



**HAL**  
open science

# Urz ar gerioù e gwenedeg-isel hed-ha-hed an 20ved kanived

Seongwoo Kang

► **To cite this version:**

Seongwoo Kang. Urz ar gerioù e gwenedeg-isel hed-ha-hed an 20ved kanived. Humanities and Social Sciences. 2022. dumas-03926602

**HAL Id: dumas-03926602**

**<https://dumas.ccsd.cnrs.fr/dumas-03926602>**

Submitted on 6 Jan 2023

**HAL** is a multi-disciplinary open access archive for the deposit and dissemination of scientific research documents, whether they are published or not. The documents may come from teaching and research institutions in France or abroad, or from public or private research centers.

L'archive ouverte pluridisciplinaire **HAL**, est destinée au dépôt et à la diffusion de documents scientifiques de niveau recherche, publiés ou non, émanant des établissements d'enseignement et de recherche français ou étrangers, des laboratoires publics ou privés.



Distributed under a Creative Commons Attribution - NonCommercial - NoDerivatives 4.0  
International License

# URZ AR GERIOÙ E GWENEDEG-ISEL HED-HA-HED AN 20<sup>VED</sup> KANTVED

D'an heni vad  
Ne meus ket ho kwelet, med tri bloaz so amañ  
Er bloaz 2019, deus ar mitin o tond  
Lein ar perzh-skol, gant Sorj Richard, flapañ  
Levrioù war ho faouarn, siwazh, d'an anser-hont  
Yaouank ha sad ma oan, 'ma ket hach anavez  
Bez so bet anser gant 'pa'n em gavamp 'n L3  
Lennegesh vrezhoneg 'h on dent ganti marzet  
A-dingarez deach 'ho, 'meus aravez enni  
Na fromussad un dra, heñvelig dach John Keats  
Chitk ha cheuch, brav ha kaer, na finvig  
H en ket da lired deach, ma mavech 'ya da sach  
Ames lavaret euid ar vach diwezañ  
Rismadelloù enis echu an istor-mañ  
"Den ebet ne eufe peom 'vije pellañ!"  
  
D'ar 15 a vis Mae 2022

D'an hani mad  
Et ma vêt kavant dalm restant  
Re pa chaulenn genach meub  
Welech ket 'nour displeant kaer  
A: guss deach, ar-raog e'hellen mand  
Na boud 'ho blezaden, us peomp,  
Lakamp, da bostiñ genach, na berr  
E las! Anser paset genach,  
Pad ar c'hentelioù, so, 'hellech  
Introdabl, chom 'oun boemet c'hoach  
Prissius, ma buhez penn dar vach,  
Et ma vehe diñ-me laret  
Cherchet 'boe 'meus ho raskantet!  
  
D'ar 14 a vis Mae 2022

SEONGWOO KANG

MÉMOIRE DE MASTER 1

PARCOURS MASTER CIVILISATIONS, CULTURES ET SOCIÉTÉS

ANNÉE SCOLAIRE 2021-2022

BREST

SOUS LA DIRECTION D'ERWAN LE PIPEC, MAÎTRE DE CONFÉRENCES,  
UNIVERSITÉ DE BRETAGNE OCCIDENTALE





Université de Bretagne Occidentale

**Université de Bretagne Occidentale**  
**Master Civilisations, Cultures et Sociétés**

**Urz ar gerioù e gwenedeg-isel hed-ha-hed  
an 20<sup>ved</sup> kantved**

Présenté par Seongwoo KANG

**Abstract**

This master thesis shows us a summary of Bas-Vannetais word order (*Pourlet* Breton, more precisely) regarding an original approach for Breton syntactical study. This approach, proposed by Oliver Currie (2000) in his analyse on word order shift in pre-modern Welsh, makes more considerable, 'external' contexts (*socio-literature*, literary genres etc) and 'internal' causes (preference of some word order for certain verbs, intransitive verbs or transitive verbs etc).

In the comparison of result with the proportion of word order from other studies (LE PIPEC 2017), we easily find that proportion of word order is quite like what we found in Malguénac (*Ibidem*). we can also validate the theory (*Ibidem*) on Breton word order: more you go to Southeast Lower-Brittany, more you find *S V* structure.

Another comparison with two corpora from 'academic-form like' Breton affirms that a temporal evolution of Breton word order (or in Vannetais dialect, at least): we do not find that much a difference between speakers born in 1900s to 1940s. The thing is, we could find *a radical shift* when it comes to authors who are highly educated, which brings proportion of their word order, like KLT's one. Wherefore resemble their phrases to KLT, instead of Classical Vannetais?

As we often consider that things, we find in grammar books usually do not correspond to real usage of popular (or vernacular) language (phonology, vocabulary, morphology), syntax is not also corresponding to a popular usage. In the occasion of this study, we could as well think about which forms should we teach to children in bilingual school or Breton immersion school...

Membres du jury:

Prof. Nelly BLANCHARD, Professeure,  
Université de Bretagne Occidentale

M. Erwan LE PIPEC, Maître de conférences,  
Université de Bretagne Occidentale

*“To be, or not to be, that is the question.  
Whether 'tis nobler in the mind to suffer  
The slings and arrows of outrageous fortune,  
Or to take arms against a sea of troubles  
And by opposing end them. [...]”*  
-*Hamlet* III.1, Shakespeare, 1602.

“Digenvez sioul. Kariadez fur  
Gant da vil guzul. Da vil gevrin  
Sioulded ec'hon. Kannadez en Neñv  
Bennozh dit ! Mignonez doueel...  
Te barrleun a vuhez askellek  
A wez, a vleuñv, a dour-red  
M'eo ken glan ennout pep buhez  
Pep hunvre. Pep hengoun. Pep meiz  
Digenvez sioul. Kariadez  
O balzam va c'halon  
Frealz va Ene. Kennerzh va youl  
Komz ouzhin. Kan din. Va luskell  
Gant diskanoù an Amzer gent,  
Kanoù an Heol. Kanoù ar Gwent  
Gwerzioù hor re zo er Gwenved  
Heklev Añjeluz an Neved  
Ha kroez ar skluz en draonienn vut  
Digenvez leun a ganoù hud  
Kariadez, me da salud.  
19 a viz Ebrel 1968”  
- *D'am digenvez*, Anjela Duval.

*“They say all's well that ends well, but I'm in a new Hell [...]”*  
-*All too well (10 minute version) (Taylor's Version)*, Taylor Swift, 2021.



## An urz-lenn

<b>RAGSKRID: PERAG SKRIW E BREZHONEG?</b> .....	<b>3</b>
<b>1. AN NOR D'AR STUDI</b> .....	<b>5</b>
1.1. DIWAR A LÂR AN DUD... ..	6
1.2. PESSORT MOD E YAY AR STUDI-MAÑ WAR-RAOG... ..	10
<b>2. TEORIÖÙ</b> .....	<b>11</b>
2.1. KAOSIOÙ HA KAOSIOÙ: CHAÑCHAMANTOÙ? DISHEÑVEL? .....	12
2.2. PETRA A LÂR AR YEZHADURIOÙ? .....	15
2.3. EN TU ALL D'AN ELLE, D'AN ODED, D'AN AON HA DA BLOUGASTELL... ..	26
2.3.1. <i>En Ozeganned hag Ar C'hoarnandoned: urz ar gerioù e gwenedeg klassel e liw ar bobl pe skeud an Emzao KLT a-ziadreñv?</i> .....	28
2.3.2. <i>Pewar C'hatekis: ar stumm S V O hag ar stumm Inf. V</i> .....	34
2.3.3. <i>Un den en doe daou vab... Ar Mabig Prodig ha hengounioù skrid</i> .....	38
2.4. EWID AR YEZH SEWENAETOC'H? .....	40
2.5. AR PEZH A RANKOMP LAKAAD ER PENN-KENTAÑ? .....	47
2.6. PENAOS E VESE GWRAET EN E-RAOG... ..	50
2.7. STUMMOÙ FRASENNOÙ HAG A VO ARNODET .....	61
2.8. METODOLOGĪEZH .....	64
2.8.1. <i>An doare hypothético-déductif</i> .....	64
2.8.2. <i>An doare empirico-inductif</i> .....	65
2.8.3. <i>'Top-down approach' ha 'bottom-up approach' ewid urz ar gerioù (CURRIE 2000)</i> .....	66
2.8.4. <i>Sossio-lennegezh?</i> .....	68
2.8.5. <i>An doare kañtitativel</i> .....	70
2.8.6. <i>Filologĳezh? hag 'Etik'</i> .....	70
<b>3. STUDI KORPUSSOÙ</b> .....	<b>72</b>
3.1. É KLASK AR VRO GWENEDEG-ISEL PE AR VRO-POURLET... ..	73
3.2. KORPUSSOÙ STUDIET .....	86
3.2.1. <i>Ar yezh komset da vad</i> .....	86
3.2.2. <i>Ar yezh komset sewenaetoc'h</i> .....	86
3.2.3. <i>Ar yezh hanter-skriwet: dastum sorc'hennoù</i> .....	87
3.2.4. <i>Ar yezh skriwet: kronikennoù er journal</i> .....	87
<b>4. AN DISOC'HOÙ</b> .....	<b>90</b>
4.1. PA VEZ SELLET A-BELL... ..	91
4.1.1. <i>Rener dirag ar verb</i> .....	92
4.1.2. <i>(X)V2: XVS+Pred V+X Pred V</i> .....	95
4.1.3. <i>(X)V2: OVS+XOV</i> .....	95
4.1.4. <i>Inf. V+X Inf. V</i> .....	95
4.1.5. <i>boud V</i> .....	95
4.1.6. <i>VI</i> .....	95
4.1.7. <i>diverb</i> .....	96
4.1.7. <i>A-zivoud ar frasennoù stumm-nac'h</i> .....	96
4.1.8. <i>A-zivoud an islavarennoù</i> .....	96
4.1.9. <i>Ewid klosiñ?</i> .....	98
4.2. HAG A-DOSTOC'H, GWIRIONEZ A GAVOC'H? .....	99
4.2.1. <i>Rener dirag ar verb</i> .....	99
4.2.2. <i>Tu-gouzañv ha VI gant an amser-dremenet-amstrizh (passé composé pe présent parfait)</i> .....	102
4.2.3. <i>Stumm-nac'h</i> .....	104
4.2.4. <i>Islavarennoù</i> .....	106
4.2.5. <i>A-zivoud ar stumm Inf. V</i> .....	108

4.2.6. Kłosiñ ar pennad-mañ.....	109
<b>5. SKRIW E GWENEDEG-SKOL?: URZ AR GERIOÙ E SKRIDOÙ AR VREZHONEGRIEN AG AR MIDAD NEWEZ .....</b>	<b>110</b>
5.1. KORPUSSOÙ CHOASET.....	111
5.1.1. <i>Dornskridoù ewid kenstrivadeg Ar Falz ag ar blezadoù 50-60</i> .....	111
5.1.2. <i>Skriwagnour-skolàer ha skriwagnour-kelenour</i> .....	112
5.2. DISOC’HOÙ.....	114
5.2.1. <i>Disoc’hoù diàr ar c’horpussoù “dornskridoù”</i> .....	114
5.2.2. <i>Disoc’hoù diàr skridoù Iwan Tangi ha David ar Gall</i> .....	119
<b>6. PENNAD-KLOSIÑ .....</b>	<b>123</b>
<b>STAGADENN-VIHAN .....</b>	<b>131</b>
STAGADENN-VIHAN: TAOLENN 1 .....	131
STAGADENN-VIHAN: TAOLENNOÙ 2&3.....	132
STAGADENN-VIHAN: TAOLENNOÙ 4&5.....	137
STAGADENN-VIHAN: TAOLENN 6~11 .....	139
STAGADENN-VIHAN: TAOLENN 12 .....	150
<b>BIBLIOGRAFIEZH .....</b>	<b>151</b>
<b>MAMMENNOÙ.....</b>	<b>160</b>



### Ragskrid: Perag skriw e brezhoneg?

*“Piou avad a rebecho deom klask ober euz on henvroiz  
tud pinvidikoh e peb giz, desketoh ha kalonekoh?  
Hogen, ma teuom a-benn euz on taol, piou a rebecho deom  
beza saveteet ar brezoneg war ar marhad?  
E giz ebed, on poan ne hell beza eur boan gollet.”*  
-F. Falc’hun<sup>1</sup>

Lies awalc’h e vên-me é klewed é lâred *a-balamor da betra klask skriw e brezhoneg* pa vez anavet galleg ged razh an dud a ouia kaosal brezhoneg iwe. Perag enta klask skriw e brezhoneg, e-lec’h skriw e galleg ha ma vehe lennet ged muioc’h a dud eid pa vez skriwet e brezhoneg. Marse awalc’h e vo lennet ged muioc’h a dud pa vez skriwet e galleg, en ur yezh vrassoc’h eid ar brezhoneg. Krediñ a rañ goull ged ar re a lâra traoù a-sort-se: *perag enta ne skriweet ked e saosneg?* Hag ar saosneg, yezh vrassañ so hed-ha-hed an Istoer, ha sokénnoc’h, m’en assur deoc’h e c’hellehec’h beajiñ *Bro-ar-Mintin-Sioul* hemb gouied ar parlant a vez kaoset enni ma ouiet distilhiñ saosnegajoù.

Ur yezh, spered ur bobl merhad, men ma kaver buhez ar bobl, gouizigezh ar bobl hag arall... a lârer, en ur gaosal e mod *nassionalisted penn-ketañ an 20ved kantved*: “*ur yezh, ur bobl hag ur F... ur vro!*” Daoust ha ‘meus lakaet ma fri a-barzh ar *Chovinism benniget?* Pell diac’halese. Re skuizh on ged ar politikerezh, ged ar jakobiniezh lakaet da goucho ged ar vro-mañ. Sossioyezhoñezh, lennegezh nariped studi hag a vez gwraet diàrbenn ar yezh-mañ e vez kavet enne un disterrañ tra hag a sella douzh ar Politik, a-wael. Skriw e brezhoneg? É vould gouestret eid marw pe buhez ar brezhoneg?

Er penn-ketañ-razh, êl ma vez lâret ged unan a ma c’helenourien ataw – un den mad eo – “*Ur pec’hed eo é weled ma studierien é kaosel e galleg etrede er-maes ag ar sklass.*” Me so bet souezhet iwe é weled daou baotr (ha hê é prientiñ ewid tremen ar c’hapes *brezhoneg*) é kaosel e galleg etrede, begatad ‘meus gwraet hemb goûd diñ: “*Flutenn, za’ret e brezhoneg ‘tresoc’h!*”. Soñj ‘meus a Varia Prat é lâred e penn-ketañ ar blezadòu 2000: “*Kàer eo lâred Diwan, kerz d’ar ru, ‘gavi ked daou goublad tud yaouank a gaose e brezhoneg etrese...*” N’eus ked voian ebed er vro-se med *obljiñ* an dud d’ober un dra? Just êl ma oa e Breizh-isel adal kreis an 19<sup>ved</sup> kantved betag ar Bresel diwezañ?

Me ‘greda penaos skriw ur pennad skiantel douzhpenn kement-se eo reiñ enor d’ar yezh, hemb enor ebed ema diaes d’ur yezh boud *lakaet àr wel*: êl m’en dehe bet lâret Roparz Hemon, n’eus ked kals a dra e brezhoneg hag a c’hellehe mago tud a ouizigezh ha ‘neus desket brezhoneg, setu-hê tremen d’ar galleg eid mago o spered c’hoantus... Daoust hag-eñv e c’houlennamp ged tud *skañv o sac’h-skol* da skriw ur pennad e galleg hag a laka kaos a *vetaforennoù a-barzh oberennoù Molière?* Pas ked, ged tud ha ‘neus bet e-leizh a zeskamantòu eo e c’houlennamp da skriw. Salokrass, ar mes’ tra eo eid ar brezhoneg iwe: hemb boud *totalist*, tud a ouizigezh hag a ouia brezhoneg *propr* ha *yac’h*

---

<sup>1</sup> Falc’hun, François. ‘Diwar-benn amzer da zond ar brezoneg’, *Brud*, no. 5, Hañv 1958. P.P. 5-8

eo a stagay douzh advewo ha moderniso ar yezh-mañ. Roparz Hemon a ouie *ar wirionez*. Med da ziwall so! Ne lâriñ ked iwe ema red da dud a ouzigezh vrezhoneg skriw eid *amser-da-zond* ar yezh, pe eid *amser-da-zond* Breizh. Ni a skriway hag a gaosay e brezhoneg eid tud ag an amser a-vremañ.

Brezhoneg n'eo ked ma yezh-vamm anehoñ, na galleg na saosneg naked. Marse awalc'h 'meus bet lennet muioc'h a bennadoù skiantel e galleg pe e saosneg eid ma 'meus bet gwraet e brezhoneg (e saosneg, ar peb muiañ, sur): peogwir e vez gwraet ar studi ihuel e galleg (hama! e saosneg muioc'h). Ar mes' tra a gredañ gober er yezh-mañ ma vez lâret liës awalc'h e vanka gerioù skiantel, difetiss ha razh. Na boud ne vehe ked ger difetiss ebed en ur yezh, n'hellamp ked lâred penaos n'eus ked ag an dra-se a-barzh penn an unanigoù a ra ged ar yezh. Pa vez lâret *glas* kenklous lâred *bleu*, *vert* pe *gris* sokén, ha *Yehan ar Go* a so kondaonet da nompas diforc'hiñ ar liwioù-se? Gwir eo eid ar yezh iwe, daousto ma n'eus ked ger ebed eid lâred ur gomprenassion, eh eus un doare arall da zispleg 'nehi ataw: en ur heuli kentelioù *troidigezh* a-c'houde daou vlez 'h on bet da benn a gompren kement-se.

Pa 'meus komañset da skriw ar pennad-mañ e brezhoneg ema a-gaos da brouiñ, douzhpenn kement-se, ar pennad-mañ so savet eid tud hag a so *kasset mad* àr ar brezhoneg deja, n'eo ked eid *John Smith* da dañwad yezhadur ar yezh-mañ, med eid ar vrezhonegerien ha 'neus c'hoant da vago e brezhoneg o soñjesonoù diàrbenn ar brezhoneg. Hag un dez pa vo daet c'hoant d'unan da sevel ur pennad skiantel e brezhoneg, hemb boud "*neupal*", e vehe koutant da weled penaos n'eo ked e-gunan anehoñ.

Ken ewid kement-traoù so ur rêson rall: eid diskouez d'o ji a zita da ma ji bepred, a luchenna kach douzh ma ji peogwir ema ma ji ur pussart é toned a-bell, peogwir n'eo ked bet kouezet ma flous a-barzh an tuad-mañ 'istima o ji ne safay ked ma ji hirroc'h diàrnoñ. Boud a ra unanigoù êl-se ataw, benoted, pesaf diàrbenn ar yezh-mañ, sort ji ha ne safa ked a betra 'zita ma ji a-barzh amañ.

Seongwoo KANG

## 1. An nor d'ar studi

“INTRODUKSĪON”, “*pennad-digor*” kenkouls evel “*digoradur*” – kement traoù a blij diñ iwe e gwirionez – petramant “*an nor d'ar studi*” evel ma lâre Yehan Marion gant e oberenn – lakaet e brezhoneg diwar an oberenn “*Introduction à la vie dévote*” bet savet gant Frances a Sales – *En or ag er vuhé devot, pe instructioneu forh pourfïtable eit conduire ha sonnat en inean én devotion*, setu an droienn a gouch mad gant ar pezh a raïmp. Pa vez un oberenn pe ur studi un ti, ema an *introduksion* un nor dehi. Mar ne gavomp ked dor vad ebed, diaes e vefe antreal e-barzh, diaes e vefe en em heñchañ. A-balamour da gement-se ema a-boues sevel *an nor* a c'hell kass an dud da vond donnoc'h gant ar studi ‘mit-hu?

Komañset e vo ar studi-mañ neuse en ur verchañ *un dra* hag a soñj deoc'h dibar, interessant pe *direizh* sokén é soñjal ma vez soñjet gant an dud: *gwenedeg* hag *urz ar gerioù*. Levesonet-hardi gant ar galleg ‘mit-hu? Studioù a so bet gwraet beteg pelloc'h a zisklêr deomp kavoud ur sell disheñvel war ar sujed. Ha seul vui ma kavomp heñvelig dregantad *urz ar gerioù* e brezhoneg komset douzh an heni e brezhoneg skriwet gant skriwagnerien-bobl, ha pa gavomp dregantad *urz ar gerioù* heñvelig adarre e brezhoneg komset douzh brezhoneg ar *c'hantwezh* a-raog, penaos e c'hellfemp displegañ?

Buan-ha-buan e vo gwelet – peogwir n'eo ked gwall-vourrapl chom douzh an nor pell – pessort digarez a gass ahanon da studïal war *brezhoneg Bro-Gwened-isel*; gant pessort soñj eh añ – ar pezh a vo ressissaet-meurbed en ur pennad all – ; gant *petra?* da lâred eo *petra* a vo studïet ewid ober ar studi-mañ. Ha gant pessort doare e riñ – sur e vo sellet douzh doareoù all awalc'h! –, ar c'hentañ doare a teu diñ e-barzh ma spered, *soasio-lennegezh*. Implij an doare *soasio-lennegel* ewid studïal war *urz ar gerioù* – yezhadur propr pe ur lodenn deus ar yezhoniezh a gredañ lâred – n'eo ked kredapl ‘mit-hu? Koulskoude daoust hag e c'hell un doare *siñtaks propr* dispakañ choas ar stummoù frasennoù a c'hellfe bezañ disheñvel – ma ve nebeud evelato! – herwez digouezioù disheñvel, gant ho pluenn kenkouls evel dirag ur mor a dud petramant dirag un den é stenniñ ar mikro douzhoc'h?

### 1.1. Diwar a lâr an dud...

**P**A vez KAOS DEUS AR GWENEDEG – *diwar a lâr tud a so kenkouls evel tud a ouiziegezh sokén* – n'omp ked en em baraad a weled tud o verchañ leveson ar galleg. E-barzh levr K. Jackson (1967<sup>2</sup>) en ur goms diwarbenn plass an taol-mouezh en henvrezhoneg, e lâr o vezañ ma'h eus bet *gallegerien* war-un-dro e tachad *ar Gevred* e oa gellet mired an taol-mouezh war ar silabenn ziwezañ<sup>3</sup>:

(P.79) “*The reason for the failure of the new stress to penetrate into the Vannetais and to some extent into Goelo etc. is doubtless the greater proportion of speakers of Romance (French) living in those areas and especially in the “Mixed Zone” immediately to the east, as indicated by the distribution of place-names in -ac. These people presumably bilingual, would present, with their firmly-based French ultimate accent, a formidable barrier to the penetration of the new stress; though, as we shall see, there is a considerable intermediate transitional region in E. K. and W. V.*”

Ha kement-mañ a vefe ken gwir all ewid urz ar gerioù e gwenedeg iwe? Da lâred eo pa vez implijet muioc'h a stumm frasennou *SVO* e gwenedeg, daoust hag ema é tond deus ar galleg? Setu ar pezh a denn d'an danvez studiet war zigarez ar skrid-mañ.

Savet so bet soñj ganiñ da ober ar studi-mañ, gwezh en ur lenn ur pennad savet gant E. Pipec (2017<sup>4</sup>) diwarbenn urz ar gerioù e gwenedeg-ihuel gwezh en ur selaou douzh ur bresegenn gwraet gant O. Currie<sup>5</sup> diwarbenn chañchamant urz ar gerioù hed-ha-hed ar c'hembraeg rag-vodern hag ar c'hembraeg e finwezh trived blezad an aotreegezh brezhoneg-keltieg hag a oa kasset gant Nelly Blanchard. Hag en ur selaou hag en ur lenn iwe penaos *ar wenedourion*<sup>6</sup> a laka rener o frasennou dirag ar verb gosig dalc'hmad, ha neuse ema heñvel douzh urz ar gerioù e galleg ma teu *ar vrud* deus-outi penaos *ar gwenedeg so bet koussiet gant ar galleg*, seul vuioe'h m'en em gav *Bro-Gwened* tost douzh

<sup>2</sup> Jackson, K. H. *A Historical Phonology of Breton*. D.I.A.S., 1967.

<sup>3</sup> Droug ha fachel gantañ e vefe furroc'h deomp chom war hon ewezh: orin chañchamant plass an taol-mouezh a so amsklaer c'hoazh (martese tachadoù: *Ossism* vs. *Venetes*), beteg Bro-Aven sokén eh eus kavet gerioù taolmouezhiet kreñv war ar silabenn ziwezañ: *Gwener, Sadorn, isel, ounnar, ledan, pounner, banal, ataw* (BOUZEC ET AL. 2017: 10).

Hag ema red gouzoud eh eus tri sort *accent* e brezhoneg war-un-dro: *accent d'intensité* (a c'hellomp troiñ gant *taol-mouezh*), *accent de hauteur* (a c'hellomp troiñ gant *poues-mouezh*) hag *accent de longueur* (an *hirded*) hag a so disheñvel mad o *foues* herwez ar parlantoù.

<sup>4</sup> Le Pipec, Erwan. *Profil syntaxique du haut-vannetais : le vannetais a-t-il une préférence pour la construction à sujet en tête ?*. 2017.

<sup>5</sup> *Lecturer in English language and linguistics* en Universtiy of Ljubljana.

<sup>6</sup> ‘*Gwenedourien*’ a *sinifie* tud a *gKostez ar C'hoad, ag ar Vro Pourlet* ewid tud a Vro-Fañch, pe gwelet e vese tud a Langoned douzh en em zisklêrio *gwenedourien* (Plourin 1982 P.XVII). E Seglian-Lawlann, ar ger “*gwenedour*” a so anavet didan ar stumm [ˈdʒʏɛnˈduʁ], ur stumm siñkopet, hag er Gemene (MCKENNA 1988) hemb siñkop, teir silabenn a-bezh; a ra deomp da soñjal penaos ar ger-mañ a so degasset gant Fisseloù pe Fañchaou en Hanternon ar Vro-Pourlet. Ar sonenn *Melani vihan* (a vez kanet war ton an dañs-plin) e kavomp enni un aotrou a Vellioneg hag a vez lakaet *gwenedour* gant ur verc'h a Voulvriag: “(Ar verc'h a lâr) *Ur Gwenedour n'eo ked mad 'med 'n ur press alhwezet, hag alhweziou an teñsor 'vint ganiñ da viret.*” –“(Ar jaw-banal da respont dehi) *C'hwi 'po keuz Melani vihan boud bet ma refuset, kar an aotrou deus Mellioneg deuy ked kén d'ho kweled. Ha pa v'it kasset d'ar park da labourad an douar, ha neusen 'ta Melani c'hwi 'po keuz ha glac'har.*”

*ar vro c'hallez pe c'hallaoueg*: tech a so e-touesk brezhonegrien (o tond deus Bro-Gwened<sup>7</sup> sokén) da lâred pa vez kaos deus *ar gwenedeg* hebkén, ma kavont un disterrañ ger o tond deus ar galleg, e lâront ema ar “brezhoneg fall” sokén.

Ur pennad savet gant E. Pipec (2017) a zispak neuse stad urz ar gerioù e gwenedeg-ihuel (Margenag, an Ardeven, Arradon) en ur lakaad anehe tal-ha-tal, douzh un tu gant ar pezh a so bet lâret gant F. Favereau (1997<sup>8</sup>) en e levr-yezhadur diwarbenn urz ar gerioù e parlant ar Poher; douzh un tu all gant ur skrid gwenedeg lennegel savet gant Y. Marion (1790): evel ma vo gwelet en ur pennad all, gwir eo e vez kavet muioc'h a frasenoù en dro *SVO*, hanter-gwir ma sellomp douztañ pishañ-pizh: pennad E. Pipec (2017) a ziskouez penaos urz ar gerioù e parlant Margenag a so tostig douzh heni parlant ar Poher; ha seul dostoc'h douzh ar Gevred seul vuioc'h a frasenoù e *SVO* a vo kavet (an Ardeven hag an Arradon) med *un 60% bennak a frasenoù* hebkén. N'eus ked trawalc'h ewid lâred e vez lakaet rener o frasenoù dirag ar verb *gosig bepred*, ouzhpenn kement-se, en ur lakaad urz ar gerioù parlant an Arradon (A. Audic 2013; E. Pipec 2017) e-keñver urz ar gerioù ar skrid savet gant Y. Marion (1790) e teu splann deomp penaos urz ar gerioù e gwenedeg (en Arradon da vihanañ neuse) a vefe un dra ken kozh all evel staoñekadur e-barzh parlañchoù ar vro pe evel plass an taol-mouezh e-barzh parlañchoù ar vro; ha da grediñ a so e vefe stablil awalc'h an implij-se.

An deori bennañ hon eus a so: seul vuioc'h ma yeomp d'ar Gevred seul vuioc'h a frasenoù er sort *SVO* a vo kavet ha n'eus ked kals a chañchamant etre *ar c'hantwed*<sup>9</sup>. Un dra all iwe deus studi E. Pipec a so e vez kavet muioc'h a frasenoù er sort *Inf. V(S)* a vez kavet e parlant ar Poher (ur 6% bennak) ha herwez ar pezh ma tispake studi L. Timm (1989<sup>10</sup>) ur 5% bennak gant ar skriwagnerien orin deus ar bobl é tond deus ar vro *KLT vras*<sup>11</sup>, muioc'h neuse ewid parlañchoù *Bro-Gwened* moarvad, 0%~0,6%, gosig sort ebed. Ouzhpenn kement-se hor bo gwelet ne glot ked implij ar stumm *Inf. V(S)* e gwenedeg gant ar pezh a vez gwraet e *KLT vras*, an darn vrasañ deus ar frasenoù en tu *Inf. V(S)* e gwenedeg klassel e oa displeget en *dic'hour*, koulskoude n'omp ked ewid lâred iwe penaos n'eo ked anavet ar stumm-mañ gant ar bobl, petramant ne vo ked kavet frasenn ebed en *Inf. V(S)* e-

<sup>7</sup> Stankoc'h eo gant ar re *yaouankoc'h* (tud ganet war-lerc'h ar bloawezh 1950...)

<sup>8</sup> Favereau, Francis. *Grammaire du breton contemporain*. Skol Vreizh, 1997.

<sup>9</sup> Le Pipec, Erwan, *Opus citatum*. 2017 PP.10-11 (NOTENN 7):

“*La distance peut même être encore réduite : il n'y a que soixante-sept ans entre la mort de Marion (en 1824) et 1891. Soit le laps de temps qui nous sépare (en 2015) de 1948. Sur une période aussi courte, seules peuvent s'observer des variations superficielles (lexique, effets de mode...). Mais à distribution sociologique et à bagage culturel constants, les fondamentaux d'une langue (phonologie, morphologie, syntaxe) ne peuvent pas changer significativement.*”

<sup>10</sup> Timm, Lenora. ‘Word Order in 20th century Breton’. *Natural Language and Linguistic Theory*, vol. 7, Aug. 1989

<sup>11</sup> Termenadur ar ger *KLT* a vefe disheñvel: lies awalc'h e sinifi an tachad ma vese didan leveson ar skritur *KLT* (bet savet pe unvanet e 1907 gant Vallée hag Ernault) pe an tachad didan leveson an tri Eskobti bras; petramant é kaoseal en un *doare fonologel*, an tachad ma vez reolieg pe reolieg plass an taol-mouezh (douzh tu ar C'hreistez: an Oded an heni eo a rafe un hars).

barzh sonennoù deus ar bobl, e-barzh *katekizioù* pe e-barzh *pezhioù-c'hoari-pobl*, e gwirionez e vez kavet *ur wech an amser*.

Ar studi-mañ a sello neuse douzh an tachad etre ar Poher “*Kreis-Breizh*” (FAVEREAU 1997) hag *ar vro (g)wenedeg-ihuel* (Margenag > an Ardeven, an Arradon): *Bro-Gwened-isel*<sup>12</sup>.

Mar ne ve ked kals a ziforc’h etre Margenag (er vro (g)wenedeg-ihuel, ur sort) hag ar Poher (keneve ar c’*hconjugaison périphrastique*), e Bro Gwened-isel e vo kavet stummoù frassennoù heñvel pe heñvel douzh re ar Poher.

Hag en ur selled douzh ur pennad bet savet gant L. Timm (1989) ma vez lâret ganti diforc’h etre skridoù ar skriwagnerien douzh tu ar bobl hag ar yezh komset e c’hellfemp kompren: douzh tu ar skriwagnerien-bobl so bet kavet 70,4% a frassennoù e stumm *V S O*, ha 20,7% e stumm *S V O* hag ar c’*hconjugaison périphrastique* 5% hebkén<sup>13</sup>, hag a so heñvel-mik douzh ar pezh a so bet dispaket gant F. Favereau ewid parlant ar Poher (65%, 25% ha 6%)<sup>14</sup>.

Amañ e c’hellomp degass soñj deus parlant an Arradon (PIPEC 2017): ar yezh komset n’eo ked gwall-zisheñvel douzh ar yezh skriwet bet savet ar c’hantwezh a-raog. Neuse, ar pezh a c’hellimp klask ober a so: lakaad ar yezh komset tal-ha-tal gant ar yezh skriwet ewid *gwenedeg-isel iwe*.

Gwezh, en ur heuli doareoù da ziefenniñ ar frassennoù hag a so bet gwraet gante meur a wezh – da gentañ, ewid heuli an doareoù e vefe gwelloc’h gouzoud petra eo an doare-se ha penaos mond warnañ gant ar brezhoneg moarvad... – pe tennañ deus-oute stummoù frassennoù da ziefenniñ. Gwezh all, en ur soñjal diwar gement-se, peheni a vefe gwelloc’h ewid lakaad da gouchañ pa vez brezhoneg<sup>15</sup>, da skwer pessort stummoù frassennoù da ziefenniñ just-mad pa welomp bremañ un dornad islavarennoù-distag gant brezhonegerien a-vihan hag islavarennoù-stag hag a vez implijet gante – ar pezh a so *mad* da geñver ar *yezhadur* – e kav diñ ema mall lakaad aneche en dregantad iwe.

Evel ma welimp pelloc’h, ar c’horpussoù a vo rannet en pemp lodenn a-vas:

<i>Ar yezh komset da vad</i>	>	<i>Ar yezh komset sewenaetoc’h 1: kontadenn dre eñvor</i>	=;>	<i>Ar yezh komset sewenaetoc’h 2: kontadenn enrollet ha bisskriwet</i>	>	<i>Ar yezh hanter-skriwet: kontadennoù dastumet</i>	>	<i>Ar yezh skriwet<sup>16</sup>: kronikennoù e-barzh ar journal</i>
------------------------------	---	---	-----	--	---	---	---	---

<sup>12</sup> Ewid termenadur an tachad *Bro-Gwened-isel* pe *ar vro (g)wenedeg-isel* en ho pedañ e welfet an deirved lodenn deus an tamm skrid-mañ!

<sup>13</sup> Timm, Lenora. *Opus citatum*. Aug. 1989, p. 371

<sup>14</sup> Le Pipec, *Opus citatum*. 2017. P.6

<sup>15</sup> Red eo soñjal penaos doareoù so da ziefennañ frassennoù a so bet krouet ewid ar saosneg da gentañ (*generative grammar, structuralism* h.a.): n’omp ked sur neuse e vefe klotet gant ar brezhoneg na gant yezhoù all naked.

<sup>16</sup> Med n’omp ked ewid gortos ur *yezh skriwet* ken kempennet evel ma kavomp bremañ e-barzh levrioù ewid ar *gwenedeg-isel*: ne oa ked kals a dud ha ‘noa skriwet en o farlant *gwenedeg-isel* rik-ha-rik, lewesonet e oant (Loeiz Herieu, Iwan an Dibreder h.a.) gant an hengoun lennegezh *gwenedeg klassel* petramant gant ar galleg sokén a-dra-sur (gweled *infra*).

### Taolenn 1

Ur pennad-kaos pe un atersadenn e vefe ar yezh komset da vad ma kavomp ar yezh naturellañ. Hag ur *sorc'henn* pe ur gontadenn e vefe ar yezh komset sewenaetoc'h. Med lakaet so disparti etre kontadenn dre eñvor hag kontadenn enrollet ha bisskriwet peogwir n'hellomp ked gouzoud hag-eñv e oa ar c'honter o lenn an destenn skriwet gantañ<sup>17</sup>. Hag kontadennoù dastumet (ha kempennet ewid boud embannet evel-just) em eus lakaet e-barzh ar yezh hanter-skriwet, mar n'eo ked un treusskriwadur rik-ha-rik diwar ar pezh a so bet klewet gant un den<sup>18</sup> –na possupl ma ve merchet a-berzh piw ema o tond... – e vefe gwelloc'h chom war hon ewezh enta! Ken ma fin, ar yezh skriwet – kredet pe ne gredeet e vo aessoc'h kaved unan skriwet ewid re all? – pa 'meus choaset da vond gant ar gwenedeg-isel e oa diaes choas unan skriwet e gwenedeg-isel. E ranken marc'hatad, a-benn ar fin 'meus kavet unan pe zaou hag a goucho... kronikennoù e-barzh ar journal koulskoude red eo kemer e kont penaos n'ouzomp ked c'hoazh hag-eñv e vese skriwet gante (ar pezh a sell douzh urz ar gerioù bepred!) evel ma kaoseent pe skriwet en ur heuli reolioù hag a denn da re ar gwenedeg klassel...

Komparassiñ ur pennad-kaos ha skridoù a-beb-sort eo heuli doare L. Timm (1989). Koulskoude ar pezh a faot deomp ober a so ledannad ar c'horpussoù (setu perag 'meus lakaet *sorc'henn* en o zal) en ur soñjal e-barzh ar vetodologiezh *sossio-lennegezh* (gweled *infra*) hag a so bet kemeret e kont gant O. Currie (2000<sup>19</sup>). Ha kement-mañ o lâred eh eus bet ur stumm frasennoù a gavemp gwelloc'h implij herwez anien ar skrid:

(P.9) “*The discourse structure of the Psalms could be argued to be naturally more favourable to AIV order in another respect too. Because of their monologic and lyric form — expressing thanksgiving, praise and supplication to God — we do not find in the Psalms the frequent changes of perspective and protagonist, nor the multiplicity of potentially competing topics that we do in narrative texts like Esther and Mark. The two main personae of the Psalms, the author in the first person, and God, either addressed directly in the second person or referred to in the third, are continuously present; so too the dominant themes of praise, deliverance and thanksgiving constantly recur throughout the Psalms. Since a common use (cross-linguistically) of verb-initial order with zero anaphora is in contexts of topic and thematic continuity, the Psalms provide, arguably, considerable opportunity to use this construction.*”

Ha gwir e vefe ewid ar brezhoneg iwe? E-gis ma vez lâred e vez kavet ur bern frasennoù *diverb* e-barzh kontadennoù...

<sup>17</sup> Pezh a vez gwelet lies awalc'h e *filajoù* herwez ma lâr Daniel Doujet diñ.

<sup>18</sup> Kemener, Yann-Fañch. *Collecteur de contes en Basse-Bretagne = war henchoù ar c'hontadennoù*. 2014. a vefe un treusskriwadur fidel diwar ar pezh 'noa klewet.

<sup>19</sup> Currie, Oliver. 'Word Order Stability and Change from a Sociolinguistic Perspective: The Case of Early Modern Welsh'. In *Stability, Variation and Change in Word-Order Patterns over Time [Current Issues in Linguistic Theory 213]*, John Benjamins, 2000, pp. 203–30.

## 1.2. Pessort mod e yay ar studi-mañ war-raog...

Da c'houde ar pennad-mañ e vimp o klask goùd diwarboues *urz ar gerioù* hed-ha-hed an amser diwar studioù gwraet en a-raog, a-balamour da c'houùd hag-eñv eh eus bet chañchamañchoù heverk. Ha war-lerc'h e vo kaos deus ar yezhadurioù: er penn-kentañ 'meus klasket kempenn herwez an amser ma'h int bet embannet (setu ma teu an droienn *yezhadurioù hengounel* ha *yezhadurioù mod-newez*), med red eo goùd iwe e-mesk levr-yezhadurioù so savet a-newez (da lâred eo goude ar bloawezhioù 1970<sup>20</sup>) so ideioù savet diwar *yezhadurioù hengounel* pe *kent* (*reaksionism?*). War-lerc'h bezañ gwelet ar pezh a vez lâret gant ar yezhadurioù, pred eo lâred petra eo diforc'hioù etre skridoù *KLT* ha skridoù *gwenedeg*: ewid amweled kement-se 'meus choaset oberennoù ha so deus-oute e gwenedeg kenkouls hag e *KLT*, lies-mad lakaet e brezhoneg *KLT* (pe *Bro-Leon*, petramant *Eskobti Leon ha Kemper*, a lârer) diwar brezhoneg *Bro-Gwened*; petramant kement ha diwar ar latin, pe ar galleg lakaet e brezhonegoù disheñvel. Kement hag ober studioù – forzh pessort studioù e gwirionez – e ranker selled douzh studioù gwraet en a-raog war ar sujed heñvel douzh hon heni: setu ma 'meus choaset pennadoù diwarbenn *urz ar gerioù* brezhoneg. Diwar gement-traoù e teufomp a-benn da lâred pessort stummoù-frasenoù a vo arnodet e-barzh ar studi-mañ. An doareoù a vo implijet a-balamour d'ar studi-mañ a vo lâret da c'houde: sur e vo doareoù boutin ewid studïal war *urz ar gerioù*, koulskoude implijet so bet ganiñ doareoù divoutin da geñver *ar studi ereadurezh*...

War-lerc'h *refleksionoù* hir diwarbenn ar studi, war-lerc'h bezañ lâret perag studïal, petra da studïal, pred eo *termeniñ* an dachenn a vo studïet ganeomp: *ar Vro-Pourlet*, lâret e vez gant an oll dud eh eus ur vro hag a vez gwraet *ar Vro-Pourlet* deus-outi, med hê aet da chom bout pa vez kaos deus, adaleg pelec'h beteg pelec'h...? War-lerc'h bezañ lakaet kaos deus ar *Vro-Pourlet*, e vo presantet pessort korpussoù ganeomp: tud deus ar *Vro-Pourlet* ha skriwagnerien deus ar *Vro-Pourlet* ken-ha-ken.

Setu ur wech dielfennet frasenoù diwar ar c'horpussoù e vo tu da lâred *disoc'hoù* diwar ar c'horpussoù: evel ma so dleet, e vo gwraet ar gomparêson herwez an doareoù 'meus choaset e-barzh ar lodenn *metodologiezh*, kavet e vo traoù dic'horto, traoù ha n'hon eus ked gwelet morse.

Trawalc'h eo, a lâro unan bennaket, koulskoude un dra interessant e vefe komparassiñ an *disoc'hoù* kavet gant ar gomserien hengounel (brezhonegerien a-vihan anehe toud) hag an *disoc'hoù* a vo kavet gant gwenedourien deus ar *rummad newez*, adal m'o defe bet muioc'h a *skiant prenet desket* war ar brezhoneg...

---

<sup>20</sup> Dre zigouez ema bet choaset ar mare-mañ, netra da weled gant marw Roparz Hemon...



## 2. Teorioù

E-barzh ar lodenn-mañ e vo kaos – na petra ‘ta – deus ar pezh a vo gwraet:

Er penn-kentañ, un hipotesenn a beurbado e-kerz ar studi-mañ – diforc’h etre koms ha skrid mand oc’h engortos gweled ha klewed – ; ha petra a lâre(e) ar skiant diarbenn an dra-se, ha rannet ar yezhadurioù en daou strollad etre yezhadur hengounel-glan ha yezhadur mod-newez e-keñver an amser, petra a ra deomp ranno en diw?; ha war-lerc’h, o vezañ ma welimp un dra a denn da barlañchoù a Vro-Gwened, mall iwe selled douzh ar pezh a vez gwraet e KLT, ken ewid ober kement-se e vo tu lakaad war wel oberennoù gwenedeg lakaet e yezh Bro-Leon, ha katekizioù a-dal ma so diforc’hioù etrese... ken ma fin e vimp arru gant ar Mabig Prodig hag a oa bet skriwet ha kontet dre meur a barlant; ur wech gwraet kement a brederioù war ar yezhadur reizh e-keñver urz ar gerioù e vo c’hoant deomp da amweled penaos ema (pe e oa) e-keñver ar vorfologïezh, ar pezh a vez lâret hag ar pezh a vez goulennet ganeomp da skriwañ. Heb-pell neuse e vo kaos deus urz ar gerioù adarre, nemed en ur selled douzh yezhoù all iwe; petramant labourioù so bet gwraet en a-raog diarbenn urz ar gerioù hag o c’haosioù a-beb-sort. Ha kent da fin, penaos e vo dielfennet pe pezh sort frasennoù a vo dielfennet ganiñ...

En ur zerc’hel soñj deus kement-traoù hor bo amser da lâred petra eo ma doareoù da selled douzh ar c’horpussoù: doareoù ken boutin, divoutin (ewid un enklask hag a vez gwraet yezhonïezh douzhtañ ataw!) evel sossio-lennegezh, filologïezh (!) hag all.

## 2.1. Kaosioù ha kaosioù: Chañchamantou? Disheñvel?

Lies awalc’h, ar pezh a vez kavet e-barzh levrioù-yezhadur hag ar pezh a vez gwraet e gwirionez gant “gwir-implijerien ar yezh” a so disheñvel. Brezhoneg iwe heb bezañ achapet douzh an hengounioù-skrid-se, ma welomp en e levroù-yezhadur o tislâred ar pezh a vez gwraet e gwirionez<sup>21</sup>.

O kaoseal deus ‘*disheñvel*’ pe diforc’h etre ar yezh skriwet hag ar yezh komset, red-mad eo gouzoud piw eo a vese o skriwañ e brezhoneg adaleg kalon an 19<sup>ved</sup> kantved: tud a Ilis anehe c’hoazh lies awalc’h, tud a ouizidigezh meur a wezh iwe (*Kervarker, Jaffrennou, Herrieu* h.a.). Ha distro d’an amser dostoc’h douzh hiriw-an-dez, e kalon an 20<sup>ved</sup> kantved e welemp skriwagnerien so o tond deus ar bobl (*Jarl Priel, Herve Herri, Yeun ar Gow, Anjela Duval, Jañ-Mai Skragh* h.a.) desket gante *skriwañ* ha dehe da skriwañ-diskriwañ o “zamm buhez” en o yezh-vamm.

Chomet so da c’houzoud pessort diforc’h a so etre ar yezh skriwet gant tud a ouizidigezh (tud a *Emzao, Gwalarnisted, Liammisted* h.a.) hag ar yezh vew, komset. Med evel m’hon eus gwelet e-barzh ar pennad a-gent: ar yezh skriwet a-raog an *Emzao* n’eo ked gwall-chañchet, stabil a gredomp lâred e parlant an Arradon da vihannañ (PIPEC 2017):

	J. Marion 1790	an Arradon (bet ganet e 1891)
SVO (pe SOV)	60,0%	64,8%
[S] V+an		
AVS(O)	35,3%	33,7%
Emph+VS(O)		
Ha+VS(O)		
VS(O)		
OVS	4,1%	1,5%
Inf. VS(O)	0,6%	0%

Taolenn 2<sup>22</sup>

Splann e welomp ema heñvel an dregantad an eil douzh egile: un disterrañ diforc’h a gavomp amañ a so dregantad ar stumm *OVS* ha dregantad an *Inf. VS* (*id est* ar c’*hconjugaison périphrastique*)<sup>23</sup>. An diforc’h etrese, neuse etre ar yezh sewenaetoc’h ha yezh ar bobl simpl a oa nebeud *a-raog an Emzao*.

<sup>21</sup> Lod anehe a laka ur sort ar pezh a vez lâret e gwirionez gant an dud, tostoc’h douzh ar yezh komset pe notennoù diwarbenn impljoù (evel heni CHEVEAU 2017).

<sup>22</sup> *Opus citatum*. P.9

<sup>23</sup> Moarvad, implij ar stumm *dic’hour* hag a oa stank er yezh skrid a lakae an diforc’h (gweled *infra*).

O vond trema'r *C'hLT* ar wezh-mañ e c'hellomp menegiñ studi L. Timm (1989<sup>24</sup>) ewid kavoud ur sell douzh an diforc'h etre ar yezh komset hag ar yezh skriwet.

Diwar pemp skriwagner *KLIT*<sup>25</sup> he doa gwraet he zamm dielfenniñ, hag ar pezh a ziskouez neuse evel m'hon eus gwelet a-us, heñvelig douzh ar pezh a so bet kavet gant Favereau (1997) e Poher:

	brezhoneg lennegel deus ar bobl <sup>26</sup>	parlant Karaes <sup>27</sup>	parlant ar Poher(Poullaouen) <sup>28</sup>
VSO (pe AVS+VSO)	70,4%	55,2%	65%
SVO	20,7%	23,8%	25%
OVS	3,8%	8%	4%
Inf. VS(O)	5%	13%	6%

Taolenn 3

Diwar gement-se e c'hellomp gouzoud penaos n'eus ked bet kals a ziforc'h<sup>29</sup> etre ar yezh skriwet gant ar bobl – hag o deus bet un tamm deskamant – hag ar yezh komset gant ar bobl pa vez urz ar gerioù. Med amañ e welomp ar c'hontrel douzh ar gwenedeg (gweled *supra*): da gentañ n'eus ked diforc'h ebed a-fed an amser, etre skriwagnerien deus an 20<sup>ved</sup> kantved hag an dud deus an 20<sup>ved</sup> kantved 'ni eo; ha ma oa ar yezh skriwet o implij muioc'h a stummoù frassennoù *OVS*, *Inf. VS(O)* e gwenedeg, amañ ar yezh komset an heni eo e welomp muioc'h a stummoù frassennoù a-sort-se. Nemed 13% a frassennoù e stumm *Inf. VS(O)* a so dedennus e-toues korpussoù L. Timm (1989), med kement-se a vefe un dibarder deus ur parlant hebkén. Hag an dregantadoù all a c'hellfe bezañ chañchet herwez an dud, dregantad ar stumm *SVO* a so stabil: tre 20%.

<sup>24</sup> *Opus citatum*.

<sup>25</sup> Timm, Lenora. *Opus citatum*. 1989. P.370 “*The works examined are: Tad-Kozh Roperz Huon (Duval, 1982); E Skeud Tour bras Sant Jermen (ar Gow, 1978); Evel-se e oamp (Herri, 1982); Va zarnmig buhez (Priel, 1975); 'Ar voualh aour' (Brud Nevez, Rolland, 1985).*”

<sup>26</sup> *Ibidem*. P.371; da ziwall a so: 1235 a frassennoù a so bet dielfennet ganti tre ma n'eus ked bet med 339 a frassennoù hebkén ewid parlant Karaes diefennet ganti.

<sup>27</sup> *Ibidem*. P.371

<sup>28</sup> Le Pipec, Erwan. *Loco citato*. P.6

<sup>29</sup> Ur 15% bennak a ziforc'h etre heni ar skriwagnerien-bobl ha heni ar gomserien a-vihan deus Karaes: soñjal a c'hellfemp e-barzh an tremen etre ar stumm *VSO* ha *Inf. VS...*

Beteg pelloc'h hon eus dregantad ar stummoù frasennoù stabil-pe-stabil etrese nemed – red eo gouzoud – seul vuioc'h eh amp d'ar Gevred seul vuioc'h a stumm frasennoù *SVO* a vefe kavet<sup>30</sup> ha kement-se n'eo ked un dra newez med kozh awalc'h a gredomp lâred. Pe a-hend-all da grediñ a so penaos n'eus ked kals a ziforc'h etre ar yezh komset hag ar yezh skriwet. Med pezh a so amañ ar skridoù bet dielfennet gant L. Timm (1989) a so diwar skriwagnerien-bobl desket gante skriwañ, martese ne vefe ked med ur stumm sewenaetoc'h ewid ar stumm komset.

---

<sup>30</sup> *Opus citatum*. P.8

## 2.2. *Petra a lâr ar yezhadurioù*<sup>31</sup>?

Ewid tostaad d'ar stumm *lennegel*<sup>32</sup>ema red deomp selled douzh ar pezh a so erbedet d'ober gant ar *yezhadurourien*. Interessant e vo neuse selled douzh pessort mod e soñjont ar stummoù frassennoù, penaos e venegont ar stumm-mañ-'r stumm, dreist-oll *SVO* a zeskomp ne "rankomp" ked implij<sup>33</sup> kals anehañ; ken ma fin *petra a lâr ar skiant diwarbenn urz ar gerioù e brezhoneg*?

Seizh a so da selled douzhte:

Da gentañ, ar *yezhadurioù hengounel-glan*<sup>34</sup> (adaleg Gonideg moarvad)

1. Levr-deskiñ ha yezhadurioù R. Hemon (1928<sup>35</sup>, 1932<sup>36</sup>)
2. yezhadur F. Kervella (1947<sup>37</sup>)
3. heni E. Chalm (2008<sup>38</sup>)

Hag ar *yezhadurioù mod-newez* (adal m'ema bet ganet ar mod *deskriptivel*?)

4. heni Trepos (1996<sup>39</sup>)
5. studi Le Gléau<sup>40</sup> (1973<sup>41</sup>)
6. yezhadur Favereau (1997<sup>42</sup>)
7. heni L. Cheveau (2017<sup>43</sup>)

Ha diforc'h a so etre ar *yezhadurioù kozh* hag ar *yezhadurioù newez*? Pessort mod e venegont urz ar gerioù e brezhoneg? pessort implij a erbedont ober gantañ e pessort degouez? Ha petra a lâront

---

<sup>31</sup> Kompren a rankomp so bet gwraet un diforc'h tre *tud a yezhadur* ha *yezthoniourien* peogwir ne assantont ked an eil gant egile a-wechoù (da.sk. tre Arthur ar Bayon ha Job Loth; c.f. LAMBERT 1976, MORVANNOU 1982). E-barzh ar lodenn-mañ e vo kaos deus ar pezh a vez gwelet e-barzh levrioù-yezhadur (anes heni Le Gléau) hag e-barzh ar lodenn *Penaos e vese gwraet en e-raog* e vo gwelet ar pezh a lâre yezthoniourien.

<sup>32</sup> Gant ar ger-mañ e faot diñ lâred kentoc'h "diwar ar yezhadur *preskriptivel*" peogwir e c'hellomp soñjal iwez e-barzh '*lennegel*' pe '*lennegzh*' diwar implij ar bobl (setu ar lennegzh gwenedeg deus an 18<sup>ved</sup> kantved, PIPEC 2017 P.11).

<sup>33</sup> Gweled *infra*.

<sup>34</sup> Pa vez sellet *a-strizh* ne c'hellfemp ked lakaad *hengounel* deus-oute: peogwir e tegassfe d'an nen soñj deus ar levr-yezhadur savet gant G.Rostren (1738, adembennet e 2008), petramant Guillevic&Le Goff (1902) ewid ar gwenedeg klassel: da lâred eo ar pezh a vez *diassez* d'ar levroù-yezhadur all. Lakaet e vint kentoc'h *yezhadurioù mod-kozh* deus-oute ganeomp. Ha *hengounel* a-balamour ma vënt un *diassez* d'an deraouidi da zeskiñ ar brezhoneg (gwir eo e tepant deus ar gelennerien...).

<sup>35</sup> Hemon, Roparz. *Précis de Grammaire Bretonne*. Moul. Straed ar C'hastell, 1928.

<sup>36</sup> Hemon, Roparz. *Cours Élémentaire de Breton (Premier Livret&2e,3e,4e Livrets)*. Gwalarn, 1932.

<sup>37</sup> Kervella, Francis. *Yezhadur bras ar Brezhoneg*. La Baule, 1947.

<sup>38</sup> Chalm, Eugène. *La grammaire bretonne pour tous*. An Alarc'h embannadurioù, 2008.

<sup>39</sup> Trepos, Pierre. *Grammaire bretonne*. 5. éd, Emgleo Breiz, Brud Nevez, 1996.

<sup>40</sup> Pa vez savet ar levr-yezhadurioù all er *skol-mañ* diwar implij ar *bobl*, e kredomp lâret e vez savet ar studi-mañ diwar implijoù e-barzh ar lennegzh a-beb-sort, ken ma vefe ressiss.

<sup>41</sup> Le Gléau, René. *Syntaxe du breton moderne 1710-1972*. Édition La Baule, 1973.

<sup>42</sup> Favereau, Francis. *Opus citatum*. 1997.

<sup>43</sup> Cheveau, Loïc. *Nouvelle grammaire bretonne du dialecte de Vannes: vannetais standard*. Les Éditions Label LN, 2017.

diwarbenn an *islavarennoù doareañ* e-keñver urz ar gerioù: dreist-oll daoust ha ma ve meneget gante ar stumm evel *stagell VS + S V<sup>44</sup>* evel m'ema bet lâret gant S. Hewitt (2018):

“*The pre-matrix embedded clause counts as slot 1, leaving the first element of the matrix clause as slot 2; hence no adjustment rules needed to ensure T2 in affirmative PSO order in the matrix clause. (38) [Ma vez amser]<sub>1</sub>, e<sup>M</sup>tebro<sub>2</sub> an<sup>L</sup>dud krampouzh [...] However, especially with lexical subjects (with pronominal subjects mainly in SW), SPO is increasingly possible in the matrix clause: (39) [Ma vez amser]<sub>0</sub>, an<sup>L</sup>dud<sub>1</sub> a<sup>L</sup>zebro<sub>2</sub> krampouzh [...] Since SPO also possible (breaking T2 constraint) in matrix clause, would not be surprising for PSO with T2 adjustment rule to be found in some varieties (but none with which I am familiar<sup>45</sup>) (40) ??[Ma vez amser]<sub>0</sub>, dibriñ<sub>1</sub> a<sup>L</sup>ray<sub>2</sub> an<sup>L</sup>dud krampouzh.*”

Dre-se e teu da welloc'h soñjal, urz ar gerioù e brezhoneg so gwelloc'h dehi lakaad an traoù *newez-deut* e penn kentañ ur frasenn – pe pa vez ur frasenn eeun, pe pa vez ur frasenn kenurziet – kentoc'h ewid an traoù “pouesussañ”, *a posteriori* a c'hell liammañ gant ar frasenn en he raog (LE GLÉAU 1973<sup>46</sup>) med chomet e vefe ar *bpriorited* gant an doareenn pe gant ar renadenn-dieun-lec'h (pe amser) da vezañ lakaet e penn kentañ ur frasenn.

Levrioù-yezhadur *mod-newez* a ziskouez ar yezh – *reizh* pand eo lakaet e-barzh ar *levrioù-yezhadur* – diwar an implij, dreist-oll diwar parlantoù-pobl (*deskriptivel*<sup>47</sup>). Hag anad neuse eh eus daou *gamp* pa vez pe *levrioù-yezhadur* pe *levrioù-deskiñ*: douzh un tu, unan hag a ziskouez ar *yezhadur braw, reolieg-abominapl*; douzh un tu all, unan hag a zispak ar yezh implijet gant ar bobl, diwar implij ar bobl<sup>48</sup>.

Ar pezh a venegomp e-barzh *cours élémentaire* R. Hemon (1932<sup>49</sup>) n'eo ked aet pelloc'h e gentel ma kavomp ar c'*hconjugaison périphrastique* e-barzh ar bajenn 17 hag e lâre: “*Vous savez conjuguer le présent de l'indicatif des verbes à la première personne et à la troisième personne du*

<sup>44</sup> Hewitt, Steve. *Breton verbal syntax: An explanatory framework, Typologi ar Brezhoneg, UBO, Kemper, 19-20 June 2018*. P.27: ar skriwagner a lâre e diasezet e labour diwar *terminal speakers* e Bro-Dreger, koulskoude diñ da c'houzoud, bremañ e c'hellfemp lakaad ledan-douzh-ledan e *deorienn* e-barzh ar c'hoarnadoù-bro all eus ar Brezhonegva.

<sup>45</sup> Hag a so ken gwir all evel ma lennomp e-barzh: Laouënan, Yves-Marie Gabriel, *Kastel Ker Iann Koatanskour* 1834. “*Mar d'eo ho c'hoant da redet ar vro gand plijadur evid he anaout, ho kuzulia a rann da zistrei dré hent Plouesk...*”

<sup>46</sup> *Opus citatum*. P.78:

“*L'aisance du style décide à l'intérieur d'un paragraphe du choix du mot initial de chaque phrase. Ce mot initial doit LIER strictement cette phrase à la phrase précédente; ce paragraphe au paragraphe précédent ; plus qu'une règle de grammaire, c'est la logique de l'exposé qui détermine l'ordre des mots : Kounnar a oa e Breizh e 1775 : Difennet e oa bet beziañ en ilizoù... Diaes e kave ar barrezianiz dilezel beziou o zud. Bered a oa koulskoude e Lanber. Met er beredoù ne veze beziet nemet an divroidi. Lanber de L. Lok-Dujardin. 1942 P.29*”

<sup>47</sup> Meur a wech: *studiou* pe *enklaskoù* kentoc'h ewid ur levr-yezhadur *bras* e vënt. (FAVEREAU 1984, CHEVEAU 2017)

<sup>48</sup> Ur skwer hebkén a zisklêr krenn an tech-se “an araogenn *ba*”: ma sellomp douzh an diw *hentenn Assimil* savet gant daou zen disheñvel, Fañch Morvannou (1975) da zigentañ a lâre e ma daou stumm (da lâred eo *e* ha *ba*) ar memes tra (P.16 “E Brest = *ba* Brest ; e Gwened = *ba* Gwened), koulskoude *ba*'n hentenn savet gant Divi gKervella (2005) e lâre “(P.377) *Comme vous risquez fort de rencontrer ces formes [ba'n, ba'r, ba'l] tôt ou tard, nous vous les indiquons ici, mais elles ne sont guères recommandées en breton standard.*” (a-du-rall, lâred a rañ ma zamm trugarez da Jean Lecoulant a Garaes, ha ‘neus gwraet diñ anavoud a-zivoud ar c'hontrast-mañ!)

<sup>49</sup> Hemon, Roparz. *Opus citatum*. 1932. P.6

*singulier et à la deuxième personne, à l'aide des formes a ran, a ra, a rit [...]*". Martese dic'halamañ ma komañs implij stank ar c'hconjugaison périphrastique ewid deskiñ d'an 'deraouidi' (gweled *infra*, NOTENN 136)? E-barzh e bprécis de grammaire<sup>50</sup> e kavomp frasennoù berr diwarbenn *urz ar gerioù brezhoneg*: "Gant ma vo dalc'het d'ar reolennoù displeget a-us (dreist-holl a-zivout ar rannouigoù-verb hag ar stagellou), e c'heller urzia eul lavarenn peurliesha e-giz ma karer."

Koulskoude ne venege tra ebed petra eo ar peb 'neutrallañ', petra ober ewid pouesañ war un dra h.a. Nemed pand eus gwelet un *bern* frasennoù e stumm *conjugaison périphrastique* e penn-kentañ e *gcours élémentaire* (adaleg ar bajenn 6 betek 51 ewid ar levrenn gentañ da skwer) e kavomp ur frasenn e stumm *conjugaison périphrastique*, da vihannañ pa vez verb en amser a-vremañ (deomp-ni da c'houzoud n'eus ked kavet med ur 6% bennaket e parlant ar Poher (FAVEREAU 1997<sup>51</sup>)).

Ar pezh a lâr F. Kervella (1947<sup>52</sup>), meneget e-barzh Favereau (1997<sup>53</sup>):

"(FK 389 - "teir reolenn aour kevreadur ar frazenn e brezhoneg") : mettre en tête le mot ou le membre de phrase sur lesquels porte l'insistance principale, avoir le verbe conjugué en seconde position (contrainte syntaxique unique dans les langues celtiques) , éviter ainsi de commencer une phrase indépendante par un verbe conjugué (après les particules verbales a ou e ... )."

Pe kouls lâret gantañ, P.390: "Ar ger pouezusañ, an hini a zo da vezañ sachet [*sic*] warnañ an evezh eo a zo da vezañ lakaet da gentañ."

Amañ e vez lâret gant F. Kervella ema gwelloc'h lakaad ar lodenn deus ur frasenn a fell deomp "pouesañ" warni, ha lakaad ar verb en eilved plass ataw ha nompas komañs ur frasenn gant ur verb displeget. Martese e oa e yezhadur o selled douzh brezhoneg ar Gwalarn<sup>54</sup> peurlieshañ, 'noa *ankouc'haet* disklêrio e vez kavet frasennoù evel "*eh a da...*", "*E rankan...*" da lâred eo ar "verboù kreñv<sup>55</sup>" a c'hellomp diplegañ ha lakaad anehe e penn kentañ ur frasenn.

Geriennoù bennak diwarbenn an urz evel *sujed* e deroù ur frasenn a so iwe, P.392:

"Diwallet e vo da ober gwallimplij eus an doare-se da sevel frazennoù, dreist-holl pa vezor o treiñ pennadoù diwar ar yezhoù romanek pe c'hermanek a zo o urzh reizh lakaat ar rener dirak ar verb. E brezhoneg ne vez lakaet ar rener da gentañ nemet pa'z eus c'hoant e gwirionez d'hen dispartiañ a-douez ar geriennoù all da sachañ [*sic*] evezh ar selaouer pe al lenner warnañ..."

<sup>50</sup> Hemon, Roparz. *Opus citatum* 1928. P.38

<sup>51</sup> *Opus citatum*.

<sup>52</sup> *Opus citatum*.

<sup>53</sup> *Opus citatum*.

<sup>54</sup> Pennaod, G. 'KIS - E076' [*réponse à une lettre de Kervella*], *Preder Kaier* 159-160, *Lavar* 05, 138-143. 1972.

"... n'eo nemet reizh lavarout ned a ket e anaouedegezh gwall belloc'h eget ar pezh en deus desket pa oa bugel pe en deus kavet tu da gavout el lec'h m'emañ o vevañ, eleze, a gredan, teodyezh Dirinon ha hini Lannuon. En aner e klaskfed en e levrioù pe e oberennoù gramadegel notennoù sonn a-zivout ar brezhonegoù all (ar gwenedeg pergen), ha nebeutoc'h c'hoazh a-zivout ar grennyezh."

<sup>55</sup> Favereau, Francis. *Loco citato*. 1997. P.318

P. Trepos<sup>56</sup> a lâr neuse diwarbenn urz ar gerioù evel ma lâre F. Kervella<sup>57</sup>: p.356: "*Le mot essentiel sur lequel on veut attirer l'attention, celui qui révèle au mieux la pensée de l'auteur ou ses intentions implicites, peut toujours se placer en tête.*" Hag a so c'hoazh ewid urz ar gerioù *S V O*, P. Trepos a lâr:

p.358: "*Le breton répugne généralement à mettre le sujet en tête, sauf par droit d'insistance: me a yelo da weled ahanoh, moi j'irai vous voir; et, dans ce cas, il aura tendance à ajouter AN HINI EO, SOUS la forme syncopée 'NI ... me 'ni a yelo da weled ahanoh, c'est moi qui irai vous voir; La première forme a pris de l'extension au cours des dernières générations. Cependant on préférera, en conversation courante: mond a rin da weled ahanoh"*

da c'houzoud dehañ e vese implijet *S V O* gant an dud d'an ampoent-se heb soñjal pouesañ war ar sujed evel ma so bet lâret gant G. Goyat<sup>58</sup>: "*l'ordre de mots S + V + A (ou) O doit être considéré comme neutre ou non-emphatique. Pour insister particulièrement sur le sujet, on a recours à l'expression 'ni eo qui se place après lui, ou à une accentuation orale plus forte*".

Ewid plass ar verb e kavomp e-barzh P.359: "*D'autre part, dans une phrase qui commence par un complément circonstanciel, le verbe arrive en seconde position sous sa forme personnelle, et le sujet se contente de la troisième place (...) Signalons une construction particulière (verbe en tête, sujet en deuxième position) dans le cas d'un subjonctif-impératif à la troisième personne*", ma welomp *V2* ha *V1* enni, tre ma welomp iwe P. Trepos o tisklêrio, heb goùd dehañ, ur stumm *V3* dalc'hmad:

P.326 "*La proposition complément d'objet n'a pas à être introduite par une conjonction. Il se trouve qu'en général le verbe est en tête de cette proposition [...] me 'lavar deoh e oa re goz ar marh-se [...] me 'oar mad ne zihuno ket ar plah abred a-walh [...] Mais on peut dire également, avec le sujet devant le verbe dans la proposition complément d'objet: me 'lavar deoh ar marh-se a oa re goz; [...] me 'oar mad ar plah ne zihuno ket abred a-walh...*"

gant e-leizh a frasennoù ma kavomp lies a draoù lakaet e penn kentañ an islavarenn: un anw boutin, P.331, P.346 "goude beza krouet ar gwaz, Doue a grouas ar vaouez"; un anw divoutin, P.334, "trohet e garrad gouzill, Lom a zellas ouz an heol"; un doareen, P.333 "pa rooh, mignon e vezoh, den fall avad, pa houlenoh", "nemed ha glao pill a rafe, dornet e vo warhoaz"; un anw-verb, P.223, P.351, "daoust pegen klañv eo, sevel a ra an diri", "goude ha me gouezfe mein, mond a rin beteg kêr".

Diaes e oa deomp soñjal neuse e-barzh pelec'h da lakaad levr-yezhadur Trepos, diwar a lâre diwarbenn urz ar gerioù em bije bet gallet lakaad e-barzh ar *strollad yezhadur hengounel-glan*. Koulskoude pa sellomp douzh ar pezh a vese displeget gantañ (da.sk. implij 'ressiss' deus ar

<sup>56</sup> *Opus citatum*. 1996.

<sup>57</sup> *Loco citato*. 1947. P.389

<sup>58</sup> Goyat, G. *Description morphosyntaxique du parler breton de Plozévet (Finistère)*, Rennes 2. 2012. P.339



stummoù-mañ-‘r stummoù<sup>59</sup> ‘ressiss’ ar pezh a vez lâret gant ar bobl. Gwir eo e oa levesonet gant ar yezhadur *hengounel-glan* e-keñver implij deus ar stumm *SVO* (petramant e oa gwir (!) ar pezh en doa lâret, en e barlant da vihannañ) med menegiñ ebed diwarbenn implij deus ar stumm *V3*, disheñvel douzh heni Kervella (gweled *supra*), e c’hellfemp lakaad Trepos e-barzh ar strollad *yezhadurioù mod-newez...*

R. Le Gléau, evel ma tiskouez titl e oberenn “*Syntaxe du Breton Moderne 1710-1972*” – n’eo ked ur levr-yezhadur e gwirionez – eh ae donnoc’h gant urz ar gerioù en ur zisklêrio teir fesson da sevel ul lavarenn: “*structure primaire*” ar verb displeget o vezañ lakaet e penn kentañ ur frasenn<sup>60</sup>,

“*structure secondaire*” [ar verb displeget o vezañ lakaet en eilved plass ur frasenn<sup>61</sup> hag ur stumm ispisial, dired med *stilistik*] “*structure tertiaire*”: “*Structure exceptionnelle, mais correcte, la structure tertiaire place le verbe en troisième position. Elle répond à un souci stylistique d’équilibre de la proposition ou de recherche de l’expression forte; [...] Abret pe ziwezat, Doue a vezo trec’h d’e enebourien. [Buez ar Zant gant an aotrou Morvan. 1869] p.730 Diwar neuze, ar sant a greskas e binijennoù. Buz p.14 E-traoñ an ti, Volantin a lavaras kenavo d’an tri faotr. [An Tri bouломig kalon aour R. Hemon. 1961] p.127*”.

Amañ ema meneget ar pezh a vez lâret gant S. Hewitt<sup>62</sup> diwar *terminal speakers*<sup>63</sup> Bro-Dreger a gav

---

<sup>59</sup> Ar pajenn 17 ha 35 e welomp enne reolennoù-pouesmouezhiañ deus *brezhoneg Bro-Gwened*, dreist-oll so bet meneget gantañ reolennoù disheñvel douzh re ar *C’hLT*: P.17 “*vann., tad (a long); pl. tadeu (a bref)*”; ha kement-mañ gwiriet – ewid parlant a Vargenag da vihannañ – e-barzh Le Pipec, Erwan. ‘Lecture critique du NALBB’. *La Bretagne linguistique*, no. 13, 2004, pp. 157–75. P.165 “/ta:t/ > /ta:’rœq/”; P.35 “*cependant, cette règle est loin d’être générale, en particulier dans les régions vannetaises situées en bordures de la Cornouaille.*”, gwiriet da gentañ gant F.Falc’hun (1981) p.p.147-49 hag e-barzh Plourin, Jean-Yves. ‘L’accentuation en Haute-Cornouaille et en Bas-Vannetais’. *La Bretagne linguistique*, no. 1, 1985, pp. 103–15.; petramant iwe diwarbenn implij deus an *doubliñ* verboù so (*gelloud*; *gouzoud*) ewid lakaad poues warne da vad hag a vez lâret en *Haut-Trégorrois* (p.249), gwiriet e-barzh Jouitteau, Mélanie. ‘La Conjugaison Analytique de Doublement Du Verbe En Breton’. *Ali Tifrit (Éd.) Phonologie, Morphologie, Syntaxe Mélanges Offerts à Jean-Pierre Angoujard*, PUR, 2013, pp. 327–54.

<sup>60</sup> Frasennoù stumm-nac’h: *ne fiñvan ket, ne gavan ket va hent ...*; troiennoù perifrastik: *gotozet o doa Tad Adrian, Rannet e oa kalon Adrian, Restaol a ran dit kement a zo eus da beadra, Sellit! Bez’ ez eus hentoù bihan dre ar strouezh*; war-lerc’h un islavarenn lakaet e penn kentañ ur frasenn: *Pa ziskennis d’an douar, e kavis labour en un atant vras*; e-barzh an divisoù lies awalc’h goude “*hag e*”: *E lavaren bremaik, hag ez eas kuit, hag e kavas kamaladed fall, neuze e teuas soñj dezhañ eus ar gêr, hag e savas, hag ez eas da gaout e dad*; hag ar verboù damskoazellañ: *ez an da ziskenn, e rankan lavaret deoc’h diwall eus daou dra...*

<sup>61</sup> Sujed e penn kentañ ar frasennoù (hag a vese kals e fin an 19<sup>ved</sup> kantved); war-lerc’h un doareen hag ur renadenn-eeun: *Sebezet-mik e chomont, dilavar e chom Erwan, Daou vreur am boa koshoc’h egedon*; war-lerc’h adverboù, lavarennoù kenlakaet: *War ar roziou e oa stank ar gwez, Diskredik ha fall galonet, e sellem an eil ouzh egile*

<sup>62</sup> *Opus citatum*. 2018. P.27

<sup>63</sup> Grinevald, Colette, and Michel Bert. ‘3: Speakers and Communities’. *The Cambridge Handbook of Endangered Languages*, Cambridge University Press, 1996, pp. 45–65. (PP.50-51):

“*This is a term that is found in the literature, although its negative connotations make it controversial. Some have suggested the term partial is preferable, although this would not distinguish them qualitatively from semi-speakers. Terminal speakers are those with some passive knowledge of the language and very limited productive skills,*

gwelloc'h lakaad ar verb displeget en trived plass en arbenn a sklærded al lavarenn pa vez lakaet un islavarenn en he raog. Mar bez diskouezet “frazennoù pennlammet” gant F. Kervella en e yezhadur<sup>64</sup> en ur lâred ema ur fazi o vezañ m'ema un dra hag a gavomp dre skrid kentoc'h ewid dre gomz<sup>65</sup>.

Koulskoude, heñvel eo ganiñ n'eo miret an doare-mañ nemed ewid ar skridoù – da lâred eo en abeg stilistik –, implijet e vez e-barzh peb kaoseadenn war bemdez gant ar vrezhonegerien ‘neus *tapet* ar yezh war *barlenn o mamm*<sup>66</sup>.

E-barzh al levr *Evel-se e oamp*<sup>67</sup>, ar skriwagner a ziskouez liës a stummoù hag a c'hellfemp ober gante ewid al lavarenn isurziet, hag e c'hellomp komañs ul lavarenn isurziet gant ur sujed?: evel ma lâr S. Hewitt<sup>68</sup>, skriwagnerien douzh tu ar bobl, kouls ha skriwagnerien douzh tu an Ilis, a gav gwelloc'h lakaad e penn kentañ al lavarenn isurziet pa vez un anw boutin pe divoutin ( da lâred eo pa ne vez ked ur raganw) “Pa veze kemeret teir pe beder bolennad, **ar vuhez he deze** kemeret ul liv all hag an Nog a lavare en ur dorchañ e vourroù gant palv e zorn... (P.148); Pa zeuas en-dro, **an horolaj a verke** dek eur seizh. (P.198); Pa ne gompene ket un dra bennak, neuze digouezhet er gêr, **e kemere** ar geriadur bras "Larousse" e daou levr warn-ugent, hag e klaske e-barzh diskoulm ar gudenn. (P.198)” Ar memes reolenn a vez lakaet d'ar stagell “peogwir” o vezañ m'ema é tont deus “pa + eo + gwir”: “... peogwir **tregont vloaz war-lerc'h e oant** c'hoazh naet ha kempenn evel veloioù nevez. (P.200)”, amañ so gwelet ur renadenn-amser hag e c'hellfemp lâred diwarni e vefe lakaet d'al lavarenn isurziet, ar memes reolenn evel ur frasenn eeun: un dra *newez-deut* a vefe lakaet e penn kentañ al lavarenn isurziet sokén.

Favereau (1997) a gennig deomp e-barzh e yezhadur ma so bet gouestlet un 200 pajennad ewid urz ar gerioù e brezhoneg hag evel pa ‘neus kontet pegementad da beb stumm e teu a-benn da *varnañ* peheni eo ar *structure majoritaire*: **A + e + V + (+ S + O)**.

Meur a stumm all a so bet disklêriet iwe: **Setu + V; Hag + e + V; S + a + V (+ O)** (ewid pouesañ); S

---

*sometimes reduced to frozen fixed expressions. This very limited knowledge can be the result of either very partial acquisition of the endangered language (say, overhearing it spoken irregularly by grandparents to each other), or of an advanced level of attrition in someone who might have been a more fluent speaker in childhood.”*

<sup>64</sup> *Opus citatum*. 1949. §753:

“Pa vez ur renadenn doareañ un tammig hir avat e vez kavet alies, er yezh skrivet, un troc'h er frazenn a gendalc'h neuze gant ur ger bennak ha n'eo ket ar verb en un doare personel. Setu ur skouer bennak eus an doare ober-se : An deiz war-lerc'h, beure mat, Arnus a oa krog da reizhañ pep tra a-benn al leur-nevez. (Dir-na-Dor) [...] Echu e bedenn gantañ, Gwenole a zeuas war blasenn an iliz. (I. Krok) [...] Ur seurt doare-se a gaver enta e labourioù hor skrivagnerien aketusañ. Lakaet e tle bezañ koulskoude da wir fazi an darn vuiañ eus an amzer ha ret skrivañ: ... e oa krog Arnus; [...] ... e teuas Gwenole ...”

<sup>65</sup> *Ibidem*. P.396, hag e ouzhpenn “*n'emañ mui o lec'h en ul levr deskiñ brezhoneg, da skouer e “Cours Élémentaire de Breton” R. Hemon a zo ar gentel 22 anezhañ da reizhañ penn da benn war ar poent-se.*”

<sup>66</sup> <http://banque.sonore.breton.free.fr/resultats.php5> (gwiriet d'an 3 a vis Mae e 2021), douzh ar frasenn c'hallec “*Chaque fois que nous étions malade, Joseph venait nous voir.*” eo bet roet gante (*Sant-Riwal, Pleurgad, Serval, An Ospital, Plouziri, Santeg, Kerrien, Moelan, Bourc'h-Kintin, An Houadig, Sulnieg, Plounez*), ar frasenn a stumm heñvel-mik: Stagell (*seul gwezh, beb taol, bewech* h.a.) + *ma pe a, e + V + klañv, Josef (Chop, Jojep* h.a.) + V + *da weled ahanomp (d'hon gweled)*.

<sup>67</sup> Herri, Herve. *Evel-se e oamp*, Al Liamm. 1982.

<sup>68</sup> *Loco citato*. 2018. P.27

**V O** (“*logique*” heb soñjal pouesañ war ar sujed); **S V O** (anaforenn); **nV + ober + S (+ O)**; **Bez’ + V + S**; **O + a + V (+ S)**; **n + V (+ S + O)** (stumm-nac’h); **S + n + V (+ O)**; ar *faux-sujet* e-barzh ar frasenn stumm-nac’h. Lakaet eo bet kemm gantañ etre daou **S V O**, unan ewid pouesañ war ar sujed, hag unan all é c’hounid takad diwar batrom ar galleg (P.297) en ur venegiñ P. Trepos (2009)<sup>69</sup> hag ouzhpenn kement-se e lâr e vese gwelet ar stumm *lojik*-mañ lies awalc’h e-barzh ar c’hollokoù pe levrioù-deskiñ brezhoneg, kentoc’h hag abretoc’h ewid ar stummoù all adaleg F. Vallée da vihannañ, ar pezh a so kontrel-mik bremañ: gwelet e vez ar stumm **nV + ober + S (+ O)** kentoc’h ewid ar re all, ur stumm hag a vez lakaet gant F. Favereau, *neutr* a-benn bremañ:

“(P.301) ... *de la conjugaison dite “périphrastique” [...] est également emphatique, au départ [...] Mais elle est assez largement usitée, voire usée, au point de devenir relativement neutre désormais, puisqu’on l’emploie dans quelque 6% du total des indépendantes ou principales ici considérées (Poher). Elle correspond alors toujours à une insistance particulière sur le verbe, donc sur l’action ainsi exprimée, outre, par usure de cet aspect sémantique, la nécessité d’ordonner diverses informations*”.

Ha kaos so bet lakaet gantañ war plass ar verb, tri anehe a-dra-sur evel m’ema bet lâret gant R. Le Gléau (1973), *V1, V2* ha *V3*, en ur zisklêrio ema ar verb en eilved plass ‘ni eo ar peb aliessañ, evelato. Rannet *V1* e 6 implij disheñvel (doare-gourc’hemenn, *tags*<sup>70</sup>, ‘ema’, verboù kreñv<sup>71</sup>, *V1* e Lanijen<sup>72</sup>, ‘kaoud’ e penn kentañ ar frasenn e gwenedeg), e c’hellfemp menegiñ implij ar stumm *V1* a-eneb douzh reolenn olleg ar sevel-frasennoù e brezhoneg, evel ma so diskouezet a-us, *V1* e Lanijen, e Bro Fissel-Fañch<sup>73</sup> hag er Vro Pourlet<sup>74</sup> iwe – da lâred eo en takad etre brezhoneg ar Gwalarn ha brezhoneg ar Gevred – ewid verboù so hebkén ataw: gweled<sup>75</sup> e Lanijen<sup>76</sup> hag e Gloñvel; ar verb ‘boud’ med heñvel eo ganiñ ne vez lakaet e penn kentañ ur frasenn evel-se nemed pa vez an amser-amdremenet *a posteriori*. Evel ma lâr O. Currie<sup>77</sup> (2000) ewid chañchamant urz ar gerioù e kembraeg rag-vodern (fin ar 17<sup>ved</sup> kantved) ema pouesus iwe selled douzh *ged pessort verb so savet ur frasenn*: P.16:

“*Simon Thomas, on the other hand, in both Hanes y Byd a’r Amseroedd and Histori yr Heretic Pelagius, alternates between the two constructions, showing quite specific preferences for AIV order with certain idioms, and for the dummy subject construction with other idioms. So, for example, with the 3s past of bod ‘to be’, Simon Thomas consistently uses the AIV form bu rather than the dummy subject*

<sup>69</sup> *Opus citatum*. 1996. P.352 “*La première forme a pris de l’extension au cours des dernières générations*”

<sup>70</sup> Evel: “*a c’hell bezañ*” Faverau, Francis *Opus citatum*. 1997. P.317

<sup>71</sup> Mond, dond, dleoud, galloud, rankoud

<sup>72</sup> Evenou, Erwan. *Description phonologique du breton de Lanvenegen (canton du Faouet, Cornouaille)*, thèse Rennes II. 1987.

<sup>73</sup> Kemener, Yann-Fañch. *Opus citatum*. 2014.: Chevalier “*Fele or penn-souch bras [...] Fel’ on den ‘erruet hag on hanter ijen gantañ war i chouk, ha cheto ‘n’añ war en ale.*”

<sup>74</sup> Ar Bras, Liliane. ‘*Mari: Amzer eurus meche paset, me bourap...*’ *Hor Yezh* 110. 1976.

<sup>75</sup> Gwraet so ur c’hemmadur *léni-provection* evel ma treusskriwe Y. F. Kemener, ‘*fele*

<sup>76</sup> Favereau, Francis, *Loco citato*: P.319 “*ec’h wele an den e dud*”

<sup>77</sup> Currie, Oliver. *Opus citatum*. 2000. P.16

*form fe fu; for the 3sg future of bod, on the other hand, he consistently uses the dummy subject form fe fydd, instead of the AIV form bydd. With the impersonal construction with the verb darfod 'to happen', Simon Thomas consistently uses the AIV form darfu, instead of the dummy subject form fe ddarfu."*

Skriwagnerien pe komserien e brezhoneg iwe a oar lakaad ar verboù-mañ-'r verboù e penn kentañ ur frasenn, ken gwir all ewid ar stummoù all herwez lec'hioù so, evel ma ne vez displeget ar verb 'kavoud' gosig nemed war batrom **nV + ober + S (+ O)** – da lâred eo “*Kavoud a rañ.../Kavoud a ra diñ*” – e Kreis-Breizh –, kouls ar verb 'gouzoud' a vez displeget lies mad er-mod-se e lec'hioù so “*Goùd a rez*” pa vez kavet “*te 'oar, c'hwi 'oar*” liessoc'h<sup>78</sup>.

Ha neuse, F. Favereau o tisklêrio *bezañs ar V3* e brezhoneg da heul R. Le Gléau (1973) a lâd ouzhpenn ema ar *V3* a-eneb douzh reolenn ar sevel-frasennoù e brezhoneg adarre, souezhus e mod ebed avad, a vez implijet kals sokén gant ar gomserien ken lies evel ar skriwagnerien: evel ma lâd R. Le Gléau (1973) e vez implijet dreist-oll ewid sklaered al lavarenn hag ewid lakaad *ur liw all* d'al lavarenn (*stilistik*). Alies e vez kavet un adverb e penn kentañ ha heñv bezañ heuliet gant ur sujed (pe sujed raganw pe sujed anw boutin, divoutin), stumm evel ma so bet lakaet gant O. Currie (2000)<sup>79</sup>, *AdvPS = Adverbial phrase + personal pronoun subject + verb; AdvNS = Adverbial phrase + nominal subject + verb*. E kembraeg rag-vodern iwe, ma oa ur yezh *V2 a priori* anehañ, e vese kavet ar stumm *V3* liessoc'h e-barzh an divisoù e kentañ gour hag en trived gour<sup>80</sup>.

Lakaet so bet kaos gant F. Favereau en e levr yezhadur diwarbenn plass ar sujed, en ur lâred pa vez lakaet ar sujed e penn kentañ ur frasenn ema ewid pouesañ warnañ awalc'h<sup>81</sup> hag ar raganwoù é sinifi *semi-exclamatif* pa vënt lakaet er penn kentañ.

El lodenn, urz ar gerioù olleg (P.330) 'noa skriwet e santomp ema-heñv é tamall d'ar stummoù 'generativel' all:

*“Cependant, si cette règle fondamentale s'applique très largement, l'usage que l'on disait jadis "tyran des langues" ou l'emploi usuel - facteurs également très forts dans le vécu des bretonnants (pour qui cette langue est tout d'abord intime et d'usage domestique ou de proximité) - font qu'il sera souvent puéril de vouloir à tout prix renverser ainsi certaines propositions, comme le suggèrent des "exercices structuraux" par trop schématiques souvent : ur muzul zo da bep tra (ha pa ve d'ober tokeier) ! (fig. il y a une limite à tout !).”*

Diwarbenn urz ar gerioù pa vez un islavarenn e tiskouez e c'hellomp lakaad (*V3* neuse) un dra all hag ur verb (*V2* neuse, ar pezh a so d'ar muiañ): P.336 “*Sujet ou complément en tête de*

<sup>78</sup> Favereau, Francis, *Opus citatum*. 1997.

P.298: “*Ainsi, par exemple, si l'on entend en Cornouaille maritime foar (< c'hwi 'oar) vous savez. . . , l'expression te 'oar. . . paraîtra-t-elle relativement emphatique au centre (= toi, tu sais - sous-entendu : pas moi, nous, eux etc.), car l'on dira plus usuellement et plus naturellement goût a rez (voire goût 'ouzez avec quelque insistance, goût 'walc'h 'rez / rit, g'walc'h 'rit par amuïssement), ou plus souvent encore, en incise, 'ouzez 'walc'h (Ph) tu sais bien, 'vel ouzout (T) comme tu sais . . .”*

<sup>79</sup> *Loco citato*. P.6~8

<sup>80</sup> *Ibidem*. P.6~7

<sup>81</sup> Favereau, Francis, *Opus citatum*. P.325

*subordonnée – si la structure ci-dessus [da lâred eo V2: Stagell + V (+ S) V (+ S)] est bien la plus courante, plusieurs exceptions existent, mettant le sujet (voire le complément d'objet) en tête de principale après la circonstancielle, par insistance ou non*<sup>82</sup>” Evel m'hon eus gwelet e c'hellomp lakaad ur sujed a anw boutin pe divoutin e penn kentañ un islavarenn evel ma vez diskouezet gant S. Hewitt (2018) evel ma so bet meneget gantañ, an traoù all a c'hell bezañ lakaet. Ma vez lakaet un dra hag a c'hell liammañ ar frasenn m'emañ enni hag ar frasenn en he raog, un dra *newez-deut*, a *posteriori*; un dra ar peb pouesussañ a vefe lakaet e penn kentañ un islavarenn neuse a-nes ma ne vefe ked ur sujed a anw boutin pe divoutin hag a gavomp gwelloc'h lakaad er penn kentañ.

Distro eo E. Chalm daved Kervella (1947) en ur zegass soñj deomp e vez lakaet an traoù pouesussañ e penn kentañ ur frasenn: P.204 “*Ainsi donc, en breton, on met en tête de phrase l'élément – mot ou groupe de mots – le plus important*” hag eo bet ouzhpennet evel ma tisklêr F. Favereau (1997) e vez roet ar briorited d'an doareenn ewid sevel ur frasenn *neutr*: P.204 “*Cela donne, dans les faits, majoritairement la construction: - A l'affirmatif: A + eV+ S + C Brav e oa an amzer dec'h, Debret eo bet merenn er gegin [...] s'ils ne débutent pas la phrase: 1. L'attribut a priorité, et suit le verbe Dec'h e oa brav an amzer, Er gegin eo bet debret merenn ...*”.

Ar yezhadur newezzañ ewid brezhoneg Bro-Gwened, levr-yezhadur L. Cheveau (2017<sup>83</sup>) a so da gentañ *reneweziñ* levr-yezhadur Guillevic&Le Goff (1902&1986) hag er *pinvikaad* gant skwer tennet gant L. Cheveau e-hunan diwar e enklaskoù heniennel pe diwar abadennoù Radio<sup>84</sup>. E-barzh e levr-yezhadur eh eus bet gwraet a-daleg 296 betag 329 ewid *peurzispleg* urz ar gerioù e gwenedeg *standard*. Ar c'hentañ menegiñ ‘neus gwraet a so enta:

P.300 “*On place en première place l'élément sur lequel on veut insister (à condition d'appuyer dessus avec la voix), l'élément nouveau dans la conversation et que l'on veut ainsi mettre en scène, l'élément qui répond à la question qui a été posée. En vannetais l'ordre “neutre” est généralement SVO (sujet-verbe-objet) dans les principales et indépendantes (en particulier quand le sujet est un nom ou groupe nominal). Autrement dit, quand on place le sujet en première place, on n'insiste pas spécialement dessus, à moins d'appuyer sur ce sujet avec la voix. Pour insister sur un pronom personnel sujet, on le suffixe après le verbe (me zo-me [...]). La phrase me zo bras n'insiste pas plus sur le sujet que bras on en vannetais.*”

Amañ e kavomp adarre ur menegiñ *newez* (*newez*, war-lerc'h LE GLÉAU 1973) hag lâr e vez lakaet e penn-kentañ ar frasenn un dra *newez-deut*, hag a c'hell liammañ ar frasenn hag ar frasenn en

<sup>82</sup> Favereau, Francis. *Opus citatum*. 1997. P.336: “*daoust 'n'a bet ur gordenn vat ha paeet ar priz uhel, ar bioù ne raent ket muioc'h laezh*”; “*ar wech kentañ a oan hanvet, me a oa hanvet an Dogan (P. Proux)*”; “*ma savit hugale fur, un dez e raint deoc'h plijadur !*”; “*ma'h eo amzer gollet, bet am eus c'hoazh alies*”.

<sup>83</sup> Cheveau, Loïc. *Opus citatum*. 2017.

<sup>84</sup> *Ibidem*. PP.10-11

he raog. Hag *SVO* o vezañ ur stumm *neutr* e gwenedeg – hag ouzhpenn gant ar pezh a lâr er bajenn 303<sup>85</sup> – e ouzomp enta petra sinifi ar frasenn “*Arhoah ni e huélou*”<sup>86</sup> e-tal “*Àrc’hoazh e welamp*”. Er pajennoù 325-327 e lâr *rannigoù* hag a vez implijet war-lerc’h an droienn “*n’ouiañ ked*” – na boud ma vez klewet ‘ma’ hembkén dre goms lies awalc’h – e welamp boud lakaet *ha(g-eñv)* da gentañ evel ma oa bet gant Guillevic&Le Goff (1986<sup>87</sup>) e-tal skwerioù savet getoñ, ur skwer tennet ag un oberenn savet ged Y. Marion (1856<sup>88</sup>): “eh añ da (c’h)oulenn get matezh ar person hag-eñ a zo gwir ar pezh a lâret diñ<sup>89</sup>”, chomet da gompren *hag-eñv* ema an *hag-eñv*-mañ un anaforenn hag a gass *ar pezh a lâret diñ* pe ur stumm *skornet* êl ma kavamp bremañ.

E-barzh ar pajennoù 181-182 e kavamp enta implij ar *c’honjugaison périphrastique* e gwenedeg *lennegel* ha *dre goms*. Fed a implij ar stumm-se hag a vese *ur bochad* e gwenedeg *lennegel* a vehe *marse* edan leveson ar *C’hLT*<sup>90</sup> peogwir ne vez ked implijet lies awalc’h tre ma vez anavet ar stumm-se ged an dud, nemed pa vez troiennoù *hemb rener ebed*<sup>91</sup>. Hag a oa gwir ged *gwenedeg lennegel*: da skwer, Yehann Marion pe Yann-Vari ar Joubious a vese implijet ar *c’hconjugaison périphrastique* gete pa vez *dic’hour* rener ar frasenn<sup>92</sup>.

Pa vez kaos ag an islavarennoù, e welamp ged ar pajennoù 315 ha 328 penaos ar stumm *V3* a so diwar an implij hag a so gwir er lec’hioù arall (dreist-oll àr-lerc’h ar stagell *peogwir* pe *perag*).

Ma’h omp bet o lâred<sup>93</sup> e vez lakaet ar pouesussañ tra e penn kentañ ur frasenn, adaleg F. Kervella (1947<sup>94</sup>) da vihannañ, gwelet e vese un neubeud a *yezhadurourien* o lâred e vez lakaet un dra newez-deut kentoc’h, en ur gompren ar soursi *stilistik* ar pezh a vez gwraet gant ar bobl ha gant ar skriwagnerien e gwirionez. Yezhadur F. Kervella, ha P. Trepos pe E. Chalm a ziskouez kentoc’h ur yezhadur klassel, un dra *a-gozh*, un dra hag a so reolieg ha ma vo aessoc’h d’an deskerien na bezañ

85

“*On peut utiliser l’ordre: complément circonstancie l– sujet – verbe... quand on n’insiste pas sur le complément circonstanciel . Er voure’h, Yann en deus gwelet e vestr-skol [...] (quand on insiste que c’est dans le bourg et pas ailleurs, on dira alors: er voure’h en deus gwelet Yann e vestr-skol [...]) Cependant, il est rare qu’on utilise ces structures d’insistance quand le sujet est un nom ou un groupe nominal: on le fait surtout quand le sujet est inclus dans le verbe (et donc qu’il est déjà connu car déjà mentionné auparavant dans la conversation ou le texte.)*”

<sup>86</sup> Guillevic, A., et Le Goff, P. *Opus citatum*. 1986 P.90

<sup>87</sup> *Ibidem*. P.115 “*On peut employer, au lieu de ha, la conjonction mar qui se construit comme dans les propositions conditionnelles avec le présent de l’indicatif [...]*”

<sup>88</sup> Marion, Yehann. *Vocabulaire Nouveau Ou Dialogues Français Bretons*. J. M. Galles, 1829. Amañ ema un embann newez...

<sup>89</sup> Ar skwer-mañ so tennet diàr dialog Marion (1856) ged L. Cheveau (2017) P.326.

<sup>90</sup> Cheveau, Loïc. *Ibidem*. 2017. P.181 “[...] *Cette conjugaison est très fréquente en VL, peut-être sous l’influence du breton littéraire KLT et léonard en particulier. En vannetais parlé, même si cette conjugaison semble connue partout avec un sujet nominal ou pronominal elle n’est vraiment fréquente que certaines zones assez réduites* [Pellann, da skwer].”

<sup>91</sup> Cheveau, Loïc. *Ibidem*. P.182 “*il pleut, ça colle, ça viendra*”

<sup>92</sup> Nemed e vez kavet ged Y.-V. ar Joubious, *ur voestad a frasennoù* ha n’int ked *dic’hour* o rener: leveson é toned ag ar *C’hLT*? (gweled *supra*).

<sup>93</sup> Ewid kaoud ur sell a-vras douzh ar lodenn-mañ en ho pedañ da weled *ar Stagadenn-vihan I: taolenn 1*.

<sup>94</sup> *Opus Citatum*.

m'ema pell awalc'h douzh an implij e gwirionez, kuit da lakaad un dra a-eneb douzh ar reolenn daoust ha m'ema kavet *ur yoc'h* gant ar gomserien hag ar skriwagnerien douzh tu ar bobl, kouls douzh an Ilis: yezhadur *preskriptivel* pe normet awalc'h, tress ar brezhoneg *xénolecte*<sup>95</sup> warne.

Kement traoù a zispak awalc'h ema disheñvel ar pezh a vez skriwet e-barzh levrioù-yezhadur douzh ar pezh a vez lâret gant an dud e gwirionez er memes mare<sup>96</sup>: disheñvel douzhte, en ur heuli ar yezhadur a oa bet skriwet en e raog, en ur glask sevel un dra normet, un dra reolieg. Dre-se pa studiomp war an traoù a so bet skriwet gant ar bobl, kontet gant ar bobl, e vefe gwelloc'h nompas barnañ warne diwar ar yezhadur hebkén: e tle – ar c'hontrel eo – sevel pe kaved ar reolennoù diwarne.

---

<sup>95</sup> Le Pipec, Erwan. 'Les trois ruptures sociolinguistiques du breton'. *International Journal of the Sociology of Language*, 2013. P.6: "A l'inverse, le breton le plus exogène sera celui qui, malgré une plus grande distance lexicale au français (effet recherché en soi), présente le plus de calques syntaxiques romans, le plus haut degré d'alignement sémantique, phonologique et accentuel sur le français, ainsi que lamorphologie la plus conforme au seul usage normatif." Koulskoude amañ e welomp kentoc'h un tech da bellaad douzh ar galleg dre *urz ar gerioù*.

<sup>96</sup> A-nes levrioù-yezhadur so...

### 2.3. *En tu all d'an Elle, d'an Oded, d'an Aon ha da Blougastell...*

Beteg pelloc'h omp bet o selled douzh an diforc'h etre ar yezh komset (gwenedeg, Kreis-Breizh) hag ar yezh skriwet (gwenedeg, an tachad Kreis tamm pe damm<sup>97</sup>: Lannuon, Pleiben, Priel h.a.). Dond a ra soñj diñ neuse daoust hag e vo dedennussoc'h lakaad diw rannyezh *klassel* skriwet tal-ha-tal an eil gant eben: ar gwenedeg *klassel* a-dra-sur hag ar leoneg *klassel* douzh an tu all.

Gwelloc'h 'meus kavet keñveriañ daou skrid, diwar ar mems mammenn: douzh un tu, ar pezh-c'hoari bet savet gant Job ar Bayon e gwenedeg *klassel* (pe er stumm sevenaet deus parlant Pluwigner) hag a oa troet gant Yann-Vari Perrot *troet e brezhoneg Leon*; douzh un tu all, katekisiou: peogwir e oa bet troet katekis Eskobti *Kemper-Leon* e brezhoneg kanton an Arzhanou (1891,1934) hag iwe peogwir e oa bet troet *katechim* Eskobti Gwened e brezhoneg *Bro Gourin hag ar Faouet* (1929). Buan-ha-buan e c'hellimp gweled pessort mod e vese stummet er parlantoù-se. Ha war-lerc'h, e vo sellet douzh versionoù disheñvel *ar Mab prodig* dastumet gant Josef Loth embannet e *Chrestomathie*<sup>98</sup> hag a so bet kempennet da voud embannet e-barzh levr P. Le Besco<sup>99</sup>.

Ar c'hentañ troidigezh gwraet etre parlañchoù da vad eo oberennoù J. ar Bayon. Oberennoù anehañ a vese lakaet gant Y.-V. Perrot e *brezhoneg Leon. En ozeganned* so bet troet, diwar an titl e vez gwelet ur skwer vad deus an droidigezh etre parlañchoù brezhoneg, *Ar C'hornandoned*. En diw oberenn staget an eil douzh eben e c'hellomp a-benn ar fin gweled tech ar parlañchoù disheñvel (da lâred eo e-keñver ar *rannyezhouriezh*), hengoun doare-skriwañ disheñvel an daou dakad (*fonologiezh*), ar c'heriaoueg disheñvel hag ar mod disheñvel da sevel ur frasenn. Evel ma tisklêr diouzhtu pa vez kaos deus *mor ar brezhoneg*<sup>100</sup> ema techet tud a *Vro-Gwened* da lakaad ar rener gosig bepred dirag ar verb, e c'hellfemp gweled penaos ema bet troet gant Y.-V. Perrot e *brezhoneg Leon*, en ur gompren *a priori* ne vez ked lakaet kals ar sujed dirag ar verb *pa ne vez ewid pouesañ warnañ*.

Levrioù Katekis a vese gwraet e brezhoneg iwe, meur a wech a-hed an amser, stumm disheñvel herwez lec'hioù hag an amser iwe. En o zouezh, al levrioù Katekis ma'h omp taolet gante eo *Katekiz Eskopti Kemper skriwet e brehoneg Kanton En Arhanaou, 1934* ha *Katekiz Eskopti Gwened evit Bro Gourin hag ar Faouët, 1929*, da geñver katekisiou all (heni Eskopti Kemper ha heni Gwened). Kanton an Arzhanou, goude ar *Revolussion* ema bet lakaet e-barzh an departamant Penn-ar-Bed. Koulskoude o vezañ ma vez kaoseet ur parlant pell awalc'h douzh ar re all, ne gomprens ked an dud *katekis Eskobti Kernew*, diw wech (e 1891 hag e 1934) e oa bet embannet ar c'hatekis e parlant ar vro-mañ, skriwet e mod ma vez distager er vro-mañ. Ha heni *Bro Gourin hag ar Faouët* iwe, a so bet deut d'ul lodenn deus an departamant Morbihan, hag int bet deut da *Wenedourien*, e oa bet roet ur

<sup>97</sup> Timm, Lenora. *Opus citatum*. 1989. P.370

<sup>98</sup> Loth, Joseph. *Chrestomathie Bretonne: (Armoricaïn, Gallois, Cornique)*. Emile Bouillon, 1890.

<sup>99</sup> Le Besco, Patrick. *Variations bretonnes sur la parabole de l'enfant prodigue*. TIR, 2016.

<sup>100</sup> Le Pipec, Erwan. *Opus citatum*. 2017.



skwerenn katekis *lakaet da gouchiñ* gant parlant ar vro.

Ma oa feal *katekiz Kanton en Arhanaou* da barlant ar vro-mañ (pe d’ar *gwenedeg klassel*) da geñver an doare-skriwañ hag ar framm, koulskoude santet e vez ema bet troet diwar batrom Katekiz Eskopti Kemper ha Leon. Hag iwe, *Katekiz Bro Gourin hag ar Faouëd* ne oa med ur c’hatekis skriwet diwar batrom *katechim Eskopti Guened*, lakaet da gouchiñ ar mod da zistagañ un tammig, levesonet mad koulskoude gant ar mod ma vese gwraet en Eskobti Leon, ha heuli ar *stil* ma kavfemp e *skridoù relijiel a-c’his kozh*, ha n’omp ked sur hag e vise kaoseet evel-se gant an dud<sup>101</sup>.

	<i>Katekiz kanton en Arhanaou</i>	<i>Katekiz Bro Gourin hag ar Faouët</i>
Framm	Ur <i>pennad-digor</i> (par d’ar c’h <i>Katechim</i> ) e penn-kentañ ar levrig, med heñvel douzh ar c’h <i>Katekiz Eskopti Kemper ha Leon</i>	Heñvel douzh ar c’h <i>Katechim</i>
Mod da “ <i>dreusfurmiñ</i> ”:	Diouzhtu e vez gwelet ar stumm <i>Inf. V</i> , ar pezh ne vese ked gwraet e gwenedeg gantañ: o vezañ ma oa ar c’h <i>Katekiz Eskopti Kemper ha Leon</i> dindan daoulagad an dud ‘noa troet?; med ar pezh a so iwe, e vez gwelet ur bern frasenoù e stumm <i>SVO</i> , lâred a c’hellfemp lâred petra a oa soñj ar <i>veleien</i> ‘noa lakaet ar C’hatekis er parlant-mañ, peogwir e vefe lâret evel-se gant peisantet a <i>Ganton en Arhanaou</i>	<i>z leoneg</i> a welomp skriwet paod-mad <i>guirionézou, buhez</i> h.a.; <i>tri ferson</i> (KLT lennegel) vs. <i>tri personn</i> (Gwenedeg lennegel e penn-kentañ an 20 <sup>ved</sup> kantved); a-wechoù e vez kavet ur merch eus ar parlant hag ur merch levesonet all gant ar yezh lennegel e-barzh ar memes frasenn: “ <i>evel ma ziskouez eun ti e zo bet eur mecherour d’ê zével.</i> ”; pe tud ag ar c’hanton an Arzhanou pe tud a Vro-Gourin hag ar Faoued ne vez ked implijet <i>te</i> med kaved a reomp ar stumm <i>te</i> , dre leveson é tond deus ar skridoù orin...
Skwerioù da heul e-keñver an dachenn rannyezhouriezh	<i>Jézus-Krist ighenon</i> =e-hunan, e-unan, e-gunan; <i>e yes</i> =ez eus; <i>-aou</i> =où; <i>-a</i> =lost-verb trived-gour unander an amser-vremañ	<i>greit</i> =gwraet; <i>outé</i> =outo (e-barzh <i>Katekiz Eskopti Kemper ha Leon</i> ); disheñvel douzh <i>Katekiz kanton en Arhanaou</i> ne vez ked kavet kemen a berzhioù par d’ar parlantou-se, pe a-wechoù e vez diaes goùd daoust hag-eñv emaint é tond deus ar galleg iwe “ <i>é zakremant (zakramant, gant un taol-mouezh war ar silabenn eil-ziwezañ) o vezañ ma vez skriwet sacrement pe o vezañ ma vez distaget zakr’mant en tachad-se?</i> ”
Ar pezh a chome...	<i>Limbaou</i> =Ifern ( <i>limbeu</i> a vez implijet gant beleien a Eskobti Gwened); pe ur bern gerioù so é tond diwar ar c’h <i>Katechim</i> ...	Implij deus an droienn <i>pehini</i> , ar pezh a vo bet dileset e <i>Katechim Eskopti Guened 1939</i> ; implij deus an dibenn-anw-verb <i>-out</i> ewid ar verboù n’int ked o tond eus + <i>boud</i> evel <i>gouzoud, rankoud, dleoud, galloud</i> , da.sk. <i>karout</i> : kement-mañ so bet ijinet gant Le Gonidec, en e raog ne c’hellimp ked kavoud anehe e-barzh ar geriadurioù, na ne vese lâret gant an dud herwez an ALBB (kartenn 287 “ <i>me voir</i> ”) a-nes ur wech hebkén en Enes-Sun, med kement-mañ a oa degasset gant ar c’hantikoù.

<sup>101</sup> Med gwir eo n’omp ked ewid tennañ skwer deus ar skrid ewid musuliañ penaos e vese kaoseet gant an dud d’ar memes mare, kompren a ra an dud pezh a lâr ar veleien, koulskoude nikun ne lârfé er mod-se. Thibault, Eugène. ‘*Notes sur le parler breton de Cléguérec (Morbihan)*’. Revue Celtique, no. 35, 1914,

P.1 “*Et si vous allez, par exemple, aux sermons du Carême, vous aurez le spectacle assez curieux d’une foule de femmes aux coiffes diverses – à quoi l’on reconnaît leurs paroisses respectives – serrées au pied d’une chaire du haut de la quelle un orateur prêche en un idiome conventionnel que toutes comprennent, mais que nulle d’entre elles, qu’elle vienne de Noyal, de Guern, de Cléguérec, du pays de Baud un peu plus éloigné ou de la région bas-vannetaise de Séglien-Guémené, ne parle à vrai dire.*”

2.3.1. *En Ozeganned hag Ar C'hoarnandoned: urz ar gerioù e gwenedeg klassel e liw ar bobl pe skeud an Emzao KLT a-ziadreñv?*

En ur selled douzh an diw oberenn a dal da dal – unan, ar skrid orin; hag unan all, ar skrid troet diwarnañ – bet skriwet gant daou skriwagner pe daou veleg – o tond deus beb a dachad pell deus ar C'hreis (unan deus Pluwigner hag unan all deus Plouarzhel) lec'h ma vese gwraet diw norm deus ar yezh klassel a-gent –, ema deut sklærroc'h: kavet so muioc'h a stumm *Inf. V* gant Job ar Bayon ewid na vise gwraet gant Yehan Marion pe e-barzh ar *C'hatechim*; gerioù diwar ar galleg chomet gant J. ar Bayon, skarzhet gant Yann-Vari Perrot evel ma kavomp ar memes tech e-barzh ar c'hatekisiou ; poues an destenn orin pa vez gwraet an troiñ, ur wech adarre.

An daou bezh c'hoari-mañ a so sañset bezañ lodenneg deus oberennoù e brezhoneg ewid ar bobl a vefe dle dehe diskouez penaos ober ar bobl da c'hoarzin diwar farsou lakaet e yezh *pemdezieg*, setu perag ema disheñvel al *letadennoù* pe ar *hununnoù* implijet en diw oberenn, a-balamour ma ne vise ked komprenet ur *malinrous* bennak er Gwalarn<sup>102</sup>. Ha ma sellomp pizh douzh ar pezh-c'hoari-mañ, ema deut sklær penaos pal ar pezh-c'hoari-mañ n'eo ked lakaad ar bobl da c'hoarzin hebken: ober kelennadurezh dehe eo ar pal all iwe. Evel ma ouzomp ema ar *vezwerezh* al *lontegezh* gwashañ diwar ar pezh a vez lâret gant ar c'hatekis<sup>103</sup>, an daou vezwer kollet o hent a gass d'ar gêr, *jujet* pe *barnet* gant an *Ozegan* pe gant ar *C'hornandon*; hag a-benn ewid reiñ ur gelennadurezh kuzet a-dreñv e tle bezañ gwelloc'h lakaad da silañ dre bosioù sklær ha simpl kompren gant ar bobl, ne oa ked dle bezañ diaes.

En Ozeganned	Ar C'hoarnandoned
<i>(Ean e huch)</i>	<i>(Youc'hal a ra)</i>
<i>Ma nen doh ket bouar na mud <u>hui hel</u> erhoal reskond merhat</i>	<i>Ma n'oc'h na bouzar, na mut, e c'hellit respont ac'hanon emichans</i>
<i><u>Ret e vou</u> d'ein perchanj kousket er mez</i>	<i>Hag e doare <u>e vezo</u> red d'in kousket er-meaz</i>
<i>(Ean e goëh ar en doar)</i>	<i>(Hag e <u>kouez</u> d'an douar)</i>
<i>(Epad ma tirohant <u>kleuein e hrér</u> en orglézeu-bihan é hoari el aveit ou luchenat)</i>	<i>(Epad m'en el roont da gousket e <u>c'hoarier</u> eun ton luskellus bennak)</i>
<i>ha <u>te hortei</u> ken em bou kontet betag tri</i>	<i>hag e <u>c'hortozi</u> ken n'am bô kontet betek tri</i>
<i><u>Te gleu</u>, ma tivoleùou, ma tivoleùou</i>	<i><u>Klevet a rez</u>, m'ez tivouzello !</i>
<i>Ker iein e oé touchant me lavreg el en erh</i>	<i>Bremaik va lavreg a yoa ker yen hag an erc'h</i>
<i>Kredet vehé bremen é ma en tan abarh.</i>	<i>lavaret 've great e vefe an tan ennan breman</i>
<i>(Kent pel é <u>tirohant</u> hag <u>en orglézeu bihan hum lak</u> éndro de hoari eit ou luchenat.)</i>	<i>(<u>C'hoari rear</u> adarre eun ton luskellus bennak.)</i>
<i>(En Ozeganned e <u>hra</u> diù pé tèr guëh en dro ag er lér-hoari, en ur gannein.)</i>	<i>(<u>Ober a ra eur zutadenn</u> hag ar c'hoarnandoned a <u>zilamm</u> a bep tu war leurenn an teatr.</i>
<i>Marù <u>int</u> marsé ?</i>	<i>Marteze <u>ez int</u> maro</i>

<sup>102</sup> An anvioù-lec'h so bet chañchet iwe: “Guel grechénion ne vou ket kavet nag é Pleuignér na memb é Landaul” > “na vo ket kavet unan gwelloc'h nak e Kleder nak e Lanndi”

<sup>103</sup> *Katechim Eskopti Guéned*, 1939. P.57: “Péhani é er lontegeh goahan? – Er lontegeh goahan e zou er véuerezh, rak ma lam é skiend vat get en dén, e gas en tiegèheu de gol, e zoug d'er baillardieh ha de gement droug e zou.”

<i>(Ean e goeh ar é grabaneu)</i>	<i>(Koueza a ra war e grabanou)</i>
<i>(Eit ou skontein, petra gobér?)</i>	<i>Penaoz en em gemeret evit o spounta?</i>
<i>(Ken e sonnou en Anjelus én ur chapél penag tro-ha-tro)</i>	<i>Da c'hortos an Anjeluz da zeni en eur chapel bennak diwardro!</i>
<i>(Eit ou dihousk petra gobér?)</i>	<i>Penaoz ec'h en em gemerimp 'vit o dihuni?</i>
<i>me lakou mé en huen de grol én é chaucheu !...</i>	<i>neuze e vezo lakeat ar c'houenn da zansal en e lerou.</i>
<i>(Kent achiù en devéhan poz int e zishousk en neu veür én ur hrein tauleu kern dehé hag int e ia kuit, én ur hoarhein, er bugul-noz geté.)</i>	<i>(Kerkent ha m'eo echu o c'han, e tihunont an daou vezvierien en eur rei d'ezo taoliou-dorn hag ez eont kwit en eur c'hoarzin, ar bugel-noz war o lerc'h.)</i>
<i>Eit oh merhat é konzet.</i>	<i>Evidoc'h eo e konzit m'oar vad!</i>
<i>Kollet omb!</i>	<i>emaomp devet</i>
<i>Ur hrechén mat on mé!</i>	<i>Me zo eur c'hristen mad</i>
<i>Guel grechénion ne vou ket kavet nag é Pleuignér na memb é Landaul</i>	<i>na vo ket kavet unan gwelloc'h nak e Kleder nak e Lanndi</i>

En ur lenn *En Ozeganned* ema deut anac'h implij ar stumm *SVO* e *gwenedeg* ha strizh implij ar stumm *Inf. V* e *gwenedeg*. Implijoù ar stumm *Inf. V* a glot gant ar pezh a lâr Kersulec & Solliec (2012) a-vras, a-nes implij stank ar stumm *SVO* ewid ar verb intransitivel *kouezañ*: “*(Ean e goeh ar en doar); (Ean e goeh ar é grabaneu)*”, penaos displegañ? Martese awalc'h e kavent gwelloc'h lakaad ar rener dirag ar verb *kouezañ*.

“*Ur hrechén mat on mé; me zo eur c'hristen mad*” a zislâr ar pezh a gred deomp: an doug ma kav gwelloc'h ar *Wenedis* é lakaad ar rener dirag ar verb. Koulskoude amañ e welomp ar stumm *Pred VS* digant J. ar Bayon ha *SV* digant Y.-V. Perrot. Martese ne vez ked implijet ar stumm *SV* e *gwenedeg* kenkous estlammañ<sup>104</sup>.

Evel ma kavomp e-barzh ar *C'hatechim* ha gant S. Seveno (1917), ar stumm *Inf. V* a vez kavet gant ar verb displeget dic'hour, ewid an islavarenn sokén: “*(Epad ma tirohant kleuein e hrér en orglézeu-bihan é hoari el aveit ou luchenat)*”.

Taolenn 4

Ar ger-stagañ ‘penaos’ a vez kavet gant J. ar Bayon, ha ‘neus bet erlec’hiet ‘en’ gwenedeg rag-vodern: “*Ya, té é. Pen dé guir penaus* nen des chet meit omb hun deu ama, ne hellan ket elkent laret é ma matèh er person é. > (Y.-V. Perrot) *Ya, te eo ! Ha p'eo gwir n'eus nemedomp hon-daou aman, ne c'hellan ket lavaret koulskoude eo matez ar person an hini eo !; Na pé ur chonj ! Ean e gredé perchanj penaus* n'em behé ket bet gouiet ! > Na pebez sonj drol ! Hennez a grede, m'oar vad, n'am bije ket gouezet; Eit diskoein d'is penaus n'em es chet eun erbet anehé, é han aben d'ou galhùein de zonet éndro > evit diskouez d'it n'am eus ket bet a aoun razo, ez an d'o gervel da zont en-dro”. O vezañ ma n'eo ked bet implijet ‘med dindan stumm-nac’h e oa red diñ selled douzh S. Seveno (1917) ewid gweled urz ar gerioù pa vez ur frasenn-kadam: “*Hou chonj é, Filoté, donet de vout devot, rak er relijion e zisk d'oh penaus* en devision e zou ur vertu hag e hra plijadur vras d'en Eutru Doué.”. Libr eo urz ar gerioù war-lerc'h ar ger-stagañ ‘penaos’ e *gwenedeg* hag a so disheñvel douzh ‘en’

<sup>104</sup> Favereau, Francis. *Opus citatum.* 1997. P.298

gwenedeg rag-vodern ma rankemp lakaad ar verb just goude, na disheñvel douzh an implij e *KLT* ma rankomp lakaad ar verb just war-lerc’h. Heñvel eo koulskoude douzh an implij ‘*lar*’.

Un tech all a gavomp etre an diw oberenn a so: implij ar stumm heb verb displeget ‘*diverb*’ ewid lakaad lusk e-barzh ar posioù, evel: “Eit ou skontein, petra gobér?; Eit ou dihousk petra gobér ? > Penaoz en em gemeret evit o spouna? ; Penaoz ec’h en em gemerimp ’vit o dihuni ?”

Keneve an daolenn a-us e kavomp frasennoù savet en *Inf. V* gant J. ar Bayon ha troet er memes fesson gant Y.-V. Perrot:

En Ozeganned	Ar C’hornanded
<i>Kleuein e hran unan penag é fourbouchat ér bod-drein sé</i>	<i>Klevet e ran unan bennak o filbouchat er bod drein-ze</i>
<i>Krénein e hran kement</i>	<i>Krena ’ran kement</i>
<i>Farsal e hrér marahueh</i>	<i>Farsal a rear meur a wech</i>
<i>Kredein e hré guélet en diaul</i>	<i>kredi rea gwelet an diaoul</i>
<i>kredein e hran nen dé ket mé é, kansort</i>	<i>kredi ran n’eo ket me eo, konsort</i>
<i>krenein e hret hoah get hou korvad eun, el pe vehé lan a erh hou lavreg !</i>	<i>krena rit c’hoaz gant ho korfad aoun evel pa vefe leun a erc’h ho lavreg</i>
<i>(Huitellat e hra un taul pé deu.)</i>	<i>(Sutal a ra.)</i>

Taolenn 5

Klotañ a ra gant ar pezh so kavet gant Kersulec & Solliec (2012) med war a sellomp e oa bet implijet gant J. ar Bayon muioc’h a stumm *Inf. V* ewid e-barzh ar *C’hatechim* hag ewid na vefe bet gant Y. Marion<sup>105</sup> – da lâred eo skridoù relijiel –, ezomm so neuse diforc’hiñ herwez pessort skrid (hag-eñv eo ur skrid relijiel, pe ur pezh-c’hoari h.a.) pe herwez pessort gre ma oa bet skriwet.

Ne oa ked bet un dra chomet dianav ar stumm *Inf. V*<sup>106</sup> – paneve ar verb displeget en dic’hour – gant ar skriwagnerien é tond deus Bro-Gwened d’an 19<sup>ved</sup> kantved: gant Yehan Marion ha Joakim Gwilhom (1829,1863<sup>107</sup>), er bajenn 57 (pe P.65 ewid skwerenn J. Gwilhom) e welomp an displegañ-verb, e-tal ar stumm ma kavomp ar rener dirag ar verb *mé gonz* pe *te gar*, e welomp a-benn-kàer ar stumm *Inf. V conz e ran* pe *carein e rès*. Mar ne vefe ked bet implijet ar stumm-mañ n’ouifent ked ken na vefe ked lakaet e-barzh an divisioù da zeskiñ ar brezhoneg (pe ar galleg).

Chomet eo da c’houzoud ema bet un dra a-gozh evel m’hon eus gwelet ma ne vese ked gwraet gantañ gant ar skriwagnerien e-barzh o skridoù, peogwir ne gavomp ‘med dibaod a wech e-barzh ar skridoù d’ar gre-se a-balamour ma ne welomp ‘med 0,6% bennak gant Y. Marion (1790<sup>108</sup>). A-se, penaos e c’hellimp kompren m’ema bet implijet *kals* ar stumm *Inf. V* gant J. ar Bayon en e bezh-c’hoari?

Gant-se n’en em viromp ked da deurel ur sell douzh ar pezh a vese gwraet en e raog: choaset eo bet ganiñ da selled pizh douzh ar skridoù bet savet gant Yann-Vari ar Joubious diwarbenn an ao.

<sup>105</sup> Le Pipec, Erwan. *Opus citatum*. 2017. P.10

<sup>106</sup> Hag a vez anavet e-barzh ar parlantoù iwe, Cheveau, Loïc. *Opus citatum*. P.181.

<sup>107</sup> Marion, Yehan. *Vocabulaire nouveau ou dialogues français bretons* 1829; Gwilhom, Joakim. *Vocabulaire nouveau ou dialogues français bretons* 1863.

<sup>108</sup> Le Pipec, Erwan. *Loco citato*. P.10

person Pier Nourry<sup>109</sup>. Ar skridoù orin a oa bet embannet e-barzh *Lihérieu bréidiah er Fé* 1843~1845. Tennet ‘meus ur voestad frasennou savet gantañ en *Inf. V*:

“Goud e ran penaoz... (P.104); Hellein e hrér... (P.106); Goud e hram paot mad reihoh... (P.107); Hellein e hrér hoah gwélet... (P.107); Goud e hram reih mad penaoz... (P.109); Lakein e hrér étré é zaouarn ar halis hag un osti heb boud konsakret; ivlein e hrér é zaouarn ged ivl sakret. (P.109); ha larein e hrér hoah hiniw an dé (P.112); mes gouiein e hran reih mad penaoz... (P.112); Ha kredein e hra-eañ én en-devo muioh a furnéz... (P.113); Goud e hré mad é oé... (P.114); ha neoah, konz e hré ag un dén e oé marù deu-ugent vlé kent (P.116); Em boud e hran... (P.118); ha troein e hra an énéaneu de’r mad... (P.120); Em fariein e hrehe neoah an neb e gredehé penaoz... (P.120); Bourrein e hré peb unan boud én tu getoñ... (P.121); Mes hag hellein e hrt-hwi lared... (P.123); Anadein e hré àr é fas ar joé... (P.123); Em vahein e hré ar bobl eid selled an élig-sé (P.124); Magein e hré an dud ehommeg (P.125); Lénnein e hram... (P.125); ha duein e hrent ged an naon... (P.125); Tamallein e hrant dehoñ é arhoueregeh... (P.126); Goulennein e hré ged Doué é wellaen... (P.129); Em gredein e hré ér baraouéz... (P.129); ha meulein e hrein-mé an aotrou Nourry... (P.129); Mes hellein e hrér lared penaoz... (P.131); Goulennein e hré m’en-devehé... (P.131); Moned e hrei an ivern àr an douar... (P.132); hag é gwirioné viktoérein e hreint... (P.132); sentein e hran dohoh (P.137); Krénein e hran ne droehé de zroug de’r vélean a Spagn... (P.138); Krénein e hran ne saùehé un dé éneb d’o bélean... (P.138); Douarein e hras én ur porh ag ur Morbihan... (P.142); Gwéleïn e hrér mem tud degas àr-walh... (P.145); Moned e hras de Logonéh... (P.145); Goulenn e hran ged Doué... (P.147); Doned e hrér a vouestad d’er hlevet... (P.147); Larein e hrér é tas Begnénez d’er goulenn ged an aotrou Pancemont... (P.147); larein e hrér ohpen penaoz... (P.147); mes êsad e hra dehoñ... (P.148); Kemennein e hré én testamant-sé ma vehé bet kaset, kentih èl é varù, e gorv d’é barréz a Vegnéz... (P.148); Kavein e hrér an eur ag ar marù... (P.148); Fallein e hré hoah dehoñ predeg ur wéh... (P.148); Goulenn e hrant ged Doué... (P.149); Gortoz e hran dé ar jujemant, é pehéni é vein reneùéet! (P.149)”.

Gwelet e vez sklâer so kals frasennou savet en *Inf. V*. Gwir eo e welomp ar memes verboù a vez displeget lies awalc’h en *Inf. V* (goud, goulennein, hellein, krénein h.a. gant an dibenn-verb -ein ataw<sup>110</sup>) hag ar verb displeget en dic’hour (e hrér), ne zislâront ked penaos ema red selled douzh pessort gour, pessort verb pa vez dielfennet ar frasennou.

Red eo kompren soñj ar Joubious diwarbenn ar brezhoneg kent ewid lâred perag e kavomp kement a frasennou en *Inf. V*: “Levezonet é bet ged an romanteleh él é gansorted ar Gonideg, Kermarker, Brizieux. Tost ar-walh de sonjeu ar Gonideg é oé: de lared é glanaad ar parlant ha skarhein ar gerieu galleg.”<sup>111</sup> Pe gant e gomsoù dehañ ema deut splannoc’h:

<sup>109</sup> Ar Joubiouz, Yann-Vari, et Patrick Le Besco. *Oberenneu klok*. Emgleo Breiz : Ar Skol vrezoneg, 1993. P.101~149

<sup>110</sup> Châtelier, Antoine. ‘Noms Verbaux Dans La Littérature En Vannetais Classique, Le Cas Des Noms Verbaux « doubles » et de En Devout « conjugué »’. *Etudes Celtiques*, no. 42, 2016, pp. 249–66.

<sup>111</sup> Ar Joubiouz, Yann-Vari, et Patrick Le Besco. *Opus citatum*. P.4

“Un dén ré speredet oé an aotrou Nourry eid ma vehé de chañjein nétra ag ar substañs ag é lévreu, mes an aotrou Nourry, èl oll an dud ag é amzér, e oé taolet braz ged ar galleg; sod oent, é gwirioné, getoñ. Laret é vehé e kavent é oé ar brehoneg ré beur, hag é oé red er pinùidikad ged gérieu galleg. Seul mui ma oé hañval o brehoneg doh ar galleg, seul braùoh én er havent. N'em lakent ket tamm érbed é poén eid klah ur gér brehoneg; ma n'em gavé ket édan o dorn, kentih é kemérent unan galleg; ne sellent ket doh kement-sé. – Mes, e laro unan bennag, ne vern nétra ha breton pe goll vo ur gér, dré ma vo komprenet. – Nend on ket mé ag ar sonj-sé, hag un droug braz é kavehen ma vehé kohonet ur predeg e zo komzet é Breih a-houdé deu vil vlé zo, meur-a-gand vlé eid ne oé anad érbed ag ar galleg. An aotrou Nourry, daoustoñ ma oé un dén speredeg[*g*] braz, a em farias èl ar ré ‘rall; nétra truégoh (me gred el laret) eid é vrehoneg; hanter galleg é. De'm soñj-mé enta é vehé red lemel ag é bredegeu, ker kaer a-du-‘rall, ar gérieu galleg, ha lakad én o léh gérieu breton.<sup>112</sup>” “Red é lared neoah éma an trajedi-sé, èl é bredegeu, kousiet dré un troh gérieu galleg<sup>113</sup>.”

Gwelloc'h e kave gant Y.-V. ar Joubious neuse amprest ur ger diwar ar *C'hLT* ewid diwar ar galleg, setu ma kavomp ar ger evel *Breiz, barz(ed), ehommeg*.

Unan a urz ar gerioù ha ne gavomp ked gant ar skriwagnerien en e raog a so iwe: *boud + ema* evel: “Boud émant doktored braz (P.145)”. Un amprest diwar ar *C'hLT*? pe un emdroadur diwar batrom “boud so”? Chomet eo da c'houzoud...

Mar bez levesonet Y.-V. ar Joubious kement ma vese implijet gantañ ar stumm *Inf. V*, stank er *C'hLT hebkén*, da lâred eo un dra *diakourset* ewid lennerien *Lihérieru Brédiah er Fé*, ne vefemp ked souezhet ma ne vefe ked bet ar gelaouenn-se oc'h ober stad evel ma vese *Lizeriou Breuriez ar Feiz* savet gant Kervarker e 1849 o implij ar yezh *glannaet* gant ar Gonideg ha ne c'hellimp ked displegañ penaos e oa deut *Feiz ha Breiz* – o implij ar yezh tostoc'h douzh ar bobl – a-benn d'ober stad. Hag ouzhpenn kement-se ma venne Y.-V. ar Joubious *skarzhañ* kement traoù a denn d'ar galleg ne welfemp ked ur *voestad* frassenoù en *SVO* all hag a so muioc'h ewid ar frassenoù en *Inf. V*. Ken gwir all ewid pezh-c'hoari Job ar Bayon ma welomp un dornad frassenoù en *Inf. V* – hag a so nebutoc'h ewid ar frassenoù en *SVO* e gwirionez – un danvez re farsus, a ra kelennadurezh hag all a oa bet gwraet ewid ar bobl. Ha ma vefe gwir, e tlefe bezañ tost douzh yezh ar bobl, ne dle ked skriwañ ar pezh na gomprenet ked ar bobl d'ar gre-se.

Diaes e vefe neuse displegañ perag e vese implijet gant ar Jobious pe gant ar Bayon e-barzh skrdioù ewid ar bobl, muioc'h a stumm *Inf. V* ewid ar pezh a gavomp e-barzh ar skridoù relijiel. Ur perch deus *glannaad ar yezh* hag a vese abaoe ar Gonideg ewid ar brezhoneg? Pe ur perzh deus ar bobl e Bro-Gwened? Red eo gouzoud e chom ar stumm *Inf. V* ul lodenn vihannoc'h ewid ar stumm *SVO*

<sup>112</sup> Ar Joubiouz, Yann-Vari, et Patrick Le Besco. *Opus citatum*. P.119

<sup>113</sup> *Ibidem*. P.123

gant J. ar Bayon ha gant ar Joubious. Ewid dispakañ ar wirionez so ezomm d'ober ur studi diwarbenn dielfennañ urz ar gerioù diwar ar skridoù savet gant *trived rummad ar skriwagnerien* deus Bro-Gwened, da lâred eo da vare Joakim Gwilhom, Yann-Vari ar Joubious hag a oa tud a *Lihérieu Brédiah er Fé*; e-tal ar skridoù savet d'ar memes mare er *C'hLT*, da lâred eo da vare ar Gonideg, Kervarker hag ar c'hentañ *Feiz-ha-Breiz*. Rekis e vo studïañ skridoù savet war-lerc'h ar rummadoù-se: rummad *Dihunamb* hag ar skriwagnerien *KLT* da lâred eo rummad *Emzao* F. Jaffrennou. Ar rummad war-lerc'h Brezel kentañ ar Bed a so bet levesonet gant ar yezhoniourien é klask glannaad ar brezhoneg c'hoazh, sevel ar brezhoneg brezhonekoc'h, e-keñver ar c'heriaoueg kenkouls evel urz ar gerioù, dreist-oll diwarbenn ar stumm *S V O* hag *Inf. V* hag en ur *bismigañ* brezhoneg Bro-Gwened ouzhpenn kement-se<sup>114</sup>:

*“personnes, celle qui parle et celle à qui l'on parle, parce qu'elles sont au premier plan et s'opposent l'une à l'autre:*

*- Me a zesk mat, ha te, Yann?, 'Moi j'apprends bien, et toi, Jean?'*

*- Me a zesk mat ivez, 'J'apprends bien aussi.'*

*Mais pour la troisième personne on emploie rarement ainsi heñ, hi, i (int) avec le verbe impersonnel. Le faire seulement lorsqu'il y aura emphase réelle sur le pronom sujet et dans les oppositions:*

*'Il rit et elle pleure.', heñ a choarz ha hi a leñv.*

*Ceci ne s'applique pas au vannetais dont la syntaxe sur ce point est très francisée.*<sup>115</sup>;

*“Construction de la phrase. La phrase bretonne commence par le terme sur lequel on veut attirer l'attention. Dans certains cas l'emploi du verbe au début de la phrase donne à celle-ci une tournure plus bretonne.*

*Exemples :*

*1° Le chien aboya toute la nuit.*

*Ar c'hi a harzhas e-pad an noz.*

*E-pad an noz ar c'hi a harzhas.*

*E-pad an noz e harzhas ar c'hi.*

*Harzhal a reas ar c'hi e-pad an noz.*

*2° Il pleut tous les jours.*

*Glav a ra bemdez.*

*Bemdez e ra glav.*

*Ober a ra glav bemdez.*

*3° L'enfant joua quand il eut appris sa leçon.*

*Ar bugel a c'hoarias pa en devoe desket e gentel.*

<sup>114</sup> Gweled ar pennadoù '*fal labour*', Loeiz Herrieu (Dihunamb 385 mis Gwengolo 1943) hag '*Er brehonekan brehoneg*', Loeiz Herrieu (Dihunamb 387 mis Du 1943)

<sup>115</sup> Vallée, F. *La langue bretonne en 40 leçons*, Librairie Prud'homme, 1926. P.12

*Pa en devoe desket e gentel, ar bugel a c'hoarias.*

*Pa en devoe desket e gentel e c'hoarias ar bugel.*

*C'hoari a reas ar bugel pa en devoe desket e gentel.*

*La dernière phrase de chaque exemple est plus bretonne que les autres.*<sup>116</sup>

### 2.3.2. *Pewar C'hatekis: ar stumm S V O hag ar stumm Inf. V*

Hag ar C'hatekision, choaset 'meus keñveriañ un nebeud frasennoù deus *Katekiz Eskopti Kemper ha Leon, 1908* ha *Katekiz Eskopti Kemper skriwet e brehonek Kanton En Arhanaou, 1934*; *Katekiz Eskopti Guened evit Bro Gourin hag ar Faouët, 1929* ha *Katechim Eskopti Guened, 1939*. Choaset so bet frasennoù disheñvel a urz ar gerioù etrese, ha lakaad aneche war wel nemedkén.

*-Katekiz Eskopti Guened evit Bro Gourin hag ar Faouët ha Katechim Eskopti Guened*

E-keñver <i>Int. V</i>	Bro Gourin hag ar Faouët 1929	Katechim 1939
Doare-gourc'hemenn	<i>Miret a ri an oll suliou, gant euvrou mat ha pèdennou</i>	<i>Arsaù pep sul a labourat, eit chervijein Doué devot mat</i>
Hag e V	<i>ha kenig a rant aour, ezans ha mir.</i>	<i>hag é kenigant dehon eur, ansans ha mir.</i>
S V	<i>Guéllat a ra ..., kreski a ra..., lakat a ra...;</i> <i>ha dont a ra en o zonz en lakat d'ar maro.;</i> <i>Nann, koll a rant hemp dalé o stad eurus o tizenti ouz Doue.;</i> <i>kemér a ras truez outan</i>	<i>Ean a huella ..., e saù ..., e gresk ..., e laka ...;</i> <i>hag ind e laka én ou chonj er lahein.;</i> <i>Nepas, ind e gollas kent pel ou stad santél hag eurus...;</i> <i>ean e geméras truhé doh-ton</i>
Diverb	<i>choaj a ra en o mesk daouzek abostol, ha lakat a ra</i> <i>Sant Per da vestr var ar ré all.</i>	<i>ha ean keméret deuzek aveit gobér apostoled anehè ha lakeit</i> <i>sant Pièr de vout mestr drest er réal.</i>

#### Taolenn 6

Diforc'hioù a gavomp etre daou gatekis en *Eskopti Gwened* a so, ma kemeromp ar skwer a-ledan, implij ar stumm *Inf. V* (ar c'hconjugaison périphrastique): frasennoù ma oa implijet *Inf. V* e *Bro Gourin hag ar Faouët*, e gwenedeg klassel d'ar mare-se (1939) e oa implijet stummoù all, *S V* al lodenn vrassañ aneche

Implij ar stumm *Inf. V* e-barzh ar *C'hatechim* (1939) a vez gwelet muioc'h pa vez ar rener dic'hour pe difetiss (Jesus-Krist, goude e varw<sup>117</sup>?), un arvez *inkoativel*<sup>118</sup> ha pa vez ur goulenn é sevel<sup>119</sup>: da lâred eo pa vez lakaet poues war an ober. Dic'hour o vezañ ma n'eus rener ebed, n'omp ked ewid pouesañ warnañ, gant verboù so nemedkén. Pa vez un ober ha n'eo ked reoliet gant ar rener e vez gwelet ar stumm *Inf. V*<sup>120</sup> evel ma lâr Kersulec & Sollicec (2012):

<sup>116</sup> Le Diuzet, Alain. 'Evit Ar Vrezhonegerien: Cours Élémentaire'. *An Eost*, Gwengolo 1943, p.7.

<sup>117</sup> "Chom e hra épad deu-ugent dé get é Apostoled aveit achiù ou diskein ha laret dehé er péh ou doé d'ober."

<sup>118</sup> "Padein e hrei perpet [eneñv]" (adaleg ar marw sokén? Goude ar marw sokén?)

<sup>119</sup> "Ha padein e hrei perpet guir Iliz hur Salvér?"

<sup>120</sup> "Merùel e hra, guénér er groéz, én ur bardonein d'é éneberion hag én ur genig é vuhé d'é Dad aveit salvedigeh en dud."



“c. *Do the human actant control the process ?*

(8) *monet e raer er vouilhenn, -Baud*

*to go + v. p. + do/make + IMPERS + in/DEF + mud*

*One's goes in the mud [to get stuck in]*

(9) *mervel e ray ar verc'h-mañ, -bert-*

*to die + verb. part. + do/make + FUT + the + girl + DEM*

*This girl will die*

*Actant doesn't control the process they are involved in & sometimes PCG is associated to the impersonal. The process is often irremediable.”*

Splann e welomp, e gwenedeg *klassel* ne vez implijet ar stumm *Inf. V* med e degouezioù so, gant verboù so hembkén (*intransitivel* darn anehe), kouls hag e gwenedeg dre goms evel ma lâr Kersulec & Sollicec (2012): verboù liammet gant an amser (*teurel glaw...*), un arvez *inkoativel*, verboù liammet gant ar santadur fisikel<sup>121</sup> (hag ar 5 *skiant* iwe?<sup>122</sup>), verboù-fiñv<sup>123</sup> so, verboù-krediñ pe verboù-istim ha pa vez un ober ha n'eo ked reoliet gant ar rener.

*-Katekiz Eskopti Kemper ha Leon ha Katekiz Eskopti Kemper skrivet e brehoneg Kanton en Arhanaou*

O selled douzh an daou *Gatekis* all, heni *Eskopti Kemper ha Leon* ha heni *Kanton en Arhanaou*, traoù a so deut anad diñ a so: implij ar ger *peheni* chomet e katekizioù Eskobti Kemper ha Leon; hag implij ar stumm *S V O* e *Kanton en Arhanaou*.

*Pehe*ni, petra bennak e vefe, pe o tond deus ar galleg pe al latin, petramant un emdroadur diabarzh... a so ur merch sklâer deus ar brezhoneg beleg, ar brezhoneg lizhiri a so silet e-barzh brezhoneg ar bobl dre ganaouennoù pe dre zeskamant digant an Ilis. Ar c'hentañ koms deus *pedenn hor Salver* pe *Pater Noster* ‘ni eo e c'hellomp gweled ar goms-mañ:

Eskobti Kemper ha Leon (1908)	Bro Gourin hag ar Faoued (1929)	Kanton an Arzhanou (1934)	Eskobti Gwened (1939)
<i>Hon tad, <u>pehini</u> zo enn env</i>	<i>Hon tad a zo en nenv</i>	<i>Hon tad, <u>pehani</u> 'zo én nenw</i>	<i>Hun tad e zou én néan</i>

Taolenn 7

Kals ne vern deus ar mare (heni Kanton an Arzhanou a oa bet skrivet diwezatoc'h ewid heni Bro-Gourin hag ar Faoued), gwelet e vez e vese miret *peheni* en Eskobti Kemper ha Leon, ha dileset en Eskobti Gwened adaleg 1924<sup>124</sup> da vihannañ ewid al lodenn é tond deus *Eskobti Kernew*.

<sup>121</sup> *Serriñ, digor, beurlitiñ* h.a.

<sup>122</sup> E c'hellomp tennañ skwer deus ur sonenn hengounel *an anduilhenn*: “*Blasiñ a rae, ne harse ked*”, moarvad pa vez ur rener ha n'eo ked un den?

<sup>123</sup> *Moned, doned, arriwiñ* h.a., koulskoude red gouzoud pa vez “*the subject is definite but generic, no will is expressed*.” Kersulec & Sollicec (2012), evel ar frasenn tennet skwer deus-outi gant E. Pipec (2017): “*Arriwiñ a rae an Alamanted àrnomp*.”

<sup>124</sup> *Leor pédennoù ha kantikou eskopti Guéned : evit bro Gourin hag ar Faouet. É Guéned, Moullerez Galles, 1924*

An eilved tra, hag a so deut anatoe'h eo, implij disheñvel *eo* ha *so*: herwez ar yezhadur, pa vez lakaet daou dra *ressissaet* e rankomp lakaad *eo* ewid liammañ anehe, ha nompas lakaad *so*. Koulskoude en ur geñveriañ an daou *Gatekis* deus Eskobti Kemper ha Leon e c'hellomp gweled o implij *so* ewid liammañ daou dra *ressissaet*:

Eskobti Kemper ha Leon (1908)	Kantn an Arzhanou (1934)
<i>Pe ar c'horf, pe ann ene, eo al lodenn vella euz ann den?</i>	<i>Pé er horv, pé en énaon 'zo er loden guellaon ag an dén?</i>
<i>Ann ene eo al lodenn vella...</i>	<i>En énaon 'zo er loden guellaon...</i>

Taolenn 8

Traoù dibar ar c'hatekis douzh an egile a vez kavet un nebeud, alies e welomp digant an daou gatekis stummoù heñvel-mik an eil douzh an egile, da lâred eo n'eo ked bet chañchet peogwir e komprenne an dud eus Kanton an Arzhanou, ar c'hatekis troet ger-ha-ger diwar skwerenn orin Eskobti Kemper ha Leon. Med mar bez chañchet ar stumm e c'hellfemp kompren ganti, ema digomprenabl ar skwerenn orin a-balamour d'ar stumm-se, petramant un dra divoutin awalc'h d'an dud.

Gant R. le Gléau (1973<sup>125</sup>) e welomp ema miret implij disheñvel *eo* ha *so* pa vez daou dra *ressissaet*: P.42, “*Au lieu de la simple définition : Breizh zo bro va zadoù (Petra eo Breizh ?) on obtient la définition exclusive: Breizh EO bro va zadoù (Pehini eo bro ho tadoù ?). Cette dernière implique un choix. Le vannetais maintient ces nuances, alors que le K. L. T. emploie uniformément EO. Ar pezh a so e-barzh ar c'hatekis koulskoude a ro deomp d'ober choas e gwirionez, herwez kont, sañset eo bet implijet *eo* memestra e gwenedeg<sup>126</sup> iwe. Ar pezh a soñj diñ a so kentoc'h, evel ma ne vez implijet med *eo* e *KLT* heb diforc'h ebed, e Kanton an Arzhanou e vefe implijet *so* hebkén, diforc'h ebed, simplaet gant *so*; martese, an diforc'h ne vise ked komprenet kén gant an dud d'ar mare-se.*

Ha meur a stumm implijet e-barzh *Katekiz Eskopti Kemper ha Leon* so bet troet gant *SVO* hebkén e skwerenn Kanton an Arzhanou:

E keñver <i>SVO</i>	Eskobti Kemper ha Leon 1908	Kanton an Arzhanou 1934
<i>OV</i>	<i>c'hoant en deuz da zavetei ann dud holl...</i>	<i>Héon 'zézir sauveign en ol dud<sup>127</sup>...</i>
<i>AV</i>	<i>Ia, par int ann eil d'egile e peb tra; Ha kendalc'het o deuz-hi holl er stad-se?; benniget oc'h...</i>	<i>Ia, hé 'zo éngal en eil d'er-guilé é peb tra; Hag en ol Aelet 'zo chomet er stad-se?; hui 'zo béniguet...</i>
<i>Inf. V</i>	<i>Kendalc'her a rejont-hi er stad euruz-ze?; Nann, ober a rejont brezel d'ezhan...; Hag ar Verc'hez Vari, he adori a c'hellomp-ni ?</i>	<i>Adam hag Eva, ha<sup>128</sup> hè e chomaz er stad üruz-se?; Nan, hè raz brezel dehon...; Ha ni e hel adoreign er Werc'hez Vari ?</i>
<i>Ne V</i>	<i>N'euz den all ebet nemethi hag en defe bet ar c'hras-se...</i>	<i>Hi hembkèn en nes bet er hras-se...</i>
<i>Renadenn-lec'h V</i>	<i>Goudeze e prezegaz ann Aviel...</i>	<i>Arlerh, Héon e brégaz en Aviel...</i>

<sup>125</sup> Le Gléau, René. *Opus citatum*. 1973.

<sup>126</sup> E-barzh *Katekiz Eskopti Guened, 1939* e c'hellomp kaved implij ar stumm *eo* war-lerc'h *pere*: “Péré é er burhudeu brasan en des groeit hur Salvér Jésus-Krist?”; hag implij ar stumm *so* ewid liammañ daou dra *ressissaet*: “Petra é er Spered-Santél? -Er Spered-Santél e zou en drivet person ag en Drinded.”

<sup>127</sup> E gwenedeg e vez lâret kentoc'h *oll an dud*.

<sup>128</sup> E gwirionez n'eo ked ur stumm *SVO*, d'ar mare-se e vese displeget *hag eñv* herwez pessor gour ha pessor niver: un doare goulennata eo.

Taolenn 9

O kaoseal deus ar stumm *Inf. V*, e vefe jaojapl o lâred pessorit implij a oa chañchet e-barzh katekis Kanton an Arzhanoù e-keñver an heni orin. Kalsig a oa bet chañchet, chomet eo dichañch ar lodenn vrassañ deus ar pezh a welomp e-barzh katekis Eskobti Kemper ha Leon. Chañchet so bet gwraet, med chomet so lod: da lâred eo, na bezañ dehañ ur stumm ma kavomp dibaod a wech e-barzh ar parlant, ne oa ked un dra digomprenapl.

En ur selled pizh douzh ar pewar c’hatekis re zisheñvel, heñvel-mik hag all, da geñver urz ar gerioù e teu diñ da soñjal e vez *re uset* ar stumm *SVO* e *gwenedeg* hag e vez *re uset* ar stumm *Inf. V* e *KLT*. Kement traoù a vefe bet, *a priori*, servijet ewid *lakaad poues warne* en ur soñjal da liammañ gant ar frasenn just a-raog.

A-beban e ta kement-se neuse? Marse e oa ar beleg hag a so karget a droiñ é soñjal, en ur selled douzh oberennoù gwenedeg klassel men kavemp *ur bochad* frasennoù e stumm *SVO* e soñje dehoñ e vehe jaojapl lakaad frasennoù e stumm *SVO* êl ma soñje dehoñ e vehe komprenet ged ar bobl ged kement-se? Ar c’hotrol a vefe gwir-pater ewid *Bro Gourin hag ar Faoued*. Ur beleg kasset da dreiñ an destenn a soñje dezañ e vefe *emsavoc’h* lemel *ur maread* frasennoù gwenedeg e stumm *SVO* hag hen ramplasiñ gant ar stumm *Inf. V* peurlissañ? Diforc’h ar stummoù frasennoù etre ar *gwenedeg klassel-lennegel* hag ar *C’hLT lennegel* a so afer deus studïal pizh c’hoazh, evel m’hon eus tañvaet war zigarez da gompariñ oberenn Job ar Bayon hag oberenn Yann-Vari Perrot. Engortos omp ur studïadenn war gement-se.

### 2.3.3. *Un den en doe daou vab... Ar Mabig Prodig ha hengounioù skrid*

Ur levr embannet e 2016 ha savet gant Patrick le Besco<sup>129</sup> a ra deomp *tañvaad* un tolpad skridoù a sell douzh *ar Mab Prodig* petramant *ar C'hrouadur kollet*. O vezañ troet diwar an destenn c'halleg petramant diwar ar latin sokén, ma c'hellomp kompren deus-oute a-balamour da betra oa bet troet er mod-mañ-'r mod<sup>130</sup>.

An *annek 2* a c'hellomp kavoud ennañ choas ar *versionoù* dielfennet ganiñ, ha choas ar frasennoù dielfennet ganiñ. Evel ma ouzomp ema displek klask kavoud techoù rik ur parlant gant skridoù, na gant versionoù *dastumet*<sup>131</sup>: gwelet e vez sklæer e oa an den é lâred ar pezh 'noa desket e-barzh ar c'hentelioù katekis. Gant skriwagnerien so sokén e welomp e oant levesonet gant skriwagnerien all, tre ma vez gwelet techoù dibar gant skriwagnerien so iwe.

Na bezañ da gement traoù e c'hellomp soñjal e-barzh an disparti *splann* etre ar *C'hLT* hag ar *gwenedeg*:

1. Implij ar stumm *S V* (pa vez ur raganw) war-lerc'h un adverb e gwenedeg: da.sk. *Quentéh ean e yas peël doh er guær* (Y. Marion), a-vras e vez implijet raganw an trived gour unander (*heñv*) liessoc'h ewid er *C'hLT* (diw wezh hebkén diwar un *deg doussened a frasennoù*<sup>132</sup>).
2. Ar stumm *diverb* (*ha+diverb* pe *setu+diverb*) a so stankoc'h e gwenedeg, ouzhpenn kement-se gant skriwagnerien so (Oliero ha Seveno), douzh tu ar *C'hLT* e welomp Gabriel Morvan é implij ar stumm-mañ peurlieasañ<sup>133</sup>.
3. ar *c'hconjugaison périphrastique* e gwenedeg klassel, strizh-mad e implij (*Arri a raas, Kouez a raas, en em gaved a raas, doned a raas*) ha ged skriwagnerion 'so (*Sevel a raas enta ha moned a raas*: Dano, Larboulet, Buléon) petramant e lec'hioù so (*Sevel a riñ*: ar Gemene (J. Loth *e-gunan*), Groe, Gerveur – da lâred eo ar *C'huz-heol*, ouzhpenn kement-se distaget *zevel... –*; med *me* 'savo ged Dano, Larboulet, Buléon).
4. Un dra *olleg* ha *reolieg* ewid ar *C'hLT* kenkouls evel ar gwenedeg: lakaet e vez ur rener *leksikal* dirag ar verb pa vez komañset ar frasenn gant un adverb sokén, da skwer, *Ac aben un nebeud derveziou goudeze, ar yaouanca o cass gantan quemant en doa, a ïeas en eur vro bell* (Le Puyferre); *Eun devez benag goude, ar pôtr yaoauñk a gemer ar pez a oa digouéet d'eañ ha setu héñ emez ar vro* (Eugène Héry); *Un dé*

<sup>129</sup> Le Besco, Patrick. *Variations bretonnes sur la parabole de l'enfant prodigue*. TIR, 2016.

<sup>130</sup> *Ibidem*. P.221

<sup>131</sup> Embannet e-barzh: Loth, Joseph. *Chrestomathie Bretonne: (Armoricain, Gallois, Cornique)*. Emile Bouillon, 1890.

<sup>132</sup> *hag hen a gommansaz beza en dienez* (J. Jenkins); *Mez hen, deuet enghan he-unan, a lavaraz [...]* (J. Quéré).

<sup>133</sup> *Ha setu heñ d'en em denna en eur vro bell, evit beva eno en he roll; Ha var gement-se, setu heñ en hent evit distrei da gaout he dad.*

*benec goudé er ievanquan*, arlèrh en dout pet tolpet tout er pèh e oai dehon, *e ias de voüageign i méz à vro* (Jacques Giquello); *Idañ bèr, er pautr iouañk e gemér é dreu* (Jérôme Buléon); *Hogen, pa edo c'hoazh pell, he dad a velas anezhan* (Jean-François Caer); *Hogen pa 'vedo c'hoazh pell, e dad en gwelas* (dastumet e Landerne gant J. Loth).

5. E gwenedeg, pa vez ar verboù *doned, arri, moned, koueziñ* h.a.<sup>134</sup> e vez lakaet ar rener àr-lerc'h ar verb pa vez un islavarenn ( ... *e taas ur gerteri vras er vro*).

6. Ar stumm \*o (*vezañ*) re *uset* er *C'hLT*, dre leveson ar latin pe ar galleg: Le Brigant *en ur vewañ; en ur sevel* a oa bet reizhet gant Le Gonidec *o vewañ; o sevel*, ar pezh ne gavomp ked kals e gwenedeg klassel.

Un digarez a oa selled buan-ha-buan douzh *stummoù frasennoù* implijet gant meur a skriwagner en amser a-gent, ha me komprenet an disparti splann etre an *daou du* hag a oa é ober *ar lizhiri klassel*, hag e c'hellon nen mond pelloc'h gant ar sujed-se...

---

<sup>134</sup> Pa soñjomp 'h int ar verboù a c'hellomp implij gant ar c'hconjugaison périphrastique (KERSULEC&SOLLIEC 2012). Ha gwir eo e kavomp ar stumm *A Inf.V* gant Jaques Giquello: *Mæs, goudé en dout tout dismantet, en hum gavoet e ras* ir vro-cen ur famin vras.

## 2.4. Ewid ar yezh sewenaetoc'h?

Beteg pelloc'h hon eus gwelet penaos: n'eus ked kals a ziforc'h etre ar yezh komset hag ar yezh skriwet gant ar bobl e-keñver urz ar gerioù ha diforc'h a so etre parlantoù Bro-Gwened (J. ar Bayon, an Arradon, kanton an Arzhanou) ha parlantoù *KLT* (Y.-V. Perrot, parlantoù a Greis-Breizh, skriwagnerien-bobl) a-beb-eil etre ar stumm *SVO* hag ar stumm *VSO*, koulskoude ema é tostaad douzh stummoù frasennoù implijet e Kreis-Breizh pand arruomp e Margenag<sup>135</sup>. Ha gante nebeutoc'h a frasennoù e stumm *Inf VS(O)* (pe ar c'hconjugaison périphrastique) hag a vez rekomandet d'ober gantañ gant an *Emsaverien*<sup>136</sup> ewid an *deraouidi* koulskoude.

Er mod-se ema ar pezh a so erbedet gant ar yezhadur d'ober gantañ hag a so pell douzh ar pezh a vez gwraet e gwirionez. Beteg bremañ hon eus gwelet dregantad ar stummoù frasennoù hag a vez gwraet gante e brezhoneg-pobl hag ar pezh a lâr *levrioù-yezhadur: petra a vez lakaet e penn-kentañ ar frasenn*; hag implij an islavrenn-distag pa vez ur stagell (HEWITT 2018; HERRI 1982) n'eo ked meneget med e-barzh levrioù-yezhadur so (LE GLÉAU 1973; FAVEREAU 1997) pe meneget evel ur *fazi* (KERVELLA 1947 P.392); petramantig verb e penn-kentañ ar frasenn (gweled an daolenn 3). Sur-mad e vez levrioù-yezhadur so o tostaad d'ar pezh a vez lâret gant an dud e gwirionez, med an darn vrassañ douzhte n'int ked e-keñver ar stummoù frasennoù kenkouls evel traoù all moarvad (da skwer *distagadur, kemmadur* h.a.)

Meur a wech ema ar levr-yezhadur 'ni eo a ra norm ar yezh, dre skrid. Ken stabil m'ema an norm dre skrid, Erwan le Pipec (2013<sup>137</sup>) a lâr e oa heñvel douzh re ar 17<sup>ved</sup> kanved, ar pedennoù ma ouie tud a Vargenag dre eñvor. Ne vez ked chañchet kals an norm dre skrid a vez assambles gant peb parlant douzh tu ar bobl da beb pobl. Ar parlañchoù 'ni eo a chañch: *sinkope* ar silabennoù didaolmouezhiet, degouez ar vogalenn *epentes* ewid aessaad an distagadur, blotaad ar c'hensonennoù hag a vez kals e brezhoneg, kouls skriwet ha ne vez skriwet h.a. Ha peb parlant a so ur chañchamant yezh par dehañ alies: e parlañchoù so e vez miret traoù koshoc'h en takadoù periferik herwez *techoù da vired an takadoù periferik*, d'al liessañ ema an takad kreis evel *Karaes, Montroules* pe *Karnag* e

<sup>135</sup> Le Pipec, Erwan. *Opus citatum*. 2017.

<sup>136</sup> Diw hentenn a so trawalc'h ewid dispakañ: Davalan, Nikolaz. *Brezhoneg: méthode oulpan*. Skol an Emsav, 2000. ha Sèité, Visant, et al. *Deskom brezoneg*. *Emgleo Breiz*, 1996. *An hentenn oulpan* a ziskouez ar c'hconjugaison périphrastique kentoc'h (*kentel 12* p.127) ewid ar c'hconjugaison analytique (*kentel 15p.151*) tre ma vez diskouezet ar c'hconjugaison analytique da gentañ gant V. Seite er *gentel genta* sokén (P.11) ha ressissaet an displegañ-verb e brezhoneg a-benn an *drede kentel* (P.21).; ken gwir all eo ewid an araogenn *ba*: ma sellomp douzh an diw *hentenn Assimil* savet gant daou zen disheñvel, Fañch Morvannou (1975) da zigentañ a lâre ema an daou stumm (da lâred eo *e* ha *ba*) ar memes tra (P.16 “E Brest = ba Brest ; e Gwened = ba Gwened), koulskoude ba'n hentenn savet gant Divi gKervella (2005) e lâre “(P.377) *Comme vous risquez fort de rencontrer ces formes [ba'n, ba'r, ba'l] tôt ou tard, nous vous les indiquons ici, mais elles ne sont guères recommandées en breton standard.*” (a-du-rall, lâred a rañ ma zamm trugarez da Jean Lecoulant a Garaes, ha 'neus gwraet diñ anavoud a-zivoud ar c'hontrast-mañ!)

<sup>137</sup> Le Pipec, Erwan. *Opus citatum*. 2013. P.5: “*Par exemple, dans l'édition de 1930 du petit catéchisme de Vannes, que des générations de bretonnants ont appris par cœur, on lit une version des dix commandements (cf. Le Pipec 2008 : 287) étonnamment proche de celle de 1631 (Loth 1904). Les commandements 4 et 7 sont rigoureusement identiques (à l'orthographe près).*”

teu un dra newez e-keñver istor ar brezhoneg. Ha pegehed amser a ra ewid ma vo meneget ar chañchamañchoù-se – fonologiezh (da lâred eo e-keñver an doare-skriwañ), geriaoueg (e-barzh ar geriadurioù), morfologiezh hag urz ar gerioù – gant ar yezhadurourien? Ma kemeromp ar skwer a-ledan, pa vez skriwet e-barzh ar levrioù-yezhadur pe e-barzh ar geriadurioù ema stabil-tre ar fenomen dre goms deja, ha n'omp ked ewid merchañ ar chañchamant a so o c'hoarvezed hiriw-an-dez (LABOV 1970, P.38), da lâred eo e vefe un dra c'hoarvezet (pe chañchet), *100 ha 100 vloaz* so a-raog ma vefe skriwet e-barzh ar levrioù-yezhadur. Hag e sinifefe penaos ar pezh a so skriwet e-barzh ar levrioù-yezhadur a vefe un dra a-gozh, stabil, er-maes deus ar c'his dre goms a-wechoù hag all.

Ewid ar brezhoneg so bet meneget gant C. V. Cillart de Kerampoul (1744) en e c'heriadur *Dictionnaire françois-breton ou françois-celtique du dialecte de Vannes*, “bon breton” ha “mauvais breton”: lâret e vese “*I e lar*” e Noal e-lec'h “*Ind a lar*”; lâret e vese “*I e yo deitt*” e Mourieg e-lec'h “*Ind a ouai deitt*” d'ar mare-se gant an dud. Gwir eo e *An Form da obér an Pron e brezonec* (1631)<sup>138</sup> hag e *gwersennoù an Ignol*<sup>139</sup> ne welomp med “*à, a*”<sup>140</sup> c'hoazh koulskoude abalamour d'ar ger-mell strizh komañset de vezañ skriwet “*en*”<sup>141</sup> e c'hellfemp soñjal e oa komañset gant an tech da lakaad /ə/ ewid “*a*” krennvrezhoneg didaolmouezhiet<sup>142</sup>. E-barzh *Magasin spirituel er beurerion, en artisanter, er serviterion, hac en dud diar er maezeu 1790*, Jean Marion a skriwas “*e*” ewid ar rannig-verb: un 50 vloaz tremenet a-baoe geriadur Cillart de Kerampoul, degemeret a-benn ar fin ar mod ma koms ar bobl<sup>143</sup> gantañ e-barzh ar yezh *klassel* iwe.

<sup>138</sup> Loth J. ‘Le plus ancien texte suivi en breton de Vannes’. In *Annales de Bretagne*. Tome 20, numéro 3, 1904. pp. 341-350

<sup>139</sup> Bihan H. ‘*Les vers en moyen-breton de Lignol (1619 ?-1624 ?) sont-ils vannetais*’. In: Buron, Bihan & Merdrignac (dir.), *A travers les îles celtiques/ A-dreuz an inizi keltiek / Per insulas scotticas, Britannia Monastica 12 / Klask, Rennes, 2008*.


<sup>140</sup> “peheny à recommandanff deuh hou bout ordinairement en ou intention principalement pen douh en Ilis”; “ac er peh à deléet de credeing”; “Pehani a zo bet conceuet dré er Spered santel, ha ganet ac er Guirhiés glorieux Marie”

<sup>141</sup> Ne oa ked stabil-stabil etre “*an*” hag “*en*” evel ma oa bet skriwet “*an*” hag “*en*” da heul e-barzh ar memes frasenn: “*An Form da obér an Pron e Brezonec evit en ol Përsonet, Curéet, ha Vicairer*”; pe daou furn disheñvel dirag ar memes ger: “*Me cret en Doué an Tat ol puissant, croeour dan eanff ha dan douar*.” vs. “*A zo montet en enff, hac à zo asséet en tu deheou de Doué en Tat ol puissant*.”

<sup>142</sup> Red eo chom war hon ewezh: martese ema ar ger-mell “*an*” hag ar rannig-verb “*a*” diw anien disheñvel e-keñver ar fonologiezh evel ma kavomp hiriw-an-dez c'hoazh e kembraeg “*y(n)*” ewid “*an*” (“*en*” gant /ə/ e gwenedeg) hag “*a*” ewid “*a*” (“*e*” bremañ gant /ə/ e gwenedeg), da lâred eo ema heñvel ar jeu, kembraeg ha gwenedeg *rag-vodern*. Ouzhpenn kement-se pa soñjomp e vez distaget [a] ewid “*a (eus)*” e gwenedeg e c'hellomp soñjal ema disheñvel ar chañchamant distagadur herwez ar gerioù...

<sup>143</sup> Koulskoude ma sellomp douzh kartennoù so deus an ALBB e welomp e vese distaget [a] e penn pellañ *Bro-Gwened* (Lokmariaker, Enes-Houad, Ruis, Damgan): kartennoù 71, 72, 73, 74, 75; ha c'hoazh e Sulnieg <http://banque.sonore.breton.free.fr/index.html> (gwelet d'an 10 a vis Gouhereñv e 2021) “*Kement gwezh so ma oamp klañv, Job a zae d'hon gweled*.” [kəmən 'gʷe zu ma wem 'klā 'ʒwob a ze dō 'gʷəl]. N'omp ked ewid en em baraad a soñjal c'hoazh ma vez distaget en heveleb fesson e kembraeg: ar ger-mell “*y*” a vez distaget [ə] hag ar rannig-verb “*a*” a vez distaget [a] just evel ma vez gwraet e *gwenedeg ar 17<sup>ved</sup> kantved* kenkouls evel e penn pellañ reter Bro-Gwened beteg bremañ (2012 e Sulnieg).

A-balamour da *gaoud doujañs douzh ar yezhadur*<sup>144</sup> (*a-gozh*, martese; ha ken gwir all pa soñjomp en distagadur iwe!<sup>145</sup>), a-wechoù ne vez ked lakaet traoù hag a vez lâret er mare ma so skriwet ul levr yezhadur. A-drugarez d’an ALBB<sup>146</sup> so moian deomp da gaoud ur sell war ar brezhoneg rag-vodern dre goms, gant ar c’hartennoù 384 (*trois, quatre, neuf chiens*), 385 (*trois, quatre chiennes*), 509 (*trois garçons*) :



*Skeudenn 1*<sup>147</sup>

hag e welomp e vez gwraet ar c’hemmadur dre vlotaad er poeñchoù 5,6,10,11 a vez gwraet Gorre Leon douzhte, hag a rae patrom yezh dre skrid an Eskobti Leon ha Kernew; ha kemmadur ebed e parlañchoù Arvor Bro-Gwened a rae patrom yezh dre skrid an Eskobti Gwened. Koulskoude ar yezhadurioù embannet er memes mare ne veneg tra ebed diwarbenn ar c’hemmadur war-lerc’h ar sifroù 3,4,9<sup>148</sup>. O vezañ m’ema miret ar c’hemmadur dre c’hwezhañ e kornadoù-bro so e vez dalc’het da vond war *tri faotr, tri c’hi* e yezh dre skrid?

Depant a ra martese douzh pessort chañchamant yezh: ma kemeromp ar skwer a-ledan, e brezhoneg e vez techet ar yezhadurourien pe ar skriwagnerien da lakaad war wel, ar chañchamañchoù fonologell

<sup>144</sup> Evel ma so bet meneget e-barzh. *Opus citatum*. Le Gléau, René. 1973., ar c’hemmadur ewid al lavarennoù skornet e-gis e berr gomsoù: “... *Seraient enclins à pratiquer la mutation lénitive les écrivains soucieux de “respecter la grammaire”, comme A. DURAND, disciple de Le Gonidec, puriste du vocabulaire plutôt que de la syntaxe. Les vrais usagers de la langue ignorent toute mutation à la fin du 19<sup>e</sup>.*”

<sup>145</sup> Guillevic, A., et P. Le Goff. *Grammaire bretonne du dialecte de Vannes*. Ar Skol Vrezoneg, Emgleo Breiz, 1986. PP.5-6 a lâre e-barzh o levr-yezhadur penaos: “*g conserve le son guttural devant e et i (...) k se prononce comme en français. Il remplace le c guttural et le q...*” Koulskoude dastum Rudolf Trebitsch (2004) a ziskouez e vese palataliset *awalc’h* da vare P. le Goff ha A. Guillevic dija: pewar den a oa bet enrollet (Joseph Loth deus ar Gemene; Jean Kerdudo hag a oa ur beleg en Oriant a *gane* e *gwenedeg-isel*; Mathurin Buléon, ur beleg iwe é tond deus Sant-Yehan; ha Joseph le Blinec, ur jardinour kozh-kozh a oa bet 92 vloaz dija pa oa enrollet, é tond deus *martese* Gevred Bro-Gwened) ar ger “*ked*” a so distaget staoñekaet dija gant an oll, “*ged (gant)*” a so distaget palataliset [gj-j] gant an daou Wenedour deus Bro-Gwened-isel, ar ger “*ar gêr*” [g-] gant Jean Kerdudo ha [j-] gant Joseph le Blinec. <https://www.youtube.com/watch?v=MSspJ1n8gPI&t> (gwelet d’ar 7 a vis Even e 2021) a ra deomp da glewed Lociz Herrieu é kanañ, amañ e klewomp ar ger “*ked, ken (aes), gwir*” distaget [c] ha [jɥ-] gantañ.

<sup>146</sup> Le Roux, Pierre. *Atlas linguistique de Basse-Bretagne*. Plihon et Hommay, 1924.

<sup>147</sup> *Ibidem*.

<sup>148</sup> Guillevic, A., et P. Le Goff. *Loco citato*. Ar Skol Vrezoneg, Emgleo Breiz, 1986. Na bezañ ma tisklêriont “*rarement*”... P.8; pe e-barzh Hemon (1975) e vez gwelet o lâred: (p.7) “*langue écrite: teir c’hador teir zro tri fenn langue parlée: teir gador, teir dro, tri benn*”



‘aessoc’h’ ha ‘buannoc’h’, hag an dud-se chomet mirourien e-keñver ar chañchamañchoù morfologell ha siñtatikell.

/t-/ pa vez lakaet ar c’hemmadur dre c’hwezhañ, bremañ e vez desket ma vo distaget /z-/, hag ewid /p-/, /k-/ da /f-/, /x-/. Skriwet e vënt ‘z’, ‘c’h’ ha ‘f’: unan mouezhiet ha daou a re all divouezh. A-benn ewid gouzoud hirroc’h perag e vez skriwet kement-traoù all e rankomp selled douzh istor ar c’hemmadur dre vlotaad newez (“new lenition<sup>149</sup>” a vez lakaet gant JACKSON 1967<sup>150</sup>).

‘t’ a vese skriwet ‘z’ abred awalc’h pa vez gwraet ar c’hemmadur dre c’hwezhañ: (JACKSON 1967<sup>151</sup>) “The writing of initial z- for the sound from θ- becomes regular only when the indication of initial mutation becomes regular, i.e. with *Le Nobletz and Maunoir*, but *Maunoir* recognises none of the other new lenitions<sup>152</sup>.” Gwir eo ema /s-/ ‘ni eo an heni koshañ evel ma kavomp e takadoù periferik so, med dre m’ema /z-/ ken kozh all ma c’hellfemp soñjal e vese distaget /z-/ (da lâred eo ur son mouezhiet<sup>153</sup>) dija e krennvrezhoneg pa vese skriwet e 17<sup>ved</sup> kantved.

A-hend-all, /p-/ > /v<sup>h</sup>~v/ ha /k-/ > /f-/ ne vënt ked skriwet o vezañ m’emaint newezoc’h. /p-/ > /v<sup>h</sup>~v/ etrevoglaenn a vefe bet ur c’his dre goms e Gorre Leon en 18<sup>ved</sup> kantved dija evel ma kavomp e-barzh *Ar Farvel Goäpäer*<sup>154</sup>. A-se e oa red gortos Falc’hun hag e zoare-skriwañ newez ewid ma vefent diskouezet dre skrid da vad gant arouezioù ‘f, h. Istimañ a ra K. Jackson m’ema bet komañset da vezañ gwraet ar c’hemmadur ‘t’ da /z-/ ken abred hag er 15<sup>ved</sup>~16<sup>ved</sup> kantved<sup>155</sup>, lakaet war wel gant Maunoir ar c’hentañ gwech e 17<sup>ved</sup> kantved ha degemeret gant Le Gonidec<sup>156</sup> da skriwañ ‘z’ war-lerc’h ar gerioù-mell, ‘da, daou, diw, tri, teir’. Ha gant Le Clerc<sup>157</sup> da skriwañ ‘s’ > ‘z’ ewid brezhoneg Bro-Dreger: 300~400 vloaz a oa red ewid ma vo deut da norm.

Herwez K. Jackson (1967) ne vefe ked abretoc’h /p-/ > /v<sup>h</sup>~v/ ewid ar 17<sup>ved</sup> kantved<sup>158</sup> ha /k-/ > /f-/ diwezatoc’h ewitañ tro-ha-tro d’an 18<sup>ved</sup> kantved<sup>159</sup>, gosig 200~300 a rae ewid ma vint degemeret gant an norm da vad<sup>160</sup>.

<sup>149</sup> E gwirionez, *new lenition* a so kement *lenitions* ha n’int ked o tont deus ar c’hemmadur vlotaad *hengounel* a oa bet a-balamour d’ar fed fonologell, a so bremañ a-balamour d’ar fed morfologell: an *new lenitions* a so a-balamour d’ar fed fonologell adarre.

<sup>150</sup> Jackson, K. H. *Opus citatum*. 1967. P.360

<sup>151</sup> *Ibidem*. P.374

<sup>152</sup> Da lâred eo /p-/ > /v<sup>h</sup>~v/ ha /k-/ > /f-/.

<sup>153</sup> Hag a so ken gwir all, e Mourieg (<https://youtu.be/OLfZnwpxm8Q> gwiriet d’ar 4 a vis Mae e 2021, 3:34), kostez Logonec’h e vez distaget ‘ma zad’ [mæ ‘ðɑ:t] da lâred eo ur son mouezhiet all, ar c’hontrel so moian da gaved e *Bro-Pondi* e Margenag kenkouls evel e Neuilheg (Le Pipec 2008 [mæ ‘ɾɑ:t]; <https://www.youtube.com/watch?v=1NuLOKkdhqA> gwiriet d’ar 4 a vis Mae e 2021: 1:15 [mæ ɾɑ: ‘kuh uni. ‘i: ‘dik ‘plāj] ).

<sup>154</sup> Kerenveyer, François Nicolas Pascal de, et Calvez, Ronan. *Ar farvel göäpäer = Le bouffon moqueur*. Centre de recherche bretonne et celtique, 2005. P.138: "Mais, zouci, va enor a diyen din dha zoubla."

<sup>155</sup> Jackson, K. H. *Loco citato*. 1967. P.374

<sup>156</sup> Le Gonidec, J. F. M. M. A. *Grammaire Celto-Bretonne*. 1838. P.23, 29, 33

<sup>157</sup> Le Clerc, Louis. *Grammaire bretonne du Dialecte de Tréguier*. Prud’homme, 1908. P.19

<sup>158</sup> *Loco citato*. P.374

<sup>159</sup> *Loco citato*. P.374

<sup>160</sup> Red eo gouzoud e oa klok ar chañchamant /s-/ da /z-/ e meur a gornad-bro a-raog ma vez lakaet dre skrid, koulskoude n’eo ked klok /f-/ da /v- ~ v<sup>h</sup>-/ ha /x-/ da /f-/ e kornadoù-bro so.

Ha bremañ, deomp da selled douzh chañchamañchoù morfologell : evel m'hon eus gwelet gant ar skwer a-raog, ar c'hemmadur war-lerc'h ar sifroù 3,4,9, na bezañ ma vënt gwraet gant ar c'hemmadur dre vlotaad pe tra ebed gant ar bobl herwez an ALBB, e-barzh ar levrioù yezhadur n'eus tress ebed diwarne ha ne vez c'hoazh.

Dibenn-verb eilved gour liester an amser-da-zond '-ot' a so chomet bew e-barzh kals a levrioù yezhadur hag e-barzh levrioù-deskiñ:

Skriwagner al levr-yezhadur; pe ar geriadur; pe an titl	Eilved gour liester amser-da-zond ar verb <i>mond</i>
F. Kervella (1947 <sup>161</sup> )	-ot (p.124), e vezot (p.152)
P. Trepos (1996 <sup>162</sup> )	-ot (-oh, -foh; p.289), e viot (e vioh; p.291)
P. Denez (1972 <sup>163</sup> )	e voc'h (p.78), -oc'h (p.102)
R. Hemon (1975 <sup>164</sup> )	-ot (p.48)
V. Seïte (1996 <sup>165</sup> )	-oc'h (p.51)
M. Kerrain (2007 <sup>166</sup> )	-ot (p.222)
F. Favereau (1997 <sup>167</sup> )	-oc'h, -het (p.192); -fet
E. Chalm (2008 <sup>168</sup> )	-ot, -oc'h (p.54)
Oulpan 3 <sup>169</sup>	-ot/-fet (à éviter en breton littéraire; p.218)
Ar Merser (1983 <sup>170</sup> )	-oh (-ot), -fet (Trégor, Sud-Finistère; p.84-85)
Geriadur an Here <sup>171</sup>	-ot (p. XL)
Geriadur Garnier <sup>172</sup>	-oh (p.804)
Geriadur Al Liamm <sup>173</sup>	-ot (p.854)

Taolenn 10

E krennvrezhoneg, dibenn-verb eilved gour liester an amser-da-zond d'ar peb liessañ a oa '-(h)et' a so deut '-ehet, -eet' e gwenedeg, '-fet' e tregerieg hag e gouelaoueg. An dibenn-verb '-ot' a vese implijet iwe e krennvrezhoneg, a vefe o tont deus an analogiezh diwar 'vezo'. Herwez Roparz Hemon<sup>174</sup>, an dibenn-verb '-ot'-mañ a oa deut da '-oc'h' dre analogiezh diwar dibennoù-verb an eilved gour all en 19<sup>ved</sup> kantved. Gant-se, kartennoù an ALBB 244 (*quand tu sauras, quand vous saurez*) ha 486 (*quand vous viendrez*)

<sup>161</sup> Kervella, Francis. *Opus citatum*. 1947.

<sup>162</sup> Trepos, Pierre. *Opus citatum*. 1996.

<sup>163</sup> Denez, Per. *Brezhoneg buan hag aes, (le breton vite et facilement-Breton fast and easy)*. Paris: Omnivox. 1972.

<sup>164</sup> Hemon, R. *Grammaire bretonne*, La Baule: Al Liamm. 1975.

<sup>165</sup> Sèité, Visant, et al. *Opus citatum*. 1996.

<sup>166</sup> Kerrain, Mark. *Ni a gomz brezhoneg ! = Nous, nous parlons breton !: méthode de breton pour débutants*. 2007.

<sup>167</sup> Favereau, Francis. *Opus citatum*. 1997.

<sup>168</sup> Chalm, Eugène. *Opus citatum*. 2008.

<sup>169</sup> Davalan, Nikolaz. *Brezhoneg: méthode oulpan* [3]. Skol An Emsav, 2002.


<sup>170</sup> Merser (ar), A. *Précis de Grammaire Bretonne*, Brest: Ar Helenner. 1983.

<sup>171</sup> Menard, Martial, and Iwan Kadored. *Geriadur Brezhoneg*. An Here, 2001.

<sup>172</sup> Helias, Pierre-Jakez (dir.). *Dictionnaire breton : breton-français, français-breton*, Paris, Garnier. 1986.

<sup>173</sup> *Nouveau dictionnaire breton-français, français-breton*. Al Liamm, 2014.

<sup>174</sup> Hemon, Roparz. *A Historical Morphology and Syntax of Breton*. The Dublin Institute for Advanced Studies, 1975. P.189



*Skeudenn 2*<sup>175</sup>

a ziskouez neblec'h ne vez implijet an dibenn-verb '-ot'-se gant ar bobl. Kouslskoude a-balamour m'ema deut an dibenn-verb '-ot' da norm dre skrid er Gwalarn adaleg ar 17<sup>ved</sup> kantved gant Tanguy Gueguen<sup>176</sup> ha gant Quicquer de Roscoff<sup>177</sup>, bremañ pa dremen ur 400 vloaz bennak, ne gredomp ked chañch, kement-mañ an heni eo profil ar chañchamant morfologell e-barzh ar levrioù-yezhadur. Meur a furm a so ewid ar verb '*mond, moned*' displeget e trived gour unander an amser-da-zond: ar furm koshañ a vefe '*yel, ay*<sup>178</sup>, '*yal, yalo*<sup>179</sup>', herwez Roparz Hemon<sup>180</sup>, evel ma kavomp e kembraeg lennegel: '*êl, elo*' ha gant dibennoù-verb trived gour an amser-da-zond '-oi, -oe, -eu, -o' e henvrezhoneg<sup>181</sup>. En o zouesk e vez kavet '*aio*' gant Lan Inisan<sup>182</sup> e-tal '*ai*'. Moarvad e oa skriwet '*ec'h aio*' gantañ ha ne oa ked '*ez aio*' evel ma vez kavet bremañ e-barzh meur a levr-yezhadur. Kartenn 477 "*lui, il ira*" an ALBB so moian da gaoud ur sell douzh ar furmoù-se. A-dra-sur neblec'h ne vese lâret '*az aio*<sup>183</sup>'. Kouslskoude ar stumm-se a vez desket bremañ dre levr ha dre stummadur pe dre deskadurezh diweyzegeg. Perag iwe e vez lakaet stank war wel bremañ pa ne vez lâret med un takad ken bihan all? Martese iwe o vezañ m'ema un dra reolieg: '*ay*' gant dibenn-verb trived gour unander an amser-da-zond -o, dre analogiezh daoust ha ma ne vez ked lâret kals gant ar bobl. Amañ n'eo ked un tech da vired un dra gozh avad, med degemer un dra newez, ewid regularited ar yezhadur, ha ma vo klotet gant displegadur ar verb '*dond, doned*' en ur gompren komserien ar yezh standard.

<sup>175</sup> Le Roux, Pierre. *Opus citatum*. 1924.

<sup>176</sup> Gueguen, Tanguy, *An Mirouer a Confession*. 1621.

<sup>177</sup> Quicquer de Roscoff, *Dictionnaire et Colloques François, Breton, Latin*. 1632.

<sup>178</sup> Hemon, Roparz. *Trois poèmes en Moyen-breton*. 1962.


<sup>179</sup> *An Dialog etre Arzur Roe d'an Bretounet ha Guynglaff*. 1450.

<sup>180</sup> Hemon, Roparz. *Opus citatum*. 1975. P.230

<sup>181</sup> Fleuriot, Léon. *Le Vieux-Breton : éléments d'une grammaire*. Slatkine, 1989.

<sup>182</sup> Inisan, Lan. *Emgann Kergidu*. 1878.

<sup>183</sup> [a dajo] a vese lâret er poent 5...



*Skeudenn 3<sup>184</sup>*

<sup>184</sup> Le Roux, Pierre. *Opus citatum*. 1924.

## 2.5. *Ar pezh a rankomp lakaad er penn-kentañ?*

Ne vese ked meneget *VI* lies-hardi e-barzh levrioù-yezhadur (gweled an daolenn 3) koulskoude red-mad eo gouzoud eh eus verboù a vez lakaet e penn-kentañ ar frasenn lies awalc’h, depant a ra douzh lec’hioù a-dra-sur: *mond* e parlantoù ar Sav-heol, *dond* e gwenedeg, *ema* en darn vrassañ deus ar parlantoù er Brezhonegva h.a.

Savet so soñj ganiñ neuse daoust hag eh eus verboù hag a gavomp gwelloc’h ober gant ar stummoù frasennoù-mañ-‘ stummoù frasennoù, evel ma lâr Favereau en e levr-yezhadur<sup>185</sup>:

P.298: “*Ainsi, par exemple, si l'on entend en Cornouaille maritime f'oar (< c'hwi 'oar) vous savez. . . , l'expression te 'oar. . . paraîtra-t-elle relativement emphatique au centre (= toi, tu sais - sous-entendu : pas moi, nous, eux etc.), car l'on dira plus usuellement et plus naturellement goût a rez (voire goût 'ouzez avec quelque insistance, goût 'walc'h ' rez / rit, g'walc 'h ' rit par amuïssement), ou plus souvent encore, en incise, 'ouzez 'walc'h (Ph) tu sais bien, 'vel ouzout (T) comme tu sais . . .*”

Pe ewid pouesañ warnañ pe n’eo ked: e lec’hioù so e vez displeget ar verb *gouzoud* lies awalc’h e stumm *conjugaison analytique* pe lec’hioù all e stumm *conjugaison périphrastique*. Surmad e tepant douzh ar lec’hioù koulskoude ema red kemer e kont penaos verboù so a so techet da vond gant ar stumm frasennoù a gouch gant ar verboù plaen ataw.

Evel ma vez lâret ganiñ en e-raog, e rankimp selled douzh ar pezh a so a-dreist an destenn, pe a-dreñv an destenn, traoù *soasio-lennegel*: *piw* ‘noa skriwet, *ewid piw* ‘noa skriwet pe *pesavare* ‘noa skriwet, ha *varierezh* urz ar gerioù herweze, mar ne ve ked ema da c’houzoud hag ema ur *variesoñ libr* ha penaos eh a en-dro da geñver urz ar gerioù all.

Med petra a c’hellimp menegiñ ar pezh a so e-barzh an destenn, da lâred eo selled douzh ar pezh a vefe é termeniñ urz ar gerioù e brezhoneg, en ur tennañ skwer deus yezhoù all.

Da zigentañ evel m’hon eus gwelet el lodenn all – en ur ziskouez soñjeson Favereau (1997) diwarbenn ar stumm *VI* e brezhoneg – e vefe gwelloc’h deomp arnodin pessort verb (*boud*, *gweled*, *gouzoud*, *gelloud* h.a.). Petramant testennoù Y.-V. ar Joubious (ar Besko 1993), J. ar Bayon (1905) ha S. Seveno (1917) a zisklêr iwe e vez implijet ar stumm *Inf. V* e gwenedeg ewid an dic’hour dreist-oll.

Evel ma so bet meneget dija (gweled supra), O. Currie (2000) a ziskouez penaos so taolet skriwagnerien gant ar stumm-mañ-‘r stumm ewid ar verb-mañ-‘r verb<sup>186</sup>, hag a vefe ur penn-kaos

<sup>185</sup> Favereau, Francis *Opus citatum*. 1997.

<sup>186</sup> *Opus citatum*. P.16

“*Simon Thomas, on the other hand, in both Hanes y Byd a'r Amseroedd and Histori yr Heretic Pelagius, alternates between the two constructions, showing quite specific preferences for AIV order with certain idioms, and for the dummy subject construction with other idioms. So, for example, with the 3s past of bod 'to be', Simon Thomas consistently uses the AIV form bu rather than the dummy subject form fe fu; for the 3sg future of bod, on the other hand, he consistently uses the dummy subject form fe fydd, instead of the AIV form bydd. With the impersonal construction with the verb darfod 'to happen', Simon Thomas consistently uses the AIV form darfu, instead of the dummy subject form fe ddarfu. A further possibility available to authors is style shifting in the use of AIV order. The higher use of AIV order in both Salesbury's and Morgan's Psalms compared to other parts of their Bible translations is most likely an example of this.*”

mard eo chañchet urw ar gerioù hed-ha-hed ar c'hrenn-gembraeg d'ar c'hembraeg a-vremañ: ma teu deus-outañ ar soñj d'ar skriwagnerien en defe ar stumm *V S O* ar memes talvoudegezh êl 'fe' *V S O*, tamm-ha-tamm e ta ar stumm *V S O* da c'hounid takad diwar-goust ar stumm 'fe' *V S O*, ken ma teuy ar stumm *V S O* da voutinnañ.

En henc'halleg e kavomp an hevelep traoù iwe, da lâred eo an doug d'ar verboù so taolet gant ar stumm-mañ-'r stumm. An henc'halleg – evel ar brezhoneg a-vremañ – a ziskouez ennañ meur a choas ewid sevel ur frasenn, dindan ar musul *V2*. En henc'halleg e vese roet ar plass kentañ d'*an dra ma fell deomp lakaad war wel*<sup>187</sup> just evel ar pezh a gred d'an dud ewid ar brezhoneg.

Koulskoude, en henc'halleg ne vese ked lakaet lies awalc'h un dra *newez-deut* e penn kentañ ar frasenn, dreist-oll pa vez *un dra diressiss*<sup>188</sup>.

An urz *O V S* a vese implijet gant ar verboù-mañ-'r verboù: 'avoir' (*droit, duel, honte, mestier, pitié, poor, talent*), 'crier' (*merci*), 'donner, faire' (*duel, joie*), 'oïr' (*merveilles*), 'porter' (*armes*), 'prendre' (*congié, conseil*) (Buridant 2007 P.745).

An urz *V S* (Buridant 2007 P.752~755) a vese implijet pa vez degasset ar gaos gant ar verbe *dire* é tisklêrio: "*Dist li Cuens (ar c'hont a lâras pe lâred a raas ar c'hont)*". Pa vez ar verb *respondre* é tegass ar gaos iwe e vese lakaet e penn kentañ ar frasenn: "*Respont Rollant : Jo fereie que fols (Roland a repontas: Mond a rafen e belbi ganti)*"; ar verboù-merchañ 'oïr, veoir' a vese lakaet e penn kentañ ar frasenn iwe: "*voit le Bertrans, a pou n'est forsené (Ha Beltram d'er gweled, a-benn-kàer heñv kounnaret)*"; "*Ot le Bertran, a pou n'est forsenez (Ha Beltram d'er c'hlewed, a-benn-kàer heñv kounnaret)*". Hag ar verboù-fiñval (*aler, tresaler, cheoir, fuir, s'enfuit, enchalcier, saillir, venir, revenir*) a vese lakaet e penn kentañ ar frasenn pa vez un troc'h ewid adkomañs gant un dezrevell all: "*Va s'en Amis li gentiz et li bers (Mond a ra kuit ar c'hensort, an denjentil hag an den vailhant)*"; "*Fuit s'en Ernaus, n'i ot qe esmaier (Ernaod a ya kuit gant leun a aon)*".

Evel-se e meur a yezh, urz ar gerioù – pe pa vez ur verb pe pa vez ur rener d'ar plass kentañ – a so herwez ar gerioù: ar gerioù-mañ-'r gerioù a gav gwelloc'h deomp lakaad e penn kentañ ar frasenn – evel-just pa vez *libr* urz ar gerioù – ar gerioù-hont-'r gerioù a gav deomp penaos ezomm so deus ar

<sup>187</sup> Buridant, Claude. *Grammaire nouvelle de l'ancien français*. SEDES, 2007. P.741

"La première zone de la proposition, qui est donc la zone préverbale, est saturée par une large palette d'éléments pouvant constituer le thème de la proposition, soit : a. Le sujet syntaxique [...] b. Un élément topicalisé autre que le sujet, mettant en relief de l'information, soit: un régime direct [...] un complément circonstanciel [...] un adverbe thématique, lors, or, si, etc [...] des éléments rhématiques focalisés : adjectifs attributs prédicats du verbe estre [...] ou des struments marquant l'intensité, comme molt, trop, assez, bien [...] des formes nominales du verbe [...]"

P.743 "le paramètre stylistique, soit le genre des textes. L'antéposition d'éléments autres que le sujet est plus fréquente: dans des textes littéraires où jouent plus volontiers des phénomènes de mise en relief, moins dans des textes technique ou scientifiques, où l'ordre Sujet-Verbe est l'ordre de présentation normal, qui se répand de plus en plus à mesure que se développe ce genre de textes [...]"

<sup>188</sup> *Ibidem*. P.742 "On remarquera que la position thématique est rarement occupée par un élément indéterminé apportant une information nouvelle, comme un syntagme sujet art. Indéfini + N : avec un tel syntagme, l'ordre le plus fréquent est l'ordre adverbe/préposition circonstancielle [...]"

rener a-zirag. Ha kement-mañ a vefe ur pleustr a-gozh, un dra skornet, da lâred eo a-werso mad e vez gwraet e-mod-se hag un dra diwar ar pezh a vez gwrat gant an dud ha ne vefe ked un dra desket dehe da ober e-mod-se. Meur a wech, n'eo ked al lennegezh klassel 'ni eo a ra beli war ar parlant deus ar bobl, med ar parlant deus ar bobl 'ni eo a so bet silet e-barzh al lennegezh klassel. Nemed pa vez un *atañsion* da reizhañ pe *glannaad* – ha lies-mad en ur dostaad douzh an *henyezh* – ar yezh, a-eneb douzh ar parlant *koussiet* deus ar bobl douzh o selloù. Ar gomserien *yac'h* a so techet da goms *evel ma teu, evel ma vez klewet* gant an dud tro-ha-tro dehe a ya martese war ur furm hebkén d'al liessañ, hag a vez gwraet *ur furm skornet* (evel 'goar' 'ret' e *Bro-Fañch*) deus-outi. Koulskoude pa stagont da gonto, sevel un istor pe da sevel ur ganaouenn ne vefe ked gwall-souezhus ha ma kavfemp lies a stummoù-fracenn. Peogwir ema ar gontadenn pe ar ganaouenn deus ar bobl 'ni eo ma raskontr ar yezh *voutin* hag ar yezh *klassel* da lâred eo ur furm-yezh *muioc'h sewenaet, lakaet e gwersennoù*, strewet gant an Ilis pa vez kaos deus ar brezhoneg.

## 2.6. *Penaos e vese gwraet en e-raog...*

Ar lodenn-mañ a vo kenniget da ziskouez gant pessort mod e vese gwraet studioù diwarbenn urz ar gerioù en e-raog. En ur selled douzh skwerioù ar studi diwarbenn an hevelep sujed e c'hellimp tennañ skwer deus-oute, gant kement-se e c'hellimp sevel hon doare hon-unan, pe kadarnaad ar mod a-gozh.

Selled a raïmp buan-ha-buan douzh: Lenora Timm (1989<sup>189</sup>; ar studi a vese gwraet war-lerc'h Amy Varin 1979) ha 'neus amprouet war urz ar gerioù e-barzh ar lennegezh vrezhoneg a-vremañ *deus ar bobl* war-lerc'h al labour a oa bet gwraet gant A. Varin (1979) diwarbenn urz ar gerioù e brezhoneg *hengounel skriwet* hag e brezhoneg *chimikel*, ha L. Timm (1989) 'neus lakaet urz ar gerioù e brezhoneg deus ar bobl (deus kostez Karaes, martese) en o zal; René le Gléau (1973<sup>190</sup>) berr-ouzh-berr o vezañ m'ema bet meneget dija en e-raog, a ziskouez urz ar gerioù hag o *zalvoudegezh* diwar al *lizhiri adaleg 1710 (Introduction dar vuez devot Charlez ar Brizh)* beteg 1972; Janig Stephens (1982<sup>191</sup>) – brezhonegeres a-vihan deus kostez Lannuon – 'neus taolet ur sell douzh urz ar gerioù e brezhoneg deus ar bobl (dreist-oll heni *Bro-Dreger*) med heni variesoñ lennegel iwe<sup>192</sup>; Gilles Goyat (2012<sup>193</sup>) a zisklêr neuse urz ar gerioù deus komserien a-vihan brezhoneg Plozeved hag a oa bet ganet e fin an 19<sup>ved</sup> kantved sokén, hag a binvikay hor selloù douzh urz ar gerioù e brezhoneg *yac'h*; Mélanie Jouitteau (2013<sup>194</sup>) a sell douzh ar c'hconjugaison *perphastique* da lâred eo *Inf. V*, a-dreist peb tra, en ur reiñ da weled meur a zoare da sevel ar c'hconjugaison *periphastique*-mañ, lies awalc'h gant ar verb-sikour 'ober' petramant gant ar verboù so o-hunan (*rankoud, dleoud, gouzoud* h.a.) pe a-hend-all gant verboù *leksikal* all (*lenn, redeg*) pezh a vefe un dra dic'hortos; hag a-benn ar fin, – gantañ adarre! – Erwan le Pipec (2017<sup>195</sup>) – hag a so ur studi oc'h ober diñ-me choas ar sujed-mañ – a ra ahanomp da arnodiñ urz ar gerioù e *gwenedeg-ihuel* ma santomp ennañ e vez lakaet ar rener *dalbezh* pe gosig dirag

---

<sup>189</sup> *Opus citatum.*

<sup>190</sup> *Opus citatum.*

<sup>191</sup> Stephens, J. *Word order in Breton*, School of Oriental and African Studies, University of London. 1982.

<sup>192</sup> *Ibidem.* P.7~8:

"I am a native speaker of the dialect of Bro-Dreger, having learned French only when I went to school. Most of my study will be based on my experience with and knowledge of that dialect. I should remark, however, that I have examined sources from all the other dialects including Bro-Wened. These are available in a number of publications in Breton, such as *Al Liamm, Hor Yezh, Pobl Vreizh, Barr-Heol, Brud Nevez, Skrid, Al Lanv, Evit ar Brezhoneg*. An important other source is the collection of the spoken Breton of Bro-Dreger by Jules Gros. Gros, himself a native speaker of the dialect of Bro-Dreger, carefully compiled a collection of Breton as it was spoken, in the first part of this century.

[...] There exist also monthly magazines on audio tape cassettes: *Kazetenn ar Vro Plinn, Kazetenn Bro-Dreger, Kazetenn ar Menez*, for example, which proved to be valuable sources of material. The speakers on *Kazetenn Bro-Dreger* speak in the dialect of Bro-Dreger, but Bro-Plin being close to the South, includes speakers from different dialects. Finally, during regular visits to Brittany, I have been able to consult neighbours and members of my family, all native speakers of Breton, and for whom Breton is still the everyday language."

<sup>193</sup> Goyat, Gilles. *Description morphosyntaxique du parler breton de Plozévet*. Université de Haute Bretagne, Rennes 2, 2012.

<sup>194</sup> Jouitteau, Mélanie. 'La Conjugaison Analytique de Doublement Du Verbe En Breton'. Ali Tifrit (Éd.) *Phonologie, Morphologie, Syntaxe Mélanges Offerts à Jean-Pierre Angoujard*, PUR, 2013, pp. 327–54.

<sup>195</sup> *Opus citatum.*



ar verb, hag a ziskouezo urz ar gerioù brezhoneg dre goms (Margenag, An Ardeven, Arradon e-tal heni ar Poher hag a so bet studiet gant F. Favereau) ha heni ar *gwenedeg klassel*.

Pennad L. Timm (1989), o komañs ar pennad en ur zegass soñj deus an hipotesenn savet gant A. Varin penaos e-toues ar c’homsoù skriwet adaleg fin an 19<sup>ved</sup> kantved beteg ar mare ma skriwe A. Varin ar pennad, ar stumm *SVO* ‘ni eo ar peb muiañ kavet hag ar stumm *VSO* (*Inf VSO*, amañ ewid ar brezhoneg neuse) a vefe un tech da c’hlannaad ar yezh gant *newezbrezhonegerien* ha ‘noa desket dre levrioù a-benn ewid tostaad douzh ar yezhoù keltieg all ma vez enne, *VSO* ar stumm muiañ kavet.

Dislâred a ra L. Timm neuse ma n’eo ked bet amprouet gant A. Varin penaos e vez gwraet *dre goms*<sup>196</sup> seul vuioç’h ma ‘noa klasket *termeniñ* ar brezhoneg evel ar yezh *SVO*.

Neuse, L. Timm da lakaad urz ar gerioù e brezhoneg dre goms (heni kostez Karaes ataw) e-tal heni *ar brezhoneg chimikel*<sup>197</sup> ha heni *ar brezhoneg hengounel* (da lâred eo brezhoneg dre skrid adaleg fin an 19<sup>ved</sup> kantved): setu an daolenn<sup>198</sup> savet gant L. Timm<sup>199</sup> kempennet un tammig ganiñ en ur lakaad un daolenn all savet ganti<sup>200</sup> diwarbenn urz ar gerioù tennet diwar *pemp destenn lennegel deus ar bobl*<sup>201</sup>

Un dielfennañ diwar implij a oa da zigentañ, koulskoude evel ma vese gwraet kals d’ar mare-se ne gemere e kont, perag e vez skriwet pe lâret er mod-se, ne ziskoueze ked ar frasennoù e-toues ar frasennoù all, da lâred eo ne rae ‘med un dielfennañ formalist all. Un dra all a so da lâred diwar he studi: ne zispake ked urz ar gerioù pa vez islavarenn-adverb. Diskouezet ‘neus urz ar gerioù pa vez islavarenn-stag (*VSO* d’ar muiañ), med interessantoc’h e vefe bet m’he defe lakaad tal-ha-tal anehi gant an islavarenn-adverb, seul vuioç’h ma kavomp – evel m’hon eus gwelet diwar skwerioù levr Herve Herri – e vez kavet an urz libr<sup>202</sup> pa vez isurziet ar frasenn sokén.

Un dra interessant a gavomp en he studi ur sort: dregantad ar stumm *Inf. V* (ar gconjugaison perifrastik). Nemed 5% ne gavomp e-toues *I235* a frasennoù amprouet ganti. Hag a glot gant ar pezh a so bet dispaket gant F. Favereau (1997) ewid brezhoneg ar Poher: nemed 6% herwezañ<sup>203</sup>.

---

<sup>196</sup> P.363 “*Varin's evidence for SVO pivots on a few well-chosen examples from written sources stretching from the late 19<sup>th</sup> century to the present day. She does not provide evidence from the spoken language.*”

<sup>197</sup> Da’m soñj e vefe brezhoneg *desket* ha brezhoneg e-barzh ar levroù-yezhadur...

<sup>198</sup> Ewid an daolenn en ho pedañ da weled **Stagadenn-vihan I: taolenn 12**

<sup>199</sup> *Loco citato*. P.365

<sup>200</sup> *Ibidem*. P.371

<sup>201</sup> P.370 “*The works examined are: Tad-Kozh Roperz Huon (Duval, 1982); E Skeud Tour bras Sant Jermen (ar Gow, 1978); Evel-se e oamp (Herri, 1982); Va zarnmig buhez (Priel, 1975); 'Ar voualh aour' (Brud Nevez, Rolland, 1985).*”

<sup>202</sup> Da lâred eo ema disheñvel urz ar gerioù pa vez isurziet sokén herwez an digouez, evel ar frasennoù-kadarn, e vefe gwelloc’h lakaad un dra *newez-deut* (S. Hewitt 2018 a ziskouez an doug ma lakomp ar rener – pa vez un anw-boutin ha divoutin ha pa ne vez ked ur raganw – just goude an *tamm kentañ*) evel “*Pa oan bihan / ma familh a oa paour; Peogwir / kavoud a rae mad ar boñboñioù*”. En ur mod all e vefe displeget ema techet an dud da zispartiañ an islavarenn douzh al lavarenn bennañ: *V2* a vez gwraet pa vez an islavarenn-adverb evel pa vez diw lavarenn bennañ *kenurziet* gant un adverb

<sup>203</sup> Gweled an daolenn 1

Dregantad ar stumm *Inf. V* a c'hell bezañ disheñvel an eil skriwagner douzh egile. Herwez a veneg L. Timm, Jarl Priel 'ni eo ha 'noa implijet ar stumm-mañ ar muiañ (11,8%) ewid ar re all (2,6%~4,7%)<sup>204</sup>.

O kaoseal deus dregantad ar stummoù, un dra dedennus all a gavomp pa vez ar stumm *SVO*. Jarl Priel 'ni eo ha 'noa implijet ar stumm *SVO* an nebeutañ (10%), ha Anjela Duval ar muiañ (30,5%). Unan, ur gwas, ur c'hoariva-our, un troer; hag unan all, ur vaoues, ul laboureres-douar. Koulskoude an diw oberenn a oa oll sort biografiezh hag an daou 'noa skriwet oberennoù ewid Al Liamm. A-gaos da berag? Afer a studial pizh c'hoazh...

En he c'honklusioñ e taole he ferspektiv diwar amser-da-zond urz ar gerioù e brezhoneg. A-balamour m'he doa diskouezet med urz ar gerioù brezhoneg diwar oberennoù pe komsoù savet pe estaolet gant ar vrezhonegerin a-vihan. Ha hi da zisklêrio daou hent pa vez urz ar gerioù d'ar gomserien 'noa desket brezhoneg evel an eilved yezh (pe an deirved, ar bederved...): heli ar skriwagnerien *Keltist*<sup>205</sup> pe sevel o zammoù frasennoù diwar patrom ar galleg<sup>206</sup>. Koulskoude, me 'gav diñ penaos an daou hent-mañ a so oll diwar patrom ar galleg. Ne gemeront ked e kont *gwevnded* urz ar gerioù e brezhoneg dreist-oll pa vez un islavarenn-adverb. Ar yezhadur preskriptivel (hag a glot gant brezhoneg chimikel A. Varin ha L. Timm) a zifenn ma vo lakaet an traoù all kén-med ar verb (da lâred eo V2, en ur ster strizhig) da lâred eo ur stumm skornet (evel e galleg) tre ma vez libr ar stumm pa vez an islavarenn-adverb e brezhoneg *yac'h* (da lâred eo V2 iwe, en ur ster ledannoc'h; gweled an NOTENN 202).

Levr René le Gléau (1973<sup>207</sup>) – na bezañ ma ne zisklêr ked dregantad urz ar gerioù paneve-se ul labour poueset-mad – so ul labour *strukturalist* hag a zispak petra a oa tech al lennegezh klassel beteg e amser (~1972). Evel ma vez labourioù strukturalist ne laka ked kaos deus ar fedoù a-ziavaes, displeget gantañ: er-mod-se e vez implijet gant an dud ha ne zispleg ked a-balamour da betra e vez gwraet er-mod-se en ur glask ar fedoù a-ziavaes, nemed ewid an *énonciatives de structure tertiaire* (P.77) – ar pezh a gave *dijaojapl* da F. Kervella – hag a so reizh a ra deomp da c'helloud sevel ur frasenn hag a so kreñv he foues heb koll sklæerder ar frasenn<sup>208</sup>. Hag ouzhpenn a-balamour da betra e vez gwraet e vez lakaet ar verb er plass kentañ pe en eilved pe en trived, en ur glask ar fedoù a-ziabarzh. N'eo ked petra a vez lakaet e penn kentañ ar frasenn 'ni eo 'neus displeget evel-just.

Petramant en e zispleg ne lâr ked ema un dra ma fell deomp pouesañ warnañ 'ni eo a vez lakaet e penn kentañ ar frasenn, med un dra a c'hell liammañ ar frasenn hag ar frasenn en he raog.

---

<sup>204</sup> *Opus citatum*. P.373

<sup>205</sup> P.377 “either they will consciously adopt the rules of the more conservative, Celticist writers (the Bch route)”

<sup>206</sup> P.377 “they will follow their largely francophone instincts in expressing themselves in Breton, which could easily mean a rise in the frequency of SVO ordering (as well as a host of other morphosyntactic changes that could radically alter the shape of the language).”

<sup>207</sup> *Opus citatum*.

<sup>208</sup> P.77 “Structure exceptionnelle, mais correcte, la structure tertiaire place le verbe en troisième position. Elle répond à un souci stylistique d'équilibre de la proposition ou de recherche de l'expression forte...”

Un dra interessant a gavomp er bajenn 88, diwarbenn implij ar stagell ‘ma’ goude ar verboù ‘gweled, gouzoud, lâred’. Neb a lâro ema un dra o tond deus ar galleg, dre leveson ar galleg “*Je ne sais pas si...*”, koulskoude R. le Gléau a soñj dehañ ema reizh tre na vo ked a *zisklàerded*<sup>209</sup>. Krediñ a ra deomp ema un implij reizh e gwenedeg klassel hag un dra zireizh er C’hLT klassel, roet so bet diw skwer gantañ med e gwenedeg hebkén<sup>210</sup> gant ar memes skriwagner e-barzh ar memes oberenn. Y.-V. ar Joubious ne implije ked ‘med ‘ha’ (LE BESCO 1993<sup>211</sup>), koulskoude kaved a reomp ‘ma’ e-tal ‘ha’ e-barzh al levr-yezhadur gwenedeg klassel (GOFF&GUILLEVIC 1902<sup>212</sup>).

War ar poent-mañ, F. Favereau (1997) en em c’houlenn ha so ul leveson diwar ar galleg pe hag so un emdroadur diabarzh er mod saosneg:

P.386 “693. *Interrogatives en \*ma - on ne saurait, non plus, tout au moins en principe, admettre la structure en ma (ou mar -LC 205, lequel juge qu'ils 'agit d'"un abus tout à fait condamnable", de même que FK 400: "ur fazi": une faute) même si on l'entend, non seulement en "néo-breton" (ex. \*n'ouzon ket ma teuio ...), mais en vannetais quasi standard (ne ouian ket ma tay ... j'ignore s'il viendra), voire de plus en plus en breton parlé des jeunes générations, et en breton usuel jusqu'au Pélem au moins (contes de M. Guilloux). Evolution fautive et "terminale", ou innovation à la manière de l'anglais qui a généralisé if au lieu de whether? L'avenir le dira, même si on peut s'attendre, au vu de l'évolution rapide de l'usage, à ce que la première hypothèse se vérifie. L'emploi traditionnel de ha serait ici bien préférable, pourtant. D'autant qu'il existe une différence pertinente à conserver entre: lar din hag-eñ e chom(o) / lar din ma chom (= dis moi s'il reste en fait / préviens-moi au cas où il reste)”.*

Douzh a glewañ er c’hreissennoù stummadur brezhoneg e vez desket implij ‘hag-eñv’ hebkén hag a varn ema direizh<sup>213</sup> implij ‘ma’ ... E rankfemp ober ur studi diwarbenn kement-mañ a-benn ewid gouzoud hag e vefe un emdroadur diabarzh, un dra newez-flamm hag all.

Tesenn Janig Stephens (1982<sup>214</sup>) a so ur studi *formalist* iwe a zislâr an deorienn ma lâr ema ur yezh *SVO* ar brezhoneg hag a oa savpoent J. E. Edmonds (1979<sup>215</sup>) é lâred ema ar stumm *VSO* é tond deus ar stumm-*diasez* brezhoneg: *SVO*.

En trived pennad so kaos deus ar stumm neutr en urz ar gerioù brezhoneg. Termeniñ a rae ema daou stumm pennañ e brezhoneg: unan *neutr* [*Verb* (*S* [+ *finite*]) *Aux. X*]; hag unan all *topikaliset* [*Topic*] [*V* (*S* [+ *finite*]) *X*]. Herwezi, ar stumm(ioù) *topikaliset* a yafe assambles gant *WH*

<sup>209</sup> P.88 “*Pour l’interrogation simple: Mar; Hag; Hag-eñ: Mar, fondamentalement conjonction conditionnelle comme en français SI et en grec EI, s’emploie usuellement dans les parlers comme particule interrogative. Cet emploi est correct s’il n’entraîne pas aucune ambiguïté*”

<sup>210</sup> P.88 “*Gwelit mar dit a-gil pe a-raok. [Livr Pedenne overen ha gospereu. GUILLEVIC. 1927] p. 25 Piv oar mar ne bardono ket deoc’h? [Ibidem.] p. 35*”

<sup>211</sup> Ar Joubious, Y.-V. et Le Besco, P. *Opus citatum*.

<sup>212</sup> *Opus citatum*.

<sup>213</sup> Ur stummer é tond deus *Bro-Gwened* ‘noa lâret iwe ema dre leveson ar galleg...

<sup>214</sup> *Opus citatum*.

<sup>215</sup> Edmonds Joseph. ‘Word order in generative grammar’, in *Explorations in Linguistics: in honor of Kuzuko Inoue*. 1979

*constructions*. Hag evel ma lâr P. Rous en e levr<sup>216</sup>, ar stumm *Inf. V (S) O* n'eo ked ur stumm topikalaset med e vefe dleet bezañ soñjet evel ar stumm neutr hag ar stumm liammet gant *Wh constructions* ar stumm topikalaset a vefe *Inf. O V (S): lenn a ra Anna ul levr er gêr* vs. *lenn ul levr a ra Anna er gêr* (a laka poues war ar *VP*). Hag ar stummoù all a laka poues pe war an *NP (Anna a lenn ul levr er gêr)* pe war ar *PP (Er gêr e lenn Anna ul levr)*.

Ha kement-se, martese reizh *o kaoseal en un doare formalist*, pa sellomp douzh an dregantad dispaket gant F. Favereau (1997<sup>217</sup>) e Poher ha gant E. Pipec (2017<sup>218</sup>) e Margenag e soñjfemp en ur mod all. Nemed ur 6% a frasennoù dastumet gant F. Favereau ne oa er stumm *Inf. V* (heb soñjal e-barzh ar stumm *Inf. O V*, ar pezh a so ewid lakaad poues war ar *VP* herwez J. Stephens), ha nebeutoc'h e Margenag nemed ur 0,6% a frasennoù bennak. O kaoseal *en un doare formalist*, an darn vrassañ ceus ar c'homsoù estaolet gant Poheris ha Margenagis a so *topikalaset* ha herwez an deorienn-se, an oll gomsoù dastumet gant E. Pipec (2017) en Ardeven hag en Arradon, n'eus med komsoù *topikalaset* anehe.

En ur zielfennañ er mod *formalist* – en ur soñjal ema ar brezhoneg yezh *V S O* – ar frasenn neutr ne rankfe ked-med bezañ diwar ar stumm *Inf V (S)* hag ar stummoù all a rankfe bezañ *topikalaset* peogwir ne vo ked ar verb 'ni eo a vo lakaet e penn kentañ ar frasenn, dirag ar *VP*.

Klask ar frasenn neutr e brezhoneg a so bet kals hag a so bet disheñvel, evel m'hon eus gwelet, P. Rous (1957<sup>219</sup>) a lâre penaos ar stumm *Inf V (S)* 'neus kollet e boues hag a vefe gwelloc'h deomp lakaad anehañ *neutr*; P. Trepos (1996<sup>220</sup>) en e levr-yezhadur a lâr ema ar stumm *S V O* é c'hounid takad tamm-ha-tamm diwar-goust ar stummoù all<sup>221</sup>; J.-Y. Urien (1978<sup>222</sup>) ne gav ked frasenn neutr ebed e brezhoneg a-hend-all; Jos Corbel (1981; meneget e-barzh Favereau 1997<sup>223</sup>) *Adv.* (pe *Anw-gwann-verb*) *V (S)*; ha *S V O lojik* hag a so neutr a gavomp e-barzh F. Favereau (1997) a vefe dre leveson ar galleg herwez P. Trepos (1996).

Penaos e vese gant brezhonegerien ha n'ouient ked ger galleg ebed? Tesenn Gilles Goyat (2012<sup>224</sup>) a ziskouez deomp brezhoneg maouisi o tond deus Bro-Vigouden, bet ganet fin an 19ved kantved hag a oa bet aterset gant Donatien Laurent e finwezh o buhez. Ger galleg ebed ne ouie ar maouisi-se, kalon ar yezh pe "brezounek skiltrus ha freaz" a oa manet enne (cf. FLEURIOT 1981;

<sup>216</sup> Le Roux Pierre. *Le verbe breton (morphologie, syntaxe)*. - 2ème éd. rev. et augm. - Paris-Rennes : Plihon, Champion, 1957. P.466: "... elle a perdu beaucoup sa valeur emphatique"

<sup>217</sup> *Opus citatum*.

<sup>218</sup> *Opus citatum*.

<sup>219</sup> *Loco citato*. P.466

<sup>220</sup> *Opus citatum*.

<sup>221</sup> p.358: "Le breton répugne généralement à mettre le sujet en tête, sauf par droit d'insistance: me a yelo da weled ahanoh, moi j'irai vous voir; et, dans ce cas, il aura tendance à ajouter AN HINI EO, SOUS la forme syncopée 'NI ... me 'ni a yelo da weled ahanoh, c'est moi qui irai vous voir; La première forme a pris de l'extension au cours des dernières générations.

<sup>222</sup> Urien. J.-Y. 'Essai d'analogie sémiologique du mot verbal en breton contemporain', *Studia Celtica* XII-XIII, 1977-1978.

<sup>223</sup> *Opus citatum*.

<sup>224</sup> *Opus citatum*.

PLOURIN 2005) sañset. E berr goms, an oll dud ma ‘neus gwraet G. Goyat ar c’horpussoù deus-oute a oa bet ganet a-raog ma voe disklêriet ar Bresel Bras (1877~1909), a oa unyezhoosed brezhoneg, gosig.

Kontrel douzh a glewomp amañ hag ahont, ar stumm muiañ implijet gante e oa ar stumm *S V O* (pe *A*), setu amañ e teu soñj dehañ da lakaad *ar stumm na ‘neus poues ebed* (P.339) pe *neutr* deus-outañ. A-benn ewid pouesañ war ar rener e vez gwraet ‘*ni eo* pe lakaad muioc’h a boues-mouezh war ar rener moarvad (P.339), peogwir e vez dre goms<sup>225</sup>. Setu ma savo ur goulenn pe ma teu splannoc’h an ezomm da zispartial ar yezh dre goms douzh ar yezh dre skrid pa vez gwraet ar studi a-sort-mañ, e-barzh ar yezh dre goms a vez muioc’h a oustilloù a c’hellomp implij ewid pouesañ war an dra-mañ-‘n dra. Ar stumm na rankomp ked implij aliet gant levrioù-yezhadur, *adv. S V O* (pe *A*) a gavomp awalc’h iwe, e-tal ar stumm *Adv. V(S)*.

Evel ma kavomp e-barzh levrioù-yezhadur so (LE GLÉAU 1973; FAVEREAU 1997), ar verboù so a c’hellomp lakaad e penn kentañ ar frasennoù, e Plozeved e vefe (a-nes ar verb *bezañ* e stumm-ober) *dleoud* ha *gelloud* da lâred eo ar “verboù kreñv” (LE GLÉAU 1973; FAVEREAU 1997): “Drefen be lavared deñ; Alloh laka hanon da gana gou-ze hoa; Allfen be ‘n em dromped gad unan bennag.”

Ur stumm ispissial hag a vez lakaet e penn kentañ ur frasenn a gavomp iwe: “*Vie lared... (E vese lâret)*” a vez klewet lies awalc’h e Leinioù Bro-Gwened (e Margenag, PIPEC 2008<sup>226</sup> ; kenkouls evel er C’hroesti, BRAS 1976<sup>227</sup>) iwe, a-dreist-oll gant *ha* en e-raog.

Douzh e zielfennañ, 18 a frasennoù a gavomp ma vez lakaet ar verb e penn kentañ ar frasennoù (*VI prop, Inf. V(S), an doare-gourc’hemenn* hag all) e-tal 189 a frasennoù e *S V O* (pe *A*). Hag e teu anad deomp ema poueset awalc’h war an aksion pa vez lakaet ar verb e penn kentañ ar frasennoù<sup>228</sup>.

O kaoseal deus an islavarennoù, an islavarennoù-tra hag all: amañ e kavomp ur stumm libr iwe, a-wechoù ur verb<sup>229</sup> o vezañ lakaet goude al lavarenn gentañ (7 gwech) hag ur rener<sup>230</sup> (6 gwech) pe ur renadenn-dra<sup>231</sup> (4 gwech).

An islavarennoù all (paneve an islavarenn-stag) so libr o urz nemed an *islavarenn-c’houlezad* na vez ked kavet ‘med ar verb just war-lerc’h al lavarenn gentañ:

---

<sup>225</sup> “La conséquence en est que l’ordre de mots *S + V + A* (ou) *O* doit être considéré comme neutre ou non-emphatique. Pour insister particulièrement sur le sujet, on a recours à l’expression ‘*ni eo* qui se place après lui, ou à une accentuation orale plus forte, puisqu’il s’agit d’un parler.”

<sup>226</sup> Le Pipec, Erwan. *Etude pluridimensionnelle d’un parler : description, émergence et aspects sociolinguistiques du parler du breton de Malguénac*. Université de Haute Bretagne, Rennes 2, 2008.

<sup>227</sup> *Opus citatum*. Hor Yezh 110.

<sup>228</sup>

P.345 “Dans quelques cas, la valeur emphatique de cette structure est certaine : l’insistance sur l’action exprimée par le verbe est évidente. Mais même si le nombre d’occurrences dans le corpus est limité (18, y compris celles commençant par des verbes à l’impératif et les incisives, contre 189 avec le sujet en tête !), il semble que ce soit majoritairement une construction neutre du point de vue de l’expressivité.”

<sup>229</sup> “Posubl ve glevez trouz ar hloh doh p’leh oa.”

<sup>230</sup> “Me oar ar chañsonioù oa braw.”

<sup>231</sup> “Pep uni neuz ar pezh a verit.”

P.366 “*La subordonnée concessive peut précéder ou suivre la principale. Dans le corpus, elle la précède dans 4 cas sur 10. Le verbe y est exclusivement à la conjugaison synthétique. Les locutions conjonctives utilisées sont n’eus forz, la plus représentée, qui apparaît sous le forme forz, daoust ha et evid (da) ; nous les présentons dans cet ordre. Nous y avons ajouté deux phrases contenant des subordonnées que l’on pourrait appeler « d’opposition », introduites par e-leh (tandis que), où le verbe est à la conjugaison analytique.*”

Ar parlant diskriwet gant G. Goyat a ziskouez e vez libr urz ar gerioù e brezhoneg pa vez islavarennoù gant brezhonegerien a-vihan hag a oa bet ganet a-raog ar Bresel Bras. Hag a so c’hoazh e vez (pe e vese...) *neutr* ar stumm *S V O* ewite.

N’eo ked kement verboù so a c’hellfemp implij ar stumm *Inf. V (S) O* gante e brezhoneg. Evel ma so bet displeget gant J. Stephens (1982) en ur refusañ da vond war ar *generalised phrase structure grammar*, ar verboù-di-zifiñv hebkén ‘ni eo a vo lakaad er *VP* da lâred eo; hê hebkén eo a vo gwraet ar frasennou en *Inf. V (S) O* gante<sup>232</sup>. Da skwer ar verb ‘bezañ’ ne vo ked implijet ewid ober ur frasenn en *Inf. V (S) O* (nemed pa ve al lavarenn skornet ‘*Boud a ra*’ e kornadoù-bro so ewid lâred ‘*Boud so pe Bez so*’) pe ar verb ‘*kaoud pe endevoud*’ ne vo ked iwe pe dibaod a wezh (e *gwenedeg-kozh* da skwer).

Pennad M. Jouitteau (2013) so bet kenniget d’ar c’*hconjugaison périphratique*: ar stumm *Inf. V* (gant ar verb *ober* displeget) hag un all *Inf. V* (gant ar verb *doublet*).

Da zigentañ, e tispak daou stumm deus an displegañ-mañ: unan hag a c’hell bezañ gwraet gantañ bepred pe dost, da lâred eo ar stumm ‘sort “*Mont a ran d’ar jardin*” hag a vez kavet aes e-barzh peb parlant; hag unan all gant an doublañ verb, da lâred eo “*Mont a yan d’ar jardin*” hag a vefe herwez parlañchoù pe herwez tud sokén.

Evel ma lâre J. Stevens (gweled an NOTENN 232), menegiñ so bet gwraet gant M. Jouitteau penaos e-barzh levrioù-yezhadur *klassel* e vez gwelet ne c’hellomp ked displegañ ar *verboù-stad* er stumm *Inf. V* (ROSTRENN 1795; TREPOS 1996). Koulskoude evel ma kavomp *verboù-stad* dindan ar stumm *Inf. V (S)*: *seblantoud, dond da vezañ, tremen* ewid herwez ar pezh ma so bet meneget ganti, ha diñ-me ar verb “*chom*” iwe, dre skrid kenkouls evel dre goms ha gant an *newezbrezhonegerien* kenkouls evel gant ar *vrezhonegerien a-gozh*.

Kemm so bet lakaet ganti neuse etre *structure informationnelle plate* hag a glot – ma kemeromp ar skwer a-ledannoc’h – gant ar pezh ma lâre J. Stephens (1982), ar stumm *Inf. V (S)* ‘neus heb talvoudegezh poueset ebed; hag unan all *poueset* neuse m’en em gav ar verb-sikour “*ober*” displeget lies awalc’h distag douzh an *Inf.* ma kavfemp etrese *renadenn-dra an Inf.* pa vez ar verb *transitivel* pe

<sup>232</sup> Stephens, Janig. *Opus citatum*. 1982.

P.16: “*However the idiosyncratic properties of the auxiliary ‘ober’ cannot be adequately explained in a Phrase Structure grammar. (...) However, if every verb in the language is inserted in a sentential context, only the non-stative verbs occur in the Topic. A whole class of verbs does not occur in VP. For these reasons the framework of the Generalised Phrase Structure Grammar has not been adopted.*”

*renadenn-dieeun* pa vez ar verb *intransitivel*, setu amañ ema ar stumm poueset herwez J. Stephens ha M. Jouitteau.

Herwezi, ar stumm-mañ a c'hellfe bezañ implijet ewid ar verboù leksikal fokalisiert ma rankomp implij anehañ hag ar *structure informationnelle plate* ma so lies a choasioù etre ar stummoù n'int ked poueset all. Koulskoude pa vez un dra *rag-verbal* ne c'hellfemp ked implij anehañ. Koulskoude kaved a reomp a-wechoù ar stumm *A, Inf. V (S)* na bezañ dehañ dibaod a wech a gavomp<sup>233</sup>.

Un dra all meneget ganti a so, meur a wechoù ne gavomp lost-verb ebed ewid an *Inf.* er stumm-mañ evel e Pellann hag e Gwareg: ar bossublted chañch-dichañch etre *-o* (lost-verb *adrenñverbal*) hag *-eg* (lost-verb ewid ar stumm *Inf. V (S)* pe *rag-verbal*). Ken gwir all e gwenedeg klassel iwe, dreist-oll gant Y.-V. Joubious (LE BESCO 1993) e kavomp al lost-verb *-ein* a vez kavet stank ewid ar stumm-mañ e-tal al lostoù-verb all (*larein* vs. *lared*; *hellein* vs. *helloud*; *lakein* vs. *lakad*; *goulennein* vs. *goulenn*).

Ur stumm all ewid ar c'hconjugaison *périphratique* e brezhoneg a so en ur *zoublañ ar verb*: an darn deus-oute a so *verboù-hanter-sikour* pe *modal* (*gelloud*, *rankoud*, *dleoud*, *gouzoud*) hag ar *verboù-fiñv boutinnañ* (*mond* ha *dond*) hag a-rouez *verboù leksikal* evel '*kerzed*, *redeg*, *lenn*'. Dibarder ar stumm-mañ e-keñver ar stumm *Inf. V* ("ober" dipleget) a so penaos ne c'hellomp ked lakaad ur renadenn-dra etre an daou verb, paneve renadenn-dieeun hag a c'hell bezañ lakaet etrese pa vez verboù *intransitivel* (da lâred eo *mond* ha *dond* hebkén amañ): P.12 "Dont d'ar gêr e teuio war droad / \*warc'hoazh."

A-nes ar verboù '*kerzed*, *redeg*, *lenn* ha *gouzoud*', kement a verboù all (ar *verboù modal*; pe *mond* ha *dond* evel ur verb-sikour ewid esteurel un aksion hag a vo gwraet tuchantig pe hag a so bet gwraet tuchantig, just evel *futur proche* ha *passé proche* e galleg cf. GOFF&GUILLEVIC 1902, P.44) a c'hell bezañ lakaet e penn kentañ ar frasenn (*VI*, GOFF&GUILLEVIC 1902; LE GLÉAU 1973; FAVEREAU 1997) iwe.

Doublañ verb ewid ar c'hconjugaison *périphrastique* e brezhoneg a so da zigentañ herwez tud (evel ma tiskouez gant ur gomseres o tond deus Kallag hag unan all o tond deus Kemperle, ne glot ked ar verboù a c'hell bezañ doublet, an eil gant eben). Ha n'eo ked kement verboù so hag a c'hell bezañ doublet. Ar c'hconjugaison *périphrastique*, pe *anw-verb*, pe *infinitiv* a vefe, e gwirionez lâred a ra M.

---

<sup>233</sup> Laouënan, Yves-Marie Gabriel, *Kastel Ker Iann Koatanskour*. 1834. "Mar d'eo ho c'hoant da redet ar vro gand plijadur evid he anaout, ho kuzulia a rann da zistrei dré hent Ploueskat..."

Jouitteau iwe ma vefe ur stumm ha n'eo ked *fokalisiert*; hag ar stumm en ur zoublañ a vefe ur stumm hag a so muioc'h a nerzh ennañ<sup>234</sup> a vo a-benn ar fin ur stumm *fokalisiert* war ar verb.

Re na anavont ked mad ar gwenedeg, pa vez kaos deus ar gwenedeg gante e vez kaoseet deus ar staoñekadur da gentañ, ha gant re ha 'neus bet tro da lenn skridoù skriwet e gwenedeg klassel e vefe lâret penaos ar stumm S V O – hag a denn d'ar galleg – a so kals e gwenedeg, en ur lâred so ul leveson diwar ar galleg, seul vuic'h m'ema Bro-Gwened tostoc'h douzh Bro ar C'hallaoued.

Erbedet en doa F. Kervella (1947) nompas implij re ar stumm S V O marse ewid en em ziforc'hiñ douzh ar galleg iwe ha F. Vallée (1926<sup>235</sup>) é lâred n'eus ked med e gwenedeg ma vez implijet ar stumm-mañ ewid an trived gour en ur lâred "*Ceci ne s'applique pas au vannetais dont la syntaxe sur ce point est très francisée.*".

Pennad Erwan Pipec (2017) a zispak neuse ar wirionez e-keñver urz ar gerioù e parlañchoù gwenedeg en ur lakaad anehe e-tal urz ar gerioù e parlant ar Poher (FAVEREAU 1997) ha heni ar skrid skriwet e gwenedeg klassel *Instructioneu santel ar re gurionnéeu principal ag er religion* (MARION 1790).

Da zielfenniñ urz ar gerioù e parlañchoù so bet rummataet gantañ e 12 a dipoù – ha 'moa kredet implij – : S V (O) (pe SOV); [S] V + anaforik<sup>236</sup> ; A V (O) ; Emfatik + V S (O)<sup>237</sup>; Ha + V S (O) ; O V S ; InfV S (O)<sup>238</sup>; ~~Inf~~<sup>239</sup> ; ~~X~~<sup>240</sup> ; ~~?~~<sup>241</sup>; V S (O).

Ha Margenag o vezañ en em gavet er Gwalarn-uhel deus an tachadoù ma vez kaoseet gwenedeg-uhel enne a vefe gwelet perzhoù é tond deus komunioù amneseg (*tuadoù ar Vro Pourlet*) hag a vefe levesonet sokénnoc'h gant *Kreis-Breizh* – ma kavomp ar Poher (FAVEREAU 1997) ennañ – e-keñver ar c'heriaoueg<sup>242</sup> kenkouls evel ar fonologiezh.

234

P.12 "*L'impact du doublement sur la structure informationnelle va de l'allusif au contradictoire dans les grammaires. Son étude demanderait un test extensif, prenant en compte la variation. Ernault (1890 :470) postule une gradation d'insistance : le doublement du verbe rankout, 'devoir', serait un « synonyme plus énergique » de la CA en 'faire', qui marquerait déjà un renchérissement sur la forme synthétique. Ceci serait par ailleurs contradictoire avec la note de Le Gléau (1973 :46) qui lui n'a pas la forme CA en 'faire' avec une lecture focalisante sur des semi-auxiliaires comme rankout, 'devoir'. La traduction que Herve ar Bihan offre de cette phrase de son père Guy pointe vers un effet d'insistance sur la véracité de l'action ('verum focus').*"

<sup>235</sup> Vallée, F. *La langue bretonne en 40 leçons*, Librairie Prud'homme. 1926. P.12

<sup>236</sup> "Ar Finistériens 'oa kaled kompren gete."

<sup>237</sup> "Bet oa ( ) a gement lec'h"

<sup>238</sup> "Arriviñ a rae an Alamanted"

<sup>239</sup> "Ha kaniñ ha traoù"

<sup>240</sup> "Dimezet ar blez eizh ha doau-ugent."

<sup>241</sup> "Kar a zo-int sévères."

<sup>242</sup> Gerioù hag a kavomp e-barzh Plourin, J.-Y. "*Initiation au breton familial et argotique*" 2002. a vez komprenet ha klewet gant tud a Vro-Pourlet iwe... (*plommiñ* da skwer) ha gerioù evel '*emzav (kapapl)*' a vez implijet er Vro Pourlet iwe.



An disoc'hoù dispaket gant E. Pipec a lâr penaos n'eo ked gwall-zisheñvel urz ar gerioù e-barzh parlant Margenag douzh parlant ar Poher: 33,9 % a frasennoù e *SVO* (*SOV*) ha [*S*] *V* + anaforik e Margenag douzh 27,8 % a frasennoù a-sort-se e Poher; 62,1% a frasennoù e tipoù *VS*<sup>243</sup> e Margenag douzh 61,1% a frasennoù a-sort-se e Poher; 3,1% a frasennoù en *OV* e Margenag douzh 4,4% a frasennoù a-sort-se e Poher; 0,7 % a frasennoù en *Inf.VS* (*O*) e Margenag douzh 6,7 % a frasennoù a-sort-se e Poher. Ar stumm *Inf. V* (*S*) (ase *Inf. VS* (*O*)) hebkén a laka kemm etre parlant ar Poher ha parlant Margenag. Koulskoude pa sellomp douzh parlant kostez an Arvor, tostoc'h douzh Gwened (da lâred eo seul vuioù ma tostaomp d'ar Gevred) e teuy sklæerroc'h ma vefe kavet muioc'h a frasennoù e *S V* en Ardeven hag en Arradon e-keñver Margenag hag ar Poher (P.8).

En ur lakaad aneche e-tal ar skrid savet gant Y. Marion (1790) ginidig deus an Arradon iwe a laka (P.10) lies a stummoù frasenn e-keñver dre goms nemed dregantad ar stummoù hag a so heñvel-heñvel douzh dre goms iwe, ar stummoù ne chañchont ked... muioc'h a frasennoù en *OV* gant Y. Marion (4,1%) douzh dre goms (1,5%); muioc'h a frasennoù en *Inf. VS* (*O*) gant Y. Marion (0,6%) douzh dre goms (0%). Med ar pezh a so ewid ar stumm *Inf. VS* (*O*) e-keñver yezh Marion, evel m'hon eus gwelet, dibaod a wech ne vez kavet med pa vez ar *gour neutr*, martese ema kollet dre goms<sup>244</sup>, setu trapenn da betra ne vez ked implijet tamm *Inf. V* ebed e parlant an Arradon. Kouskoude gwann<sup>245</sup> eo dregantad ar stumm *S V* ha ma kredomp lâred penaos “*tud Bro Gwened a laka ar rener bepred (pe neuze d'ar liesañ) e-raok ar verb en o farlant*.”<sup>246</sup>

Ma tiskouez enklask E. Pipec (2017) ema ar stumm *Inf. V* (*S*) *é c'hounid takad seul vuioù h ma yamp d'ar Gevred (da vihannañ deus ar Poher beteg an Arradon)* hag ema (e oa...) stabil urz ar gerioù a-hed ur midad pe zaou (etre an amser (1824) ma varwas Y. Marion hag an amser (1891) ma oa bet ganet an den enrollet gant A. Audic (2013) en Arradon). Diac'hann-mañ e savo ar goulenñ – evel m'en deus lâred E. Pipec da ober – ma vez tost awalc'h dregantad urz ar gerioù<sup>247</sup> e parlant Margenag douzh heni parlant ar Poher e vo kavet kemend-all pe tostoc'h douzh parlant ar Poher seul vuioù h ma yamp douzh Kornaog Bro-Gwened evel m'ema pa sellomp douzh ar c'heriaoueg hag ar fonologiezh

<sup>243</sup> Da lâred eo: *AVS* (*O*), *Emfatik + VS* (*O*), *Ha + VS* (*O*), *VS* (*O*).

<sup>244</sup> Ar *gour neutr* ne vez ked implijet e kement parlañchoù so e Breizh-isel: ur ger leksikal ‘*an nen*’ pe gourioù all – evel ma vez gwraet e saosneg “*they say...*” – a c'hell lakaet en e lec'h (*ni*, *hè* dreist-oll).

<sup>245</sup> Le Pipec, Erwan. *Opus citatum*. 2017. P.11

“*Enfin, il convient de relativiser fortement le caractère « SV-dominant » des parlers même les plus au sud-est : dans les données présentées, la proportion maximale de phrases SV atteint à peine les deux tiers. Encore ne s'agit-il que des propositions indépendantes et principales, à la forme affirmative. Si l'observation portait sur l'ensemble des propositions, incluant les subordonnées et les interrogatives, où la construction VS est induite par une conjonction ou un pronom, la proportion de structures SV serait considérablement réduite. Et représenterait la minorité, probablement jusque dans le parler d'Arradon.*”

<sup>246</sup> *Ibidem*. P.1

<sup>247</sup> Keneve dregantad ar stumm *Inf. V* (*S*) ma vez lakaet dehañ *ar reolennoù strishoc'h* e parlañchoù gwenedeg (Cf. P.-Y. Kersulec&T.Sollic 2012)

pe traoù etnografiezh<sup>248</sup>. Un dra all hag a vefe mad da ober a so evel m'en deus gwraet ewid parlant an Arradon, lakaad tal-ha-tal urz ar gerioù a-hed ar midadoù pe lakaad tal-ha-tal ar parlant dre goms hag ar skrid savet gant un den a-ginidig deus ar memes parres. Diac'hann-mañ e c'hellfemp tostaad d'ar wirionez: “*daoust hag ema ar stumm S V O o tond deus ar galleg?; daoust hag ema ar skrid a ra beli war ar parlant dre goms pe ar c'hontrel?*” a so bet lâred en e gonklusion.

---

<sup>248</sup> Sort paner ‘*kochinell*’ Pourlet a so heñvel douzh ar sort ‘*boutog, bouteg*’ (R. Hérisset 2012 P.170) (hag a vese implijet beteg Neuilheg iwe c.f. “*Cahier Dastum N°7 naol-pondi chants traditionnels*”, Jean le Clerc de la Herverie, 1983); an dañs ma vez krollet er Vro Pourlet a so tostoc’h douzh re *Bro-Gernew* moarvad iwe...

## 2.7. Stummoù frasennoù hag a vo arnodet

Brezhoneg, o vezañ ur yezh ma lakomp verb ar frasenn en eilved plass ar frasenn *gosig bepred*, a so pouesys urz ar gerioù enni. Koulskoude, a-balamour ma teu ar soñj diñ da ober ar studimañ diwar ar pennad savet gant E. Pipec (2017) e kav gwelloc’h diñ heli ar frammoù savet gantañ hag a so o-hunan é tond deus ar rummadoù implijet e-barzh levr-yezhadur F. Favereau (1997). Kempennet gant E. Pipec ewid lakaad disparti etre *S V O* ha *V S O*.

Ha deomp-ni da weled ouzhpenn kement-se, urz ar gerioù pa vez islavarennoù-adverb: peogwir ema disheñvel ar pezh ma lâr levrioù-yezhadur da ober douzh ar pezh ma vez gwraet e gwirionez gant ar bobl – degemeret gant levrioù-yezhadur so (LE GLÉAU 1973; FAVEREAU 1997), dindan an anw *V3* liës awalc’h – ha peogwir ema hon teorienn é lâred penaos an *terminal speakers* a laka verb ar frasenn en eilved plass ewid al lavarenn bennañ hag ewid an islavarenn-adverb iwe (HEWITT 2018) en ur heli ar reolenn *aour newez* ma lâr e vez lakaet un dra *newez-deuet* e penn kentañ ar frasenn, ha pa ne vez ked ar rener ar raganw (neuse e vo merket gant an displegiñ-verb) e kav gwelloc’h dehe lakaad e penn kentañ an islavarenn-adverb sokén.

Hag *ar gwenedeg*, c’hoazh e kavomp gwall-aessoc’h ar raganw e penn kentañ an islavarenn-adverb<sup>249</sup>, e-tal ar verb displeget neuse hemb raganw ebed hag a so *VI* herwez hon teorienn (*V2* neuse e-barzh al levrioù-yezhadur); mar bez implijet an daou stumm (da lâred eo raganw e penn kentañ an islavarenn-adverb vs. ar verb displeget e penn kentañ an islavarenn) e tle bezañ ur rêson, ewid prouiñ kement-mañ (ha *dislâred an deorienn voutin ewid ar brezhoneg a lâr e vez lakaet ar peb pouesussañ tra e penn kentañ ar frasenn*) e vefe jaojapl dielfennañ urz ar gerioù pa vez islavarennoù-adverb.

Disparti etre *ne V (S)* hag *S ne V*? Gwir eo ema ar stumm *S ne V* ur stumm topikaliset. Koulskoude koll a rae e *boues* diwar-goust *sklâerder ar frasenn*: pa vez hir ur frasenn, dreist-oll gant un objed pe ur renadenn-dra hir-mad e vefe gwelloc’h deomp lakaad ar rener e penn kentañ ar frasenn stumm-nac’h. Heñvel eo ganiñ e vefe kavet muioc’h dre goms ewid na vefe dre skrid, peogwir ar yezh dre goms a so ewid ar *gaoseadenn etre an dud*, pouesussoc’h eo ober an dud da gompren *sklaerroc’h* (LE GLÉAU 1973 P.78).

Lavarennoù *gennet* hag ar stagelloù pe traoù rag-verb hag an adverboù a vefe diskouezet gant *X*; hag an doarennoù gant *Pred*<sup>250</sup>.

Ha pa ne vez ked verb displeget ebed e-barzh ar frasennoù e vo lakaet e-barzh ar rummad *diverb*<sup>251</sup>.

<sup>249</sup> Da skwer: “a pe zigouéhent ar en araok, en dud e larè.”

<sup>250</sup> Da skwer: “mes diaéz e oè dehè”

<sup>251</sup> Pe n’eus verb ebed (da lâred eo anw-verb naked) ebed: da.sk. “ur spurmant a zevossion ha netrakén.”; pe gant un anw-verb, ar stumm a vez implijet liës awalc’h e *gwenedeg*; da.sk. “Honnañ aet ha lâred dehi un dez.”

Neuse, ar stummoù hag a vo lakaet war wel a so:

	rummadoù	skwerioù
<b>Lavarennoù pennañ</b>	<b><i>S V O (pe S O V)</i></b>	<i>Er brechell hou kas de dal er chapel...</i>
	<b><i>O V (S)</i></b>	<i>(mes) un hent douar ledan ha dishéoliet, e oè azé...</i>
	<b><i>Pred. V (S)</i></b>	<i>Ret e vezè gouiet...</i>
	<b><i>Inf. V (S)</i></b>	<i>Lared e hré...</i>
	<b><i>X S V</i></b>	<i>D'anderv, tud er pardon en um gav en dro de davarn...</i>
	<b><i>X V S</i></b>	<i>Ar er hlazenn e zo bet savet ur halvar...</i>
	<b><i>X anw-gwann-verb V S</i></b>	<i>en dé-sé, kavet em oè Yann er Baluhenn é chakein pèr</i>
	<b><i>X inf. V (S)</i></b>	<i>Ur wèh aral, e laras Yann er Baluhenn, komz e hrein...</i>
	<b><i>X Pred. V (S)</i></b>	<i>Aveit moned de chapel Sant Brechenn, patron karet kornad Pureilh, dav é kemér...</i>
	<b><i>V1 pe Hag e V... pe anw-gwann-verb V (kaoud)</i></b>	<i>E ma azé, ar ur hlazenn...</i>
	<b><i>Diverb</i></b>	<i>Deit de Oann ha mé ur soj kailh...</i>
	<b><i>Boud V S</i></b>	<i>Bout e oè ken kailh elton...</i>
	<b>Islavarennoù-adverb</b>	<b><i>... V (S)</i></b>
<b><i>... S V</i></b>		<i>èl é houiet, ean e zo dihuis kaer...</i>
<b><i>... O V (S)</i></b>		<i>Mar klasket dishéol, un tèr pe peder dervenn e zo tostig...</i>
<b><i>... Inf. V (S)</i></b>		<i>ma her laran d'oh hwi, gouiet e hran nen dehet ket hwi de zigor ho peg!</i>
<b><i>... Pred. V (S)</i></b>		<i>Rak ma vehem bet dovet get er mem liv-krohenn [...] skuih bras en um gavehem buan ar en douarman.</i>

	<b>... diverb</b>	<i>el ma oè Alban é voned get ur vinojenn étré div garh lann ha benal, mé de voned ar é lerh a bazeu kah</i>
<b>Stumm-nac'h</b>	<b>ne V (S)</b>	<i>N'anavan ket met un dénig...</i>
	<b>S ne V</b>	<i>Er ré-man ne gavant ket mui skoselleu èl guéharal.</i>
	<b>O ne V (S) pe Pred ne V (S)</b>	<i>Amzer n'hon es ket de gavout ur sant neué.</i>
	<b>X S ne V</b>	<i>e Berné, en dud ne oent ket hep komzal ag en dra-sé</i>

Ar skwerioù a-us 'meus kavet e-barzh *Yann ar Baluc'henn*, 1986<sup>252</sup>. hag e-barzh *Sorhienneu ha Farseu koh er Hornad*, 1925<sup>253</sup>.

Hag ar listennad-mañ a c'hellfe bezañ chañchet a-vusul ma ya an dielfenniñ war-raog... Da skwer stummoù hag a vez implijet re nebeud a ray ur rummad '*stummoù all*'.

Pe a-hend-all, beb a ruammadoù a c'hell bezañ dielfennet ha dregantet o-hunan, da lâred eo dielfenniñ ha dregantiñ stummoù pa vez frasenoù stumm-nac'h hebkén da skwer. Hag evel m'hon eus gwelet diwar studi O. Currie (2000) e vefe dedennus gweled ar stummoù frasenoù herwez *ar gourioù* seul vuioç'h m'hon eus santet e vez implijet e *gwenedeg klassel* muioc'h frasenoù en *Inf. V* pa vez dic'hour.

<sup>252</sup> Jaffre, Job, et Daniel Doujet. *Yann Ar Baluc'henn*. Dastum, 1986.

<sup>253</sup> Ar Borgn, Guillam. *Sorhienneu Ha Farseu Koh Er Hornad*. Galles, 1925.

## 2.8. Metodologiezh

Red eo komañs ur studi war ar yezh iwe, memestra – pe pa vez ar *sossioyezhoñiezh* pe pa vez ar *filologiezh* – gant ar *selled pizh* douzh ar wirionez a-benn ewid tennañ un hipotesenn deus-outi pe sevel un hipotesenn deus-outi. Pa vez komañset ar studioù ema dle deomp kaoud ur *rag-soñj* pe ur *rag-varn* diwarbenn an disoc’h a vefe: ar varteseadenn a so a-boues neuse a-benn ewid aessaad hent ar studi, a gass ahanomp da brouiñ ha *dispakañ* c’hoazh ar wirionez ne ouiemp ked e vefe bet. Ar studi a ranko bezañ komañset er mod-se, da lâred eo: kaoud *skiant-prenet*, soñjal en ur sujed tennet deus-outi, ha mond da *arnodiñ*.

### 2.8.1. *An doare hypothético-déductif*<sup>254</sup>

An doare-mañ a vez implijet muioc’h adaleg an 19<sup>ved</sup> kantved ewid peb studi – orin deus metodologiezh ar *skiant-natur* – a so da zigentañ sevel ur goulenn pa vez krog gant ar studi hag en ur arnodiñ ar c’horpussoù choaset ha tennañ an disoc’h deus-oute: da weled daoust hag e oa gwir ar goulenn savet pe daoust hag e c’hellomp respont d’ar goulenn savet. Ar goulenn pe an *hipotesenn* savet eo a dermen *kondissionoù ar studi* hag an disoc’h *engortoset*. En ur vond war an doare-mañ n’omp ked ewid en em vired da *rag-weled* an disoc’h ha da gadarnaad ar pezh a vo diskouezet. Evel ma vez lâret ema mad d’ober *ur studi e-barzh ar burew*. Mad eo d’ober gant an doare-mañ pa vez gwraet ar studioù war ar sujed dija: sevel un hipotesenn en ur lenn pizh ar pezh a so bet skriwet en e-raog. Ezomm so d’an doare-mañ deus kals *doneioù*, *dibabet* gant an enklasker. Pismiget a vez neuse an doare-mañ<sup>255</sup> o vezañ dehañ: kass ahanomp – *hep gouzoud deomp* – da *berc’hennañ*, *amprouiñ* ha *heuli* an hipotesenn savet, dislâret en ur ziskriwañ enklaskerien debron da brouiñ e hipotesenn hag a *nac’h* ar pezh a so pell douzh e hipotesenn; hag a-balamour m’ema diasezet an hipotesenn diwar ar pezh a so bet gwraet en e-raog, pe diwar ar *skiant-prenet*, ne c’hellfe ked enklaskerien ober e studi heb patrom ebed gwraet en e-raog.

Koulskoude, an doare a-gozh-mañ a c’hello bezañ servijet awalc’h ma chomomp war hon ewezh douzh an *nac’hañ-se*. An doare-mañ a vefe interessantoc’h pa ne vez ked klotet an hipotesenn savet gant an disoc’h. Evel ma oa savet ar *sossioyezhoñiezh a-vremañ* gant William Labov<sup>256</sup> goude bezañ bet é studïal *parlant Martha’s Vineyard*<sup>257</sup> – martese ‘noa bet ide da ziskriwañ, da lâred eo diwar batrom ar *strukturalism* – ar chañchamant foneteg e-barzh ar parlant-se da zigentañ, hag en ur glask *perag?* ‘noa keñveriet an doneioù fonologiezh ha doneioù poltred sokïal an annezidi. Setu kavet *perag* pe *penaos* ema liammet ar *c’hreisadur* diftongennoù /ay/ hag /aw/ gant *pelec’h emaint é chom* (douaroniezh), *pessort mecher a reont* (*pe a raent*) (renk sokïal) ha *pessort orin kenelel o deus* pe

<sup>254</sup> Blanchet, Philippe. *Linguistique de terrain: méthode et théorie ; une approche ethno-sociolinguistique*. Presses Univ. de Rennes, 2000. P.28

<sup>255</sup> Morin, Edgar. *La méthode. 4: Les idées: leur habitat, leur vie, leurs moeurs, leur organisation*. Éd. du Seuil, 1995.

<sup>256</sup> Labov, William. *Sociolinguistique: William Labov*. Éditions de Minuit, 1976.

<sup>257</sup> Labov, William. “*The Social Motivation of a Sound Change*”, WORD, 1963

*pessort santimant o deus e-keñver an Enes*. An hent-mañ a so kentoc'h d'an doare all a vez gwraet deus-outañ '*empirico-inductif*' a vo kaos deus-outañ heb pell.

Evel m'hon eus gwelet gant problemoù diwarbenn an troiñ penaos poues an destenn orin a so deus-outañ e gwirionez, ken gwir all ewid ar studioù, n'omp ked ewid en em barraad da selled douzh ar studioù a so bet gwraet e-raog. Kàer hor bo troiñ hor c'hein douzh al labourioù a-gent, heb gouzoud deomp eh omp levesonet gante o vezañ deomp klask tennañ skwer, pe patrom deus-oute. Enklask W. Labov (1963) a so bet kalonekaet sokén gant ul labour gwraet en e-raog<sup>258</sup>. Peogwir 'noa lennet an diforc'h diwar al labour-se gwraet en e-raog e oa deut a-benn da ober ur studi *strukturalist* war an diforc'h-mañ da zigentañ ha heñv da sevel un deorienn all en ur selled douzh meur a statistik a c'helle *disoloiñ* ar *perag*. Mad eo sokén selled douzh al labourioù savet ewid kaoud danvez hag en ur studïal istor ar studi – da lâred eo pessort teoriennoù so bet e-raog – e teuomp a-benn da wiriañ an disoc'h.

### 2.8.2. *An doare empirico-inductif*<sup>259</sup>

Un doare hag a vez implijet kentoc'h ewid ober studioù war ar *sossiolegiezh a-vremañ*, an *etno-sossioyezhoniezh* hag all a *arnod ur fed e-keñver un den pe ur strollad en ur gompren e blass e-barzh ar gevredigezh*. Da lâred eo, arnodiñ a ra ar studioù gant an doare-mañ liamm an den pe ar strollad gant ar fed sokïal en ur soñjal meur a gendestenn deus an den pe ar strollad. Ha kompren petra a sinifi ar fed ha n'eo ked da zisplegañ ar fed eo. Red eo d'an enklaskerien krouiñ e zoare d'en em zegemer en ur ober o studi. An doare-mañ a zislâr ar *skiant-prenet* é tond eus an deorienn da lâred eo ar skiant-prenet o vezañ lakaet da gaoud a-balamour d'an deorienn savet med ar c'hontrel eo e rankomp ober: diwar ar skiant-prenet eo ma tennomp an deorienn deus-outi; evel ar skwer hon eus gwelet dija, William Labov o vezañ bet é studïal kreisadur an diftongennoù /ay/ hag /aw/ en enes *Martha's Vineyard* ha ne glot med gant an doneioù renk sokïal, santimant an annezidi douzh an Enes hag all. En ur ger neuse, pa vez studïet ur fed sokïal ema gwelloc'h d'an enklaskerien mond e darempred gant an dud a glot gant ar poltred sokïal (pe meur a boltred, pe pa vez *ur poltred hebkén* pe pa vez *meur a boltred sokïal mesket*), hag o vezañ bet gwraet studi diwarne hag en ur gompren ar fed eh eont a-benn da dennañ un deorienn deus-oute.

Pismiget e vez an doare-mañ neuse: o vezañ m'ema diaes bezañ *objektivel* e-keñver ar fed *aterset* pe an dud pe ar strollad studïet; ken diaes all sevel *un deorienn* deus ar fed studïet hag a c'hellfe lakaad diw deorienn kontrel-mik an eil douzh eben iwe. Hag a so c'hoazh, diaes e vefe mond heb ur *rag-soñj* savet pe *ur rag-varn* savet, un *opservassion*, diac'hann-mañ ma tennomp hon ewezh deus-oute, a c'hello bleinañ ahanomp d'en em zedenniñ en ur strollad a studïmp warnañ ha ni da sevel un *hipotesenn* deus-oute, mond da *arnodiñ* pe *aters* anehi ha diac'hann-mañ ma c'hellomp dond a-

<sup>258</sup> Kurath, Hans. *Handbook of the Linguistic Geography of New England*. 2d ed, Published by arrangement with the American Council of Learned Societies by AMS Press, 1973. (ar c'hentañ embann e 1939)

<sup>259</sup> Blanchet, Philippe. *Loco citato*.

benn da *wiriañ* an hipotesenn petramant *pa n'eo ked gwir* e c'hellomp dond a-benn da sevel un hipotesenn all deus-outi.

Kals ne vern gant pessort doare e ret e tleïmp *dielfennañ* meur a zone statistik – evel ma oa gwraet gant W. Labov (1963) – setu-ni en em gaved gant *un dra newez, un dra zisheñvel* evel ma 'meus lâret e vefe interessantoc'h pa ne glot ked an hipotesenn gant an disoc'h. Hag amañ en ur geñveriañ an doneioù a-beb-sort e c'hellomp kaved pe sevel un deorienn newez.

Ezomm a so neuse kaoud un hent etre an daou zoare, a ya deus ur selled pizh hag ar c'hentañ santimant war ar jeu > un hipotesenn pe ur goulenn é sevel > arnodiñ > an disoc'h ha kompariñ anehañ gant an doneioù war an tachennoù all > kompren > displegañ > ar c'honklusïon en ur bresantiñ ar studioù a c'hellfemp ober diwar ar studi-mañ (perspektivoù):

Ur selled pizh hag ar c'hentañ santimant war ar jeu	Ar momant mand eo ganet diwar ar pezh omp kustumet gantañ, a-drugarez da soñjal ' <i>perag</i> '?
Un hipotesenn pe ur goulenn é sevel	Bikén ne vo trawalc'h ur <i>perag</i> hebkén: mall soñjal <i>en un doare skiantel</i> , 'mit-hu; dic'halamañ e sav goulenn(où) hag a bado e-kerz ar studi
Arnodiñ	En ur soñjal an hipotesenn pe ar goulenn so bet savet a-raog, choas korpussoù, hag o dielfennañ.
An disoc'h ha kompariñ anehañ gant an doneioù war an tachennoù all	A-drugarez d'an dielfennañ, hor bo un disoc'h. Gwir eo e c'hellomp achu a-benn, med gwelloc'h e vefe kompariñ anehañ gant an doneioù é tond deus studioù <i>a-beb-sort</i> .
Kompren&displegañ	En ur lakaad tal-ha-tal an eil douzh egile e c'hellimp kompren ha displegañ deus pelec'h e ta an <i>diforc'h</i> pe an <i>heñvelded</i> .
Ar c'honklusïon en ur bresantiñ ar studioù a c'hellfemp ober diwar ar studi-mañ (perspektivoù)	Ur studi a c'han ur studi all, evel p'hon eus tennet gounid deus studioù all ewid ober ar studi-mañ, e c'hellfemp lâred da betra servijo, peb studi a zegass un tamm boued ataw...

Taolenn 11

En ur gomañs ar studi gant an opservassiön hag an impressiön e c'hellomp tennañ skwer deus ar situassiön a c'hellomp studiäl warni. Ha diac'hann-mañ e tleomp sevel un hipotesenn pe ur goulenn hag a ra framm ar studi. Choas ur c'horpuss (pe meur a unan...) diwar ar skiant-prenet pe diwar an doneioù a so bet dija. Kenkent m'hon eus an disoc'h e c'hellomp kompariñ anehe gant an doneioù all, amañ e tleomp implij metodologiezh ar studioù war an dachenn: red eo selled kompren foñsiön dinamik ar sujed e-keñver meur a zataënn. Neuse e teu ar prantad da zisplegañ en ur gompren ar fenomen dielfennet a-drugarez d'an data dinamik liammet gant ar sujed. Meur a gonklusïon a c'hello bezañ, a-se, peb konklusïon a rank presantiñ un hipotesenn all diwarni.

### 2.8.3. '*Top-down approach*' ha '*bottom-up approach*' ewid urz ar gerioù (CURRIE 2000)

*Top-down approach* e yezhoniezh, dreist-oll ewid urz ar gerioù a so o komañs gant termeniñ pessort karg a so da beb urz – martese diwar ar yezhadur a oa deus-outañ dija, meur a wech *preskriptivel* –, kemer reolenn an urz a-ledan neuse hag a so mad da varnañ hag ema *reizh* an urz *da geñver ar yezhadur*; ha heñv bet kavet lies awalc'h gant ar yezhourien e *kamp ar yezhadur genetivel*. An *top-down approach*, o vezañ dehañ lakaad ar *variesoñ* a-gostez ha nompas kemer ar *gendestenn* e



kont, ar pezh a so *a-dreñv* pe *a-dreist* ar c’homsoù gant a ra diskriwañ pe kemer ar skwerioù deus *re ledan* gwechoù. Ar pezh a ziskouezfe an *top-down approach* da geñver chañchamant urz ar gerioù, hag a so bet e meur a yezh, da skwer hed-ha-hed *kembraeg rag-vodern abred da gembraeg a-vremañ* (CURRIE 2000), *urz ar gerioù V2 da V1 (VSO) d’ar muiañ*.

*Bottom-up approach* ewid urz ar gerioù, koulskoude, a so en em gavet da gemer e kont kement traoù a so *a-dreñv* pe *a-dreist* ar c’homsoù – evel pa vez gwraet ur studi sossioyezhoñiezh – e tleomp soñjal *pessort testenn eo* (Koms-plaen? Sarmonioù? Relijiel? *Laik?*), *pessort gour eo* (Kentañ gour? Eilved gour? Dic’hour?) pe *pessort verb* (Boud? Kaoud? Gelloud?). Ne sinifi ked ar *bottom-up approach* dilesel ar stummoù ken *ledan* all, da skwer e brezhoneg: ar stumm *S V O* na ar stumm *Inf. V* a oa da zigentañ ewid pouesañ war ar rener ha war an ober, red eo soñjal kement-mañ hag ar pezh a so chomet d’ober eo perag ema techet tud a so bremañ d’ober gant *S V O* ken lies techet d’ober gant *Inf. V* ken lies all bremañ. Da lâred eo mard eo an *top-down approach* ewid ober un diskriwañ pe *un displegañ* gantañ, en ur lakaad un urz en e karg da gaoud talvoudegezh eus an dra-mañ-‘n dra; ema ar *bottom-up approach* ewid lakaad un dalvoudegezh da beb stumm ha keñveriañ anehe diwar sked ar *gendestenn* pe ar *stilistik*, lakaad peb stumm war wel ar muiañ ar gwellañ.

Gelloud a reomp lâred neuse ema heñvelig ar *bottom-up approach* douzh an doare *empirico-inductif*, evel p’ema an doare *empirico-inductif* o selled douzh ar *skiant-prenet* ha kompren ar jeu en ur gemer e kont poltred ur sujed: ar memes tra eo ar *bottom-up approach* ewid urz ar gerioù neuse, da zigentañ da zielfennañ un destenn, red eo lakaad sort an destenn war wel, pelec’h ema lakaet ar verboù-mañ-‘r verboù displeget, an amser ma oa bet skriwet an destenn-mañ, piw ‘noa bet skriwet, ewid piw ‘noa bet skriwet. Ha ni en em gavet da gompren ar variesoñ stilistik diwarne.

En ur soñjal deus an doareoù all ewid dielfenniñ urz ar gerioù: *strukturalism* ha *formalism* pe *foñsionalism*, gwelloc’h eo ganeomp nompas mond gante. Pe *strukturalism* pe *formalism* na pe *foñsionalism*, gante n’omp ked ewid selled pizh douzh urz ar gerioù e brezhoneg, dreist-oll pa vez urz gerioù ar gomserien é chañch a-vusul ma yeont war *vrassaad*, ne c’hellomp ked lâret abalamour da betra e vez implijet gante, ar stumm *S V O* muioc’h pa vënt bihan, hag ar stumm *Inf. V* muioc’h pa vënt deut da *vas*.

En ur labourad e Skol Diwan Lokournan (kentañ-derez) e-pad ar c’hwec’h misiad, ‘meus tro da glewed brezhoneg komset gant ar vugale, ar lodenn vrassañ deus-oute o vezañ komset galleg hebkén gant o zud pe gant o zud-kozh (darn-vrassañ hag o zud-kozh a goms brezhoneg avad...) doutzhte, ar lodenn vihan all o vezañ *klewet* brezhoneg gant o zud-kozh dreist-oll. Siwazh ne’m boa ked chañs d’ober ur studi zon diwar gement-se, koulskoude santet ‘meus e vez gwraet alies awalc’h gant ar vugale (da vihannañ gant ar vugale eus ar sklass CE1, 8 vl.~9 bl. gosig) – da vihannañ pa vez frasenoù goulennata – frasenoù sort *S V O* “*Daoust ha me a c’hell...; Daoust ha ni a c’hell...*” hag a so *dre zigouez* heñvel-mik douzh ar framm ma vese gwraet gantañ e brezhoneg deus an *norm* e fin an

19<sup>ved</sup> kantved ha penn kentañ an 20<sup>ved</sup> kantved nemed amañ ne vese ked implijet “*Daoust*”: “*Ha me a c'hell...; Ha ni a c'hell...*” ar pezh a deuy “*Hag-eñv e c'hellañ...; Hag-eñv e c'hellomp...*” e brezhoneg a-vremañ. Hag ar skolaerien a so techet da *reizhañ* o doare da sevel goulennoù: “*Daoust hag-eñv e c'hellañ... pe Daoust ha galloud a rañ...*” Ar frasennoù-kadarn komset gant ar vugale iwe a so er stumm *SVO*, *douzh a glewañ* (amañ n'eo ked ar skolaerien da reizhañ anehe avad).

Koulskoude, ar gomserien yaouank ha ‘noa gwraet o buhez e Skol Diwan pe ha ‘noa *desket* brezhoneg pa vënt deut en o oad – *douzh a glewañ ataw* – a so taolet bras gant ar stumm *Inf. V*, setu diac’hann-mañ ma teu koms Favereau (1997, P.301). An daou stumm *SVO* hag *Inf. V* a so re zisheñvel an eil douzh egile da geñver ar *formalism*: plass ar rener, plass ar verb hag all, med ma chañchfe urz ar gerioù herwez o oad, e tleïmp implij ar mod da studïal *sossioyezhoniezh*.

Evel ma so bet meneget gant O. Currie (2000)<sup>260</sup>, ar *formalism* a so techet da nompas kemer ar fedoù *sossioyezhoniezh* e kont, seul ziaessoc’h ma vefe arnodin daoust hag ema ur *free variation* a-balamour d’ar stil pe ur variesoñ é tond deus ar *renk sokial*, ar *gour* pe an *digouezioù* hag all (CURRIE 2000<sup>261</sup>)

#### 2.8.4. *Sossio-lennegezh?*

Stad ar brezhoneg a ra deomp soñjal (ataw!) e-barzh *a-balamour da betra so bet savet un oberenn gant piw ewid piw da lenn*. En amser amser a-gent ar lennegezh vrezhoneg e kavomp oberennoù *kàer ewid dougen bri da Zoue, prederiañ ar fez*, med red eo gouzoud iwe en o mesk e vez gwelet meur a wech oberennoù savet pe troet (diwar ar galleg pe ar latin neuse) ewid *kemer preder douzh ar bobl* iwe: kelaouennoù ar fez (heni ar Joubious dreist-oll) petramant Buhez ar Sent (a lennemp a-vouezh uhel e-pad ur filajoù bennak ewid ma vo klewet gant an oll) ha kentoc’h *Magasin spirituel er beurerion, en artisanet, er serviterion, hac en dud diar er maezeu* savet gant Yehann Marion d’ar *bohl* moarvad. Ewid reiñ dehe da gompren, e oa dleet boud *eeun ha simpl* da lenn.

Med chañchamant so bet gwraet adal ma ‘neus en em lakaet *Emsaverien* da skriwañ, é klask *skriwañ braw*. En ur gemer preder douzh *hengounioù ar vro, anien ar vro* petramant *ijin ar vro*, setu-

---

<sup>260</sup> “Third, mainstream word order theory has tended to exclude sociolinguistic factors a priori from its analysis, and does not seem adequately equipped to deal with sociolinguistic variation.”

<sup>261</sup>

“We find significant stylistic variation here between texts of a very similar nature (in terms of genre, content and discourse type) and written by authors (all men) of a similar social status, and of similar social and educational backgrounds. Even if we possessed more biographical information about the various authors, we would still be hard pushed to correlate this linguistic variation with differences in social identity and social group membership. Yet, the existence of such individual stylistic variation as described here for Early Modern Welsh word order should not be seen in any way as surprising. Individual stylistic variation has been studied in other contexts (Eckert 1995, Johnstone 1996); moreover, from a theoretical perspective, as Romaine (1984) has convincingly argued, correlations between language and social group structures do not in themselves explain individual speakers’ use of language, but are in fact secondary, derived from the collective observation of individual speakers’ linguistic behaviour. Mainstream linguistics, including sociolinguistic theory, has tended to underestimate the role of individual speakers as agents of language variation and change — a role Romaine (1984: 33-4) sums up as follows: ‘by virtue of the fact that speakers can monitor and control their performance to varying degrees and act self-consciously in conveying meaning, they can vary and change language (where language is understood as linguistic behaviour).’”

ni en em gavet gant *ar rannoù* digant un *Druiz* e-barzh *Barzaz Breiz* Kervarker e-lec'h *gousperoù ar raned*; gant *gwreg ar C'hroasour* e-lec'h *ar verjelenn* hag *an daou vreur* petramant *gwas aotrou Gwesklin* e-lec'h *Yannig Bon garçon* ha *marc'hadour bihan* evel ma vefent bet ur lodenn deus istor ar Vretoned.

Ha war-lerc'h ar Bresel Bras, *Emsaverien* (a oa deut da *Walarnisted*) o komañs da *stigmatisañ*<sup>262</sup> choas ar *Wenedourion* pa vez stummoù frasennoù, ken ma oa deut soñj da Loeiz Herrieu e-gunan lakaad en e *vBreton Usuel*<sup>263</sup> “*On devra donc éviter autant que possible, de construire la phrase bretonne sur le modèle de la phrase française.*” Gwir e lâre, med pa soñjomp e vez savet meur a frasenn e stumm *SVO* hag a so heñvelig douzh heni ar galleg...

Ar c'hontadennoù pe *sorc'hennoù* a so douzh ur plass ispisial e-barzh ar lennegezh. Ur *chanennad* a bosioù moarvad med é kemer preder kaoseal *braw* dirag an dud lies awalc'h e vese amprestet gant konterien troiennoù *sewenaetoc'h* diwar *ar lizhiri* (evel ma so gwir ewid ar c'hanaouennoù), setu ur pont etre ur gaoseadenn *eeun* hag ar lennegezh *kàer*.

Ha brezhoneg er journalioù? Depant a ra moarvad douzh ar skriwagnerien med ur skriwagner ha heñv brezhoneger a-vihan, desket gantañ skriwañ e brezhoneg gant ar levrioù... C'hoant dehañ skriwañ an tostañ ar gwellañ douzh ar mod ma vez kaoseet, peogwir e oar e vo lennet gant brezhonegerien a-vihan eveltañ. Med red eo gouzoud dehañ penaos e vefe lennet gant tud é komañs gant ar brezhoneg iwe. Setu e teufe soñj dehañ diskouez dehe skwerioù *reizh* diwar ar yezhadur *reizh*. Pa soñjomp enta ema ar *radio* pe an *television* douzh tachenn ledan ar lennegezh, bez so un den aet da aters (lâromp *atersour*) un den (*heni aterset* neuse), pessort mod e tle d'an *atersour* kaoseal dirag an *heni aterset?* e brezhoneg ma kavomp e-leizh a *variesoñoù?* Lies awalc'h, ar *re aterset* (brezhonegerien a-vihan aneche) a vefe chomet abafet<sup>264</sup> dirag ar re yaouank (dreist-oll) a gaos brezhoneg, hag a-balamour da gement-se pa vez un *atersour yaouank* e vefe diaes klewed gant ar *re aterset*, o farlant propr. En ur soñjal e-barzh kement-se, ‘meus choaset diw enrolladenn diwar ar memes den, med gwraet er mareoù disheñvel (er bloawezh 1990, hag e 2018) ha gwraet gant daou zen disheñvel (unan, brezhonegeres a-vihan deus an *tuad* hag unan all martese desket gantañ kaoseal brezhoneg).

<sup>262</sup> Gweled *fal labour*, Loeiz Herrieu (Dihunamb 385 mis Gwengolo 1943) hag *Er brehonekan brehoneg*, Loeiz Herrieu (Dihunamb 387 mis Du 1943)

<sup>263</sup> Herrieu, Loeiz. *Le Breton Usuel (Dialecte de Vannes) Ou Manuel Français-Breton Contenant Un Précis de Grammaire, Des Listes Alphabétiques de Mots Usuels, Des Conversations*. 2ème, Dihunamb, 1934. P.20

<sup>264</sup> Gwiader, Yann-Bêr., Lozac'h, Gurvan. Radio Kreiz-Breizh d'ar 6 a vis Meurzh e 2019; <https://www.youtube.com/watch?v=x-7-h1g0mIg&t=380s> (gweled d'ar 26 a vis Henaol e 2021) 6:20~6:59

“Mond war an dachenn a oa dit iwe, kregiñ abred yaouank-tre e oas memestra, un den yaouank pa vez gwelet ‘h arruoud fass ti tud an oad da glask koms brezhoneg, da skriwañ iwe, d'enrolliñ... se oa ur souezhadenn ewid an dud se? -Ba ya soue’et ‘vênt memestra pa vez gwelet ‘ha’ on ‘tigou’ed ‘mod-se med aon ‘neuint un tamm da zigentañ pa ‘ana’ont ked ‘ha’ on kwa, just awalc’h ‘o hemañ so ‘tond deus ar skol ‘vo ked komprenet, ‘meus ked c’hoant... koll amser a vo...” enfin beb sort traoù a vez soñjet douzhtu gant an dud kwa. Med pa gle’ont ‘ha’ on ‘kaoseal ‘mod-se ‘h a mad an traoù douzhtu goude kwa.”

Evel ma lâr ur penn-levr gouestret d'ar lennegezh vrezhoneg (LE BERRE 2006<sup>265</sup>), a-viskoazh so bet ur *patrom* da beb lennegezh en Europa, hag ewid ar lennegezh vrezhoneg eh eus tri: an heni latin da gentañ, an heni katolik hag an heni galleg neuse, perag kement traoù é voud patrom ar lennegezh vrezhoneg? Aesig da c'hoùd, a-viskoazh ema bet ar Vretoned o vevañ e-mesk ar re-se...:

*“Depuis Homère il n’y a jamais eu dans le contexte européen de littérature sans modèles. La littérature bretonne a eu pour modèles les littératures latine, chrétienne et française. Son altérité n’est pas un donné intemporel et absolu. Elle a des causes: les conditions historiques et sociales dans lesquelles ont vécu et vivent encore les locuteurs du breton ; les ramifications locales des courants de la pensée et du goût. Ce qu’elle a à nous apprendre n’est pas tant à chercher dans la relation écrivain-œuvre que dans la relation la relation œuvre-lecteur, ce grand angle mort de l’histoire littéraire et de l’enseignement de la littérature tels qu’on les pratique encore de nos jours.”*<sup>266</sup>

#### 2.8.5. *An doare kañtitativel*

Un doare gant ar *c'houlennaoueg* pe gant ar *sontadeg* a so ur lodenn deus ar studi sossologezh lies awalc'h. An doare-mañ a sav goulenn ganeomp hag-eñv e c'hellomp sevel ur *wirionez* diwar ur *bochad traoù*. Dibab an doneioù a-dra-sur herwez ar pezh a faot deomp kaved (ar wech-mañ e vo stummoù frassennoù ewidomp), ha lakaad aneche a-skoefs ewid kaved un disoc'h pe disoc'hoù disheñvel herwez doareoù-sikour a vez implijet gantañ, petramant disheñvel herwez ar sell ma studiomp gantañ. An doare kañtitativel a so a-boues pa vez ur studi diwar an implij, pa vez c'hoant kaved ar wirionez diwar an implij. Lies awalc'h e vez choaset doneioù diwar ar memes<sup>267</sup> anien<sup>268</sup>, med ewid ar studi-mañ eh añ gant korpussoù disheñvel o anien an eil douzh egile: evel ma so diskouezet awalc'h, *kontadennoù*, *enrolladennoù*, *kronikennoù* peogwir 'meus selloù disheñvel an eil douzh egile da studïal ar c'horpussoù: n'eo ked pell douzh an doare *kalitativel* adal ma 'meus kemeret e kont korpussoù a anien disheñvel ewid selled na vo ar *variesoñ* douzhte, med ar c'horpussoù pa vez kaos deus ar lec'h, a chomo e-barzh ar memes tachad (Bro-Gwened-isel... petra bennak e vefe), a lâr ema an doare kañtitativel eh on oc'h ober gantañ.

#### 2.8.6. *Filologezh? hag 'Etik'*

O vezañ ma n'eo ked me an heni eo 'neus serret an oll zoneioù ewid sevel korpussoù, soñj deomp ne brestfomp ked doare ar filologezh ewid ar studi-mañ, geo?

<sup>265</sup> Le Berre, Yves, et al. *Qu'est-ce que la littérature bretonne ? essais de critique littéraire, XVe-XXe siècle*. Presses universitaires de Rennes, 2006.

<sup>266</sup> *Ibidem*. P.32

<sup>267</sup> Martin, Olivier. 'Analyse Quantitative'. In Paugam Serge (Dir.), *Les 100 Mots de La Sociologie*, 2018, p. 26. "L'analyse quantitative désigne l'ensemble des méthodes et des raisonnements utilisés pour analyser des données standardisées (c'est-à-dire des informations dont la nature et les modalités de codage sont strictement identiques d'un individu ou d'une situation à l'autre)."

<sup>268</sup> Amañ gant ar ger "anien" e faot diñ lâred "potredoù un den, anien ar skrid, anien an enrolladenn..."

Termenadur ar ger “*philologie*” herwez ar geriadur *Le Petit Robert*<sup>269</sup> eo “*1. Connaissance des belles-lettres; étude historique des textes. 2. (1800) Etude d’une langue par l’analyse critique des textes.*” Petramant termenadur ar ger “*philologue*”: “*1. Spécialiste de l’étude grammaticale, linguistique des textes [...]*”. Gwir eo penaos ar filologiezh a so stag douzh ar skridoù a-gozh lies awalc’h, med ma vo lamet ar ger a-gozh, ar pezh a riñ n’eo ked disheñvel douzh ar filologiezh diwar ar skridoù a-gozh: ur studi war un dra *tremenet* deja (red gouzoud penaos tud enrollet e-barzh ma c’horpussoù pe tud ha ‘noa skriwet ma c’horpussoù so marw), ar yezhadur na petra ‘ta. Ne vefe ked gwall-zisheñvel douzh ar pezh a vese gwraet adaleg penn-kentañ an 19<sup>ved</sup> kantved betek an 20<sup>ved</sup> kantved: “*Etude syntaxique ou morphologique d’une telle ou telle langue ancienne*”. Ar pezh a oa bet ganet e-skeud ar Geltomaned deus an 18<sup>ved</sup> kantved: Edward Lhuyd (gant e benn-oberenn *Archaeologia cetica*), Jacques le Brigant, Théophile-Malo de La Tour d’Auvergne-Corret; hag ar Geltomaned alaman da heuli aneche: Johann-Kaspar Zeuss ha Franz Bopp; hag e-barzh Frañs petramant e Breizh neuse: *Emsaverien* ha Josef Loth, Emile Ernault, Henri d’Arbois de Jubainville pe Henri Gaidoz gant o *Revue celtique*.

A sav goulenn ganeomp. Pa so lâret eh añ d’ober ur studi *filologiezh* gant ar brezhoneg, red-mad eo gouzoud neuse da betra servij ar filologiezh bremañ ewid ar brezhoneg ouzhpenn kement-se. Evel ma konten lâred er lodenn ***Petra a lâr ar skiant?*** eh eus doareoù disheñvel da sevel ur levr-yezhadur, daou bleg a so: douzh un tu en ur heuli ar yezhadur *kempennet* ha *reizh* hag a so é tond deus levrioù-yezhadur a-gozh, ha douzh un tu all, mad eo heuli ar yezhadur a-gozh, med en ur gemer preder iwe douzh ar pezh a vez lâret gant an dud e gwirionez, amañ ‘*an dud*’ ar vrezhonegerien a-vihan “*endolecte*<sup>270</sup>” a gredomp lâred ha hê dileset gante *treuskass* ar yezh d’ar midad war-lerc’h (lec’h ma teu an droienn “*troc’h*”), Da grediñ a so neuse e vez desket brezhoneg *standard* (e-tal ur bern gerioù hag a gouch gantañ: *roazhoneg, diwaneg...*) da *newezbrezhonegerien*, hag ar *brezhoneg standard* oc’h en em gaved e-kreis ar *yezh reolieg, kempennet* ha *reizh*. Hag ar brezhoneg *pobl* a chome e-tal *kals ne vern pessort brezhoneg standard* gant e emdroadur diabarzh. Un *troc’h* a so bet gwraet er bloawezh 1950, an dud é tilesel kaoseal brezhoneg douzh o bugale, *treuskass* ar yezh *pobl* a so en em gavet *troc’het*. Sed amañ e teu soñj d’an nen ewid lakaad *ur pont*: *kempenn* ha *diskouez* ar pezh a vese lâret gant ar *vrezhonegerien diwezañ* d’an dud o komañs da zeskiñ. Amañ so un dra a c’hell servij ar studimañ dehañ.

---

<sup>269</sup> Rey, Alain, et Josette Rey-Debove. *Le petit Robert: dictionnaire alphabétique et analogique de la langue française*. Nouvelle éd. du ‘Petit Robert’ de Paul Robert, le Robert, 2011. P.1885

<sup>270</sup> Le Pipec, Erwan. *Opus citatum*. 2013.

### 3. Studi korpusoù

*“Me so-me ur stêrig vihan  
ag ar vro vraw ar Morbihan...”*

*-Sonenn ar Skorv, Julien Dupuis ag an Ignel*

E-barzh ar lodenn e vo disklêriet ken ma fin, war betra da studïal – na possupl ma ouifet dija – un tachad ma vez gwraet *Bro-Gwened-Isel* pe *ar vro (g)wenedeg-isel* hag o zermenadurioù a-beb-sort e-keñver tachadoù hag a c’hellen kemer e kont.

Ur wezh choaset an tachad da studïal warni ha termeniñ anehi eh eus mall lâred petra eo ar c’horpusoù vo studïet ganeomp: evel m’hon eus gwelet e penn-kentañ ar skrid-mañ gant an *daolenn 1* so bet choaset 4-5 live disheñvel ha un enrolladenn (pe ur skrid) pe zaou da beb live moarvad. Deus ar *gaoseadenn* beteg ar *pennadoù e-barzh ar journal*, deus an *naturellañ* d’ar *lennegellañ*?

Ha war-lerc’h ur frapad hir a amser da zielfenniñ ar c’horpusoù – *souezhet* pe *ne vimp ked* – en ur soñjal e-barzh *pessort verboù*, *pessort gour dehe* hag *anien* ar posioù (soñjet enta e-barzh *pewar pe pemp live* ‘meus choaset...’) e vimp arri da benn a c’houzoud penn d’an teoriennoù deomp-ni: *stabilte* *urz ar gerioù*? evel m’hon eus meneget gant E. Le Pipec (2017) en Arradon ha gant L. Timm (1989) en *tachad Kreis ar Brezhonegva*; ha petra ewid ar stumm *SVO* hag a so sañset boud kavet nebeutoc’h (tre 20%-30% herwez kont), *an daou a re ziwezañ* (ha ‘noa skriwet e-barzh ar journal ‘had!’), desket dehe uhel-pe-uhel, skolàerien aneche, a vese bet é kass o zamm skrdioù da Zihunamb pe da gelaouennoù brezhoneg etre ar Breselioù, leveson ar yezh *klassel*<sup>271</sup> pe leveson é tond deus ar *brezhoneg lennegel*<sup>272</sup>.


---

<sup>271</sup> Amañ *gwenedeg klassel* a so bet adkempennet a-baoe 1902 ha bet pleustret e-barzh ar gelaouenn *Dihunamb*.

<sup>272</sup> Amañ gant ar ger *lennegel* e faot diñ lâred kentoc’h *ur stumm glanaet* a-c’houde Le Gonidec, Vallée pe Hemon.

### 3.1.É klask ar vro gwenedeg-isel pe ar Vro-Pourlet...

Da zigentañ, red eo gouzoud penaos ne vese ked gwraet al lennegezh klassel diwar ar parlañchoù gwenedeg-isel. Savet e oa al lennegezh gwenedeg klassel gant ar skriwagnerien pe ar veleien, skoliataet e kloerdi *Keranna* ha war-lerc’h e kloerdi bras Gwened, dre-se e welomp hengoun an doare-skriwañ gwenedeg klassel heñvelig douzh parlant penn-pellañ Sav-heol Bro-Gwened (heni Y. Marion, Y.-V. Joubious ha doare-skriwañ penn kentañ ar gelaouenn *Dihunamb*<sup>273</sup>). Ar c’heriaoueg iwe e welomp skriwagnerien wenedeg an 19<sup>ved</sup> kantved~penn kentañ an 20<sup>ved</sup> kantved é essae *lakaad liw* d’o skridoù en ur implij gerioù o tond deus o farlant o-hunan. Red e oa gortos ar gelaouenn *Dihunamb* a-benn ewid gweled parlañchoù gwenedeg-isel ouzh en em silañ e-barzh ar gwenedeg *standard*, ouzhpenn kement-se skriwagnerien-dastumerien o tond deus kostez an Oriant (Loeiz Herrieu, Iwan an Diberder<sup>274</sup>) é tond deus ar Vro Pourlet (Guilham er Borgn<sup>275</sup>).



Skeudenn 4<sup>276</sup>

<sup>273</sup> Herrieu L. ‘Eit er brehoneg unañnet, Chonjeu er réral hag hur ré’, *Dihunamb* 1932~1933 P.81: “Ret é ma houio hur mignon é ma élsé hun es ni groeit eùé é bro Guénéed. Dilézet hun es er guénéedeg-izel, brehoneg en Arvor, brehoneg Pondi, brehoneg Groé, aveit kemér un brehoneg kreiz tost de hani Guénéed.”

<sup>274</sup> Bet ganet en Oriant, e dad é tond deus Pont-Skorv hag e vamm deus an Enes-Arzh...

<sup>275</sup> Bet ganet e Seglian, douzh an tu ma vez kaoseet *gwenedeg-isel* moarvad. E zastumoù a vese er Vro Pourlet ataw.

<sup>276</sup> Yann-Vari en Oheh a oa bet ganet e Margenag, en ur gêriadenn tostoc’h douzh Seglian pe douzh Klegereg ewid Pondi, hag e dad é tond deus Pluniaw. En em zisklêrio a rae evel ur *Pourlet* en ur vewañ e Seglian e-pad ur frapad mad a amser, kàer en doa bet kentelioù e kloerdi bihan Keranna, ar sonennoù hag ar barzonegoù savet gantañ a vese kanet e *Bro ar Gemene* dreist-oll. Gwir eo e ouie skriwañ en doare-skriwañ *gwenedeg klassel* d’ar mare-se (fin an 19<sup>ved</sup> kantved), koulskoude gwelet e vez roudoù parlant *sort gwenedeg-isel* (E. Thibault 1911): *or e-lec’h eur “aowr”* (koulskoude me ‘meus klewet e-barzh ar sonenn “*Merc’hed Margenag*” Margenagis o tistagañ [dɔ:r] kenkoul distagañ “*doùr* (*deur* neuse e gwenedeg-uhel)”, med e-barzh ar sonenn-mañ e klewomp meur a dra é tond deus *brezhoneg pourlet*, martese e oa distaget e mod Pourlet a-venetañs-kàer ewid lakaad liw d’ar sonenn: “(ibidem P.20) *Les paysans de Pontivy attribuent à ceux de Guémené des défauts innombrables, et tout breton qui leur semble un peu étrange et différent du leur est du breton pourlette.*”; ar sonerien a sant ema

En ur gomañs da glask perzhoù ar parlañchoù gwenedeg-isel, ‘meus kavet ur pennad savet gant Job Loth e *Revue Celtique*<sup>277</sup>:

“*De même qu'on appelle basse Bretagne la partie la plus occidentale de la Bretagne armoricaine, on a dû appeler bas-vannetais le pays le plus à l'ouest de la région vannetaise. Grégoire de Rostrenen s'était déjà servi de ce terme dans la même acception que nous. Le bas-vannetais est borné rigoureusement à l'ouest par l'Ellé qui formait, avant la Révolution, la ligne de démarcation entre l'évêché de Cornouailles et l'évêché de Vannes. Dans la région nord du Morbihan, la moitié du canton de Faouët et tout le canton de Gourin, moins la commune de [Plouray située sur la rive gauche de l'Ellé, continuent si bien à parler le dialecte de Cornouailles qu'on a dû y conserver le catéchisme de Quimper et n'y envoyer que des prêtres cornouaillais. A l'est, le Scorff ne forme qu'une limite approximative. Dans la région nord, la seule que nous ayons bien étudiée, sur la rive gauche du Scorff, 'on parle bas-vannetais dans les communes d'Inguiniel, Persquen, Locmalo, Séglien, Silfiac, Perret, Lescouet, Mellionec, Plélauff et Sainte-Brigitte, au moins en partie, croyons-nous. Le Blavet forme la limite au nord.*”


Mard eo anad ar vewenn douzh an Hanternos (ar Blañwezh) ha douzh ar C’huz-heol (beteg parresioù Eskobti Gwened a-gent), n’eo ked gwall-skàer ar vewenn douzh ar Sav-heol. Lod a lâro herwez an dilhad hengounel, da lâred eo parresioù ma vese lakaet koef ar Gemene pe koef an Oriant (pe an Henbont) àr ar merc’hed. Ne vo ked gwir penn-da-benn avad: e parresioù so – dreist-oll douzh tu a-zehoù ar Blañwezh – e vez kaoseet parlañchoù tostoc’h douzh *ar gwenedeg-uhel*, da skwer e Zinzag, en Henbont, en ul lodenn vad deus ar barres Bubri, e Laovedañ hag *en tu all* d’an Oriant ne vez ked lâret /dʒət/ – evel ma vez gwraet el lec’hioù all e *Bro-Gwened-isel* – med /gət/ pe [gʲət] a vez lâret gante evel e *gwenedeg-uhel*. Hag e Plourae e vese lakaet koef Fissel àr ar merc’hed. Herwez an dañsoù hengounel? E gwirionez, ma lâromp e vez korollet ar *gavotenn Pourlet* er Vro Pourlet hag *an dro e kass a-barzh* pe *ar laridenn 6 lusk* e Bro an Oriant&an Henbont, ne glot ked takad an dañsoù gant takad ar parlañchoù. Bro an Oriant&an Henbont, a-balamour d’ar memes rêson evel an dilhad hengounel (ouzhpenn kement-se, parresioù tost douzh an *Arvor* evel *Rianteg*, *Brelevenez*, *Pleheneg*, *Kervignag*, *Landevant* so ispissial o-hunan sokén) ha gavotenn ar Gemene a vese dañset beteg Margenag, Gwern, Klegereg, Bizhui ha Melrand. Tachadoù an dañsoù hengounel e Bro-Gwened a vefe rannet en diw, heni an Hanternos (Gavotenn&Laride-gavotenn) ha heni ar C’hreistez (An dro&hanterdro&laridenn); kentoc’h ewid etre ar Sav-heol hag ar C’huz-heol.

---

*jaojapl* kanañ e mod Pourlet ma so ur bochad sonerien ampert enni neuse? – trugarez da E. Pipec ewid boud lâret kement-mañ – ); *puar* e-lec’h *piar* “*pewar*”, *puar* a so ur mod da zistagañ a zisklêr deomp daoust hag ema é tond deus Kuz-heol Bro-Gwened; *hé* e-lec’h *gi* “*i(nt)*” a so ur perzh deus ar Vro Pourlet iwe. Martese awalc’h e c’hellfemp lâred penaos heñv ‘ni e oa ar peb kentañ ha ‘noa klasket lakaet liw *gwenedeg-isel* e-barzh e skridoù, e-raog ar gelaouenn *Dihunamb* sokén...

<sup>277</sup> Loth, Joseph. ‘*Remarques sur le bas-vannetais, Chansons en bas-vannetais*’. *Revue Celtique*, no. 7, 1886, pp. 171–199.





an tachadoù ma vese dañset gavotenn ar Gemene (an tachad en ruz)  
 ha laridenn-gavotenn (an tachad en glas), an dro (an tachad en melen)  
 ha laridenn (an tachad gronnet ged ar linenn vouk)

*Skeudenn 5* <sup>278</sup>

Herwez tachad didan leveson ar marc'hadoù pe ar foarioù? Martese e c'hellfe bezañ: marc'had bras ar Gemene, an Oriant hag an Hebonn a zedenne tud ar vro pe tud é tond deus ar bell vroioù (an Oriant) sokén. Ma ve disheñvel parlant ar parresioù tost douzh *an Arvor* e c'hellfemp soñjal e-barzh leveson marc'had an Alre (hag a oa brassoc'h e *zedennusted*)? A-benn ar fin n'ouzomp ked c'hoazh da bessort foar e yae tud ar vro: depant a rae douzh petra a faote dehe prenañ pe douzh petra a faote dehe gwerzhañ: douzh ma klewañ, un den deus ar C'hroesti a yae beteg an Oriant ewid gwerzhañ e dammoù amonenn, ewitañ bezañ aessoc'h mond d'ar Gemene martese d'ar mare-se (er bloawezh 1940?) dedennusted foar ar Gemene a so bet kouezet en he boull diwar goust marc'had an Oriant evel ma tiskriwe M. McKenna (1988) diwarbenn ar Gemene... Pe parresioù hag en em gav etre diw foar vras, evel Langidig ha Kistinid hag en em gav etre an Hebonn ha Baod, n'omp ked ewid musuliañ pessort leveson ar marc'had so bet war o farlant pe an oll ziw foar a ra leveson war o farlant, gerioù so a so bet strewet diwar ar faor Vaod, gerioù all é tond deus an Hebonn.

<sup>278</sup> Guilcher, Jean-Michel. *La tradition populaire de danse en Basse-Bretagne*. 2. éd, Mouton, 1976. ha Le Clerc de la Herverie, Jean. *Cahier Dastum N°7 Noal-Pondi Chants Traditionnels*. Dastum, 1983.

Implijoù ar paner ispisial a c'hell boud interessant pa vez ranniñ an tachadoù a-dammoù : herwez R. Hérisset (2012<sup>279</sup>) er pajennoù 170, 541 a ziskouez lec'h ma vese implijet ar paner tip “*variante Nord Basse Bretagne*”<sup>280</sup>, ar ger ‘*kostinell, kochinell, kanistell*’ a vese klewet e Pleurdud, beteg an Ignel moarhad<sup>281</sup> hag e c'hellomp soñjal diwarni e vese degasset ar paner a-sort-se e-barzh Hanternos ar Vro-Pourlet, martese dre ar marc'hadoù pe ar foarioù (ar Faoued, ar Gemene h.a.). Hag a so c'hoazh da soñjal diwarni, e vese darempredoù etre *Kernewis* (pe *Kernevodet*...) (tro-ha-tro da Vro-Gwened) ha *Gwenedourion*: posioù bennaket a vefe bet degasset gante, a lâr neuse ne vefe ked med disheñvel parlant Hanternos Bro-Gwened-isel douzh heni Kreistez Bro-Gwened-isel (evel ha lâromp ‘*ar Vro-Pourlet*’ ha ‘*kostez an Oriant*’...).

An NALBB (2001), a-drugarez da desenn Tanguy Sollicec (2021<sup>282</sup>) ma c'hellomp teurel ur sell a-vras douzh e gartennoù. Dispaket so bet gantañ un takad hag a vez gwraet *pôle pays de Lorient* deus-outañ ma vez tolpet ennañ ar poeñchoù 143 (Plañvour), 144 (Kaodan), 145 (Redene), 146 (Mélann), 147 (Ploue), 148 (Sant-Iwan-Bubri), 150 (Sant-Karadeg), 151 (Prijiag), 152 (Pleurdud), 153 (Lawlan), 154 (Plourae). Hag a so heñvel douzh an takad deus ar Vro Pourlet+Bro an Oriant&an Henbont (nemed ar parresioù en tu all d'ar Blañwezh *Langidig, Pleheneg, Lostank*) a glot gant ar vro *wenedeg-isel* a soñj da dud lies awalc'h. An NALBB a ziskouez perzhoù fonologiezh kenkouls evel perzhoù geriaoueg hebkén: perzhoù morfologiezh a vank pe neubeud a so; n'omp ked ewid arnodin war ar mod da zistagañ an araogenn ‘*ged*’ hag a vefe *alhwez an tachad gwenedeg-isel*. Med ar c'hontrel douzh an NALBB&T.Sollicec (2021), an ALRP (1996) a laka Bubri ha Sant-Iwan e-barzh un takad *gwenedeg-uhel* e-barzh ar memes takad evel Kistinid, Langidig.

Loig Cheveau – unan é ober an Atlas deus parlañchoù Bro-Gwened – ‘neus aliet diñ e vefe furroc'h soñjal an Henbont evel ar vewenn etre parlañchoù gwenedeg-isel ha gwenedeg-uhel a-gleiz d'an Henbont (en ur selled douzh an Hanternos) e vez kaoseet *gwenedeg-isel* hag a-zehoù d'an Henbont *gwenedeg-uhel*; ha Bubri o vezañ war ar vewenn e vefe implijet gerioù é tond deus ar *Vro Pourlet* diwar an distagadur *gwenedeg-uhel*. Hag ar perzh splann deus ar *gwenedeg-isel*, al lizherennoù ‘*s*’ ha ‘*ch*’ o vezañ distaget *mouezhiet* a zepant deus ar gerioù e-barzh an tachad-etre (*An Henbont, Zinzag, Laovedañ, Bubri*) hag e-barzh ar vro *wenedeg-isel* sokén, gerioù so ne vêt ked distaget *mouezhiet*, pe a zepant deus ar parresioù<sup>283</sup>. Parresioù war ar vewenn (Zinzag, Laovedañ) pe ar barres evel Margenag sokén e c'hellfemp klewet gant tud so deus ar parresioù-mañ, ar c'hemmadur dre

<sup>279</sup> Hérisset, Roger. *Ethnologie Des Techniques de Tressage En Bretagne : Matériaux Pour Une Nouvelle Approche Classificatoire de La Vannerie*. Université de Bretagne occidentale, 2012.

<sup>280</sup> Hag a vez gwraet herwez lec'hioù “*bouteg, boutok, kostinell*”.

<sup>281</sup> Un testeni a-berzh Loig Cheveau (diwar ur gaoseadenn bersonel)


<sup>282</sup> Sollicec, Tanguy. *Dialectométrie de La Basse-Bretagne : Enjeux, Méthodologie et Applications. Quantifier et Qualifier La Variation Linguistique, Vision Symbolique de l'espace et Écho Du Dynamisme Synchronique En Breton*. Université de Bretagne occidentale, 2021.

<sup>283</sup> Da skwer ar ger ‘*serrin*’ a vez distaget disheñvel er *Vro Pourlet* hag e *kostez an Oriant*. Martese a-balamour ma so daou fesson zisheñvel da zistagiñ anehe e *kostez an Oriant* “*cherrein*” (=klosiñ) vs. “*jerrah*” (=dastum).

vloaad /s/ > /z/ war-lerc’h ar raganw-biaou “e” ewid diforc’hiñ douzh ar raganw-biaou “he” m’ema sañset bezañ distaget /s/ herwez reolenn *rik* ar yezhadur<sup>284</sup>: sañset en takad gwenedeg-isel e vez /i 'zɔwt/ kenkoulos lâred ‘e saoud’ hag ‘he saoud’ hag en takad gwenedeg-uhel /i 'səʊt/ ewid an daou, med e Laovedañ hag e Zinzag e vez lakaet kemm etre /i 'zɔwt/ ‘e saoud’ hag /i 'sɔwt/ ‘he saoud’ kenkoulos evel ma vefe e Margenag iwe, herwez Erwan Pipec, e dad-kozh ginidig deus ar barres-mañ a zistage /i 'zəʊt/ ‘e saoud’ hag /i 'səʊt/ ‘he saoud’: displegañ a ra martese o vezañ d’e dad-kozh mond lies awalc’h d’ar *Vro-Pourlet*...

Studi Erwan Pipec (2004<sup>285</sup>) a ziskouez plass an taol-mouezh e *Bro-Gwened*. Hag e ra deomp da selled douzh ar *gwenedeg-isel* gwiriekoc’h, e-keñver an taol-mouezh iwe.

Kartennoù a ziskouez penaos adaleg Kaodan-Laovedañ-Bubri eh a war zigresk dregantad an taol-mouezh war ar silabenn ziwezañ, hag a so nebeutoc’h c’hoazh pa sellomp douzh lodenn gwalarn-uhel *Bro-Gwened*: Plourae (33,55% a c’herioù hebkén), Perred (43,1% a c’herioù), Pleurdud (52,8% a c’herioù), Berne (45,5 a c’herioù):



Skeudenn 6

<sup>284</sup> Koulskoude ar pezh a so, en takad *KLT* e gwirionez e vez distaget [z] goude ar raganw-piaou “he”, amañ so ur chañchamant *fonologel reolieg*.

<sup>285</sup> Le Pipec, Erwan. *Les schémas accentuels en breton du sud-est*. Université de Haute Bretagne, Rennes 2, 2004.

Laovedañ (90,5% a c’herioù a vez distaget gant an taol-mouezh war ar silabenn ziwezañ) ha Bubri (85,8%) n’int ked gwall-souezhet ma vënt war ar vewenn ma chañch ar parlant etre gwenedeg-isel ha gwenedeg-uhel. Tud ar parresioù-se a lâr gerioù *Pourlet* pe *an Oriant* da lâred eo gerioù *gwenedeg-isel* med diwar ar mod da zistagañ e *gwenedeg-uhel*.

E-keñver plass an taol-mouezh sokén e ra an heveleb takad evel m’em bet gwraet war-lerc’h an NALBB, ha heñvelig iwe douzh an ALRP (Bubri ha Sant-Iwan e-barzh un takad *gwenedeg-uhel*).

Pe Bubri e-barzh pe er-maes, ar soñj diwarbenn *ar vro (g)wenedeg-isel* da lâred eo *Bro-Gwened-isel* da geñver ar *yezh* ha n’eo ked da geñver an dilhad hengounel pe an dañsoù gwraet en amser a-gent; ar pezh a so splann so eh eus un takad parresioù ‘neus lakaet o darn-hanterenn e-barzh *ar vro (g)wenedeg-isel* hag o darn-hanterenn all e-barzh *ar vro wenedeg-uhel* pa vez e-keñver *an distagadur* dreist-oll.

Setu ma vo diskouezet amañ un nebeud perzhoù hag a laka diforc’hiou douzh ar parlañchoù all tro-ha-tro d’*ar gwenedeg-isel*, studi Erwan Pipec (2008, P.239~241) a zisklêr un nebeud diforc’hiou etre ar gwenedeg hag *kerneveg ar Sav-heol* ha war-lerc’h etre *ar gwenedeg-isel* hag *ar gwenedeg-uhel*: (adkempenn so bet gwraet ganiñ, islinennet ‘meus neuse)

	<i>Gwenedeg-isel</i>	<i>Gwenedeg-uhel</i>	<i>Kerneveg ar Sav-heol</i>
<i>taol-mouezh</i>	<i>libr, lies awalc’h war ar silbenn gentañ pe ziwezañ</i>	<i>War ar silabenn ziwezañ</i>	<i>War ar silabenn eil-ziwezañ an darn vrassañ anehe, med herwez gerioù e vez kavet war ar silabenn gentañ pe ziwezañ petramant war an diw</i>
“zh <sup>286</sup> ” (<θ kozh)	/h/ <sup>287</sup>	/h/	/z/
“-doù”	/-d-/	/-d-/ [-r- ~ ð]	/-z-/
“ked”	/tʃ/	/tʃ/	/k~/[c] e Fissel; /k/ e Fañch
<i>kemmadur dre vlotaad “d” &gt; “z”</i>	<i>O</i>	<i>O</i>	<i>X</i>
<i>gouied, goar, gouzoud</i>	<i><u>goui-</u></i>	<i><u>goui-</u></i>	<i>goar-</i>
<i>lost-verb</i>	<i><u>-o, -iñ, netra h.a.</u></i>	<i><u>-iñ, netra, h.a.</u></i>	<i><u>-o, -eg, netra</u></i>

<sup>286</sup> Ar *faos*-“zh” hag a vez gwraet douzhtañ e Peurunvan – dreist-oll pa vez ar strollad-kensonenn “rz(h)” – a vez distaget /h/ pe netra e kerneweg ar Sav-heol sokén: *kerzed* da skwer; pe a-hend-all ar gwir “-rzh” da skwer “*gwerzhañ*” a vefe distaget /-rh-/ meur a wech e parresioù tost douzh *Bro-Gwened*, Kemperle, Rostrenen. Koulskoude n’ouzomp ked c’hoazh hag eh eus un dra é tond deus ar *gwenedeg* pe un emdroadur diabarzh evel e kembraeg (LOTH 1886; *cerdded* > *cerhwd* h.a.).

<sup>287</sup> Ur gerioù bennak ‘meus kavet hag a so deut da /z/ pe /z/ ewid ar son \*θ kozh e *Bro-Gwened*: “*gwerzhid*”; /gur’hed/ e *gwenedeg-uhel* ma kemeromp ar skwer a-ledan med herwez kartenn ALBB 296 ‘*fuseau*’ e Sant-Aleustr (poent 66) [gurza ‘ne:t] hag e Ploveren (poent 74) [gur’zat]; e Pont-Skorv e vez distaget “*guerjad*” (P.161 Éd. Yves Le Diberder. *Chansons traditionnelles du pays vannetais: 1910-1915*. Archives départementales du Morbihan, 2011.) hag ar strollad-kanerion *Dir-ha-Tan* ‘noa distaget “*gwezhid lin*” [dʒʷɛkʲolɛjn] (gant ar verc’h é kanañ) ha [dʒʷɛkʲolɛjn] (gant ar baotred é kanañ) e-barzh ar sonenn “*Pont ar vilin (an-dro)*”, ar strollad-mañ so é tond deus Zinzag; martese ema deut ar ger-mañ da vezañ distaget /z/ e kostez an Oriant, ewid ar ger-mañ hebkén. “*bazh-krog*” distaget /*baskrok*/ e Gerveur (P. Besco 1998): hag e Groe iwe (Hor Yezh 257, 2009): “*beuzigen*”, “*durzunèl/turzunèl*” “*harzal*” “*berzud*”, “*kizér* (ALBB 364, Plañvour ha Groe)”, “*nozez*”... J. Jafre ‘noa lâret iwe ‘noa klewet “*blèuez*” gant tud a Enes Groe iwe.

/a:/	[ä:]	/a:/ [v:]
“-ou”	/-ɔw/	/-œy/
“ao”	<i>monotong</i>	<i>diftong</i>
*o: predeneg	/œ:/	/e:/, /o:/ e Bro-Karnag
“s” e penn kentañ ar gerioù	/z/, <i>med depant a ra douzh ar gerioù iwe...</i>	/s/
/r/	[ʁ] pe [r~ʁ] <sup>288</sup>	[r~ʀ]
“r” e penn kentañ ar gerioù	<i>divouezh = / (h)ʀ~x/</i>	<i>mouezhiet</i>
“ged”	/dʒ-/ <sup>289</sup>	/g-/ [gi-]
“-ien”	/-jũ/ <sup>290</sup>	/-jð/
“-omp”	/-um/	/-om/
<i>lost-verb trived gour an amser-vremañ</i>	“-a”	<i>netra pe “-a” e parresioù war an tremen</i>
<i>lost-verb trived gour an amser-da-zond</i>	“-ay”	<i>“-o” pe “-ay” e parresioù war an tremen</i>
<i>ar raganw renadenn-dra rag-lakaet?</i>	<i>O med implijet e vez an araogenn “a” iwe</i>	<i>O, gosig ar raganw rag-lakaet hebkén</i>


Taolenn 12

<sup>288</sup> Gwir eo ar pezh a lâre E.Pipec (2008) herwez an NALBB, koulskoude depant a ra *kals* douzh an dud ar mod da zistagañ /r/, red e vise bet ober ur studi diwarbenn ar son-mañ ressisoc’h... na herwez parresioù, na herwez mecherioù, na herwez gour (CHEVEAU 2011).

<sup>289</sup> Er Gemene e vese gallet klewet [gj-] iwe (MCKENNA 1988).

<sup>290</sup> Kreistez ar vro wenedeg-isel hebkén martese, en Hanternos e vez distaget [-jen~-jøn] ha ne vefe ked taol-mouezhiet.

Hervez Loig Cheveau (diwar ur gaoseadenn henienel ha diwar e *staj-pourlet* gwraet e 1919), ar vro (g)wenedeg-isel a c'hell boud rannet evel-se<sup>291</sup>:



Isoglossoù hrevez Loig Cheveau

*Skeudenn 7*

<sup>291</sup> Er-mod-all emañ bet presentet *ar parlant Pourlet* gant Maxime-Morvan Crahé e-barzh (p.p.42-46): *Pays Pourlet: Chants et Musiques Du Pays Pourlet= Ar Vro Pourlet: Tud Ag Er Vro Pourlet*. Dastum, 2021.

- An isogloss kentañ<sup>292</sup> a laka un hars etre parlantoù kostez an Oriant ha parlantoù ar Vro-Pourlet diwar ar mod da zistagañ /-v(-)/<sup>293</sup>: e-barzh ar Vro-Pourlet e vo /-v(-)/ ha netra ebed e fin ar gerioù lies awalc'h<sup>294</sup>; hag e kostez an Oriant /-w(-)/. Med nemedenoù a so: '*klewed*' a vez distaget [klawet/ klowet] e-barzh ar Vro-Pourlet; hag ar ger '*aval*' a vez distaget [a'vä:l] e-barzh ar Vro-Pourlet ha [a'va:l] e kostez an Oriant.
- An eilved isogloss a dermen "*Kuz-heol ar Vro-Pourlet*" hag a so o ferzhoù dibar:
  - '-o' hir e fin ur ger a so deut da -ow<sup>295</sup>; /e:/ e fin ar ger a so deut da [ej]<sup>296</sup>; '-aou, -où<sup>297</sup>, da [-aw]<sup>298</sup>; '-ei' a so deut da [aj]<sup>299</sup>; /VrC/ a so deut da ziftongenn ha /r/ ne vo ked distilhet meur a wezh<sup>300</sup>; /r/ a vez roulet lies awalc'h<sup>301</sup>; ar morfemoù '-añ' (neuse kentañ gour unander an amser-vremañ hag an derez-uhellañ) a so deut da '-oñ<sup>302</sup>'; '-ez<sup>303</sup>, a so deut da [ə]<sup>304</sup>; 'oe' gwenedeg klassel a so deut da 'oa' ewid meur a c'her<sup>305</sup>; '-ion' a so deut da [jœn:]<sup>306</sup>; /e/ a so deut da /ɛ/<sup>307</sup>; hag /ɛ/ a so deut da /e/<sup>308</sup>; /-v/ a so deut da netra<sup>309</sup>; ha '-ved' (niveroù-pedvedin) a so deut da '-ùent<sup>310</sup>'.

<sup>292</sup> N'eo ked bet lâret gantañ med douzh a glewañ adal an Ignel neuse e vez lâret "(hw)o, honed" e-lec'h "vo (fo), foned" hag a vez gwraet e kostez an Oriant (e-barzh skridoù so savet gant Loeiz Herrieu e c'hellomp gweled "*fo*") hag ewid ar "*foned*" e kavomp dre skrid savet gant Monik ar Boulc'h (bet ganet en Ignel koulskoude) e "Éd. Yves Le Diberder. *Chansons traditionnelles du pays vannetais: 1910-1915*. Archives départementales du Morbihan, 2011." P.10: "A-houdé en amzér-sen meus guélet er brehoneg *é fonet* a'-baourhat, on domaj bras evit pinùdigèh hoñ parland!"; "vo" a vez distaget "(h)o" lies awalc'h e parlañchoù Kreis-Breizh iwe, er Vro Pourlet [(h)wo~ho]. Med an tech-mañ a vez kavet un tammig bihan peb lec'h er vro wenedeg-uhel iwe: Margenag (E. Pipec 2001), Plaodren "ou" (A.-M. Quéré 2003). Hag an ALBB ha testoù 'meus klewet gant Padrig Drean a lâre e komañs an distilhadur-mañ adaleg Pleuwigner, Baod, koulskoude e Bro-Gregam ne vez ked gwraet...

An tech-mañ a vez kavet e parlañchoù Bro-Pondi pe Bro-Noal (Dastum 1983, E.Pipec 2008) hag e Mourieg iwe (diwar un enklask war an dachenn gwraet ganiñ), e Margenag dreist-oll ar verb displeget "vese" hag e Mourieg ar c'hemmadur dre vlotaad "m,b-" > "v-" [w-], da.sk. "nos wad", "te wamm (da vamm)", "er wotenn (ar votenn)".

<sup>293</sup> Gerioù evel "*kaved, favenn (fawenn), brav (braw), piv (piw), dervenn (derwenn), mezw (mezv)*"

<sup>294</sup> Ar pezh a so stank awalc'h er Reter *bras* ma sellomp douzh kartennoù NALBB (53,144, 390): ar Vro-Pourlet, Bro-Pondi, Bro-Fañch beteg Bro-Oueloù.

<sup>295</sup> "*ar vro, lod*"

<sup>296</sup> "*ar bed, mis Mae*"

<sup>297</sup> Lies awalc'h e vez lâret [-ɔw] pe [ɔ] hebkén ewid gerioù so ("*paour, aour*" h.a.).

<sup>298</sup> "*labourioù, saoud*"

<sup>299</sup> "*bleiz, gwraet*"

<sup>300</sup> "*dorn, Berne, person, merc'h, erru*"

<sup>301</sup> Tud evel Émile Samdy (a Verne) ha Job Jaffre (a Verne iwe) heb soñjal e-barzh ho live-yezh, pe pegement a zeskamantoù o doa bet e vese roulet /r/ gete.

<sup>302</sup> "*ne ouioñ ked*", an tech-mañ a vez kavet en tu all d'an Ele iwe.

<sup>303</sup> Neuse "-é" e skritur gwenedeg klassel, "*z leoneg*".

<sup>304</sup> "*truez, gwirionez, buhez*"

<sup>305</sup> "*koad, oad, gwazh, oa, 'moa...*"

<sup>306</sup> "*labourerion*"

<sup>307</sup> "*gwerenn, sec'h, lec'h*"

<sup>308</sup> "*berr, laezh, blew*"; a-hend-all, ar ger "*laezh*" a vez distaget [le:x] e Sant-Tudal, er C'hroesti ha [le:x] e Nignol, e Pleurdud.

<sup>309</sup> "*braw, piw, mezw*"

<sup>310</sup> "*an driven, ar bewarved, an degved*"; an tech-mañ a vez kavet e *kanton an Arzhanoù* iwe (*Katekiz eskopti Kemper, skriwet e brehonek kanton en Arhanaou*. Bayon-Roger. 1934.)

- An deirved isogloss a dermen an tachad *Bis ar Vro-Pourlet* hag a so o ferzhoù dibar: ‘f-’ distaget ‘v-’<sup>311</sup>; ‘-r’ kollet e fin meur a c’her<sup>312</sup>; ‘-un’ a so deut da [-œn]<sup>313</sup>.
- Ar bederved isogloss a ziskouez neuse lec’h ma vez gwraet ar c’hemmadur dre vlotaad ‘g-’ > [h-].
- Ar bempved isogloss a so é tisklaerio lec’h na vez ked gwraet ar c’hemmadur dre vlotaad ‘d-’ > ‘z-’.
- Ar c’hwech’hved isogloss a so herwez ar c’hemmadur dre c’hwezh ewid ar son ‘t-’: a-gleiz e vez gwraet ‘t-’ da [s-] hag a-zehoù ‘t-’ da [z-]<sup>314</sup>.
- Ar seizhved isogloss a so herwez ar c’hemmadur dre c’hwezh iwe ewid ar son ‘p-’: e lein an isogloss-mañ e vez gwraet ‘p-’ da [v-] hag en he dias ‘p-’ da [f-].
- An eizhved isogloss a so herwez ar c’hemmadur war-lerc’h ar sifroù ‘3, 4’: e lein an isogloss-mañ e vez gwraet ar c’hemmadur dre vlotaad hag en tu all ar c’hemmadur dre c’hwezh.
- An nawed isogloss e vez implijet ar morfem ‘-imp’ e-lec’h ‘-omp’<sup>315</sup> ewid ar c’hentañ gour liester pa vez araogennoù.
- An degved isogloss, e Plourae hebkén e vez lâret ‘-o’ ewid trived gour unander an amser-dazond, e-lec’h ‘-ay’.
- An unnegved isogloss a lâr un tachad ma vez lâret ‘nitè, petè’ e-lec’h ‘netra, petra’: e lein an isogloss-mañ an heni eo lec’h ma vez gwraet kement-mañ<sup>316</sup>.
- Hag an daouzegved isogloss a so ewid ar parresioù deus ar Vro-Pourlet pe kostez an Oriant ma vez kaoseet ‘*gwenedeg-uhel*’ enne.

Hag ase e c’hellfemp soñjal e-barzh ar mod da zistagañ ar gêr ‘*kêr*’ iwe ken ma lâr diwarnañ L. Cheveau e-gunan ema un nemedenn:

---

<sup>311</sup> “*ur fals, ur feuten (ur vantaneuse), faoutiñ, koad faw*”; “*ur vantane*” a c’hellomp klewed e Lawalann hag e Seglian pe e Pleurdud iwe.

<sup>312</sup> “*breur, labour*”; an tech-mañ a c’hellomp kaved e parlant Klegereg iwe (Rolland 1994).


<sup>313</sup> “*sizhun, Lun*”; an tech-mañ a so ken stank all e Bro-Pondi, e Bro-Baod beteg an Arvro Bro-Gwened, herwez kartennoù NALBB 111, 126.

<sup>314</sup> *Erratum* ewid ar gartenn: en Nignol hag e Pleurdud e vez klewet an daou...

<sup>315</sup> Distaget [-um].

<sup>316</sup> Loig Cheveau a lâr neuse adal Hanternos ar barres ‘n Ignel e vez gwraet stank-ouzh-stank.





*Skeudenn 8*

Sur e vez gwraet ar staoñekadur lies awalc’h e *gwenedeg-isel* douzh ar gerioù é komañs gant ‘k-, g-, gw-’ pa vënt lakaet dirag ‘i, e, u’. Koulskoude ar ger ‘kêr’ a so interessant da studiñ hirroc’h warnañ<sup>317</sup>.

Er-maes deus tachad Bro-Gwened-isel ema forzh interessant: e kornad ar Gevred (kornad Sarzhaw, Enes-Houad, Enes-Houadig, ha kornad Sulnieg, Surzur, Lozac’h pe poentoù NALBB 175, 176, 180, 184, 186, 187), lec’h ma vez distaget /k-/ ewid ar ger ‘kêr’ e vez distaget /dʒy-/ ewid ar ger ‘digwener’<sup>318</sup>, hag ar c’hontrel neuse lec’h ma vez distaget /tʃ-/ ewid ar ger ‘kêr’ e vez distaget /gɥ-/ ewid ar ger ‘digwener’. Hag evel hag hon eus gwelet gant kartennoù ALRP, ar staoñekadur a c’hellfe boud gwraet ewid gerioù so med pas ewid gerioù all e-barzh ur barres hag e-barzh ur barres all (ha n’eo ked forzh pell douzh an heni gentañ) e vefe ar c’hontrel-mik.

Med parresioù so e Bro-Gwened-isel evel Pleurdud<sup>319</sup>, ar Gemene (neuse re dostoc’h douzh kostez Karaes) e c’hellfemp klewed an daou: Seblanted a ra diñ penaos ar ger-mañ a ziskouez stad ar

<sup>317</sup> Hag a so c’hoazh eh eus ur mod all da zistagañ e parresioù evel Pluskelleg pe Sant-Serves-Kallag: ‘*ba yêr*’ ewid lâret ‘*à la maison*’.


<sup>318</sup> Kartenn NALBB 120.

<sup>319</sup> Albert Boché a oa bet ganet e Pleurdud med e-barzh ur gêriadenn Kergwignou dostoc’h douzh bourc’h ar C’hroesti kentoc’h ewid bourc’h Pleurdud a zistage ar ger “*kêr*” heb staoñekadur da gentañ ha war-lerc’h gant ar staoñekadur: Madeg, Mikael. Blaz keltieg. Ar Skol Vrezoneg, 1994. P.38 “Me ‘gave drol ha vezem lakeet da lenn eul lañgaj ha ne veze ket kaozeet ‘barz ar gêr. [me ˈga ˈʔe ˈdʁol ʔə ˈzɛm lakɛt tə... ˈlɛnː o lã ˈgaʃ a ʔəzɛ tʃɛd.. ˈkɔzɛt bax ˈgɛːɾ]” vs. “Hennez ‘veze kaozeet galleg dioutañ ‘barz ar gêr... [ˈhinɛfi vɛzɛ ˈkɔzɛt ˈgalɛk totɔ bax ˈdʒɛːɾ]”.

staoñekadur e gwenedeg-isel: Evel ma ne vez ked gwraet palatalisassïon ebed ewid ar ger-mañ e Kaodan, en Henbont hag e Plañvour, Daniel Doujet ‘neus lâret diñ e vese gwraet ar staoñekadur ewid ar ger-mañ e Lann-ar-Stêr. Ha pa sellomp douzh ar levr skriwet gant M. McKenna (1988), ar staoñekadur “k-” so unan deus ar free variations: “(P.65) *Some speakers had [tʃ] and [kj] varying freely in their speech: (1)*<sup>320</sup> *used [kj] on occasion, while his wife had [kj] almost invariably. [tʃ] is general for the remainder of the subjects. (...) (P.66) Free variation between [tʃ] and [kj]. [tʃe'ra:vɪn] / [kje'ra:vɪn] Keraven? [tʃɪn]/[kɪn], ‘so that’. [tʃe]/[kje] ke, ‘because’. Note: [k] and [tʃ] may vary in the word: ker ‘town; village; home’: [ba tʃer] abarh ker, ‘in town’. [kɛrvɛr] Kerver.” Amañ so diskouezet deomp – heñvel eo ganiñ – ar c’hej etre ar fed fonologel hag ar fed etnoyezhonïezh. Da lâred eo tud deus ar c’hornad-mañ a so sañset boud techet da ober ar staoñekadur douzh peb ger é komañs gant ar son k hag en em gav gant ar vogalennoù /e, i, u/; ha war-un-dro da heul, sañset int nompas ober ar staoñekadur ewid ar ger-mañ-ger ewid en em ziforc’hiañ douzh re all.*

---

<sup>320</sup> (MCKENNA 1988) “*Julien Janan, aged 73; ex-soldier, stone-mason, factory labourer and gardener; Moulin-à-Tan.*”



*Skeudenn 9<sup>321</sup>*

<sup>321</sup> Rannadur ar vro gwenedeg-isel gant an oll ditouroù a c'hellen kaved.

### 3.2. Korpussoù studiet

An oll gorpussoù a so o tond deus *ar vro gwenedeg-isel* o skriwagnerien pe o c’homserien enne, o tond deus ar *Vro-Pourlet* e gwirionez peogwir eh eus muioc’h a draoù dijapl e *pourlet* diwar a gavañ (*sorc’hennoù*, *periodikoù*, *enrolladennoù diwar tud a oad a-beb-sort*).

Degass a rañ deoc’h soñj deus an *daolenn 1* a lâr diwarbenn *rummadoù* disheñvel pe *liveioù* disheñvel iwe:

<i>Ar yezh komset da vad</i>	>	<i>Ar yezh komset sewenaetoc’h 1: kontadenn dre eñvor</i>	=;>	<i>Ar yezh komset sewenaetoc’h 2: kontadenn enrollet ha bisskriwet</i>	>	<i>Ar yezh hanter-skriwet: kontadennoù dastumet</i>	>	<i>Ar yezh skriwet<sup>322</sup>: kronikennoù e-barzh ar journal</i>
------------------------------	---	---	-----	--	---	---	---	--

Taolenn 13<sup>323</sup>

#### 3.2.1. *Ar yezh komset da vad*

Choaset so tri c’horpuss ewid *ar yezh komset da vad*.

1. Da gentañ Liliane ar Bras (1976<sup>324</sup>): ur vaoues kozh (he mamm-gozh, bet ganet e fin an 19<sup>ved</sup> kantved, *ne ouie ked ger galleg ebed*) a gonte he buhez. Ur c’horpuss bisskriwet ganti.
2. Hag ur c’horpuss o tond deus un abadenn a Radio Bro-Gwened er bloawezhioù 1990, kasset gant Monik ar Boulc’h: Emile Samedy, bet ganet er bloawezh 1930 ha aet da Anaon d’an 21 a vis Genver e 2021, a oa karrour-tonellour-konter deus Berne. E-barzh an abadenn-radio e kont deus ar vecher karrour-tonellour.
3. Un abadenn-radio gant Emile Samedy iwe, med enrollet gant un den yaouank deus ar Radio Bro-Gwened e 2018, amañ e kont deus douar Berne.

#### 3.2.2. *Ar yezh komset sewenaetoc’h*

Daou gorpuss a so da studial

1. Un abadenn *sorc’henn* e-pad ar filaj, Emile Samedy adarre o konto ur *sorc’henn dre eñvor*.
2. *Sorc’hennoù Loeiz Bevan*: bet ganet e 1919 en Ignel, “ema bet é chom e Neizin hag en Elven, met dreist-oll e Sant-Ewan-Bubri lec’h m’ema bet plomour-tredanour e-pad 30 vloaz.<sup>325</sup>” E dad-kozh a oa o chom etre Ploue ha Karnasen, setu perag, a lâre-heñv,

<sup>322</sup> Med n’omp ked ewid gortos ur *yezh skriwet* ken kempennet evel ma kavomp bremañ e-barzh levrioù ewid ar *gwenedeg-isel*: ne oa ked kals a dud ha ‘noa skriwet en o farlant *gwenedeg-isel* rik-ha-rik, lewesonet e oant gant an hengoun lennegezh *gwenedeg klassel* a-dra-sur (gweled *infra*).

<sup>323</sup> Ar memes taolenn evel an *daolenn 1*.

<sup>324</sup> Ar Bras, Liliane. ‘Mari. Amzer eurus meche paset, me bourap...’ *Hor Yezh*, no. 110.

<sup>325</sup> Bevan L. *Ewan Pier Ar C’horr* Dastum 1988. ; sur awalc’h dre-se e vese klewet distagadur *gwenedeg-ihuel* a-wechoù gantañ: ‘aon’ distaget [(j)œn] tre ma vez distaget [‘awøn] en Ignel.

ema heñvel e sorc'hennoù douzh re Job Jaffre *Yann ar Baluc'henn*. Goùd a rae skriwañ ha lenn<sup>326</sup> e brezhoneg moarvad, kasset oa gantañ skridoù da *Liberté du Morbihan*<sup>327</sup>, a-balamour d'an dra-se n'omp ked ewid disoñjal leveson al lennegezh klassel.

A-hend-all, an oll sorc'hennoù embannet *Ewan Pier Ar C'horr* (DASTUM 1988) pe skignet ewid abadenn *Beilhadeg e Breizh-izel* a so bet enrollet iwe, setu perag ema disheñvel o anien douzh ar sorc'hennoù *dastumet* ha *skriwet*: dre goms vs. dre skrid, a-se e c'hellfemp gwiriekañ... Ar lod deus e sorc'hennoù so bet savet diwar ganaouennoù iwe.

### 3.2.3. *Ar yezh hanter-skriwet: dastum sorc'hennoù*

Choaset so un dastum sorc'hennoù gwraet gant Guillam ar Borgn<sup>328</sup>. Guillam ar Borgn oa bet ganet er bloaz 1866 e Seglian ha marw er bloaz 1927. Na bezañ ma 'noa ked bet studi ebed, e teue koulskoude a-benn da sevel ur bern sonennoù, sorbiennoù ha pezhioù-c'hoari. Kasset e vese e labourioù da *Zihunamb*, da *Ar Vro* ha da *Almanach*. Labourer-douar ha dastumer anehañ, e zastum sorc'hennoù a oa dreist-oll er Vro-Pourlet ha tro-ha-tro dehi. Dastum sorc'hennoù eo da zigentañ med n'omp ked ewid goùd hag e oa chañchet gantañ.

### 3.2.4. *Ar yezh skriwet: kronikennoù er journal*

Choaset so *daou skriwagner* ha 'noa skriwet ewid *Liberté du Morbihan*. Job Jaffre gant e oberenn *Yann er Baluhenn* (bet embannet a-dammoù er journal) ha Pier ar Saoz 'Bleu Benal', e gronikennoù bet embannet er journal iwe.

1. Job Jaffre oa bet ganet e 1906 e Berne war zouar tost douzh Karnasen. Paod-mad a skol 'noa bet, mestr-skol e oa bet sokén e Karnasen. Ar c'hentañ micherour ewitañ oa kasetennour: komañset er bloaz 1931 ewid *Nouvelliste du Morbihan*, e 1941 bet skriwagner er gelaouenn *Heure-Bretonne*; war-lerc'h ar Bresel e oa bet é sevel skridoù ewid *Liberté du Morbihan*, adaleg 1965 e oa é sevel pennadoù e brezhoneg *Etrezomp e brezhoneg*, war an ton kentoc'h *evel pa vez komset gant ur c'homper douzh ur*

---

<sup>326</sup> Morhad e oa bet komanantet da *Dihunamb*: *Dihunamb* 389. 1944. P.15 “**Eured** D'en 11 a Henver é ma bet euredet é iliz Sant-Iouann, hor lennour ha keneil en E. Loeiz Bévan, à Vubri, get en Di. Virjini er Sant, a Vubri eùé. D'en tiegeh neùé hor gourhemenneu guellan.”; ha 'noa kasset e skrid sokén herwez DOUJET (2020) P.80: “Ma ! ne oa ket ar wezh kentañ da Loeiz bout embannet. Ar skrid kentañ am eus kavet anezhañ a oa e *Dihunamb*, e 1938, ne oa nemet naontek vlez.” *Er Melinér ha sant Kuperd* 'ni eo a oa bet embannet e *Dihunamb* 328.

<sup>327</sup> Jaffre, Job, et Daniel Doujet. *Opus citatum*. 1986. & Doujet, Daniel. ‘Skridoù, Skeudennoù Ha Skrivagnerion (4) : Loeiz Bévan (1919-1988), Ur Lizher Da Job Jaffré Hag Ur Pennad Evit «Etrezomp e Brezhoneg»’. *Hor Yezh*, no. 301–302, Meurzh-Mezheven 2020.

<sup>328</sup> Ar Borgn, Guillam. *Opus citatum*. 1925.

*c'henderw*.


*Yann ar Baluc'henn* so neuse un tolpe deus e bennadoù skriwet e kornad *Etrezomp e brezhoneg*: sorc'hennoù kavet e-barzh so heñvelig douzh heni Guillam er Borgn (*Iann Fineu* ha *Diannez d'er friko kig lé*<sup>329</sup>) pe heni Loeiz Bevan (*Ewan-Pier ar C'horr* ha *Oan Pier er Horr*) iwe hag sorc'hennoù so anehe a gavomp e-barzh *De Hortoz Kreisnoz*. Ewid sevel un dastumad *sorc'hennoù* 'noa kemeret kontadenn diwar un tu pe du pe diwar peb lec'h: herwez 'lâr Daniel Doujet (ur lârezh personel ganiñ), gwezh diwar *Kroaz ar Vretoned*, gwezh diwar *Dihunamb*. Med herwez kont n'omp ked ewid *nac'hañ* e vez an darn vrassañ anehe o tond *a-veg da veg pe a-vidad da vidad* er Vro-Pourlet, ma sellomp douzh sorc'hennoù all kontet gant L.Bevan pe bet dastumet gant G. ar Borgn...

2. Pierre le Sausse oa bet ganet er bloaz 1899 e Sant-Karadeg. Er bloawezhioù 1920 e vese o kass e skridoù da zDihunamb iwe. Hag e vese oc'h ober skol e Pleskob, barzonegoù oa savet gantañ, e finwezh e vuhez 'noa gouestlet d'ar brezhoneg en ur skriwañ pennadoù e kornad *Etrezomp e brezhoneg* evel Job Jaffre, etre 1976 ha 1979. Ha red eo lâred, e-keñver skridoù savet gant *Bleu Benal* 'meus implijet *Etrezomp e brezhoneg 1976-1977, 1978-1979* kempennet gant Daniel Doujet, dre-se n'omp ked ewid bezañ sur ma vise bet chañchet urz ar gerioù gantañ evel ma welomp e-barzh *Yann ar Baluc'henn* dibaod a-wechoù<sup>330</sup>.

---

<sup>329</sup> A vez anavet-mad dindan anw *Bilz, Bilzig* e Kreis-Breizh ha *Yann Seitek* e Bro ar Stêr-Aon pe *Yann al làer*...

<sup>330</sup> Da skwer: (J. Jaffre) "En amzér-sé, en Aotrou Kuniow e vieùé mélin Bod Er Hog 'barh un douleñn, tostig d'er Skorv, a réz get koed er Pontkelleg." vs. (D.Doujet) "En amzer-se e piaoue an Aotrou Kuñvioù milin..."; Daniel Doujet 'neus lâret diñ 'noa ked chañchet urz ar gerioù e-barzh e dastumadoù *Etrezomp e brezhoneg* avad...



*Skeudenn 10 parlañchoù dielfennet*

#### 4. An disoc'hoù

E-barzh ar lodenn-mañ e vo diskouezet kement-traoù dispaket diwar an oll gorpussou: tu so lâred ar pezh a ziskouez ar c'horpussou dielfennet hebken, med evel m'hon eus choaset an doare da selled disheñvel, da lâred eo *ur sell sossio-lennege*. Buan awalc'h e savo goulennoù diwarbenn disoc'hoù hag a glot-diglot gant ar poltred, ha gant anien ar skridoù.

Ar pezh a gennigomp war-lerc'h eo an disoc'hoù *kuntuilhet* war-zigarez da zielfenniñ hor c'horpuss-ni, ha mond pelloc'h, da skwer trema skridoù all (pe korpussou dre goms adarre) a-orin deus a-beb-sort (pe e-keñver *lec'hioù* – deus Seglian (tostoc'h da Vargenag) beteg ur barres e kalon ar Vro-KLT – hag *anien*, pe *mareoù disheñvel*).

Mar ve stummoù frasennoù boutin ewid ur rummad-skrid, evel ma so bet meneget gant Y. Berre (2012<sup>331</sup>) a lâer er *gwersioù* e vez kavet muioc'h a frasennoù e stumm *SVO*<sup>332</sup> – daoustoc'h diñ é kaved pe santiñ kentoc'h c'hoazh, e gwersioù gwenedeg e vehe kavet muioc'h a frasennoù e stumm *Inf. V-*, da lâred eo da beb skrid e vez ur stummoù frasennoù hag a gouch gwelloc'h ewid ar re all. Displegañ a so diaes da zond a-benn d'ober amañ, med ma teufe deomp soñjal *en un doare simpl* e vefe ewid reiñ *ton* d'o skridoù... ha netrakén...?

---

<sup>331</sup> Le Berre, Yves. 'Rhétoriques Des Gwerziou'. *La Bretagne Linguistique*, no. 17, 2012, pp. 141–60.

<sup>332</sup> *Ibidem*. pp. 143-144:

*“Alors que dans la langue orale le sujet placé devant le verbe est statistiquement assez rare ou de nature dialectale (hors Trégor et Léon), les gwerz le mettent très souvent en tête de phrase, même là où il n'est pas le prédicat. [...] La phrase – ou la proposition principale de la phrase – à sujet initial représente près de 20% du total des accidents recensés. Dans les autres phrases, c'est le verbe ou un syntagme circonstanciel qui commence la phrase. Les chiffres bruts donnés ci-dessus cachent une réalité plus tannée. KT [Kervegan hag an Touello] en est de loin le plus grand utilisateur: la phrase à sujet initial, qui y apparaît toutes les 5 lignes en moyenne, représente près du tiers de son total d'accidents (19/64). Elle se rencontre tellement souvent dans les trois textes qu'elle apparaît comme un véritable procédé technique de “traction” du récit. Elle confère en outre à ce dernier un rythme solennel et un peu monotone accordé à la gravité du thème.”*



#### 4.1. Pa vez sellet a-bell...

Ur wech achu gant dielfenniñ ar c’horpussoù disheñvel e oa red diñ soñjal pessor mod diskouez an disoc’hoù ‘meus bet gante. Seul vuioe’h ma so rannet frasenoù herwez rummadoù disheñvel *a-vunudigou* e vefe diaes peb tra war-un-dro.

E-toues an daoreoù all a c’hell diskouez meur a dra assambles, un daolenn a vefe dedennus implij. Gant un daolenn – kentoc’h ewid ur grafik, evelato – e c’hellfemp gweled an disoc’hoù *a-vras*, gant ar chifroù:

LP		E.S 1 <sup>333</sup>	E.S 2 <sup>334</sup>	Mari <sup>335</sup>	E.S 3 <sup>336</sup>	L.B <sup>337</sup>	G.B <sup>338</sup>	B.B <sup>339</sup>	J.J <sup>340</sup>	M. <sup>341</sup>
rener dirag ar verb	SVO	37,59%	28,75%	27,45%	40,27%	32,07%	30,68%	22,37%	25,88%	32,31%
	XSV	0,71%	1,25%	3,36%	4,7%	4,35%	10,41%	4,63%	5,93%	
(X)V2	XVS	14,89%	30%	17,09%	12,75%	11,96%	8,22%	15,94%	14,56%	26,56%
	Pred V	5,67%	1,25%	1,12%	10,07%	11,96%	13,15%	16,45%	16,17%	
	X Pred V	0%	0%	0%	0%	0,27%	0,27%	0,26%	1,35%	
	OVS	12,06%	20%	9,80%	10,08%	9,24%	7,67%	10,03%	8,63%	2,97%
	XOV	0,71%	0%	0,84%	0,67%	0%	0,27%	0%	0%	
	Inf. V	0%	0%	0,28%	0%	2,17%	4,11%	5,91%	3,5%	1,68%
	X Inf. V	0%	0%	0%	0%	0%	0,55%	0,77%	0%	
boud V	0%	2,5%	0,28%	1,34%	2,45%	0,27%	0%	0,27%	5,95%	
traoù all	V1	25,53%	13,75%	28,85%	6,71%	8,42%	6,85%	7,46%	8,09%	26,56%
	diverb	2,84%	2,5%	7,84%	6,71%	17,66%	17,53%	15,94%	15,63%	3,27%

<sup>333</sup> Ar c’horpuss: *E.S.1* a vo kavet e-barzh *Stagadenn 1*.

<sup>334</sup> Ar c’horpuss: *E.S.2* a vo kavet e-barzh *Stagadenn 1*.

<sup>335</sup> Ar c’horpuss: *Mari*. a vo kavet e-barzh *Stagadenn 1*.

<sup>336</sup> Ar c’horpuss: *E.M.3* a vo kavet e-barzh *Stagadenn 1*.

<sup>337</sup> Ar c’horpuss: *L.B.* a vo kavet e-barzh *Stagadenn 1*.

<sup>338</sup> Ar c’horpuss: *G.B.* a vo kavet e-barzh *Stagadenn 1*.

<sup>339</sup> Ar c’horpuss: *B.B.* a vo kavet e-barzh *Stagadenn 1*.

<sup>340</sup> Ar c’horpuss: *J.J.* a vo kavet e-barzh *Stagadenn 1*.

<sup>341</sup> Le Pipec, Erwan. *Opus citatum*. 2017. P.5: lamet ‘meus frasenoù e stumm-nac’h ha ?.

<b>ped frasenn</b>	141	80	357	149	368	365	389	371	1002
------------------------	-----	----	-----	-----	-----	-----	-----	-----	------


Taolenn 14

A-raog mond da zispleg munud-ha-munud e rankomp disklêrio penaos n'eo ked ingal frasennoù dielfennet diwar peb korpus, med en ur selled douzh an daolenn a-us dreist-oll pa vez gwelet disoc'hoù *ingalig* hervez rummad (da lâred eo: *korpussoù dre goms*, *korpus-kontadenn* h.a.) e komprenomp ne chañchfe ked an disoc'h evel ma vo dielfennet muioc'h a frasennoù.

#### 4.1. *Renner dirag ar verb*

Dregantad ar stumm *SVO+XSV* a so tre 26% ha 44%. Evel ma'h eo bet lâret e penn-kentañ ar studi-mañ, en em gav dregantad ar stumm-se etre heni ar C'hLT (20%~25%) ha heni brezhoneg ar Gevred pellañ (60%). Lakaad anehe an eil e-keñver egile a c'hellfe boud diaes pa sellomp douzhte a-bell. Med *a-vras* e c'hellomp lâred – pa vënt rannet en deir lodenn: *korpussoù dre goms*, *korpussoù-kontadenn* ha *korpussoù dre skrid* – e vez kavet gant ar rummad *korpussoù-kontadenn* (36%~44%) ar peb muiañ stumm-frasennoù *SVO+XSV*. Hag an nebeutañ gant ar *skriwagner* Bleu Benal (26%) hag a so kenkouls evel dregantad parlant ar Poher (25%). Koll-poan e vefe er poent-mañ klask kaved reolennoù an implij stumm *SVO*: an heni ha 'neus implijet ar muiañ e oa Emile Samedy (ewid e sorc'henn; 44,97%) hag an nebeutañ (a-nes Bleu Benal) e oa hennezh iwe (ewid an enrolladenn gwraet e 2018; 30%). O selled a-bell e c'hellfemp termeniñ e vez implijet muioc'h a stumm *SVO* pa vez kontadennoù. Nawazh sur e c'hellomp lâred ema *gaou* ar pezh a vez lâret war-lerc'h ar *gwenedeg* penaos *hè 'laka renner o frasennoù dirag ar verb ataw...*

A-raog tremen d'ar stummoù all e faote diñ diskouez komparêson dre griteria disheñvel, seul vuioc'h ma tleañ ma awen ewid ar studi-mañ d'ar stumm-frasennoù *SVO* (pe *renner dirag ar verb* pa lâriñ mad iwe). Gweled a c'hellomp anehe an eil e-keñver egile, war ar gartenn-geograf a-benn ewid spiañ diforc'h hervez lec'hioù da gentañ. Ha war-lerc'h – na boud ema er c'hours diskouez, 'mit-hu, peogwir e vefe gwelet muioc'h a draoù dic'hortos pe engortos pa sellomp douzh stummoù-frasennoù all, gwech evel m'hon eus gwelet lies awalc'h e brezhoneg kenkouls evel e krenngembraeg, eh eus stummoù-frasennoù so a gaver muioc'h ewid ar re all; gwech ewid dregantadoù disheñvel deus ar stummoù-frasennoù e *gwenedeg* hag e *KLT* –, diforc'h etre skriwagnerien (+ ar c'hontadennoù, evel ma kontemp o c'hompren evel ur lodenn deus ar lennegezh), pe keñveriadenn etre ar c'horpussoù dre goms hebkén.



Skeudenn 11 : dregantad ar stumm *rener dirag ar verb* hervez lec'hioù

Pa sellomp douzh ar gartenn e ta douzhtu da wiriañ an deorienn a vez lâret ganeomp dalc'hmad adaleg mad eo bet lañset ar studi-mañ: *seul vui eh amp d'ar Gevred pellañ e vez kavet muioc'h a frasennoù e stumm SVO*. Med pelloc'h, daoust hag-eñv e c'hellet sevel pe tennañ reolennoù all diwar ar gartenn-mañ? Ur wech tremenet an hars etre ar vro KLT ha *Bro-Gwened*, trema Karaes, ne vefe ked kavet ar stumm *rener dirag ar verb* muioc'h ewid un 30% bennak. Hag er *Vro-Pourlet* ha Margenang (petramant *Bro-Pondi* a-bezh?<sup>342</sup>), e welfemp ar chañchamant tre 27%~45%. Hag iselloc'h, muioc'h a frasennoù e stumm *SVO*, penn-kentañ-toud, an Ardeven (PIPEC 2017), un 42% bennak<sup>343</sup> hag en Arradon (*ibidem*), muioc'h ar wech-mañ, un 60% bennak.


Traoù a so chomet da zisoloiñ a so: dregantad ar stumm *rener dirag ar verb* e parlañchoù-etre. Parlañchoù *sav-heol* an Henbont (Bro an Oriant) ha *kuz-heol* an Henbont (Lokmikaelig, Gavr,

<sup>342</sup> Diwar a lârer (ur gaoseadenn heniennel gant E. Pipec&LE CLERC DE LA HERVERIE 1983), en tuad Noal (neuse parresioù *gwennoc'h*) e vese selaouetoc'h douzh an Ilis, mand eo gwir e vefe kavet muioc'h a leveson o tond deus skridoù?

<sup>343</sup> Gant frasennoù stumm-nac'h hag all, neuse mand eo lamet ar frasennoù stumm-nac'h e vefe kavet tre un 50% bennak a frasennoù e stumm *SVO*.

Kervignag h.a.). Petramant parlañchoù Douar an Alre, Bro-Baod<sup>344</sup>, ha c’hoazh en tuadoù evel Bubri pe Kistinid lec’h ma vez bew an treuskass brezhoneg a-veg da veg.

Ezomm so iwe dielfenniñ parlañchoù etre Karaes hag ar Vro-Pourlet: parlañchoù ar Faoued petramant Langoned, hag iselloc’h heni Kemperle a ray deomp *digudenniñ* iwe hag ema ar parlant ‘ni eo a ra leveson da yezh an Ilis (PIPEC 2017). Ken tost ma’h int douzh ar Vro-Pourlet kentoc’h ewid douzh Karaes, med ma vefe chañchamant krenn etre parlant ar Vro-Pourlet ha heni Langoned-ar Faoued e c’hellfemp soñjal a-balamour ne oant ked en Eskobti Gwened ‘med adaleg ar Revolussion?



Grafik 1 Rener dirag ar verb, herwez "rejistroù" disheñvel ar yezh

Gant ar grafik a-sort-mañ e teu sklaerroc’h da weled an disparti *munud* etre *kaoseal* ha *skriwañ*, kenkoulz evel skrid a *live isel* ha skrid a *live uhelikoc’h*. Tre ma n’eus ked gwall-ziforc’h etre korpussoù dre goms ha korpussoù-kontadennoù *lâret*, adaleg ar c’horpuss-kontadennoù *dastumet* e vez gwelet é tigrisk *war o gwarigoù*. Koulskoude daoust da gement-se – hag a so un *diforc’h munud-munud* – n’eo ked ar stumm *rener dirag ar verb* ‘ni eo an disparti krenn en o mesk kén a gredomp.

Gweled a reomp diwar an daolenn, ar gartenn hag ar grafik – n’hon eus ked taolet ur sell med war ar stumm *rener dirag ar verb* – e kav deomp n’eus ked kals a ziforc’h e-keñver ar stumm-mañ herwez ar rummadoù-korpuss disheñvel, ewid klokaad ar lodenn-mañ en ho pedañ gortos ur pennad all ewid ledannaad leveson ar skol e-keñver ar skrid e Bro-Gwened.

<sup>344</sup> Pa oan aet da weled ur vaoues ginidig a barres Mourieg (ganet er bloawezhioù 1930), d’ar goulenn da droiñ ar frasenn c’halleg “*Il est aussi grand que moi*” so bet respontet ganti “*Ker bras eo êliñ*”, daoust hag e oan é c’hortos ur frasenn evel “*Heñv so ker bras êldiñ*.”...

#### 4.1.2. (X)V2: XVS+Pred V+X Pred V

Kavet e vez ar stummoù-mañ stankoc'h dre goms kenkouls evel dre skrid (18%~33%), ha ne c'hellomp ked sevel ur reolenn a-vas pa vez sellet a-bell evel-se, martese a-balamour da choas an heniennou? da lâred eo da heul an implij frasennou en *tu-gouzañv*.

#### 4.1.3. (X)V2: OVS+XOV

Tre ma ne vez ked kavet med *un 2% bennak* e-touesk ar c'horpuss a Vargenag e welomp tre 7%~20%. Ur wech adarre, e c'hellfemp soñjal ema a-balamour an implij *tu-gouzañv*.

#### 4.1.4. Inf. V+X Inf. V

Un disparti krenn a c'hellomp gweled etre ar c'horpussoù dre goms hag ar re dre skrid pe e-keñver poltred an dud gant ar stumm-mañ. Gant E. Samedy, Mari n'eus ked med a 0%<sup>345</sup> anehe gosig, e Margenag 1,68% gosig netra iwe; gant Loeiz Bevan, 2,17% ur sort ha Gwilham ar Borgn, 4,66%, Bleu Benal – ar peb muiañ – 6,68% hag a so tost-mad douzh dregantad parlant ar Poher 6% (FAVEREAU 1997), 3,5% gant Job Jaffre. Penn-kaos an dregantad-se a vefe *kapapl da lenn ha skriwañ* moarvad, pa sellomp douzh o foltred. Da lâred eo, tud a oar lenn ha skriwañ 'neus dalc'het soñj deus ar stumm-se a vez implijet *ur wech an amser* e gwenedeg klassel deja dindan ar reolennoù strishoc'h ewid na vefe er *C'hLT* (KERSULEC&SOLLIEC 2012).

#### 4.1.5. boud V

Ne gavomp ked kement a ziforc'h etre parlantoù ar Vro-Pourlet, pe ne vez ked implijet pe ne vez ked kals ha netra kén; pe e c'hellfemp lâred e vez implijet *muiioc'h* dre goms.

#### 4.1.6. VI

Ur stumm *direizh* e-keñver ar *yezhadur reizh*. Koulskoude mall reiñ ur stad dehe peogwir e kavomp *paot-mad* dre goms a-wechoù kement evel dregantad ar stumm *SVO* a soñjfe d'an dud e vefe ur stumm hag a vez gwraet gantañ ar peb muiañ *e parlantoù Bro-Gwened*.

Nawazh amañ e welomp adarre un disparti krenn a sell douzh o foltred – a-nes ar c'horpuss *E.S.* 3 hag a gavomp nebeutoc'h a frasennou e stumm *VI* a-gaos da zregantad uhel ar stumm *SVO* – e-mesk ar re na ouiont ked lenn ha skriwañ e vez kavet muioc'h a frasennou e stumm *VI*, da lâred eo ema ur stumm stag douzh ar rejistr isel hebkén? evel ma ne gavomp frasenn ebed e-barzh ar skrid savet gant Y. Marion<sup>346</sup>? (PIPEC 2017, p.9)


---

<sup>345</sup> Ur frasenn hebkén a gavomp e-barzh ar c'horpuss *Mari...*: “Vern a ra petra...”, un droienn skornet a gredomp.

<sup>346</sup> 0,5% ewid ar stumm *Ha + V...*

#### 4.1.7. *diverb*

Kontrol d'ar stumm *V1* e vez kavet ar stumm-mañ muioc'h e-mesk ar rejistr *uhel*. Gante e kavomp muioc'h ewid 15% er stumm-mañ ataw.



Grafik 2 V1 ha diverb

Ma lakomp an daou dra war-un-dro e welomp sklaerroc'h an diforc'h etre ar goms hag ar skrid, hag e c'hellomp gweled deus pelec'h e komañs ar *skrid* (en ur ster ledan). Mar ne ve ked kavet gwall-ziforc'h etre koms ha skrid, mar so unan e vefe ar stummoù-se 'ni eo a laka an diforc'h etrese, gant ar stumm *Inf. V*.

#### 4.1.7. *A-zivoud ar frasennoù stumm-nac'h*

O vezañ ma n'eus ked kavet kement a frasennoù stumm-nac'h evel ar lavarennoù-pennañ, ne dalvfe ked ar boan o lakaad war wel, evel ma vënt dielfennet *evel un item deus ar lavarennoù-pennañ* e tammoù enklaskoù a-gent. Nemed pa vefe un disterrañ dra da zisklêrio ur sort e vefe: ar stumm *S ne V* a vez kavet forzh nebeutoc'h ewid ar stumm *ne V*. Evel ma lâr nen gwallig lies, ar stumm *S ne V* so kreñv *poues-semantic* war ar rener, setu ma teu gant unanigoù da lâred, pa vez lakaet ar rener dirag ar rannig-nac'h e vefe ewid *pouesañ* war ar rener hebkén, med e gwirionez evel ma vo sellet pizh douzhte a-belloc'h, *pouesoù* all a so a ra deomp lakaad ar rener dirag ar rannig-nac'h.

#### 4.1.8. *A-zivoud an islavarennoù*

Pa vez islavarennoù, e brezhoneg *standard* evel ma tamalle F. Kervella (gweled *supra*) – eontr kozh ar brezhoneg *reizh* – n'eo ked *reizh* lakaad med ar verb ewid krogiñ gant un islavarenn. Koulskoude ar reolenn-se, pa ne vese ked heuliet gant skriwagnerien d'an ampoent-se (da amser F. Kervella, 'mit-

hu), dre goms sokén n’eo ked ur reolenn sanket e-barzh ar penn *terminal-speakers* (HEWITT 2018), e-toues skriwagnerien-bobl e c’hellfemp lâred Herve Burel<sup>347</sup> e kavomp aessoc’h un *islavarennoù* bennak kasset gant an droienn *pa’z eo gwir*<sup>348</sup> – hag a so deut da ur ger hebkén, ne vern pessort amser – ha lakaet ur ger all hag ur verb.

Neuse, selled douzh stad urz ar gerioù er Vro-Pourlet (e-barzh ar vro vraw ar Morbihan ataw, menn ma lârer e vehe implijet ur bochad frasennoù, o rener dirag ar verb) a vo un *akt* ewid tostaad da gompren penaos e vez gwraet e gwirionez.

A-dra-sur n’eus ked kement a frasennoù a vez implijet gante evel ma vez ar lavarennoù-pennañ, med gelloud a reomp kempenn dindan ar stumm taolenn ewid kaoud ur sell *a-ledan*.

Isl	E.S.1	E.S.2	Mari.	E.S.3	L.B.	G.B	B.B	J.J.
... V	52,17%	75%	73,68%	53,33%	46,15%	40,48%	44,44%	39,29%
... S V	43,48%		23,68%	40%	42,31%	57,14%	22,22%	28,57%
... S ne V					3,85%			
... Pred V	4,35%				7,69%		5,56%	10,71%
... O V			2,36%					3,57%
... X V							11,11%	
... Inf. V								3,57%
... diverb		25%		6,67%		2,38%	16,67%	14,29%
<b>Ped frasenn?</b>	23	4	38	15	26	42	18	28

Taolenn 15

<sup>347</sup> Burel, Hervé. et Blanchard, Nelly. *Histor eur famil eus Breiz-Izel = Histoire d’une famille de Basse-Bretagne*. Skol Vreizh ; CRBC-UBO, 2011.

<sup>348</sup> *Ibidem*. Ha sokénnoc’h e kavomp gantañ ur meni stagell-isurzian *penaos war-lerc’h peogwir* evel ma oa bet gant Seveno e-lec’h *en* (gweled *supra*): (P.86) “pa zéo gwir pénos ho peus digasset da song din deus an névésenti-zé, mé ho coulen dioustu évit hen henvel pa deuo ar maré”.

Ur wech adarre, un dra a vez gwelet da zigentañ eo: ne dalvfe ked ar boan dielfennañ ur bilbern frasennou, pa ne chañch ked an disoc'h, pe nebeud. Da skwer, gosig diforc'h ebed e-keñver o fegementad etre *E.M.1* hag *E.M.3* evel ma n'eus ked gwall-ziforc'h e-keñver o dregantad iwe.

Un dra all da venegiñ iwe a so gant *G.B.*: muioc'h a frasennou e stumm ... *SV* ewid ... *V*. Martese e vefe furroc'h soñjal ema e *stil* dehañ da skriw, peogwir ne welomp ked kement-traou gant ar re all...

En ur selled douzh an daolenn e ta sklaerroc'h da lâred n'eo ked gwir ar pezh a lâre F. Kervella, med tud desketoc'h 'ni eo a vez implijet gante nebeutoc'h a stumm ... *V*.

Souezhet e vefemp neuse pand eus bet implijet muioc'h a stummoù ha n'int ked ... *V* a-herr ma ya da uhel ar *rejist*r (a gredomp), med ar stumm *S ne V* a so nebeud iwe (a-nes *G.B.*, evel ma so lâret deja), ha seul uhelloc'h ar rejistr (dizesk dre skrid > desket dre skrid) seul vuic'h a stummoù a vefe kavet (*B.B.=5*; *J.J.=6*) sur-mad ewid lakaad *ton* d'o *skrid* en ur implij stummoù *direizh* e-keñver ar yezhadur *reizh*; hag a so gwir c'hoazh e-mesk ar *bobl*, Loeiz Bevan "*Barz-Plombour*" anavet-mad a vese implijet gantañ muioc'h a stummoù (4).

#### 4.1.9. Ewid klosiñ?

Diwar ar lodenn-mañ *pa vez sellet a-bell*, e teuomp a-benn da c'hoùd deja n'eus ked kals a ziforc'h etre koms ha skrid evel na vese er *C'hLT* iwe. Hag e-barzh ar Vro-Pourlet+Margenag ne welomp ked variesoñ ebed e-keñver lec'hioù ha da grediñ so penaos ar fed da implij muioc'h (un 60% *bennak*, mar plij) a so stag douzh parresioù tro-ha-tro da Wened, adaleg Plaoren beteg an Arradon douzh a ouïamp (QUÉRÉ 2011<sup>349</sup> & PIPEC 2017<sup>350</sup>). Nemed ema anad pa sellomp douzh o implij stumm *VI* ha *diverb* hag a rafe un difroc'h etre koms ha *skrid* ha tud *desketoc'h* e brezhoneg a oar implij muioc'h a stummoù pa vez islavarennoù kenkous evel lavarennoù pennañ pa sellomp douzh ar stumm *Inf. V*.

<sup>349</sup> Quéré, Anne-Marie. 'Remarques Sur Le Breton Parlé à Plaudren'. *La Bretagne Linguistique*, no. 16, 2011, pp. 111–22.

P.122: "Pour conclure, le parler de Plaudren se rattache bien aux parlers du Haut-Vannetais. Mais la situation géographique de la commune – à la frontière du pays gallo – permet peut-être d'expliquer l'influence du français sur la syntaxe. Ceci pourrait être approfondi en poursuivant l'enquête sur certains points de grammaire et sur le lexique et aussi en menant des comparaisons avec le parler des communes voisines du canton de Grandchamp."

<sup>350</sup> *Opus citatum*.

P.11: "Enfin, il convient de relativiser fortement le caractère « *SV-dominant* » des parlers même les plus au sud-est : dans les données présentées, la proportion maximale de phrases *SV* atteint à peine les deux tiers. Encore ne s'agit-il que des propositions indépendantes et principales, à la forme affirmative. Si l'observation portait sur l'ensemble des propositions, incluant les subordonnées et les interrogatives, où la construction *VS* est induite par une conjonction ou un pronom, la proportion de structures *SV* serait considérablement réduite. Et représenterait la minorité, probablement jusque dans le parler d'Arradon."




#### 4.2. Hag a-dostoc'h, gwirionez a gavoc'h?


A-balamour m'hon eus klewet (FAVEREAU 1997&CURRIE 2000) e vez implijet a-wechoù ur stumm-displeg hebkén ewid verboù so kenkouls evel gourioù disheñvel (*dic'hour* hag all; gweled *supra*), ne teu ked deomp trawalc'h selled douzh urz ar gerioù *a-bell* hebkén.

Dond da selled *a-dostoc'h*, evel ma vèmp o konto lies gwech, eo dielfennañ frassennoù a-stummoù herwez verboù ha gourioù ha daoust ma vez tu-gouzañv iwe.

##### 4.2.1. Rener dirag ar verb




Grafik 3 dregantad ar gourioù




Grafik 4 dregantad an tipoù rener

Diforc'h a c'hellfe bezañ e-mesk ar c'horpussoù dre goms a vefe a-balamour da *rummadoù-*kaos disheñvel: *E.S.1* a gont ennañ e *vecher tonellour-karrouer*, *E.S.2* ar barres Berne kentoc'h ha

*Mari*. a gont ennañ he *buhez*; sed a c'hellfe chañch an implij gourioù disheñvel. Med daoust da gement-se ne welomp ked kement a ziforc'h etre an tri c'horpus: an trived gourioù a vez lâret ur bern ha dindan ar stummoù *raganw* dreist-oll<sup>351</sup>.



Grafik 5 dregantad ar gourioù




Grafik 6 dregantad an tipoù rener


E-barzh ar c'horpussoù kontadennoù eo e kavomp muioc'h a frasennoù en trived gour unander dreist-oll p'ema ar c'hontadennoù o konto deus darvoudoù ar re all lies awalc'h, pa vez ar gourioù all e vefent deus an *divis dieeun*. Un dra all hag a vez lakaet war wel eo implij muioc'h deus ar stumm *S anw boutin* gant Gwilham ar Borgn: martese a-balamour eh eus muioc'h a dudenoù gant *G.B.* (seul vuioù h m'ema diwar dastumad *sorc'hennoù* kontet gant tud disheñvel, sañset; tre ma n'eus ked med

<sup>351</sup> *Heñv, hi, hennzh, honnezh, hè, ar re-se* hag all.

peder zudenn bennañ (*an tad, Jesus, ar Sant-Pier hag an Ankoù-tad-pàeron*) gant *E.S.3* hag un dudenn bennañ (*Ewan Pier ar C'horr*) pe e dud-ness gant *L.B.*



Grafik 7 dregantad ar gourioù



Grafik 8 dregantad an tipoù rener

Pand vënt kaos deus ar skrid kentoc’h, e c’hellomp goùd perag e vez implijet kement a frasenoù e stumm an trived gour unander. Ha fed ag a vez diforc’h pa vez dregantad an tipoù rener etre daou skriwagner eo martese – hag adarre – a-balamour ma n’ema ked ar memes doare dehe an eil hag an all ewid *brodiñ* kontadennoù: n’eus ked liamm ebed etre kontadennoù-*farsoù* Bleu Benal, seul taol (beb sizhun, e gwirionez) e vez gwelet ur fars newez gant tudennoù newez, setu ma vefe a-gaos da berag e vez gwelet muioc’h a frasenoù e stumm *S anw boutin*; tre ma vez kontadennoù-*farsoù* Job Jaffre é kenderc’hel a-istor da istor evel ma welomp meur a wech e fin e istor “*ni welo kement-se ar sizhun-ma ‘za...*”.

Pa vez kaos deus *ar gwenedeg*, a lârer, é lakaad rener ar frasennoù dirag ar verb *ataw* e vefe ar brud é tond deus ar fed ma vez lakaet *ar raganwoù* (heñv, hi, hè hag all) e penn kentañ ar frasenn evel-se, ar pezh a vez dibaod a wech er *C'hLT* evel ma lâre F. Vallée (1926: p.26), sañset.

Hag a-zivoud an diforc'h etre ar c'horpussou disheñvel – pa so un nebeud – eo kentoc'h e-keñver an tipou-divis disheñvel. Da lâred eo e-barzh un istor (pe ur pennad-kaos) lec'h ma ne chañch ked ar sujed ne vo ked med ar memes tudennoù bepred, setu ma kavomp lod-kàer a frasennoù e stumm *S raganw*. Koulskoude e-barzh ar c'hontadennoù pe divisou diwar lies a sujedoù (muioc'h e-barzh skridoù pa c'hellomp konto deus ur bern tud memestra... pa n'omp ked é konto med deus ar vuhez deomp-ni, diaes eo lakaad tud all kenewid tud-ness deomp), chañch a ra kalon an istor seul gwech, setu ma c'hellomp lakaad muioc'h a dudenoù, hag a vo lâret e stumm *S anw boutin*, lies-mad.

#### 4.2.2. *Tu-gouzañv ha VI gant an amser-dremenet-amstrizh (passé composé pe présent parfait)*

Lâret e vez *ataw* e vez lâret ur bern frasennoù en tu-gouzañv e brezhoneg. Gwir eo kement-se evel ma kavemp deja er levr-yezhadur savet gant G. Rostren<sup>352</sup>, moarvad a-benn ewid bezañ sklàer gant ar frasenn eo pa vez kavet muioc'h a frasennoù en tu-gouzañv:

(p.148) “*Rémarquez que quand il y a un nominatif substantif de la troisième personne, on peut, & on doit changer l'actif en passif... Exemp. Douë a so caret gad ar guir Gristényen: Les véritables Chrétiens aiment Dieu ; idè , Dieu est aimé des véritables Chrétiens. J'ai dit , on peut , & on doit changer l'actif en passif , parce que si après un nominatif substantif de la troisième personne, on conjugue le verbe suivant par la première , ou par la cinquième conjugaison , le sens sera ambigu... Exemp. Douë a gar ar guir Gristényen : caret a ra ar guir Gristényen Douë ; dans ces deux phrases , dont l'une est de la première , & l'autre de la cinquième conjugaison , on peut dire que c'est Dieu qui aime les véritables Chrétiens , de même que ce sont les véritables Chrétiens qui aiment Dieu ; c'est pourquoi il faut changer en semblables occasions , l'actif en passif.*”

Daoust ha pegement a frasennoù en tu-gouzañv e vez kavet? Na bezañ ma vez lâret kaosioù é konto penaos e brezhoneg e vez implijet ur bochad frasennoù en tu-gouzañv, divad pe gosig netra ebed war an dachenn *skiantel* pe *kañtitivel* ‘mit-hu.


Pa gavomp ar stumm *VI* e skridoù *KLT* e vefe sañset deus an amser-dremenet-amstrizh ma welomp an anw-gwann-verb é vout kevrenet gant ar verb *kaoud*, pe deus ar verboù kreñv (FAVEREAU 1997: 317-320) petramant ar stumm *ema*. Evel m'hon eus gwelet e vez kavet stummoù disheñvel douzh an tri implij, dreist-oll dre goms, é komañs gant *ha* pe netra lies awalc'h iwe e-barzh parlañchoù deus ar Vro-Pourlet pe er *Leinioù* (evel ma vënt ur bochad e Margenag iwe; PIPEC 2017).

<sup>352</sup> Rostrenen, Grégoire de, et Loeiz Moulleg. *La grammaire bretonne de Grégoire de Rostrenen: avec une introduction, des notes, et un index des mots bretons mentionnés dans l'ouvrage*. Embann. al Lanv, 2008.

tu-gouzañv	E.S.1	E.S.2	Mari.	E.S.3	L.B.	G.B.	B.B.	J.J.
<i>XVS+Pred V</i>	27,59% (diwar 29)	8% (diwar 25)	15,38% (diwar 65)	2,94% (diwar 34)	14,77% (diwar 88)	22,78% (diwar 79)	17,97% (diwar 128)	18,64% (diwar 118)
<i>OVS</i>	61,11% (diwar 18)	31,25% (diwar 16)	30% (diwar 40)	25% (diwar 16)	0% (diwar 33)	6,9% (diwar 29)	20,51% (diwar 39)	21,88% (diwar 32)
<i>VI</i>	16,67% (diwar 36)	0% (diwar 11)	38,83% (diwar 103)	5% (diwar 20)	3,23% (diwar 31)	4% (diwar 25)	0% (diwar 29)	3,33% (diwar 30)

Taolenn 16 dregantad ar frasennoù en tu-gouzañv

War a seblant n'eus ked reolenn ebed, nemed pa vefe *reolieg* an implij tu-gouzañv gant an daou skriwagner ha dre goms (beteg *E.S.3* neuse) e vez stankoc'h an implij tu-gouzañv pa vez frasennoù en *OVS*. O vezañ ma n'eus ked enklask kañtitativel ebed en amser-mañ e vo red deomp unan bennak a ray da gomparrisañ e dammoù frasennoù KLT gant ar pezh so bet dispaket ganiñ.



Grafik 9 V1 (orañjes) hag amser-dremenet-amstrizh (glas)

Splann e welomp amañ ar liamm etre dregantad ar frasennoù e stumm *VI* hag stankted an implij frasennoù en amser-dremenet-amstrizh gant an anw-gwann-verb er penn-kentañ. Seul vuioc'h ma vez implijet frasennoù e stumm *VI* seul nebeutoc'h a frasennoù en amser-dremenet-amstrizh en o mesk (er c'homsoù ataw). Ar c'hontrel eo ken gwir all pe stankoc'h dre *skrid*: seul vui ma oar nen skriwañ e teufe dehe da implij nebeutoc'h a frasennoù e stumm *VI* hag ouzhpenn kement-se, ar lodenn vrasañ aneche a so deus ar frasennoù en amser-dremenet-amstrizh: da lâred eo tostoc'h d'ar *C'hLT*.

#### 4.2.3. *Stumm-nac'h*

Pa vez nebeud a frasennoù stumm-nac'h, e kredañ e c'hellfemp selled a-dostoc'h douzhte, en ur ziskouez skwerioù ressiss anehe.

- *E.S.1*

N'eus ked med frasennoù e stumm *ne V*.

- *E.S.2*

81,25% a so *ne V*. E-mesk an deir frasenn e stumm *(X) S ne V*, diw a so pe gant rener anw boutin<sup>353</sup> pe gant rener anw divoutin<sup>354</sup> hag ur frasenn hebkén gant rener raganw<sup>355</sup>.

- *Mari*.

76,62% a so *ne V*. Hag e-mesk ar frasennoù e *S ne V*, an darn hanterenn eo gant rener raganw. Ar raganwoù a so gante eo *me* (62,5%), *hennzh*, *honnezh* hag *an arall* (ur wech hebkén da beb-unan).

- *E.S.3*

Ur frasenn gant rener raganw hebkén: *me*.

- *L.B.*

Trizeg frasenn diwar 85 a so e stumm *(X) S ne V*: en o mesk so 4 frasenn gant ar *polarité négative*<sup>356</sup>, ha diw frasenn anehe gant rener *raganw*<sup>357</sup>. 7 frasenn diwar 13(*(X) S ne V*) a so gant rener anw-boutin pe divoutin.

- *G.B.*

Deg frasenn diwar 14 (*(X) S ne V*) a so gant rener anw boutin pe divoutin ha 4 anehe a so gant ar *polarité négative* adarre.

- *B.B.*

Ur frasenn hebkén diwar trizeg frasenn (*(X) S ne V*) a so gant rener raganw<sup>358</sup>.

---

<sup>353</sup> “D’an amser-se an dud n’ae ked d’ar foarioù.”

<sup>354</sup> “Denekaos, Berne n’eo ked pell douzh diw gêr êl-se kwa.”

<sup>355</sup> “An hani ‘deus ked med diw vuoc’h, c’houne ked kals a argant.”

<sup>356</sup> “Atav heni 'n doa ket an aer da dostaat, ha pad eo.”

<sup>357</sup> “Ha! Hama Bijou, bremañ, al livenn-gein-mañ, honnañ 'grevay ket a-benn Bijou!”; “Met me re-me n'int ket fall ivez.”

<sup>358</sup> “Met ar re 'rall n'o deus ket eñ gortozet.”

- *J.J.*

Diw frasenn diwar c’hwezeg ((*X*) *S ne V*) a so gant rener raganw<sup>359</sup>: an diw frasenn a so just-mad ewid lakaad ar rener war wel (*me a ouie gober med c’hwi n’ho peus ked gouiet; daoust da gement-se ne vire ked...*).

Evel ma vez lâret, pa vez frasennoù stumm-nac’h, *ne c’hellomp ked* lakaad med rener dirag ar rannig-nac’h pa vez rener anw boutin pe divoutin da lâred eo un dra newez-deut e-barzh an divis *sañset*. Pe pa vez un digouez *ispissial* a ra deomp lakaad ar rener e penn-kentañ ar frasenn: med kement-mañ iwe ne gavomp ked kén-med *raganwoù so* evel *me, hennezh, honnezh hag an arall*.

An dielfenn frasennoù stumm-nac’h amañ a lâr ar c’hontrel douzh ar pezh a vez lâret alies awalc’h gant yezhourien ar skol *yezhadur reizh*. Gwech en ur lâred deja ne vez ked implijet kals *S ne V* gant *Gwenedourien* a gredent e vefe kavet ur bern frasennoù rener dirag ar verb (pe ar rannig-nac’h) en ur lâred leveson ar galleg war *ar gwenedeg* e-keñver urz ar gerioù med evel ma vez lâret liès-mad iwe (Ledunois 2004<sup>360</sup>; Pipec 2017: P.11<sup>361</sup>), ne c’hellomp ked soñjal e-barzh ar leveson é tond deus ar galleg, mar ve leveson é tond deus ar galleg hor befe kavet kement a frasennoù e stumm *S ne V* iwe pa ne vez kavet med ur lodenn vihan deus ar frasennoù stumm-nac’h hag iwe en ur lâred ar c’hontrel d’ar pezh so bet lâret gant F. Vallée (1926: p.26) é lâred penaos e gwenedeg – hag a so *gallakaet* e-keñver urz ar gerioù, a lâre-heñv – e vez lakaet *heñv, hi, hè* e penn-kentañ ar frasenn, gwir eo e vez lakaet liès awalc’h, med ne gavomp ked anehe pa vez stumm-nac’h; gwech en ur weled e-keñver *ar c’hentañ dra pa vez kroget gant ur frasenn*, ma ne vez ked kavet frasennoù e stumm *S ne V* med gant rener boutin pe divoutin (neuse traoù hag a c’hello bezañ lâret gant raganwoù war-lerc’h) e sinifife e brezhoneg e kavomp gwelloc’h lakaad un dra newez-deut petramant ewid sklæerder ar frasennoù (pa vez *un den* – da lâred eo *un anw divoutin* – hebkén, peogwir ne gavfemp ked anwoù-lec’h gant raganw war-lerc’h pikol...). Disklêrio a ra an disoc’h-mañ penaos reolennoù savet e-barzh levrou-yezhadur ne gouchont ked ur wech adarre gant ar pezh a vez gwraet e gwirionez gant an dud, gant skriwagnerien-bobl sokén.

---

<sup>359</sup> “Hwi n’ho p’es ket gouiet her magein!”; “Kement-sé ne virè ket dohton a vout lorhus, nag a geijein meur a gir latin doh é barland.”

<sup>360</sup> Ledunois, Jean-Pierre. ‘Grammaire et Dialectologie’. *La Bretagne Linguistique*, no. 13, 2004. P.146:

“Reste à savoir pourquoi la conjugaison nominale domine en vannetais. Il est généralement admis que la cause est à rechercher dans l’influence du français. Seulement, l’influence d’une langue sur une autre se mesure d’abord et avant tout sur le vocabulaire. Le système grammatical est beaucoup moins perméable aux pressions extérieures. Il évolue, lentement, sous l’effet de sa dynamique propre. L’alignement relatif de la conjugaison du vannetais sur celle du français, par exemple, peut être dû à des causes intrinsèques, à une affinité de cette variété de breton pour l’expression de la personne sous forme nominale plutôt que verbale. [...]”

<sup>361</sup> *Opus citatum*.

“Pourquoi alors cette région utilise-t-elle aussi abondamment la structure SV ? Il est difficile de répondre à cette question, mais l’influence du français ne doit pas être prise pour évidente. S’il est clair que le français est la source du phénomène chez les jeunes bretonnants d’aujourd’hui, bilingues consécutifs à prédominance francophone (Kennard 2014), on voit mal comment les brittophones monolingues d’autrefois auraient pu être ainsi influencés par une langue qu’ils ignoraient. Il pourrait donc s’agir d’une simple évolution interne, liée à la combinatoire syntaxique. Que le sud-est se démarque si nettement de l’usage central pourrait s’expliquer tout simplement par la périphéricité de la région.”

#### 4.2.4. Islavarennoù

En ur selled a-bell hon eus kavet: seul vuioç'h ma oar nen skriwañ seul vuioç'h a stummoù a vez implijet, tamallet (KERVELLA 1947) pe ne raent ked van ebed (TREPOS 1996) e-barzh levrou-yezhadur deus ar skol *yezhadur reizh*. Petramant e-barzh ar c'horpussou dre *goms* hon eus kavet tre 23%~43% a frasennoù e stumm ... *S V*, tu so deomp selled pizh douzh an dra-se.

Ur soñj a deu diñ da zielfennañ islavarennoù en ur selled douzh ar verboù hag ar gourioù, gant pessort verboù int bet techet da implij ar stumm ... *S V* pe ... *V*.

- Korpussou dre *goms* (*E.S.1*, *E.S.2*, *Mari.*, *E.S.3*)

Ar stumm ... *V* eo a vez kavet muioc'h ewid ar stummoù all hag a vënt implijet gant ar verboù *boud* pe *kaoud* dreist-oll. Pa vez kaos deus ar stumm ... *S V*, 'meus remarket pa vez verboù transitivel e vez gwraet gant ar stumm-mañ – na bezañ ma welomp ur bern frasennoù gant ar verb *boud* ur sort pa vez ar stumm-se... – da skwer ar verb *lakaad*, *gweled*, *stardiñ*, *gober* (ewid *E.S.1*); *kass*, *kosteziñ*, *digor* (ewid *Mari.*). Ar verb *kaoud* a vez kavet dindan stumm ... *V* kentoc'h, med pa soñjomp orin ar verb-mañ (*em* + *boud*, 'mit-hu)... e kredfemp lâred e vefe implijet muioc'h a frasennoù e stumm ... *S V* pa vez verboù transitivel dreist-oll. Koulskoude n'eo ked ur reolenn *strizh*: ar verb *boud* kavet en o mesk a so dindan ar stumm *vese* d'ar muiañ, hag ema red soñjal iwe e vez implijet ar stumm *vese* muioc'h ken ewid lâred *oa* e-barzh ar vro-se ewid nompas faziañ<sup>362</sup>.

Diwarbenn an implij stumm ... *S V* gant rener raganw so traoù da lâred: e-barzh ar c'horpussou *E.S.1* ha *Mari.* dreist-oll e kavomp ... *S V* gant rener raganw *c'hwi* (*E.S.1*) ha *hè* (*Mari.*). N'o deus ked talvoudegezh evel an *eilved gour* pe an *trived gour liester* med e vënt implij evel *dic'hour* e gwirionez. Amañ e c'hellfemp kompren gant *termenadur ar stumm SVO* e-barzh levr-yezhadur L. Cheveau (2017):

(p.303): “*On peut utiliser l'ordre: complément circonstancie l– sujet – verbe... quand on n'insiste pas sur le complément circonstanciel . Er vouc'h, Yann en deus gwelet e vestr-skol [...] (quand on insiste que c'est dans le bourg et pas ailleurs, on dira alors: er vouc'h en deus gwelet Yann e vestr-skol [...]) Cependant, il est rare qu'on utilise ces structures d'insistance quand le sujet est un nom ou un groupe nominal: on le fait surtout quand le sujet est inclus dans le verbe (et donc qu'il est déjà connu car déjà mentionné auparavant dans la conversation ou le texte.*”


Mar ve un dalvoudegezh evel an *eilved gour* pe an *trived gour liester* e vefe bet implijet ar c'hconjugaison peronnelle? N'omp ked ewid goùd a-benn bremañ...

<sup>362</sup> Peogwir e vez distaget *oa* ha *vez* er memes doare (med pas e Berne, gweled *supra*) ewid *lakaad* kemm splann etre an amser-vremañ hag an amser-dremenet, e Langoned e vez implijet ar memes doare, a lâar J.-Y. Plourin en un abadenn radio: fed a implij stank ar stumm-boas pa vez verboù *boutin* (evel *gweled*; ar mod-se a vez gwraet dreist-oll e-barzh an takad *etre ar C'hLT* hag ar *gwenedeg*: Enes-Groe, ar Vro-Pourlet hag all) da.sk. *gwel' a resen ma mestres ba ma bro Morbihan; tost' a resen douzh ma bro, echu oa ma c'hoñjer (gavotenn ur soudard a Langoned pe e parres Langoned komposet gant Yv le Moal)*, a-balamour ma vez distaget *'raen* (amser-amdremenet) ha *'rehan* (doare-divisoud) er memes fesson...



- Korpussoù dre *skrid*

E-gis ma lâren e kavfemp muioc’h é implij ar stumm ... *S V* pa vez verboù transitivel, e-barzh ar *skridoù* neuse evel mand omp bet é weled e vez implijet muioc’h a stummoù med ... *S V* a gavomp ur bochad ur sort (dreist-oll e-barzh *G.B.*).



Grafik 10 korpussoù dre *skrid*: islavarennoù

Souezh pe souezh: evel mand omp bet é lâred, dre *skrid* iwe e vez ar memes tra, muioc’h e vez kavet verboù intransitel pa vez ... *V* ha muioc’h a verboù transitivel pa vez ... *S V* evel ma vez er c’horpussoù dre goms, na petra ‘ta.

P’hor bez sellet *a-bell* douzh an dielfenn korpussoù ha *G.B.* e oamp souezhet é weled dregantad uhel ar stumm ... *S V* gantañ hag e vefe bet tu soñjal *leveson ar galleg*: koulskoude pa sellomp *a-dostoc’h* en ur glask a-balamour da betra e vez implijet evel-se, setu kavet ar respont, n’eus ked ezomm da gaoseal deus *ar galleg* med kompren a c’hellimp e vese implijet muioc’h a verboù transitivel gant Gwilham ar Borgn dre-se e kavomp muioc’h a frasennoù e stumm ... *S V*.

Med chomet eo da c’hoùd perag e kavomp kement a frasennoù e stumm ... *S V* pa vez verboù transitivel? Ar respont a c’hellimp mond da glask e-barzh levroù-yezhadur so (Rostren 2008: p.148 gweled *supra*; Le Gléau 1973: p.78<sup>363</sup>): pa vez ar rener hag ar renadenn-dra skoaz-ouzh-skoaz ne vez ked gwall-sklàer ar frasenn, setu ma vez implijet an tu-gouzañv da gentañ, med an tu-gouzañv a so kreñv ar poues-semantik war an eksperiañser kasset gant an araogenn *gant* ur sort, setu a-gaos da

<sup>363</sup> *Opus citatum.*

“*L’aisance du style décide à l’intérieur d’un paragraphe du choix du mot initial de chaque phrase. Ce mot initial doit LIER strictement cette phrase à la phrase précédente; ce paragraphe au paragraphe précédent ; plus qu’une règle de grammaire, c’est la logique de l’exposé qui détermine l’ordre des mots : Kounnar a oa e Breizh e 1775 : Difennet e oa bet beziañ en ilizoù... Diaes e kave ar barrezianiz dilezel beziou o zud. Bered a oa koulskoude e Lanber. Met er beredoù ne veze beziou nemet an divroidi. Lanber de L. Lok-Dujardin. 1942 P.29*”

berag e vez implijet ar stumm *SVO* hag a so *neutr* lies awalc’h e-barzh parlantoù a Vro-Gwened, hag evel-se e vefe komprenet sklâerroc’h ar frasennoù-isurzet.

#### 4.2.5. *A-zivoud ar stumm Inf. V*

Nebeutoc’h e vez implijet ar stumm *Inf. V* e *gwenedeg* ewid na vez e parlañchoù *KLT*. :  
muioç’h a boues a so e *gwenedeg* pa vez ar stumm *Inf. V*. Evel ma welomp gant ar skritell savet gant P.-Y. Kersulec ha T. Sollicec (2012) e vez implijoù disheñvel ar stumm *Inf. V*.

Fed na vez ked implijet kals ar stumm-se dre goms eo martese a-balamour ma ne zalc’hont ked deus ar stumm-se peogwir n’o doa ked gouiet skriwañ e brezhoneg james. Evel-se pand omp é kaved muioç’h a frasennoù e stumm *Inf. V* gant tud ha ‘noa skriwañ ha lenn brezhoneg (e-mesk ar c’horpussoù deomp ataw!), deut eo anatoc’h gant kement-se pa sellomp gant pessort verboù e vez gwraet frasennoù e stumm *Inf. V*.

E-barzh ar studi Kersulec&Sollicec (2012) e lârer e vez implijet ar stumm *Inf. V* pa vez distag *bolontez ur c’homser* douzh ar *fed*<sup>364</sup>: *amser*<sup>365</sup> hag *a-fed ar santadur-korf*<sup>366</sup> pe pa ne vez ked *reoliet* un *aksion* gant un den é ober<sup>367</sup>. Ha diwar gement-se e c’hellomp musuliañ daoust hag e kouch an implij stumm *Inf. V* gant ar reolennoù-se.

	an implij stumm <i>Inf. V</i>
<i>Mari.</i>	Ne gavomp ked med ur frasenn: <i>vern a ra...</i> un droienn skornet.
<i>L.B.</i>	An oll verboù implijet a glot gant ar reolennoù.
<i>G.B.</i>	Ur frasenn hebkén (diwar 17) a so amsklâer diwar ar reolennoù <sup>368</sup> .
<i>B.B.</i>	c’hweç’h frasenn (diwar 24) a so amsklâer diwar ar reolennoù <sup>369</sup>
<i>J.J.</i>	teir frasenn (diwar 13) a so amsklâer diwar ar reolennoù <sup>370</sup>

Taolenn 17 an implij stumm *Inf. V*

An oll (a-nes *Mari.*) a so bet implijet gante an droienn “*goûd a rañ; gouied a rañ; goûd awalc’h ‘ret...*”, moarvad ema ur stumm a vez kavet stank er vro-se e-tal ar stumm “*me ouia, c’hwi wela*”.

<sup>364</sup> Kersulec, Pierre-Yves. et Sollicec, Tanguy. *Opus citatum*. 2012. “kou’iñ e ra glav, a-blaen hiriv, - Kerfourn”

<sup>365</sup> *Ibidem*. “Teurel e ra glau –Groix-”

<sup>366</sup> *Ibidem*. “beurlitiñ e ra men daoulagad, -pluméliau-”; “breiniñ e ra e vrec’h, -Baud-”

<sup>367</sup> *Ibidem*. “mervel e ray ar verç’h-mañ.”

<sup>368</sup> “ha lampein e hrant a ol hou nerh de gavet er Stanguen (*a-oll o nerzh* da lâred eo ema merchet splann o bolontez; martese ema ewid pouesiñ war an *aksion* – pezh a so pal ar stumm *Inf. V* e gwirionez – ?)”

<sup>369</sup> “daousto d’an diazamanant-se, kemer a ra Gregoer bep blez an aotre da jiboes”; “en em welet a ra den yaouank, a pa yae bep Sul get tri pe pevar c’hensort da vale àr e “velo” (gallekadur *en em weled* ouzhpenn); “digor a raont an nor, an dousikañ ma c’hellont, daousto d’an houarnaj chourikal diharak ‘barzh an noz (*digor* a c’hell boud implijet evel *digor a ra an nor...*)”; “he anav a ra erhat”; “ha paeiñ a ra get jourdoul an taos ranket (martese ewid pouesiñ war *paeiñ* amañ...); “anavout a ran ur beleg, person en ur barrezig, kreizig er-walc’h Bro-Gwened (an droienn *m’anava* a vez klewet stankoc’h er vro-se)”

<sup>370</sup> “kas e hrè dehon un toupinad soubenn (tu-gouzañv a vefe bet gwelloc’h); “kemér e hras Choch èl paotr de servij (tu-gouzañv a vefe bet gwelloc’h iwe); “chomek e hra unan (*unan a chom* a gavañ gwelloc’h)”. ”

Ar frasennoù ha n'int ked douzh ar reolennoù (KERSULEC&SOLLIEC 2012) a vefe *reizh* er mod *KLT*: martese e oa an daou skrwagner o vezañ levesonet gant skridoù *KLT*?

An daou verb a vez implijet ar peb stankañ eo *mond* ha *gouied*: *gouied* a-gaos ma vez ur stumm *skornet* med a-zivoud ar verb *moned* petra a c'hellomp lâred? An darn vrassañ aneche a so stag douzh talvoudegezhioù disheñvel ar verb *moned* (pas ar *fichal* neuse): an droienn evel “*mond a ramp koustele pe n'amp ked?*” ne c'hellfemp ked lâred en ur fesson all, ha lies awalc'h vënt kavet doujet d'ar reolennoù meneget a-raog.

#### 4.2.6. *Klosiñ ar pennad-mañ*

Dielfennet hon eus frasennoù diwar ar c'horpussou dre goms kenklous evel dre skrid é tond deus ar Vro-Pourlet. A-benn eno so bet disklêriet deja penaos ar stumm muiañ implijet n'eo ked ar stumm *rener dirag ar verb* n'eo ked med ur 25%~40% bennak. Hag er c'homsou dreist-oll e vez kavet ar stumm *VI* stankoc'h ewid dre skrid (dre-se ne vez ked gwelet e-barzh levrou-yezhadur?) ha seul vuioc'h e vez kavet ar stumm *diverb* e-barzh *skridoù*. Setu evel-se e kavomp an disoc'hoù *o-hunan* koulskoude pa vez sellet gant selloù disheñvel en ur soñjal e-barzh *anien ar pennad-kaos* pe *anien ar skrid* e teufe deomp kompren iwe a-balamour da betra e vez implijet ar stummoù-mañ- 'r stummoù gante: e gwirionez netra ne ve *dre zigouez*, prederi a reont douzh *sklâerded an divis* ataw.

Traoù newez awalc'h a so bet dispaket iwe: er penn-kentañ ar fed ma vez implijet vuioc'h a frasennoù en *amser-amdremenet* e stumm *VI* (un nebeud a so) tre ma ne vënt ked kavet ur bochad e-barzh ar c'horpussou *dre goms* koulskoude gante eo e kavomp ar muiañ a frasennoù e stumm *VI*; hag a-fed ar verboù intransitivel pe transitivel pa vez islavarennoù, verboù intransitivel eo a vez implijet dindan ar stumm ... *V* ha verboù transitivel pa vez stumm ... *S V*, moarvad eo a-balamour *sklâerded an divis* bepred evel so gwelet e-barzh meur a levr-yezhadur *er-maes deus levrou-yezhadur ar skol yezhadur reizh*. D'ar poent-se e vese implijet ar stumm ... *S V* pe stummoù disheñvel douzh ar stumm ... *V* (setu ar stumm hebkén a vese degemeret gant ar skol yezhadur reizh), gant skriwagnerien *KLT* iwe 'mit-hu.

Seul vuioc'h ma oar nen skriwañ ha lenn ar yezh seul liessoc'h a *zoareoù* da vond warni a chom: gwir eo pa sellomp douzh ar stumm *Inf. V* hag islavarennoù. Daoust ma vënt er memes doare da vond war ar yezh, gant an heni a ouie skriwañ eo e welomp liessoc'h a stummoù. Koulskoude gant an dud desketañ eo e c'hellfemp kaved vuioc'h a draoù *disheñvel* douzh ar mod ma ra ar bobl gantañ, nemed pa vefe *nebeud*, evel ma lârer n'eus ked gwall-ziforc'h etre *koms* ha *skrid*.

## 5. Skriw e gwenedeg-skol?: urz ar gerioù e skridoù ar vrezhonegrien ag ar *midad newez*

GWRAET so bet kaosioù diàrbenn urz ar gerioù diàr brezhoneg *lâret* ha *skriwet* ged tud (*a-bobl* an darn vrasañ anehe e gwirionez!) hag a oa bet ganet e-raog Eil Bresel ar Bed (deus fin an 19<sup>ved</sup> kantved betag ar blezadòù 30). Ha lâret hon eus a-neuse *n'eus ked kals a ziforc'h* etre *koms* ha *skrid* nemed *techoù* a denn d'ar stil (ar c'hontrast etre ar stumm *VI* hag ar stumm *diverb*; petramantig implij ag ar stumm *Inf. V* hag a so stankoc'h dre *skrid*, êl ma kavamp pa yamp daved stummoù-islavarenn dishañval ged ar *skridoù*, kentoc'h eid a-barzh *komsoù*) pe da anienoù dishañval ar skrid pe ar posioù (dregantad ihuelikoc'h ar stumm *SVO* pa vez *kontadennoù-omnibus*), a sella neuse douzh *techoù* (... *S V*, ... *Pred V* pa vez islavarennoù dreist-oll) a gavamp a-barzh skridoù savet e *KLT* ged skriwagnerion-bobl (gweled *supra*): fed ag urz ar gerioù, pe skriwagnerion(-*bobl*) ag an diw Vro, pe komserion ag an diw Vro (a Verne betag ar Poher a-wael), n'eus ked kavet diforc'h ebed kenewid dregantad ar stumm *Inf. V* med red eo lâred ema *strizh* reonlennoù-implij ar stumm-mañ e gwenedeg (gweled *supra*; KERSULEC&SOLLIEC 2012) hag a vez *bew* pa vez *skridoù* hembkén.

Daet soñj diñ neuse selled douzh brezhoneg (pe *gwenedeg-isel*) ar rummadoù àr-lerc'h e- (1950~) e-keñver urz ar gerioù: ar rummad hag a oa é vewo an *troc'h* hag a vese é vewo e brezhoneg ervad *dre goms* hembkén ar lod muiañ anehe, pe ar rummad a zalc'he *gout* brezhoneg o zud-kozh, dessavet e galleg ervad, skoliataet e galleg penn-dre-benn betag ar lissel hag ihuelloc'h betag ar skol-veur meur a wezh. Ha pa vënt lakaet da skriw en o *farlant* pe en o *yezh a-vihan*, ged sikour ar c'hentelioù àr ar brezhoneg lakaet tammigoù a-barzh skolajoù, lisseoù hag a-barzh an diw skol-veur vreton (a-barzh kani Roazon eo e kavamp muioc'h a *wenedourion*...). Soñj ar lodenn-mañ eo musuliñ urz ar gerioù diàr o skridoù gwenedeg *sañset*, hag o c'hompariñ ged ar pezh so bet diskouezet geniñ a-barzh ar lodenn gent: diforc'h a vo kavet? ha techet int da skriw êl hor skriwagnerion-bobl-ni? (da lâred eo Bleu Benal ha Job Jaffre...); pa ne vez ked neuse penaos e skriwant? ha hañvalig douzh petra?

### 5.1. *Korpussoù choaset*

**E**-RAOG MONED PELLOC’H ema red lâred penaos e welemp daou rummad dishañval, hag ar midadoù-mañ a sella douzh termenou dishañval pe douzh o liveoù-studi (an eil-derez hag ar live-skol-veur, pelloc’h hag ihuelloc’h) kentoc’h eid o oad. Er penn-ketañ ur midad *krenn*aj ganet just àr-lerc’h ar Bresel diwezañ, hê a-viskoazh bet é klewed kaosal brezhoneg tro-ha-tro dehe e gwirionez nemed pa vese kaoset e galleg douzhte liës awalc’h. Ha lod anehe ‘neus bet boneur da selaou douzh kentelioù àr ar brezhoneg en o skolaj (Gemene, an Oriant) hag en o lisse (an Oriant ha Pondi, dreist-oll eid hor gwenedourion!). Hag ar midad arall, daou skriwagnour ‘meus choaset ha hê desket mad, labourad *e brezhoneg*. Savet gete peb ur levr (a sella douzh *ar lennegezh* kentoc’h...), hag ase e c’hellemp gweled skridoù savet e gwenedeg a-live *ihuel*... med hag e c’hellamp em barraad a weled *KLT-adur* a-barzh o skridoù?

#### 5.1.1. *Dornskridoù ewid kenstrivadeg Ar Falz ag ar blezadoù 50-60*

Dibaod a wezh e kavamp brezhonegerion – ganet just àr-lerc’h ar Bresel diwezañ – é skriw en o *yezh-vamm* a-gaos ma ne oa ked brezhoneg ur lodenn ag o danvezioù-skol, ewid ar lod muiañ anehe. Med ur sort e c’hellamp kaved ur *voestad* skridoù savet gete, a-drugarez d’ar genstrivadeg dalc’het ged Ar Falz diàr skridoù savet ged bugale (pe tud) ag ar *skolioù publik* (a skolioù kentañ-derez betag an *Ecole Normale*). Brezhoneg o *yezh-vamm* c’hoazh, pe a-viskoazh (adal m’emant bet ganet a-barzh *kampagnoù* Breizh-Isel... daousto ma tepant douzh ar familh, douzh ar lec’hioù h.a....) bet é klewed brezhoneg e-mesk ar re nessañ dehe, ha dre-se e ouiant kaosal brezhoneg, hemb gouied lenn ha skriw e brezhoneg ataw. Setu pa vêt lakaet da skriw e brezhoneg, ne c’hellehent ked skriw med êl ma ta dre o beg.

Doned a ra ar c’horpussoù deomp-ni diàr ar *skridoù lâret* neuse, êl ma tiskoueza o dornskridoù hag a goucha-digoucha douzh ar mod ma kaosant getoñ<sup>371</sup>, kenewid traoù hag a vez gwelet ged bugale so, desketoc’h e-keñver an *doareoù-skriw*<sup>372</sup>. Marse e tiskoueza kement-mañ boud mestr àr skriw? skriw *sewenaetoc’h*? Mard eo *skriw sewenaetoc’h* iwe, petra eo skriw êl-mañ e-keñver urz ar gerioù? heuli ar mod *KLT* pe *gwenedeg klassel* petramant skriw êl ma ta dre o beg<sup>373</sup>? pe a-hend-arall skriw en

<sup>371</sup> Blanchard, Nelly. ‘L’utilisation pédagogique des textes du concours Ar Falz’. *La Bretagne linguistique*, vol. 13, 2004, pp. 13–29.

<sup>372</sup> Hañval eo geniñ e vese implijet an doare-skriw *peurunvan gwenedeg* a-barzh ar Lisse Josef Loth e Pondi, hag an doare-skriw *gwenedeg kozh* (tre kani *Dihunamb* ha kani *Skolveurieg gwenedeg*, merhad) a-barzh ar Lisse Dupuy-de-Lôme en Oriant... Mesket so doareoù dishañval (skriw hrewez ar mod da zistilhiñ hag arall) gete razh, ervad.

<sup>373</sup> Red-mad eo gouied, ha soñj a zegassañ deoc’h, penaos n’eus ked pikol diforc’h tre *koms* ha *skriw*. Ken gwir arall eid F. Favereau (2008) pa vez kaos a vBleu Benal hag a Job Jaffre (p.p.488-489; p.493): kàer eo dehe kavoud tammou deskamant, o doa skriwet àr batrom o c’homsoù da getañ, hag ar stumm ankouc’haet (*Inf. V* dreist-oll) ged ar bobl diàr-goust an dizeskamant e-keñver skriw ha lenn e brezhoneg; med pa vehe un tamm *KLT-adur* ged an *usaj* stumm *Inf. V*... Nawazh n’hellamp ked kaved leveson é toned ag ar latin pe a-hend-arall

ur heuli reolioù galleg, petramantig an hent *etre* skriw êl ma ta dre o beg *rimet* ged ar *gwenedeg klassel* hag ar *C'hLT-adur* (êl ma oa an daou skriwagnour so bet dielfennet o skridoù geniñ)? A-dra-sur e tepant douzh o c'helenner (Gildas Bernier an hani eo a oa karget a gentelioù brezhoneg d'an amser-se eid ar Lissel Dupuy-de-Lôme; eid ar skolajoù pe ar lisseoù arall n'hellañ ked kaved). Gwir eo ema skridoù anehe *miloer* o c'helenner pe *miloer* ar skridoù o deus lennet e-keñver ur bochad traoù.

### 5.1.2. *Skriwagnour-skolàer ha skriwagnour-kelenour*

Setu diw oberenn, savet ged daou zen gouestret o buhez d'an deskadurezh, ha n'int ked skriwagnerion a-vecher anehe, êl m'ema oll ar c'horpussou deomp-ni... ne'm eus ked implijet korpus ebed é toned ag ur skriwagnour a-vecher: ur vuhez arall o doa. Hag an daou skriwagnour, desket-mad sur awalc'h ar brezhoneg, dreist-oll ar gwenedeg m'emant staget douztoñ. Nawazh e c'hellamp soñjal e vehe brassoc'h poues ar brezhoneg *standard (-reizh)* ha seul vui ma ne vehe ked brezhoneg o yezh-vamm, nemed desket ar-lerc'h (ged ar re nesañ dehe... med a-viskoazh emant bet é klewed brezhoneg tro-ha-tro dehe merhad). Da lâred eo ema o skiant desket ar brezhoneg é sailhad diàr ho penn e-raog ma ta kuit o skiant perc'hennet ar brezhoneg (ar c'hontrel douzh ar midad ketañ, ar vugale hag a oa brezhoneg o yezh-vamm=skiant perc'hennet, hag o skiant desket ar brezhoneg a oa dister c'hoazh).

- Ar c'hetañ den 'meus sellet douzh e oberenn eo Jean-Claude le Ruyet. E levr *Donaw*<sup>374</sup>, sinet getoñ Iwan Tangi<sup>375</sup>. Ganet er blez 1948 en Oriant, da getañ e oa skolàer publik hag ar-lerc'h skolàer diwezh. Gwraet 'noa studioù ihuel betag an doktorelezh ar brezhoneg sokén. Diaes diñ gouied pessort mod 'noa desket brezhoneg: med merhad ged e familh a Langedieg ha dreist-oll ged Albert ar Bocher (ur Pourlet anehoñ), un tad-gwenedour. Ar levr *Donaw* a oa bet adlennet ged Albert ar Bocher sokén. Ur romant *preder* kentoc'h<sup>376</sup>, istoer un den yaouank hag ur verc'h ha merhad tud tro-ha-tro dehe: ur red-istoer ha ne chañcha ked, ne vehe ked kavet paod-mad a dudennou *sañset*. Penn-ketañ e levr e welamp un hir a *vmonolog*: kavet ar c'hetañ gour dreist-oll, lod anehe en unander, lod arall er liester ken-ha-ken, a-venetañs-kàer e vez implijet ar c'hetañ gour liester? Pa vez kaos ag an Alaman?
- An eilved den eo David ar Gall, kelenour e Skolaj-Lisse Diwan Bro-Gwened. Ganet er blez 1969, e Bubri. N'omp ked sur hag ema brezhoneg o yezh-vamm seul vui ma oa

---

leveson é toned ag ar *yezhadur reizh*, pa vêt levesonet ged ar *C'hLT*, merhad int levesonet ged skridoù a-fez hag a oa e-raog ar Bresel Bras (êl ma hellamp gouied a-barzh skridoù a J.Jaffre – ha D.Doujet 'neus lâret diñ ema gwir –, penaos kemeret 'noa skridoù-farsoù douzh kelaouennoù a-beb-sort: *Kroaz ar Vretoned* pe *Dihunamb* petramant *Feiz ha Breiz* kent sokén h.a.; peogwir e vese kavet farsoù a-barzh ar c'helaouennoù a-sort-se, gwir eo e vewent amser ar *Gwalarn*, med pa soñjamp anien ar gelaouenn (ha R.Hemon a vese é lâred ema red disparti ar lennegezh pobl douzh ar lennegezh ewid an dibab-tud!), diaes kredoud e c'hellent tenno gounid ag ar gelaouenn-se; razh an danvezioù *KLT* a vehe bet amprestet diàr ar lennegezh pobl merhad.

<sup>374</sup> Tangi, Iwan. *Donaw*. Skol Vreizh, 2000.

<sup>375</sup> Favereau, Francis. *Lennegezh ar brezhoneg en XXvet kantvet: 1968-2000*. Skol vreiz, 2020. P.359

<sup>376</sup> *Ibidem*. P.359

dalc’het hengoun ar brezhoneg pelloc’h en tuad-se (Bubri, Kistinid ha Langedig<sup>377</sup>).  
Gwraet ‘noa e studioù àr ar brezhoneg betag ho mestroniezh edan renerezh F.  
Favereau er blezadou 90 hag adal 2009 ema kelenour a-barzh skolaj-lisse Diwan  
Bro-Gwened. Hag e levr, dastum danevelloù *Hent Arkadius*<sup>378</sup>, peb danevell ‘neus un  
istoer-*omnibus*, ha ne gendalc’ha ked anehi an eil d’an arall, hag e trekahe boud kavet  
enne ur bochad tudennoù da lâred eo lod-kàer a frasennoù e stumm *SVO*? Eid gouied  
penn dehe ‘meus choaset peb a zanevell verr eid o dielfenniñ.

N’eo ked chañchet an doare da zielfenniñ frasennoù. Ar memb stummoù a vo arnodet nemed  
pa vehe gwell lakaad ar stumm-nac’h a-gostez peogwir ne oa ked disoc’h *dic’hortos* krenn e-pad hon  
dielfenniñ ketañ. Ha me gava geniñ ne chañchahe ked kals a dra na possupl ma vo dielfennet muioc’h  
a 200 a frasennoù, setu ne vo ked dielfennet med un daou-gant frasenn bennak.

Fed a zielfenniñ ar daou vidad dishañval – rannet hrewez o skiant-prenet àr ar brezhoneg – hag  
o lakaad tal-ha-tal ged an disoc’hoù ‘meus bet er lodenn a-gent a so eid gouied *pessort stummoù  
frasennoù a gava gwell ged ar re desketoc’h àr ar brezhoneg?* Ha petra a ra dehe skriw er-mod-se, da  
betra e tenna? Daoust hag e skriwent (dreist-oll bugale a skolajoù&lisseoù) êl ma ta dre o beg (e  
c’helleemp goùd en ur lakaad tal-ha-tal an disoc’hoù hor bo gete hag an disoc’hoù so bet kavet ged ar  
c’horpussoù dre goms ag ar lodenn ziwezañ...)?

---

<sup>377</sup> Le Pipec, Erwan. *Opus citatum*. 2004. P.67: “*La qualité de la langue varie beaucoup en fonction des régions et de la précocité de l’établissement du français comme langue d’usage. Là où le breton est encore très vivace (Languidic, Bubry), des sexagénaires peuvent fournir un état de langue aussi riche, sinon plus, que celui des nonagénaires de Colpo ou Moréac.*”; Rolland, Pascal. *Atlas linguistique de la région de Pontivy, Morbihan – Côtes d’Armor*. Ar Skol vrezhoneg, 1994. P.10 “*Au nord et à l’ouest [a Bondi] (Cornouaille, Pays Pourlet, Bubry, Quistinic... ) ils [unyezhegerion vrezhoneg] sont en revanche, probablement majoritaires.*” P.11 “*lors des enquêtes [1990-1992] nous avons seulement relevé trois cas d’unilinguisme, à Bubry, Langoëlan et Quistinic.*”


<sup>378</sup> Ar Gall, David. *Hent Arkadius: danevelloù*. Embann. al Liamm, 2009.

## 5.2. Disoc'hoù

Seizh testenn 'meus dielfennet eid ar c'horpussou *dornskridoù* – savet ged bugale a skolajou-lisseou. Meur a wezh e oa berr-berr testennoù so eid dielfenniñ da vad, setu e oan é soñjal e vehe gwel diskouez un disoc'h a-stroll é toned ag oll ar c'horpussou; hag àr-lerc'h dielfenniñ testennoù so dre ar munud. Hag àr-lerc'h neuse e vo moian d'o zolpiñ ged an disoc'hoù arall, gwezh ged an disoc'hoù ag ar c'horpussou-*skirwagnerien*, gwezh arall ged an disoc'hoù hon eus bet en ur zielfenniñ ar c'horpussou ag ar Vro-Pourlet.

### 5.2.1. Disoc'hoù diàr ar c'horpussou “dornskridoù”<sup>379</sup>

Gosig an oll vugale hag a so bet dielfennet o skridoù a so bet ganet er Morbihan (*Berne, Plarnel, Langedig, Bubri, Pluniaw* h.a.<sup>380</sup>), hag a oa é studïal er Lisse Dupuy-de-Lôme en Oriant<sup>381</sup> (dizan *ar memb kelennerien*, a kredañ neuse). Ar memb anien skrid: ar sujedou a oa bet raet ged *Ar Falz* (*darvoud skont, loen kollet, beaj, gouañv yen* h.a.). Na boud m'ema hañval *ragtress* o skridoù e vez kavet traoù dishañval an eil douzh an arall, a-gaos da berag enta?



Grafik 11 Dornskridoù savet ged krennag ag ar Lisse en Oriant

Er penn-ketañ, un disoc'h *pa vez sellet a-bell* diàr razh ar c'horpussou. N'eo ked lakaet àr wel an disoc'h diàr an islavarennoù, a-balamor ma n'eus ked tamm disoc'h ebed *dic'hortos*. Ged un taol-lagad hembkén e welamp e vez implijet ar stumm *rener dirag ar verb* ar peb muiañ (tre 47%) hag ar

<sup>379</sup> Ar c'horpuss: *kenstrivadeg Ar Falz* a vo kavet a-barzh: *Stagadenn II*

<sup>380</sup> Lec'hioù ma oant bet ganet a denna d'ar parresioù hag a vese dalc'het pelloc'h an implij brezhoneg a-barzh an Ilis (ha marse awalc'h a-gaos ma oa dalc'het an dud da gaoseal brezhoneg pelloc'h), Broudig, Fañch. *La Pratique Du Breton: De l'Ancien Régime à Nos Jours*. Presses universitaires de Rennes, 1995. P.126.

<sup>381</sup> Unan hembkén a-barzh ar Lisse Josef Loth e Pondi, ha so bet ganet e Pluniaw: ar skrid savet getoñ eo ar peb fidellañ douzh ar mod da gaosal, ar peb dishañvallañ douzh ar skridoù arall (ken ewid unan arall lennegelloc'h eid ar re arall, *P. er M* a Langedig), hañval eo an dregantad douzh an disoc'h kavet e Margenag (PIPEC 2017), *mikro-variesoñ a so?*; gweled an *Stagadenn II*.



stumm *XVS* (16,27%), ar stumm *VI* é heuli àr e lerc'h. Ha na possupl ma so kaos a *skriw* ne welamp ked kals a frasennoù e stumm *diverb* hag a vez kavet ur bochad ged an daou skriwagnour (J.J&B.B).

LP	E.S 1	E.S 2	Mari	E.S 3	L.B	G.B	B.B	J.J	M.	D. <sup>382</sup>
<b>rener dirag ar verb</b>	38,3%	30%	30,81%	36,42%	36,42%	41,09%	27%	31,81%	32,31%	47,5%
<b>(X)V2</b>	<b>XVS</b>	14,89%	30%	17,09%	12,75%	11,96%	8,22%	15,94%	14,56%	16,27%
	<b>Pred V</b>	5,67%	1,25%	1,12%	10,07%	12,23%	13,42%	16,71%	17,52%	26,56%
	<b>OVS</b>	12,77%	20%	10,64%	10,75%	9,24%	7,94%	10,03%	8,63%	2,97%
	<b>Inf. V</b>	0%	0%	0,28%	0%	2,17%	4,66%	6,68%	3,5%	1,68%
	<b>boud V</b>	0%	2,5%	0,28%	1,34%	2,45%	0,27%	0%	0,27%	5,95%
<b>traoù all</b>	<b>VI</b>	25,53%	13,75%	28,85%	6,71%	8,42%	6,85%	7,46%	8,09%	26,56%
	<b>diverb</b>	2,84%	2,5%	7,84%	6,71%	17,66%	17,53%	15,94%	15,63%	3,27%
<b>ped frasenn</b>	141	80	357	149	368	365	389	371	1002	381

Taolemm 18 an disoc'h diàr an *dornskridoù* pa vez lakaet e-tal an disoc'h diàr ar c'horpussou ag ar Vro-Pourlet

Pa vez lakaet an disoc'h e-tal an disoc'h diàr ar c'horpussou arall e c'hellamp gweled diforc'hiou etrede:

- er penn-ketañ e vez implijet muioc'h a frasennoù e stumm *rener dirag ar verb* ged ar *vugale*<sup>383</sup>;
- dregantad an implij stumm *XVS+Pred V* so hañval-mik douzh ar c'horpussou arall;
- ar stumm *OVS*, nebutoc'h, a denna kentoc'h da gani Margenag;

<sup>382</sup> *Dornskridoù.*

<sup>383</sup> Pa vez implijet ar ger *ar vugale* n'eo ked dre zigouez: ar lisseidi a so bet ganet e-pad pe àr-lerc'h ar Bresel diwezañ ha *tud ag ar c'horpussou arall* oa bet ganet etre an daou vresel pe e-raog ar *Bresel Bras* sokén.

- ar stumm *Inf. V*, na possupl ma ne welamp ked kals ged ar parlantoù, un nebeud so bet implijet gete (ged ar verboù *tarzal, c'hwesiñ, dond, arri, diskouez*<sup>384</sup>);
- implij stumm *boud V* a so hañvalloc'h douzh kani ar c'horpussou dre goms;
- ar frasenoù e stumm *VI*, 33,85% anehe so *anw-gwann-verb + V* (stumm displeget ag ar verb *kaoud*), da lâred eo e vez 66,15% anehe e stumm (*hag e*) *V*, ar pezh a denna da dregantad diàr ar c'horpussou dre goms;
- *hag* ar stumm diverb, na petra 'ta, a so hañval douzh ar c'horpussou dre goms.


Pa vez bodet an eil korpuss ged an arall e welamp anehe é voud tostoc'h douzh ar parlantoù, èl ma oamp é kredoud lâred, kenewid un tech hembkén da implij ar stumm *rener dirag ar verb* muioc'h eid parlantoù ar midad *a-gent* ha *dre skrid* sokén. A-gaos da berag enta? Soñjal a raer ema a-gaos d'ar galleg, nawazh galloud a raer soñjal en ur mod arall pa gomprenamp ar pezh a oa d'an amser-se. Ar skridoù-mañ so bet savet ged Lisseïdi ha so bet ganet er blezadon 1940-1950, ar mod da vewo *a-gerentiaj* a vese bew c'hoazh, o zud é kaosal en galleg douzhte, o zud-kozh en brezhoneg ataw, med ged ar skolioù (dreist-oll, an eil derez) eh eus bet chañchamant: é kuitaad o zi men oant é vewo àr-un-dro ged o zud-kozh, n'eus ked bet moian kén da glewed brezhoneg tro-ha-tro dehe, na boud ma so bet raet kentelioù àr ar brezhoneg<sup>385</sup> dehe e tahe aessoc'h ar stummoù *hag* a oant é klewed e-pad o bugalerezh ged o zud-kozh, med an troc'h so bet (dre goms ataw! Ke biskoazh ne oant ked bet lakaet da zeskiñ skriw e brezhoneg), ar stumm a zahe gete e vehe ar stumm a vez gwraet getoñ d'ar liessañ *hag* a so *hemb poues ebed* àr-un-dro. Setu pa vez kavet kavet ar stumm *rener dirag ar verb*, netra da voud souezhet geti, ha kàer eo klask goùd daoust *hag* ema a-gaos d'ar galleg, ema a-balamor ma oa un doare naturel a vez daet gete.

En ur selled douzh ar c'horpussou, eh eus unan ha so dishañval-mad douzh ar re arall, é voud mand eo *lennegelloc'h* eid ar re arall (pa sellamp douzh an disoc'h diàr skridoù savet ged an daou skriwagnour (J.J.&B.B)). Ur soñj a za diñ lakaad an dregantad diàr skrid *P. er M. a Langedig* e-tal an

<sup>384</sup> An implij *diskouez* hembkén ne goucha ked ged ar *reolioù* (KERSULEC&SOLLIEC 2012): “hou diskoein e hrein d'oh a pe arriüein ér ger” (P.er M. a Langedig), ged ur raganw-renadenn-dra lakaet dirag an anw-verb, pa vez ur raganw-renadenn-dra e vehe implijet muioc'h ar stumm *SOV*, *O* é voud ur raganw-renadenn-dra.

<sup>385</sup> Kentelioù diàrbenn ar lennegezh vrezhoneg, sañset, èl ma lâra Loeiz er Braz en e lizher kasset da F. Favereau (?) e 1995 (FAVEREAU 2020, P.361) “*Mon initiation à l'écriture date des années 57-58-59. J'avais pris l'option 'breton' pour l'oral du BEPC sous la direction d'un frère des Ecoles chrétiennes, Corentin Riou, à l'Ecole de la Clarté à Baud. Nous avons des textes de Loeiz Herrieù, Calloc'h, Le Joubioux, Heno, etc. Plus tard j'ai lu des ouvrages en KLT et connu un nouveau vocabulaire. [...]*”

dregantad a-stroll (hemb skrid *P. er M. a-barzh*), hag ar c'horpussoù arall iwe.



Skeudenn 12 komparêson etrede

Ar pezh a welamp a-getañ eo an diforc'h krenn diàr an implij stumm *rener dirag ar verb*: ged *P. er M.* ne vez ked implijet med ur 25 dregant bennak tre ma vez muioc'h eid 50% ged ar vugale arall. An eilved tra a za àr hor spered eo ar stumm *XVS* é voud implijet ar peb muiañ, kement ma vez ar stummoù *Pred V* ha *OVS* é heuli. Ar stumm *VI* eo a vez implijet ar muiañ àr-lerc'h ar stumm *rener dirag ar verb*, a pa sellet douzhte a-dost e kavamp *an hanterenn anehe* (10 frasenn diàr 20 frasenn, ger-ha-ger!) é voud implijet èl *anw-gwann-verb + V (kaoud)*.

LP	P. er M.	L.B	G.B	B.B	J.J	
rener dirag ar verb	23,85%	36,42%	41,09%	27%	31,81%	
(X)V2	XVS	24,77%	11,96%	8,22%	15,94%	14,56%
	Pred V	10,09%	12,23%	13,42%	16,71%	17,52%
	OVS	10,09%	9,24%	7,94%	10,03%	8,63%
	Inf. V	1,83%	2,17%	4,66%	6,68%	3,5%
	boud V	3,67%	2,45%	0,27%	0%	0,27%
traoù all	VI	18,35% (9,17 <sup>386</sup> ...%)	8,42%	6,85%	7,46%	8,09%

<sup>386</sup> *Anw-gwann-verb + V.*

	<b>diverb</b>	5,50%	17,66%	17,53%	15,94%	15,63%
	<b>ped frasenn</b>	109	368	365	389	371

Taolenn 19 Lakaad skrid *P. er M.* e-tal ar c'horpussou-skrid

En ur lakaad anehoñ e-tal ar c'horpussou-skrid e welamp traoù hañvalig an eil douzh an arall. Nawazh, n'hellamp ked lâred iwe e koucha douzh ur poltred hembkén, an dregantadoù lakaet àr wel ged ar liw melen e welamp diârne ema hañval skrid *P. er M.* douzh kani Loeiz Bevan (*tre koms ha skrid*) kenklous êl skridoù Bleu Benal ha Job Jaffre. A pa ne vez ked implijet kals a frasennou e stumm *diverb* e sinifi e chom un tech ag ar goms ged *P. er M.* êl ma vez ged e gamaraded (5,50% ha 6,25%), n'hellamp ked degass da dabutal diâr-boues anien ar skrid peogwir e oa hañvalig-hañval ar sujedoù.

Ur voestad frasennou e stummoù *XVS* e keñver ar c'horpussou-skrid arall a so ur perzh dibar iwe êl fed a implij nebeutoc'h a frasennou e stumm *rener dirag ar verb*. Pa ne goucha ked d'ar c'horpussou arall ervad, n'hellamp ked en em barraad a selled douzh levesonioù arall: KLT.

	brezhoneg lennegel deus ar bobl	parlant Karaes	parlant ar Poher(Poullaouen)	<i>P. er M.</i>
VSO (pe AVS+VSO)	70,4%	55,2%	65%	58,58%
SVO	20,7%	23,8%	25%	26,26%
OVS	3,8%	8%	4%	11,11%
Inf. VS(O)	5%	13%	6%	2,02%


Taolenn 20 lakaad *P. er M.* e-tal tud ag ar C'hLT

Diâr an daolenn a-us e c'hellamp lâred penaos skrid *P. er M.* so hañvalikoc'h douzh parlantoù a Greis-Breizh, med pezh a so ema hañval douzh skridoù savet ged an daou skriwagnour (B.B.&J.J.) ha hê o-hunan é voud tostoc'h douzh dregantad urz ar gerioù diâr parlantoù a Greis-Breizh; ken ma fin e trekamp disklêrio penaos skrid *P. er M.* so etre parlantoù a Greis-Breizh (pezh a sella douzh an implij stumm *XVO+Pred*) hag ar gomserien-gwendourien (pezh a sella douzh an implij stumm *diverb* hag a so nebeud) hag ar skriwagnourien-gwendourien (pezh a sella douzh an implij stumm *VI* hag *Inf. V*).

Med chomet so da ouied a-gaos da berag e kavamp ur skrid ken dishañval douzh re arall. Eid gouied splann ema red lâred ar pezh a so a-dreñv *Langedig* hag an anw *er M*<sup>387</sup>.: Langedig a oa – êl ma vez lâret bepred – ur barres ma vese dalc’het implij brezhoneg pelloc’h eid parresioù arall êl ma tisklêr M.Crahé en e desenn (2013<sup>388</sup>) diàr kaosioù (diàrbenn implij brezhoneg e Langedig pe ged tud a Langedig) so bet a-barzh studioù arall<sup>389</sup> “*A l’ouest et au sud-ouest du domaine d’étude (Lescouët, Quistinic et Saint Yves notamment) la situation est quelque peu différente et le breton est usité au quotidien dans la paroisse.*”, “*Il s’est remis au breton après son mariage car la famille de son épouse était de Languidic et utilisait constamment le breton.*”, “*Là où le breton est encore très vivace (Bubry, Languidic), des sexagénaires peuvent fournir un état de langue aussi riche, sinon plus, que celui des nonagénaires de Colpo ou Moréac.*”, tud en oad a *dri-ugent*, da lâred eo *P. er M.*<sup>390</sup> a oa un *danvez brezhoneger*, *tapet* brezhoneg àr barlenn e vamm? Hag ur wezh boud koupapl da gaoseal brezhoneg *yac’h*, en dehe gellet c’hoari etre *koms* ha *skrid* en e yezh-vamm.

### 5.2.2. Disoc’hoù diàr skridoù Iwan Tangi ha David ar Gall

Daou wenedour, desket-mad, skolàer brezhoneg ha kelenour brezhoneg a-beb unan. Nawazh ema red goùd n’int ked douzh ar memb anien-skrid: kani Jean-Claude le Ruyet so ur romant-preder men kavamp ur bochad monolog ha kani David ar Gall so un dastum danevelloù men chañcha tudennoù seul gwezh.



Skeudenn 13 komparêson etrede

<sup>387</sup> Gwir eo ema an anw *er Meliner* é tegass soñj ag ur *skriwagneres* a Langedig...

<sup>388</sup> Crahé, Maxime. *Le breton de Languidic: étude phonétique, morphologique et syntaxique d’un sous-dialecte vannetais*. Université de Haute Bretagne, Rennes 2, 2013.

<sup>389</sup> Pascal, Rolland. *Opus citatum*. 1994.; Cheveau, Loïc. *Approche phonologique, morphologique et syntaxique du breton du Grand Lorient (bas-vannetais)*. Université de Haute Bretagne, Rennes 2, 2007.; Le Pipec, Erwan. *Opus citatum*. 2004.

<sup>390</sup> Ganet er blez 1944.

Na possupl emant dishañval o anien-skrid an eil douzh an arall, e welamp dregantad gosig ur sort. Ar c'hetañ tra a welamp splann eo e vez implijet ar stumm *Inf. V* paod-mad. An dregantadoù *XVS* + *Pred V* ihuel a gadarna ar pezh a so bet disklêriet ged F. Favereau en e levr-yezhadur<sup>391</sup>.

Gwir eo pa ne vez ked med pader zudenn a-barzh ur skrid e vehe kavet nebeutoc'h a frasennoù e stumm *rener dirag ar verb* (êl m'hon eus gouiet en ur zielfenniñ ar c'horpussoù arall; gweled *supra*), ar pezh a so gwir eid skrid *Iwan Tangi*. Ha danevelloù-*omnibus* da lâred eo n'eus netra da weled tre an eil danevell hag an arall, e vehe meur a dudenn, ha kavet paod-mad a frasennoù e stumm *rener dirag ar verb*, med a-barzh skrid David ar Gall ne vez ked kavet med un 10% bennak a frasennoù e stumm *rener dirag ar verb* na possupl mand eo un tolpad danevelloù. Pader danevell 'meus bet dielfennet hag a-barzh an danevell getañ e kavamp c'hwec'h tudenn; an eilved ur pemp bennak; an deirved diw dudenn; ar baderved pader. É klask goùd e oan neuse a-gaos da berag ne vez ked implijet kement a frasennoù e stumm *rener dirag ar verb*, kentizh 'meus kavet un dregantad ihuel diàr an implij stumm *diverb*. E brezhoneg e vez implijet ar stumm-mañ liès awalc'h eid diskriw traoù pe just àr-lerc'h ur frasenn ged ur verb displeget, petramant eid lakaad un ton prim d'ur frasenn iwe. Danevelloù dielfennet amañ so re berr-mad diw bajenn hanter da beb unan, hag eid kavouid un 200 frasenn bennak ged un deg pajennad hembkén, e trekahe d'ar frasennoù berr-mad. É voud berr-mad hag e faota diskriw, displeg, disklêrio ar gaos hag arall e kavehe gwel genomp implij ar stumm *diverb*.

Distro d'ar stumm *Inf. V*, gete e kavamp tre 16% dregantad a frasennoù er stumm-se. Pa welamp dregantad ar stumm *Inf. V* diàr parlant Karaes 13%<sup>392</sup>. Sur ema ar stumm-se eid lakaad ton d'ar frasennoù, pe ne vez ked implijet med ged digouezioù ispissial (KERSULEC&SOLLIEC 2012). Ewid boud tonius en ur implij ar stumm a vez kavet nebeud dre goms ha dre skrid e gwenedeg (êl ma vez kavet ar stumm *SVO* e *gwersennoù KLT*, eid boud tonius...<sup>393</sup>)? Pe ur leveson diàr ar C'hLT ha netra kén? Ema red diwall douzh klosiñ ar gaos krenn-ha-krenn: eizh frasenn diàr 28 eid skrid *Iwan Tangi* a so ged ar veboù *kared* ha *venniñ*, ha hè er c'hetañ gour (beb a bader frasenn, unander ha liester), a-barzh eno emant eid lakaad ton...

Ged un daolenn a-stroll, renket hrewez *rummadoù-skrid* (ha *koms* iwe!) *dishañval* e c'hellehemp kaouid ur sell a-vras douzh ar labour so bet gwraet:

---

<sup>391</sup> Favereau, Francis. *Opus citatum*. 1997. P.P. 290-1 "C'est la "structure première" dans le schéma proposé par Jos Corbel (cf. méthode Ober gant ar brezhoneg, Ar Falz, 1981) que l'on pourrait également appeler structure bretonne caractéristique de type non-emphatique, ou à valeur neutre, laquelle est fondamentale en breton, puisqu'on la trouve dans quelque 55 % des cas analysés, notamment dans des phrases simples contenant un adjectif ou un adverbe."

<sup>392</sup> Timm, Lenora. *Opus citatum*. 1989. Med ema red diwall, ke stummoù dielfennet geti eid parlant Karaes a oa *VSO*, *SVO*, *OVS*, *Inf. V* hembkén: nebeuc'h e vehe kavet ar stumm *Inf. V* pa vo ledannaet ar c'hriteria.

<sup>393</sup> Le Berre, Yves. *Opus citatum*. 2012.

LP	M.	Korpussoù dre goms a Vro-Pourlet <sup>394</sup>	E.S 3	L.B	G.B	an daou skiwagnour-pourlet <sup>395</sup>	ar lisseidi <sup>396</sup>	P. er M.	an daou skiwagnour ag ar midad newez <sup>397</sup>	
<b>rener dirag ar verb</b>	32,31%	32,53%	36,42%	36,42%	41,09%	28,23%	59,99%	23,85%	15,18%	
<b>(X)V2</b>	<b>XVS</b>		18,34%	12,75%	11,96%	8,22%	14,68%	12,87%	24,77%	24,12%
	<b>Pred V</b>	26,56%	12,63%	10,07%	12,23%	13,42%	16,46%	3,68%	10,09%	20,60%
	<b>OVS</b>	2,97%	12,63%	10,75%	9,24%	7,94%	8,99%	1,47%	10,09%	10,84%
	<b>Inf. V</b>	1,68%	0,17%	0%	2,17%	4,66%	4,94%	1,10%	1,83%	17,07%
	<b>boud V</b>	5,95%	0,52%	1,34%	2,45%	0,27%	0,13%	1,84%	3,67%	0,54%
<b>traoù all</b>	<b>V1</b>	26,56%	25,95%	6,71%	8,42%	6,85%	7,47%	16,54%	18,35%	8,13%
	<b>diverb</b>	3,27%	5,88%	6,71%	17,66%	17,53%	15,19%	6,25%	5,50%	17,07%
<b>ped frasenn</b>	1002	578	149	368	365	790	272	109	369	

Taolenn 21 Taolenn a-stroll

Sur awalc’h eo lakaet ar wel dregantad ar c’horpussoù diâr skridoù savet ged *an daou skiwagnour ag ar midad newez* dre dregantad ar stumm *Inf. V* ar peb muiañ implijet hag ar stumm *rener dirag ar verb* ar peb nebeutañ. Petra a ra dehe skriw el-se? Marse awalc’h ema re er c’hours klask *ur rêson* hembkén hag a vehe ur leveson diâr mod an *Emsaverien* – ar pezh a za aessoc’h eid re arall –, med n’eus ked med *tri stumm-frasennoù* hag a so dishañval-krenn douzh ar c’horpussoù arall (*rener dirag ar verb, Pred V, Inf. V*): hag an daou stumm ketañ é voud stummoù neutroc’h eid ar re

<sup>394</sup> E.S.1+E.S.2.+Mari.

<sup>395</sup> B.B.+J.J.

<sup>396</sup> Korpussoù dornskridoù kenstrivadeg ar Falz-kani *P. er M.*

<sup>397</sup> *Iwan Tangi*+David ar Gall.

arall, a c'hellehe boud tremenet an eil stumm d'an arall êl ma vese e kembraeg rag-vodern<sup>398</sup>, petramant e c'hellehemp kompren penaos dregantad ar stumm *Inf. V* so implijet e-lec'h ar stumm *rener dirag ar verb* ha gwir eo a pa vêt lakaet àr-un-dro e kavamp un 32% bennak hag a so ur sort êl an dregantad a gavehemp a pa vez lakaet an daou stumm da heul eid ar c'horpussou arall. Ê soñjal êl-mañ neuse e trekehe deomp gouied daoust hag-eñv ema eid lakaad ton d'o skrid pe peogwir ema daet ar stumm *Inf. V* ur stumm *neutr* arall e-tal ar stummoù *rener dirag ar verb* ha *XVS + Pred V*. Mar ve daet ur stumm *neutr* arall daoust hag-eñv ema a-gaos d'ar leveson é toned a vod an *Emsaverien?* hag a gava dehe ema ar stumm *Inf. V* ar stumm *neutr*. A-benn eid gouied hirroc'h e trekehemp gober ur studi *kañtitativel*<sup>399</sup>, a zisklêria dregantad ar stumm *Inf. V* e parlantoù KLT (ged ar vrezhonegerien a-vihan&a-gozh), e skridoù savet ged *skriwagnerien-bobl*, e skridoù savet er blezadoù 1800-1900 (da lâred eo e-raog mand eo bet ganet an *newezbrezhoneg*<sup>400</sup>), e skridoù savet ged *skriwagnerien* ag ar c'hetañ midad *Emzao* (tre 1860-1920) hag an eilved midad *Emzao* (pe ar *Walarnisted*) hag e skridoù savet ged an *emsaverien* a-vremañ... ha kemend-rall eid ar *gwenedeg*! Aes eo lâred<sup>401</sup>...

---

<sup>398</sup> Currie, Oliver. *Opus citatum*. P.16; gweled an NOTENN 186.

<sup>399</sup> Êl ma so bet kenniget deja amañ, eh eus ur studi *kalitativel* kentoc'h diàrbenn an implij stumm *Inf. V*. Joutteau, Mélanie. *Opus citatum*. 2013.

<sup>400</sup> Hrewez an termenadur raet a-barzh pennad Pipec (2013).

<sup>401</sup> Le Pipec, Erwan. 'Entre Objectif Patrimonial et Contraintes de l'acquisition Scolaire : À Quoi Ressemble Le Breton Des Enfants d'aujourd'hui ?' *Corte*, 2020. P.1: "Au-delà de l'optimisme induit par la croissance du nombre d'élèves bilingues, une critique récurrente souligne que le breton actuellement enseigné serait un artefact éloigné des pratiques populaires (Hewitt 1977 : 12-18 ; Le Dù 1995 : 265 ; Le Coadic 1998 : 244, 253 ; Jones 1998 : 316 ; Pentecouteau 2002 : 175-177 ; Le Berre 2006 : 215 ; Guéguen 2006 ; Hornsby 2009 : 18 ; 65-66 ; 73-74 ; Madeg 2010 : 7-8). Cette opinion répandue est toutefois mal étayée : elles se fonde la plupart du temps sur des impressions générales et non sur des descriptions pointues (en dehors de quelques exemples convoqués pour illustrer le propos)." Da ouied, ne vehe ked pal ar studi ha pal ar skiant, gwirikaad?



## 6. Pennad-klosiñ

Ar labour-mañ so bet komañset ged ur soñj *hir*, gwezh ged *vennentez* – setu ur ger ha ne goucha ked anehoñ ged ar *skiant meur* e-gunan... – gwezh eid goùd hirroc’h àr ar jeu: *SVO* pe *rener dirag ar verb* e gwenedeg pe gwenedeg-isel. A-barzh ar lodennoù hir diàrbenn kaosiou a-beb-sort é toned a *skolioù* a-beb-sort hag a sella douzh ar yezhadur brezhoneg e welamp reolioù savet, savet diàr an implij yezh *a-gozh*, petramant diàr ar lennegezh a-gozh merhad: setu a-barzh ase ema *yezhadur ar yezh*, da lâred eo ar pezh a gava/gave *reizh* d’ar skiantourien pe d’ar yezhoniourien. Ha kement-se a sella douzh peb tra: pe *fonologïezh* (êl ma tiskouez R. Hemon en e levr-yezhadur berr<sup>402</sup>) da lâred eo ar pezh a dreka d’ar *vrezhonegerien* lâred, a soñj dehe; pe *geriaoueg* da lâred eo ar pezh a dreka d’ar *vrezhonegerien* implij (ar pezh a so termenet êl *gerioù degasset ged an Emsaverien* ged M. Madeg<sup>403</sup>) ha miret o geriaoueg dehe-hè *er gêr ba ti o zud*; petramant *morfologïezh* da lâred eo, ar stummoù lost-verb (êl *-aio* degasset deomp gete ha deomp-ni da implij), lost-ger-liester (êl ar stumm *bigi...*) ha setu unan arall ‘meus degasset deoc’h, ha deoc’h etredoc’h da soñjal, *urz ar gerioù*. Ken ma fin, kement-se eo ar pezh a so bet normaliset, gwezh dre ma vese implijet *meur a wezh* ged *lizherourien*, gwezh dre ma kave *reizh* da unanigoù é soñjal ema *reizh*. Setu *yezhadur ar yezh*, nawazh e-tal kement-se so un dra hag a vez gwraet *kalon ar yezh* anehoñ – hemb degass soñj a *skeudenn an organism* da sossilogourien fin an 19<sup>ved</sup> kantved – da lâred eo ar pezh a chom a-barzh implij an unanigoù a ra ged *ar yezh*, hemb gouied dehe, hemb boud desket dehe:

*“En définitive, ce n’est donc pas l’aspect « populaire » de ce breton qui doit le qualifier, encore moins le caractère « natif » de ses locuteurs (puisque le NB a aussi ses locuteurs natifs). Là où ce breton diffère radicalement du NB, c’est qu’il a conservé intact le cœur invariant de la langue : sa grammaire (cf. Plourin 2009 : 164) ; sa phonologie ; l’essentiel de son lexique issu de la sédimentation historique de la langue.”*<sup>404</sup>

Ar pezh a chom, ar pezh a gendalc’ha hed-ha-hed kantvlezadigoù: er penn-ketañ eo ar vorfologïezh, hag àr-lerc’h an distilhadur hag àr-lerc’h neuse ar geriaoueg (LEDUNOIS 2004: e vez kaos a-barzh e bennad, treusfurmadur ur yezh a gomañsa er penn-ketañ ged amprest gerioù diàr yezhoù estren ha levesonet fonologïezh, hag ar vorfologïezh er fin-toud). Geriaoueg, gwir eo e vez implijet ur bochad gerioù amprestet diàr ar galleg dreist-oll ged ar *vrezhonegerien a-gozh* (da lâred eo tud e midad *E.S. Mari*. h.a.); distagadur? ema red gouied – diñ da ouied ataw – n’eo ked bet influañset ha n’eo ked bet *chañchet* kals<sup>405</sup> a-c’houde amser Cillart de

<sup>402</sup> Hemon, Roparz. *Grammaire bretonne*. 8ème, Al Liamm, 1975. [1941.] E fin ar levrig-se so ur lodenn vihan gouestret d’an distagiñ e brezhoneg.

<sup>403</sup> Madeg, Mikael. *Peurzeski brezoneg Léon*. 2013.

<sup>404</sup> Le Pipec, Erwan. *Opus citatum*. 2013.

<sup>405</sup> Ur skwer arall iwe, e-barzh enrolladennoù hag a oa bet gwraet ged Rudolf Trebitsch e penn-ketañ an 20<sup>ved</sup> kantved e klewamp bouezh Francis Gourvil ginidig a Vontroules: distagadur pe traoù hag a denna d’ar vorfofonologïezh, n’int ked gwall zishañval douzh parlantoù hag a vez kaoset bremañ en-dro da Vontroules na douzh ma c’hengomser a Vontroules (hag e dud é toned a Blourin-Montroules) é terc’hel un davarn e Sant-Vark-Brest...

Kerampoull (1741<sup>406</sup>): e ragskrid e c'heriaoueg e kavamp e soñj diàrbenn *ar brezhoneg reizh hag ar brezhoneg direizh*, e Mourieg, a lâre-heñv, e vese lâret “*I e yo*” kenklous “*Ind a ouai*” (*I a oa, gi a oa, ind a oa pe hê a oa* en doare-skriv a-vremañ), ha pa vên aet da Vourieg eid kaosal ged ur vaoues ganet er blezadon 1930, ‘meus bet hi klewed é implij “*Gi e yo*”, amañ daou dra vorfo-fonologel: *palataliset* ‘*I*’ da ‘*Gi*’ med dalc’het eo ar stumm ‘*yo*’. Morfologiezh, lostoù-verb da getañ, Padrig Besko<sup>407</sup> a lâra àr-lerc’h ur studi àr an dachenn gouez er Ger-Veur, implijet ur bochad gerioù amprestet diàr ar galleg (pe diàr *ar bellilois*), kollet ar liammadur paod-mad, med tud so (dreist-oll, an *native speakers*, pas ar *semi* pe *terminal speakers*) a warne soñj a stummoù-verb displeget hag a c’helle reiñ respontoù d’ar goulennoù *lakaad e brezhoneg*, ha P. Besco a lâra ma ne za ked dehe, ne dalva ked ar boan goulenn gete, n’eus ked ag ar stumm a-barzh ar parlant kén. Da lâred eo traoù hag a sella douzh ar vorfologiezh a chomehe pelloc’h e don *kalon ar yezh*. Setu ar memb tra eid urz ar gerioù: gwelet hon eus deja n’eo ked bet chañchet hed-ha-hed *ur c’hantwezh* en Arradon (PIPEC 2017).

Hag e-tal kement traoù diàrbenn *ar yezhadur reizh, kalon ar yezh* so traoù arall da selled douzhte: liveoù-yezh dishañval. Ne faota ked soñjal ne oa ked med *parlantoù-pobl* e-tal ar brezhoneg *norm* (hag a oa *brezhoneg beleg* en amser a-gent). Ur variesoñ hag a vez gwraet *breton mondain* douzhti (CALVEZ 2008<sup>408</sup>; PIPEC 2013; MENN 1983<sup>409</sup>) a vese servijet d’ar vourc’hisien pe d’an noblañsoù brezhoneg. Variesoñ arall a so: ne vehe ked hañval ar live-yezh a-barzh ar c’haosioù bemdez douzh an hani a-barzh ar sorc’hennoù, na a-barzh ar gwersennoù pe ar sonennoù; distagiñ *ive* (iwe) a-barzh Kreis-Breizh a vercha ar live-yezh brezhoneg beleg petramant un dra hag a vehe gwraet a-barzh gwersennoù: fed a zistagiñ *dimeziñ* ged ar son *z* e Bro-Gwened a lâra omp-ni é selaou douzh ur sonenn<sup>410</sup> (PIPEC 2000: 107). Kement-se a vehe gwir eid urz ar gerioù iwe.

Ken ma fin àr-lerc’h kement-traoù e trekehemp soñjal en anien ar skrid, pe en anien ar gaosadenn. Lïes awalc’h e vez lâret penaos e brezhoneg e chañchamp urz ar gerioù hrewes digouezioù. Gwir eo an dra-se med pa vez gwraet ur studi é tielfenniñ urz ar gerioù, ne vez ked lakaet a-barzh ar gont. A-barzh digouezioù so e kava gwell genomp implij stummoù-frasennoù so ha digouezioù arall, stummoù arall marse awalc’h.

Neuse penaos ema urz ar gerioù e gwenedeg-isel? Er penn-ketañ e c’hellañ lâred sur ne vez ked lakaet rener ar frasenn dirag ar verb *ataw*, ar c’hontrel a vehe: ken ewid korpussoù so (dreist-oll dornskridoù *kenstrivadeg ar Falz*<sup>411</sup>) e kavamp muioc’h a frasennoù e stummoù arall pa vënt gwelet a-stroll (pe *XVS + Pred V* hembkén a vez kavet muioc’h eid ar stumm *rener dirag ar verb*, meur a wezh). Hag àr-lerc’h e-keñver lec’hioù n’hellamp ked kavet diforc’h tre parlantoù ag ar Vro-Pourlet hag an hani a Vargenag (PIPEC 2017), ha seul vui ma ouier lenn ha skrivi e c’heller gwarno muioc’h a stummoù-frasennoù (hag a so gwir eid B.B. ha J.J.

<sup>406</sup> Cillart de Kerampoull, C. V. *Dictionnaire françois- breton ou françois- celtique du dialecte de Vannes*. La Compagnie, 1744.

<sup>407</sup> Le Besco, Patrick. *Le breton de Belle-Ile-en-Mer*. Emgleo Breiz, 1998.

<sup>408</sup> Calvez, Ronan. ‘Du Breton Mondain’. *Annales de Bretagne et Des Pays de l’Ouest*, vol. 115, no. 3, 2008, pp. 135–53.

<sup>409</sup> Le Menn, Gwennole. *Histoire Du Théâtre Populaire Breton: XVe-XIXe*. Skol ; DASTUM ; Institut culturel de Bretagne, 1983.

<sup>410</sup> Ar sonenn “*ma zadig ha ma mamm en deus ma dimezet*” a so ur sonenn men ma klewamp an dra-se. Petramant ar sonenn “*Un dez ‘oan é voned*” ma kavamp ar posioù él “*Heñv ‘oulennas geniñ ma oan bet dimezet.*”

<sup>411</sup> Da studïal a so ur wezh arre àr o implij ag ar stumm *rener dirag ar verb: daoust hag-eñv ema ur stumm neutr, setu a-gaos da berag e vese gwarnet soñj ar gwellañ ged ar vugale ha ‘noa bewet o bugaleaj e brezhoneg?; pe peogwir ne ouient ked **petra eo sevel frasennoù e brezhoneg dre skrid e savent frasennoù diàr batrom ar galleg?***

pe P. er M. sokén), ken ma fin e vehe gellet lâred ema tost douzh skriwagnerien-bobl *KLT* (TIMM 1989). Ar stumm *Inf. V* a seblanta boud implijet el ma tiskouez Kersulec&Sollicec (2012), ken ewid frasennoù so: med a-barzh ase e faotehe deomp studïal hirroc’h eid gouied hag-eñv so implijoù arall ag ar stumm *Inf. V*, e gwenedeg, kement el e parlantoù arall (gweled *supra*).

Krediñ a rañ gober un daolenn a-stroll eid *termeniñ* (ged) urz ar gerioù hrezvez midadoù dishañval (e-keñver amserioù ha liveoù<sup>412</sup> hag arall):

G.B.	kreis, fin an 19 <sup>ved</sup> kantved
Mari.	
B.B.	
<b>20<sup>ved</sup> kantved</b>	
L.B.	e-raog pe àr-lerc’h Ketañ Bresel ar Bed (E.S. oa bet ganet er blez 1930, <i>repos dehoñ</i> )
J.J.	
E.S.	
<b>Komañs ar Bresel diwezañ</b>	
<i>Lisseïdi</i>	E-pad ar Bresel pe just àr-lerc’h ar Bresel diwezañ
P. er M.	E-pad ar Bresel pe just àr-lerc’h ar Bresel diwezañ
I.T.	fin ar blezadoù 1940
D.G.	fin ar blezadoù 1960


*Taolenn 22* Hrezvez an amser ma oant bet ganet

Mari.	E.S.	>	L.B.	G.B.	>	Lisseïdi	>	P.er M.	>	J.J.&B.B.	>	D.G.	I.T.
ar peb tostañ douzh o farlant orin						tost douzh o farlant, med traoù ankouc’haet a-barzh ar <i>goms</i> a so miret						pell douzh ar re arall: merchet-mad dre an implij stumm <i>rener dirag ar verb</i> hag <i>Inf. V</i>	

*Taolenn 23* Kempennet hrezvez o skiant-prenet desket àr ar brezhoneg

Hag e c’hellehemp kredoud o lakaad hrezvez ar c’hriteria diàrbenn *newzbrezhoneg* savet ged Pipec (2013)? Med ema red goùd a-barzh eno neuse: ar pezh a so dishañval (douzh ar parlantoù hengounel pe douzh ar skridoù savet ged ar *skriwagnerien hengounel*) ne sinifi ked ar pezh *n’hellehemp ked rekomandiñ da zesko...*:

<sup>412</sup> Pe o skiant-prenet desket àr ar brezhoneg.



Skeudenn 14 Korpussoù lakaet hrewez kriteria pennad Pipec (2013)

Da ziwall a so da zrougvesko: amañ ‘meus o lakaet hrewez o *ereadurezh* ha n’eus ked bet kemeret traoù arall e kont: dreist-oll e-keñver ar fonologïezh e c’hellehemp lakaad D.G. *en tu rall d’ar linenn*. Etre *skrid* ha *koms* a-barzh ar garrezenn *tapet-par* eh eus diforc’hoù so hembkén: implij meur a stumm dreist-oll ar stumm *inf. V* ha meur a stumm dishañval pa vez islavarennoù (traoù dishañval douzh ar stumm ... *V* a vez degemeret êl ur stumm *reizh* hembkén a-barzh ar yezhadurioù hengounel (gweled *supra*), dre-se ne vez ked implijet ar stumm *rener dirag ar verb* kement-se; seul vui a frasenoù e stumm *VI* a vez kavet seul dostoc’h eh a da *dapet-par*, ha seul vui a frasenoù e stumm *diverb* iwe, med kement-se a vehe a-gaos ma vez *dre skrid*... Seul zesketoc’h e kaveemp meur a stumm, ged un dregantad ihuel diâr ar stumm *inf. V* dreist-oll, med a-gaos da berag? A-balamor ma vez desket da skriw êl-se? Just êl ma vez a-barzh ar yezhadurioù hengounel<sup>413</sup>? Neuse ur problem diârbenn un tech da *vired traoù kozh* pe da glask deskiñ traoù *reolieg* d’an deraouidi arre?

Pa’h omp-ni ged an traoù da *zeskiñ d’an deraouidi* (vern a ra menn: er skolioù diwyezheg pe Diwan hag a-barzh kreizennoù stummadur ewid tud gour), ema rekis deomp soñjal petra a c’hellehemp kelenn dehe e gwirionez. Peb-unan a so libr êl ma vez lâret pe tuet d’ur stumm unvan-diunvan pe tuet da meur a stumm *rannyezhel*. Pe gerioù rannyezhel pe troiennoù rannyezhel a vehe kavet mad o flass adal ma vint *reizh* o stumm e-keñver ar yezhadur<sup>414</sup>. Med pa vez traoù *morfologel* betag pessort poent e vehe lâret *ur stumm rannyezhel* e-lec’h ur *fari*? Soñjoù kozh *Académie bretonne*<sup>415</sup> a ziforc’he etre

<sup>413</sup> Yezhadurioù *hengounel(-glan)* (dishañval douzh yezhadurioù *mod-kozh*: da.sk. kani Rostren...) da lâred eo, savet ged ur strollad-yezhourien é klask *glannaad* ar yezh: komañset adaleg Gonideg, *kempennet* ged R.Hemon ha peurlipet ged F.Kervella.

<sup>414</sup> Da ziwall a so ur sort: ur ger ‘*gwalliñ*’ pa lâramp-ni (“*gwendourien*”!) ewid nompas lâred “*lahiñ*” e vez komprenet hemb goùd deomp – dreist-oll ged tud desket brezhoneg dehe – “*violer*”...

<sup>415</sup> ‘Conseil de l’Académie Bretonne Aux Écrivains Bretons’. *Buhez Breiz*, 1922.

“*plus anciens et plus réguliers*” ha “*corrompus, par abus*<sup>416</sup>” pa vez stummoù rannyezhel: traoù a-gozh ha reolieg peogwir emant é tond a grennvrezhoneg pe hañval douzh kani ar c’hembraeg ha stummoù *kousiet* pa ne vêt ked kavet dre skrid. Bremañ pa vez aet kuit brezhoneg ag an Ilis menn ma vese dalc’het *ar stumm unvan-diunvan* komprenet ged darn vrassañ ag an dud a gornad<sup>417</sup>, daoust ha peb-unan a so libr ged o zammoù rannyezh? Ha peuc’h a vehe raet da neb é lâred: “n’eo ked amañ (anehoñ).” e-lec’h “n’ema ked amañ.”; “Ma mamm en deus lâret diñ.” e-lec’h “Ma mamm he deus lâret diñ.”? Ha c’hoazh: ha souezhet e veemp é klewed “ma dad” en ur pennc’hêr a Verrien pe a Blouvouskant e-lec’h “ma zad”; “me a skoañ...”<sup>418</sup> e-lec’h “me a sko...” e “Bro Dreger”; “n’ouiañ ked ma...” e-lec’h “n’ouiañ ked ha...” e Bro Gwened pe e Bro Aven (GUILLEVIC&LE GOFF 1986 [1902]; LE GLÉAU 1973; FAVERAU 1997; CHEVEAU 2017; Capes 2021 P.9 “*structure attestée en vannetais et dans l’Aven toutefois*”); pe “ar yammou<sup>419</sup>”, “merc’hed vraw, taolou vraw<sup>420</sup>”, “sonennoù gozh<sup>421</sup>” e Bro Gwened? Hag unan ag ar perzhioù pennañ e parlantoù Bro Dreger, nompas ober ar c’hemmadur *d > z* pe an dra ‘vez klewet un tammig e peb lec’h “tri gi, pewar baotr” pe “tri ki, pewar paotr” e reter Bro Gwened... daoust hag un emdroadur a vo lakaet dehe ken-ha-ken<sup>422</sup>? Hag e vo reizh neusen ar frasenn da heul: “Ar verc’hed vraw a gomsont diñ.”? é voud ma vez lâret “ar verc’hed vraw” er vro Pourlet ha “a gomsont diñ” e Bro Dreger? Traoù lec’hel a sort-se – na boud ma vez

416

“*Eviter de noter les prononciations vicieuses. Par exemple, on écrira toujours l’h étymologique (holl, hir, hep, henvel), même quand on ne l’entend pas dans la prononciation du Léon relâchée sur ce point; on évitera les notations gu- et v-, pour gw- et w- [...] pour noter la diphtongue ae (Léon ea, Trég. ê : maen, mean, mên) on donnera la préférence à ae, forme la plus ancienne et la plus régulière que l’on entend encore dans le parler du Bas-Tréguier comme en gallois (Ecarter la forme dialectale et corrompue min du Goelo [ha n’eus ked tra ebed ewid gwenedeg?]; pour les finales nasales, plus fréquentes en Trég. qu’en Léon, on ne les écartera pas systématiquement, mais on admettra progressivement dans la langue littéraire celle qui sont traditionnelles et utiles.*”

“*Pour les autres possessifs, de même que pour les pronoms en général [da lâred eo araogennoù displeget], on peut suivre à volonté l’usage du Léon ou celui du Tréguier, dont les formes sont tout aussi anciennes et régulières: par exemple le moyen-breton disait indifféremment anezo et aneze, warnezo et warneze (ouzin du Tréguier (gallois wrthyf) est à préférer à ouzoun du Léon.)*” (islinnet geniñ)

<sup>417</sup> Thibault, Ernest. ‘Notes sur le parler breton de Cléguérec (Morbihan)’. *Revue Celtique*, no. 35, 1914, pp. 1-28, 169-192, 431-40.

<sup>418</sup> Blanchard, Nelly. ‘À la recherche de l’intestin aveugle : Ethno-texte sur la boucherie-charcuterie porcine en breton’. *Lapurdum. Euskal ikerketen aldizkaria | Revue d’études basques | Revista de estudios vascos | Basque studies review*, no. 19, 19, Jan. 2016, pp. 103-19. [journals.openedition.org, https://doi.org/10.4000/lapurdum.3191](https://doi.org/10.4000/lapurdum.3191). (NOTENN 3); Hewitt, Steve. *Breton Verbal Syntax: An Explanatory Framework, Typologi Ar Brezhoneg, UBO, Kemper*. 2018.

<sup>419</sup> Ar Borgn, Herri. *Brezhoneg ar Skorv, Trésors parlés du val de Scorff*. Skol Vreizh, 2011.

<sup>420</sup> Levr-yezhadur Joakim Gwilhom. Morvannou, Fanch. *Aspects de La Littérature Bretonne Vannetaise Dans La Première Moitié Du XIXe Siècle*. 1980. P.532.

<sup>421</sup> Sonenn merc’hed Margenag.

<sup>422</sup> Ema red gouied ha me ‘ouia awalc’h iwe penaos traoù anehe a vese *lâret* gwerso pe *skriwet* sokén: ar c’hemmadur ar-lerc’h “tri, pewar, naw” èl m’hon eus gwelet deja; traoù sort “merc’hed vraw” a welamp ken cours èl ar c’hemmadur “tri, pewar, naw” (AR BORGN 1925; pe ged Joakim Gwilhom sokén); “ma mamm en deus...” ged Marion, Pourchasse èl ma oa ewid “n’eo ked amañ”... nawazh traoù arall so arri diwezatoc’h pa vese brezhoneg é tiskar iwe...

kasset bri dehe ged tud bet desket brezhoneg ged brezhonegerien a-vihan ag an tuad<sup>423</sup> – ne sonant ked braw med pa chomant *lec'hel*, ged taol-mouezh ag ar c'hornad iwe!

En em gavet arre ged urz ar gerioù neusen, ar stumm pe ressissoc'h 'an islavarenn distag' traoù 'sort '... *S V*', '... *Inf. V*' h.a. Un dra er-maes ag an "norm"? Dre goms e vez klewet, dre skrid e vese gwelet, petra a vir douzhomp a gelenn kement-mañ? Ha gwelet hon eus iwe penaos seul desketoc'h (D.G. hag I.T.) e vez gwelet stummoù frasennoù tostoc'h douzh ar pezh a vez kavet er *C'hLT*, perag enta ne vehent ked tostoc'h douzh ar pezh a vese kavet e gwenedeg klassel êl ma oa gwraet ged Marion lakamp?

Ur leveson é tond ag ar galleg neusen? Mall reskont d'ar goulenn-mañ êl ma oa an danvez-se a rae c'hoant diñ da vond pelloc'h getoñ. Daoust hag-eñv e c'hellehemp lâred ur leveson arall àr urz ar gerioù e brezhoneg (e gwenedeg, a-wael!). Da ouied deomp, diàr hor c'horpussoù-ni e kavamp ar stumm *V2* dalc'hmad pe ar peb muiañ e-mesk ar stummoù arall (dresit-oll muioù h eid ar stumm *rener dirag ar verb* = *SVO* a-vras hag a denna da gani ar galleg) keneve *ar lisseïdi* a oa é sevel frasennoù en ur implij muioù h ar stumm *rener dirag ar verb*: da soñjal a so c'hoazh ase êl ma so bet lâret deja, daoust hag-eñv **ema ur stumm neutr**, setu a-gaos da berag e vese gwarnet soñj ar gwellañ ged ar vugale ha 'noa bewet o bugaleaj e brezhoneg?; pe peogwir ne ouient ked **petra eo sevel frasennoù e brezhoneg dre skrid** e savent frasennoù diàr batrom ar galleg? A-hend-arall e c'hellehemp lâred ur leveson é tond ag *ar brezhoneg desket* ged an daou skriwagnour a-vremañ ha ken tost ema dregantad ar frasennoù implijet gete, an eil re douzh an erell! Prouiñ a ra eh eus ur leveson! Damp distro bremañ d'ar c'hrennc'hembraeg hag a domme ma c'halon douzh dielfenniñ frasennoù brezhoneg. Krennc'hembraeg pe krennvrezhoneg, hag a so lakaet "*Middle neo-Brittonic*" dehe e-barzh ur pennad diàrbenn chañchamant urz ar gerioù e kerneveureg<sup>424</sup>, e welamp ar stumm *V3* enne. Bremañ pa ouiap, en ur lenn ar c'hounskrid, e vënt *reizh* diàr-goust sklâereded ar frasenn (LE GLÉAU 1973) ne vehemp ked gwall-souezhet. Gwelet e vez a-barzh frasennoù 'sort *V3*, er penn-ketañ un adverb (peurvuiañ) ha *S + V*, darn vrassañ anehe. Ur leveson é tond ag ar saosneg hag ar galleg e vehe?

---

<sup>423</sup> Blanchard, Nelly, and Ronan Calvez. 'Parler et Se Représenter Le Breton Au 21e Siècle'. *Actes Du Colloques Méthodes de Recherches En Cultures Du Plurilinguisme Régional*, 2018.

"Après des bretonnants seconds, qui ont appris le breton à l'adolescence ou à l'âge adulte, ce que parlent les anciens est parfois doté d'un prestige symbolique (cf. le site *Brezhoneg Bro-Vear*), quand il n'est pas l'élément rêvé d'un paradis linguistique (Sauzet 1996) : cette langue bretonne est alors parée de vertus toutes naturalistes, quand bien même le breton que parlent certains bretonnants seconds – notamment les plus jeunes – est rarement compris par les anciens – et vice-versa (German 2007). Cette exaltation du breton hérité débouche parfois sur une forme de sacralisation (Colonna 2016 : 198-199) et de rejet de toute autre forme que la locale (cf. Lozac'h s.d.)."

<sup>424</sup> Eska, Joseph F., and Benjamin Bruch. '11 Prolegomena to the Diachrony of Cornish Syntax'. *11 Prolegomena to the Diachrony of Cornish Syntax*, De Gruyter Mouton, 2020, pp. 313–38. [www.degruyter.com](http://www.degruyter.com), <https://doi.org/10.1515/9783110680744-012>. P.317.

N'omp ked eid mond pelloc'h ged urz ar gerioù e saosneg ar barz **Geoffrey Chaucer** ha kani e galleg an **ao. Thomas Malory** ged e oberenn *Le Morte d'Arthur*<sup>425</sup> ...

Na chañchamant? Gweled a ramp ne oa ked gwall chañchamant a-ziaraog ar blezadoù 1930-40 (TAOLENN 22&23) nemed e oa tud *desket un tamm dehe* hag a skriwe ged muioc'h a stumm, hemb gober ged daou zoare bennak hembkén. Hag àr-lerc'h? gwelet e vese tud é klask skriw hañvalloc'h douzh ar *C'hLT*, lakamp ha tud arall é skriw êl ma tae dehe pe êl ma vesent é skriw e galleg. Na bremañ? Daoust hag-eñv e vehe tonket *brezhoneg ar skol* da voud *gallekaet*? Ase e tiströamp d'ar goulenn *gelloud a rahemp deskiñ kement-se d'ar vugale a-barzh ar skol*? Ma ve lâret penaos ar stumm *rener dirag ar verb* – a lakaer dehoñ *ur stumm implijet muioc'h didan leveson ar galleg* – a so kani *mad*, kani hag a vese implijet dalc'hmad ged ar '**re gozh**' nag ar stumm *peogwir + S + V* hag a vez kavet bepred ged re gozh ha ne oa ked anavet ger galleg ebed gete... e vo ressewet an "absolvenn" ged ar stummoù-se ken ma vo gellet boud desket a-barzh ar skol êl ur stumm ken brezhoneg hag ar stumm *V2* pe *VI* avel a-barzh *ema o tond...*? Pe un dra ken gwazh c'hoazh, en ur gompren eh eus un diforc'hig tre ar *C'hLT* hag ar *gwenedeg* e-keñver choas ar stumm-mañ-'r stumm, ur frasenn e *rener dirag ar verb* hemb kondission adal ma vo kavet diàr beg ur pollog é voud skoliataet er vro *vrezhoneg KLT*, penaos e vehe degemeret? Nag ur frasenn 'sort "*Peogwir va zad 'so deut da chom e Kastell*"? Gwraet revou a-getañ ur studi diàrbenn dregantad urz ar gerioù e brezhoneg Leon, Treger, Kernew (ur bern a so d'ober ervad) ha dregantad urz ar gerioù e brezhoneg ar vugale a-barzh ar skol diwyezheg *Ploussiseurt!*

---

<sup>425</sup> Ar c'horpuss krennc'hembraeg implijet a-barzh eo *Pedeir Keinc y Mabinogion* a vehe bet savet tre 1350-1410 hag ar c'horpuss krennvrezhoneg implijet eo *Buez Santez Nonn* a vehe bet savet en achumant an 15<sup>ved</sup> kantvezad.







## Stagadenn-vihan

### *Stagadenn-vihan: taolenn 1*

#### *Diforc'h etre yezhadur a-gozh ha yezhadur newez*

	<i>Penaos e veneg urz ar gerioù e brezhoneg</i>	<i>Diwarbenn an urz: stagell V + S, S+ V h.a.</i>	<i>Diwarbenn VI<sup>426</sup></i>
F. Kervella	Ar pep pouesussañ a vez lakaet e penn kentañ ur frasenn	lakaet e vez verb ar frasenn en eilved plass ataw; an doare-se a so ur fazi, dre skrid e vez kavet muioc'h ewid na vefe dre goms	Meneg ebed
P. Trepos	Ar memes soñj evel F. Kervella	Ar memes soñj evel F. Kervella, koulskoude roet so bet gantañ skwerioù ha n'ema ket ar verb en eilved plass	Meneg ebed
R. le Gléau	Un dra a c'hell liammañ ar frasenn gant ar frasenn en he raog	Normal ewid ar sklaerded	Ar verboù kreñv a c'hell bezañ lakaet
F. Favereau	Ar memes soñj evel F. Kervella, <i>a priori</i>	Normal, skriwet e vez, kaoseet e vez kals sokén	Ar verboù kreñv, VI e Lanijen, <i>kaoud</i> e gwenedeg
E. Chalm	Ar memes soñj evel F. Kervella	Ar memes soñj evel F. Kervella	Meneg ebed
L. Cheveau	Un dra a faot deomp pouesañ warnañ pe un dra newez-deut hag a c'hell liammñ ar frasenn gant ar frasenn en he raog.	Normal, dreist-oll war-lerc'h ar stagell <i>peogwir</i>	Ar verboù kreñv a c'hell bezañ lakaet

<sup>426</sup> A-nes da *ema*, an doare-gourc'hemenn, hag ar respont evel a *c'hell bezañ*

**Stagadenn-vihan: taolennoù 2&3**

**Lakaad tal-ha-tal en Ozeganned hag ar C'hornandoned**

En Ozeganned	Ar C'hornandoned
<i>(Ean e huch)</i>	<i>(Youc'hal a ra)</i>
<i>Ma nen doh ket bouar na mud hui hel erhoal reskond merhat</i>	<i>Ma n'oc'h na bouzar, na mut, e c'hellit respont ac'hanon emichans</i>
<i>Ret e vou d'ein perchanj kousket ér mez</i>	<i>Hag e doare e vezo red d'in kousket er-meaz</i>
<i>(Ean e goèh ar en doar)</i>	<i>(Hag e kouez d'an douar)</i>
<i>Sel ta en néan! Stiren erbet ne splann ket hoah</i>	<i>Sell 'ta, en nenv ne lugern steredenn ebet c'hoaz</i>
<i>(Epad ma tirohant kleuein e hrér en orglézeu-bihan é hoari el aveit ou luchenat)</i>	<i>(Epad m'en el roont da gousket e c'hoarier eun ton luskellus bennak)</i>
<i>ha te hortei ken em bou kontet betag tri</i>	<i>hag e c'hortozi ken n'am bô kontet betek tri</i>
<i>Te gleu, ma tivoleoùou, ma tivoleùou</i>	<i>Klevet a rez, m'ez tivouzello !</i>
<i>Ker iein e oé touchant me lavreg el en erh</i>	<i>Bremaik va lavreg a yoa ker yen hag an erc'h</i>
<i>Kredet vehé bremen é ma en tan abarh.</i>	<i>lavaret 've great e vefe an tan ennan breman</i>
<i>(Kent pel é tirohant hag en orglézeu bihan hum lak éndro de hoari eit ou luchenat.)</i>	<i>(C'hoari rear adarre eun ton luskellus bennak.)</i>
<i>(En Ozeganned e hra diù pé tèr guéh en dro ag er lér-hoari, en ur gannein.)</i>	<i>(Ober a ra eur zutadenn hag ar c'hornandoned a zilamm a bep tu war leurenn an teatr.</i>
<i>Marù int marsé ?</i>	<i>Marteze ez int maro</i>
<i>(Kent achiù en devéhan poz int e zishousk en neu veùér én ur hrein tauleu kern dehé hag int e ia kuit, én ur hoarhein, er bugul-noz geté.)</i>	<i>(Kerkent ha m'eo echu o c'han, e tihunont an daou vezvierien en eur rei d'ezo taoliou-dorn hag ez eont kwit en eur c'hoarzin, ar bugel-noz war o lerc'h.)</i>
<i>Eit oh merhat é konzet.</i>	<i>Evidoc'h eo e komzit m'oar vad !</i>
<i>Kollet omb !</i>	<i>emaomp devet</i>
<i>Ur hrechén mat on mé !</i>	<i>Me zo eur c'hristen mad</i>
<i>Guel grechénion ne vou ket kavet nag é Pleuignér na memb é Landaul</i>	<i>na vo ket kavet unan gwelloc'h nak e Kleder nak e Lanndi</i>
<i>(Ean e goeh ar é grabaneu)</i>	<i>(Koueza a ra war e grabanou)</i>
<i>Eit ou skontein, petra gobér?</i>	<i>Penaoz en em gemeret evit o spounta?</i>
<i>Ken e sonnou en Anjelus én ur chapél penag tro-ha-tro</i>	<i>Da c'hortos an Anjeluz da zeni en eur chapel bennak diwardro!</i>
<i>Eit ou dihousk petra gobér ?</i>	<i>Penaoz ec'h en em gemerimp 'vit o dihuni ?</i>
<i>me lakou mé en huen de grol én é chaucheu !...</i>	<i>neuze e vezo lakeat ar c'houenn da zansal en e lerou.</i>

En Ozeganned	Ar C'hornandoned
<i>Malinrous</i>	<i>Satordallik</i>
<i>Ar ha ziùar</i>	<i>War da zivesker</i>
<i>Me gred</i>	<i>'meus aoun</i>
<i>Hemb kavouit pen erbet de me hent</i>	<i>Hep kaout hent ebet da vont er-meaz</i>
<i>Un toullad chistr e gasan mé hinnéh d'er gér</i>	<i>Eur sac'had mad a jistr a gasan hizio d'ar gear</i>
<i>Elkent</i>	<i>Fidandoustik</i>
<i>Afé</i>	<i>Bah</i>
<i>Er bareu edan ou sam</i>	<i>Ar skourrou dindan o sammoù</i>
<i>Ken e dorh</i>	<i>Ken na dorre</i>
<i>Kent ma vou groeit er chistr neué ret é ivet en hani kouh</i>	<i>Pec'hed eo ober faë war an traou mad a ro d'eomp</i>
<i>Ne lauskein ket mé ataù me lod get er réal</i>	<i>Ne lasokin ket va lod da vont gant eun all</i>

<i>É pé korn ag er lann é on arriù</i>	<i>E pe gorn eus al lanneg emañ breman</i>
<i>(Goudé ur poz)</i>	<i>(Goude eun ehan)</i>
<i>Noz dal</i>	<i>Noz-du dall</i>
<i>Malinrous</i>	<i>Mil gutez</i>
<i>Ha me heh Jann-Mari</i>	<i>Ha va faourkeaz Mari-Jann</i>
<i>Un “turlutu” ag er ré braùan</i>	<i>Eun “turlutu” hag unan brao</i>
<i>Un tammig farz e gasan hoah dehi ag er pardon</i>	<i>Eun tammig farz gwiniz a gasan ivez d’ezhi da c’hellout kaout an tanva eus ar morlarjez mad a zo bet hizio e ti va zonton koz</i>
<i>Trouz</i>	<i>Eun tamm trouz</i>
<i>Betag Brambis</i>	<i>D’ar Genkiz</i>
<i>Er hueh ketan ma pasehet é me repér</i>	<i>Er wech kenta ma tremenoc’h a-biou d’am zi</i>
<i>Bout mar don meù ne glaskan ket chom de dremen en noz ama</i>	<i>Daoust d’in da veza mezo ne c’houlennan ket chom da dremen an noz e kamb ar stered</i>
<i>Deit de ziskoein d’er heh meùer en hent d’er gér</i>	<i>Deuit en han Doue da ziskouez e hend d’eur paourkeaz mezhvier dianket</i>
<i>M’hou kleu erhoal é vourboutat ardran er garh</i>	<i>Me glev ac’hanoc’h mad a-walc’h o fistoulat adre kein ar c’harz</i>
<i>Mil malleh ru</i>	<i>Mil gutez</i>
<i>Guileu en Aroarek</i>	<i>Gwillou an diwarlerc’h</i>
<i>Fourch ar er garh</i>	<i>Sav a-c’haoliad war ar c’harz</i>
<i>Chè mé! Chè mé!</i>	<i>Gortoz! Gortoz! War evez emañ?</i>
<i>Malinbrek! Ker ponér hous el ter ruchen gurén d’en dilost han</i>	<i>Krog oun, bez dinec’h!... Satordallik, ker pounner out ha teir gestad wenan da ziben-eost</i>
<i>É kreis er lann</i>	<i>e-kreiz al lanneg</i>
<i>Allas! Kollet em es en hent e gas betag er Bod-Kelen</i>	<i>Siouaz, kollet am eus hend Kergelen</i>
<i>Ar er bratel</i>	<i>War al letoun</i>
<i>Kousket ama?... Nag er bleidi, ne chonjés chet?</i>	<i>Ama? N’emaomp ket c’hoaz e miz Eost, hag ar bleizi, paourkeaz, ne zonjez ket?</i>
<i>Me chonj erhoal én ou chivleu, én ou deulagad e huélér é splannein de noz el goleu</i>	<i>Me zonj a-walc’h en o daoulagad a weler o lugerni evel goulou pa deu an noz, en o skilfou lemm-aotenn.</i>
<i>Én ur bégad</i>	<i>En eur c’henaouad</i>
<i>É kov ur blei bout interret</i>	<i>E kof eur bleiz beza besiet</i>
<i>Petra gobér, sonnamb hun deu</i>	<i>Kanomp, Gwillou, kanomp</i>
<i>Son té ketan: me reskondou</i>	<i>Aze ‘ma ‘n taol! Kanomp hon-daou kement ha dek</i>
<i>Ér hoèdeu don, pe splann el loèr, pe harh er chach a gér de gér, boèhieu er bleidi e gleuér</i>	<i>Er c’hoajou doun, el lanneier, pa harz ar chas a ger da ger, yud ar bleizi-noz a glever</i>
<i>Iann Kéribot</i>	<i>Job en Darzel</i>
<i>Glubet em es rah me lavreg!</i>	<i>Ma tiver an dour-c’houez diouzin war al lanneg</i>
<i>Ma krénan el en dil ér gué pen des aùél</i>	<i>Ma krenan evel eur bern deliou ouz ar gvez pa vez avel</i>
<i>Gortoz perchanj er marù eué</i>	<i>Da c’hortoz ar maro ivez, da gredi eo</i>
<i>Me lar mé d’is; sorset omb bet</i>	<i>Sorset omp bet, paotr keaz, pa lavaran dit</i>
<i>Deu volad chistr</i>	<i>Diou skudellad chistr</i>
<i>Un dram penag en des taulet é men gurén</i>	<i>Eul louzou-skol bennak en deus taolet em evaj</i>
<i>Er gast a zen</i>	<i>Eun diaoul a zen</i>
<i>D’er galeeu e telieher kas tud ker fal</i>	<i>D’ar galeou e tlefed kas tud ker fall-ze</i>
<i>Pé d’en ihuern get en diauled</i>	<i>Pe d’an ifern gant an diaoulou</i>
<i>Eit ma veint losket én tan biù</i>	<i>Ma vezint rostet ha losket en tan bev</i>

<i>En ettretant ne gavemb ket eit monet d'er gér hent erbet!</i>	<i>E-keit-ze ne gavimp hend ebet, 'meus aoun, da vont d'ar gear</i>
<i>Ahoèl pe garehé el loér dibouk pen hé fri!</i>	<i>Ma karfe al loar da vihana dispaka beg he fri</i>
<i>Étal on</i>	<i>Em c'hichenn</i>
<i>A dural, kousket hinnèh é kreis er lann, en nihour ar ur bern plouz é sulér Jak er Mér, nen dé ket goah!</i>	<i>Hag a-hent-all n'eo ket gwasoc'h kousket hizio e-kreiz al lanneg eget ne oa hen ober deac'h da noz war eur bern plouz e solier Olier ar Rouz</i>
<i>Ahoèl ne gavemb ket logod amen él ér sulérieuse, malinbrek!</i>	<i>Aman, da vihana, ne vezo ket ar c'hoz logod daonet-ze o troial war va zro, evel ma vez er solierou brein-ze</i>
<i>Lakeit em boé penneu sausis é me sah-jilet en nihour é chonjal ou havouit de vitin eit men déjun</i>	<i>Lakeat em boa eun nebeud silzigennou e godell va sac deac'h da noz, o sonjal o c'haout er beure-man d'am dijuni</i>
<i>Er logod en des int débret ha toulet me jilet el un tanouiz</i>	<i>Al logod o deus o c'havet mad ha toulet d'in va saë evel eun tamouez</i>
<i>Sel ta! Afé</i>	<i>Sell, ya 'vad! Bah!</i>
<i>Mes dommaj ou des groeit t' ein ur sort, ché!</i>	<i>Mez dommaj o deus great d'in evelato!</i>
<i>Bout er goal chonjeu-sé ér méz ag ha ben, ché, Gulieu ha kouskamb!</i>	<i>Che! Kas ar zonjeu-ze eus da benn, Gwillou, ha kouskaze em c'hichenn</i>
<i>Ha, Santez Anna beniget</i>	<i>Ha ! santez Anna venniget</i>
<i>Nen des chet meit en dud hemb péhed hag e hel dirohal ker kriù-ma!</i>	<i>N'eus nemet an dud hep pec'hed hag a c'hellfe roc'hal ker krenv</i>
<i>Pardon bras e oé hiniù é Sant-Kornéli</i>	<i>Morlarjez a oa hizio</i>
<i>Er chistr en des krapet d'ou fen, en des brumenet ou deulegad ha n'ou des chet anehé kavet en hent de vont d'er gér</i>	<i>Ar chistr savet d'o fenn en deus brumennet o daoulagad ha n'o deus ket gellet kaout hend ar gear</i>
<i>é tibouk ar el tér-hoari</i>	<i>oc'h en em gaout</i>
<i>Deù veür get ou horvad chistr gourvéet</i>	<i>daou vezvier gourvezet gant o c'hovad</i>
<i>Petra gobér? ... Sel, Yvonik, ur braù a chonj e zou deit t' ein</i>	<i>Penaoz...? Sell, Yvonik, eur zonj vrao a zo deuet em spered</i>
<i>Pé chonj</i>	<i>Pehini</i>
<i>(Skoëin e hrant a bouiz ou nerh ar diardran er veürion hag ind e rid ér mez)</i>	<i>(Skei a reont krenva ma c'hellont war du a-drenv ar vezvierien, hag e redont er-meaz.)</i>
<i>kré pemoh !</i>	<i>kre penn-oc'h !</i>
<i>Deit hous de vout fol perchanj ?</i>	<i>Eat eo da benn e belbi e doare !</i>
<i>Na té ? Kredein e hres é omb ama aveit hoari ?</i>	<i>Ha te, kredi rez emamp aman 'vit c'hoari ?</i>
<i>Lakat er réral de zihousk, én ur skoein ker kriù ar ou diardran !</i>	<i>Lakaat ar re-all da zihuna o skei ker krenv war o zu a-drenv</i>
<i>Ia, té é. Pen dé guir penaus nen des chet meit omb hun deu ama, ne hellan ket elkent laret é ma matèh er person é.</i>	<i>Ya, te eo ! Ha p'eo gwir n'eus nemedomp hon-daou aman, ne c'hellan ket lavaret koulskoude eo matez ar person an hini eo !</i>
<i>Kré geuiardour brein !</i>	<i>Kre gaouiad brein</i>
<i>lausk ahoèl er réral de gemér ou repoz</i>	<i>laosk evelato ar re-all da gemeret o repoz</i>
<i>é leh bout é hobér farseu ker lous</i>	<i>E leac'h ober farserez ken divalo</i>
<i>guel vehé d'is ivet bihanoh a lagout</i>	<i>gwell e vefe d'it eva nebeutoc'h a lagout</i>
<i>mes pas ér fèson sé, milion ru !</i>	<i>mez ne vez ket great a draou evelse, evelato !</i>
<i>Ha donet hoah de chokein er réral goudé en devout groeit kement a zroug dehé !</i>	<i>Ha dont c'hoaz da ober goap eus ar re-all, goude beza great kement a zroug d'ezo !</i>
<i>ma ne t'es chet hoand de gousket ké de vrechen malleh ru !</i>	<i>Ma n'az peus ket a c'hoant kousket, kea da zutal pel ac'halenn</i>
<i>mes ne t'es chet dobér de zonet mui de hoari elsé ar me zro, pé ma tivoleùou</i>	<i>mez na deuez ket evelse da c'hoari war va zro-me, pe m'ez tivouzello</i>
<i>Ne vein ket me pel é tonet de ben ag ur blazér el hous té</i>	<i>Ne vezin ket pell evit dont a-benn eus eur c'hoz tra fall 'veldot-te !</i>

<i>ur hah kreùet</i>	<i>eur c'haz pourset</i>
<i>ur gavr, ur gavr</i>	<i>eur c'havrig !</i>
<i>Ha cher ha veg pé m'er stankou</i>	<i>Ha serr da veg pe m'her stanko d'it</i>
<i>M'er cherrou pe hrei plijadur d'ein malinrous !</i>	<i>M'her serro pa blijo d'in, mil gurun !</i>
<i>Na pé ur chonj ! Ean e gredé perchanj penaus n'em behé ket bet gouiet !</i>	<i>Na pebez sonj drol ! Hennez a grede, m'oar vad, n'am bije ket gouezet</i>
<i>Toudidou ! Blonset en des men dibunér</i>	<i>Sac'h an dien ! Blonset en deus va diou feskenn !</i>
<i>Nen des chet anehon meit dont éndro !</i>	<i>Ha ! ma kar dizrei eo</i>
<i>Sakoustelé</i>	<i>mil gutez !</i>
<i>Ret e vou d'ein monet arhoah de gavouit er medesinour.</i>	<i>Biskoaz ! red e vo d'in mont da gaout ar c'houracher.</i>
<i>Anséamb hoah gobér un hun aral ur sort</i>	<i>Gwelomp hag eur mored all a c'hellimp ober</i>
<i>Afé, kouskamb hoah un tammig elkent aveit gortoz en dé</i>	<i>Fei ! Kouls eo ober eur pennadig kousg c'hoaz da c'hortos an deiz</i>
<i>é tisoñ ag er menhir e gan</i>	<i>o tont eus a-dre kein ar mean-hir, a gân</i>
<i>Mes... nen des chet moïand d'ou dishousk</i>	<i>Mez... N'eus moien ebed d'o dihuna</i>
<i>Pas, mem bugalégeu. Nen dint ket marù anehé mes hou sonneneu</i>	<i>Nan, va bugale, n'int ket maro mez ho kanaouenou</i>
<i>ha mar ne zihouskant ket er hueh-ma, ni huélou arlerh petra gobér.</i>	<i>ha, ma ne zihunont ket ar wech-man, ni ouezo petra d'ober.</i>
<i>Mem brér krechèñ</i>	<i>Oh ! Va breur paour</i>
<i>rag meùet em es, meùet em es</i>	<i>rak en em vezvi 'meus great, en em vezvi 'meus great</i>
<i>Na mé naket</i>	<i>Na me kennebeud</i>
<i>Dihousket mat e oen</i>	<i>Dihun mad 'oan</i>
<i>N'em es chet bet kement a skont el hanneh elkent</i>	<i>N'am eus ket bet kement a aoun hag hennez evelato</i>
<i>Koustelé en des hoah kardellet é lavreg</i>	<i>krena rea ken na flerie</i>
<i>Ur hlinuèd penag e hrei hoah perchanj, arlerh er skontaden ma.</i>	<i>Eur c'hlenved bennak a dapo zur diwar goust ar spoutadenn-man</i>
<i>Afé, be zou tud gouïù ar en doar elkent !</i>	<i>Fei ! beza zo tud aounik war an douar evelato !</i>
<i>Eit ma hellou ésat en dud,</i>	<i>'Vit ma c'hello gwellaat an dud</i>
<i>Hag a dural, mar des unan a n'omb e zou bet skontet</i>	<i>Hag a-hent-all mar deus bet spoutet unan bennak ac'hanomp</i>
<i>Mes cheleu ta, kré huizour</i>	<i>Set' aze vad eur marvailh all ! Me krena ! Kre diot zo ac'hanot</i>
<i>Eit diskoein d'is penaus n'em es chet eun erbet anehé, é han aben d'ou galhùein de zonet éndro</i>	<i>evit diskouez d'it n'am eus ket bet a aoun razo, ez an d'o gervel da zont en-dro</i>
<i>Aveit galhùein er bugul-noz, Nen des meit huitellat de noz</i>	<i>Evit gervel ar bugel-noz Tra awalc'h eo sotal en noz</i>
<i>(En ozeganned hag er bugul-noz e za éndro, éñ ur sonnein hag éñ ur hobér en dro d'en neu veùér skontet.)</i>	<i>(Ar c'hornandoned hag ar bugel-noz a deu en-dro en eur gana hag en eur en em deurel war an daou vezvier spoutet.)</i>
<i>Me heh Gulieu !</i>	<i>Paour keaz Gwillou</i>
<i>Hum honfortamb elkent hun deu</i>	<i>En em gennerzomp kenetrezomp</i>
<i>Meùet e hues</i>	<i>En em vezvi ho peus great</i>
<i>jujet oh bet</i>	<i>barnet oc'h bet</i>
<i>Tri tro krol e vou ret t'oh gobér get en ozeganned, hag a pe vou troeit en drived, ma ne hues chet achiùet er sonnen, ni hou krougou é blein ur huéin</i>	<i>Teir dro-zanz a vezo red d'eoc'h ober gant ar c'hornandoned ha, pa ho pezo great an drede, ma ne echuit ket ar zon, ni ho krougo ouz skourrou ar wezenn aze</i>

<i>Chetu guerso n'em es chet mé krollet</i>	<i>setu eur pennad abaoe ma n'oun ket bet o tansal</i>
<i>A houdé fest me zad-kouh, me gred</i>	<i>abaoe eured va zad koz, me gred</i>
<i>Me heh Gulieu, follein e hrés !</i>	<i>Paourkeaz Gwillou emaut o vont e belbi</i>
<i>Ma ne houiet ket krol hui e ziskou genemb</i>	<i>Ma ne ouezit ket dansal ni ya da zeski d'eoc'h</i>
<i>Kenevé sé</i>	<i>anez da ze</i>
<i>Mar plij genoh arsau un tammig, tuchentil !</i>	<i>En han Doue paouezit eun tammig, tuchentil !</i>
<i>Nozeh vat t'oh, tud fariet</i>	<i>Nozvez vad d'eoc'h, tud dianket</i>

Traoù heñvel:

*Mar doh fariet me ziskoei d'oh hous hent eué vs. Ha mar doc'h kollet hoc'h-unan, me ziskouezo d'eoc'h hent ivez*

*Kleuein e hran unan penag é fourbouchat ér bod-drein sé vs. Klevet e ran unan bennak o filbouchat er bod drein-ze*

*Krénein e hran kement vs. Krena 'ran kement*

*Get ur hraù pé deu ha verh e houriou éndro ha jilet vs. gant eur c'hraf pe zaou da verc'h a c'hrio d'it da zaë en-dro*

*Farsal e hrér marahueh vs. Farsal a rear meur a wech*

*Kredein e hré guélet en diaul vs. kredi rea gwelet an diaoul*

*kredein e hran nen dé ket mé é, kansort ; krenein e hret hoah get hou korvad eun, el pe vehé lan a erh hou lavreg ! vs. kredi ran n'eo ket me eo, konsort ; krena rit c'hoaz gant ho korfad aoun evel pa vefe leun a erc'h ho lavreg*

*(Huitellat e hra un taul pé deu.) vs. (Sutal a ra.)*

*Pen dé guir e hues achiùet er sonnen hemb fari, ni e ia bremen de ziskoein d'oh en hent e hues kollet vs. P'eo gwir ho peus gelllet echui ar zon difazi, ni ya breman da ziskouez d'eoc'h an hend ho peus kollet*

**Stagadenn-vihan: taolennoù 4&5**

**Lakaad tal-ha-tal Katekizioù disheñvel**

Katechim Eskopti Guéned 1939	Bro Gourin hag ar Faouët 1929
(Salud en Arhél)... hui e zou beniget drest en ol groagé	(Salud an Arc'hel)... beniget oc'h drest an oll groagez
(Kovézion er péhedeu)... em eus péhet bras	(Kovézion ar pec'hejou) abalamour am eus pec'het bras
(Gourhemenneu en Eutru Doué) Arsaù pep sul a labourat, eit chervijein Doué devot mat	(Gourc'hmennoù an Aotrou Doue) Miret a ri an oll sulioù, gant euvrou mat ha pédennoù
X	(Akt a Feiz) O c'hredi a ran, ma Doue
X	(Akt a Gontrision) Ho pedi a ran, dre veritou Jezus-Krist d'am fardoni.
(p.15) Er baradouiz e zou ur léh a leuiné ma huélér énonn en Eutru Doué...	(P.14) Ar baradoz z o eur lec'h leun a blijadurioù, é pehini e vo eun eusted o welet hag o karout Doue.
(P.17) Devéhatoh é ta er Rouañné-Maj ag er saù-hiaul doh splandér ur stiren ligernus, hag é kenigant dehon eur, ansans ha mir.	(P.15) ... ha kenig a rant aour, ezans ha mir.
(P.17) Mes ne oé ket Jézus én ou mésk.	(P.16) Mes Jezus ne oa ket én o mesk.
(P.17) Ean a huella d'er ré klan, e saù er ré varù de viù, e gresk er biùans, e laka en aùel de goéh én un taul dré ur gir hemb kin.	(P.16) Guéllat a ra ..., kreski a ra..., lakat a ra...
(P.17) ha ean keméret deuzek aveit gobér apostoled anehè ha lakeit sant Pièr de vout mestr drest er réral.	(P.16) choaj a ra en o mesk daouzek abostol, ha lakat a ra Sant Per da vestr var ar ré all.
(P.17) hag ind e laka én ou chonj er lahein.	(P.16) ha dont a ra en o zonj en lakat d'ar maro.
(P.23) Men é kavér... - Kavein e hrér merchet berroh...	(P.23) Pelec'h éma merchet berroc'h... -Ar gréden gristen zo merchet berroc'h...
(P.30) Nepas, ind e gollas kent pel ou stad santél hag eurus...	(P.30) Nann, koll a rant hemp dalé o stad eurus o tizenti ouz Doue.
(P.31) ind e oé bet forbañnet ag er léh bourus ma oent...	(P.31) Kaset oent er mez eus an dachenn gaer e lec'h ma oant...
(P.32) Nepas, en Eutru Doué ne zilézas ket mab-dén arlerh é béhed; ean e geméras truhé doh-ton, ha diar-zé e hratas dehon ur Salvér.	(P.31) Nann, an Aotrou Doue ne zilezas ket mabden arlerc'h é bec'hed; kemér a ras truéz outan, hag adalek neuzé e brométas d'hon eur Zalvér.
(P.32) forhet omb bet hembkin, én ur zonet ér-bed-men, ag er madeu en doé kollet hun hetan tad aveit-ton hag aveit-omb.	(P.32~33) dont a ramb ér bed-man hemp ar madou kollet gant hon tad kentañ evitan hag evit é vugalé
(P.43) Ha ni e zeli kredein...? Ni e zeli kredein...	(P.45) Ha dléet é d'imp kredi...? Ia, dléet é d'imp kredein

**Inf. V e gwenedeg klassel:**

kassein e hra fonnabl soudarded de Véthléem

Merùel e hra, guénér er groéz, én ur bardonein d'é éneberion hag én ur genig é vuhé d'é Dad aveit salvedigeh en dud.

Chom e hra épad deu-uigent dé get é Apostoled aveit achiù ou diskein ha laret dehé er péh ou doé d'obér.

Penaus é hrér sin er groéz? -Gobér e hrér...

Perak é larér é ma mat en Eutru Doué? – Larein e hrér é ma mat en Eutru Doué...

Donet e hrant (*kleñvedoù ha drougoù*) ag er péhed hag a hoannedigeh mab-dén.



Padein e hrei perpet (eneñv)

Ha gellein e hrér laret é omb bet kastiet diarben ur péhed groeit dré un aral?

Penaus é hellér hanaouit -Gellein e hrér hanaouit

Ha padein e hrei perpet guir Iliz hur Salvér? (Ha padout e rei bépred ar guir Iliz?)

Ha gellein e hrér bout salvet, mar bér ér méz ag en Iliz?

**Traoù dibar:**

perak en tri personn-sé nen dint meit un Doué hemb kin?/Perak an tri fersonn-se ne dint nemet eun Doue hembkin?; Perak hur Salvér en des vennet andur kement a boénieu? (Perak en deus fellet d’hor Zalvér andur kement a boaniou?) (med *perak é ma marù hur Salvér Jézus-Krist?*)

*Hag ean e zou -Ia, be zou vs. Ha bout e zo -Ia, bout e zo*

Katekiz Eskopti Kemper ha Leon 1908	Kanton en Arhanaou 1934
(P.4) Ober a reer sin ar groaz o kas ann dorn...	(P.16) E kass en dorn déhaou d’en tal...
(P.7) Kenta tra a zesk d’eomp ar Gredo eo...	(P.19) Er Gredo e zéska d’oumb, ...
(P.8) c’hoant en deuz da zavetei ann dud holl...	(P.20) Héon ‘zézir sauveign en ol dud...
(P.9) Hag ez eus tri ferson e Doue?	(P.20) Ha bout ‘zo tri ferson é Doue?
(P.9) Ia, par int ann eil d’egile e peb tra	(P.21) Ia, hé ‘zo éngal en eil d’er-guilé é peb tra
(P.10) Ha kendalc’het o deuz-hi holl er stad-se?	(P.22) Hag en ol Aelet ‘zo chomet er stad-se?
(P.10) Penaoz e hanver ann elez...	(P.22) Penost é ve haonet en Aelet...
(P.10) Ho henvel a reer...	(P.22) Haonet int...
(P.11) Pe ar c’horf, pe ann ene, eo al lodenn vella euz ann den?	(P.23) Pé er horv, pé en énaon ‘zo er loden guellaon ag an dén?
(P.11) Ann ene eo al lodenn vella...	(P.23) En énaon ‘zo er loden guellaon...
(P.12) Kendalc’her a rejont-hi er stad euruz-ze?	(P.23) Adam hag Eva, ha hè e chomaz er stad üruz-se?
(P.13) N’euz den all ebet nemethi hag en defe bet ar c’hras-se...	(P.24) Hi hembkèn en nes bet er hras-se...
(P.15) Goudeze e prezegaz ann Aviel...	(P.26) Arlerh, Héon e brégaz en Aviel...
(P.16) Nann, ober a rejont brezel d’ezhan...	(P.27) Nan, hè raz brezel dehon...
(P.27) Ar zuliou santel a viri, e servich Doue, oc’h he veuli	(P.37) Cess peb sul a labourat, ewit jervijeign Doue devot mad
(P.29) Pec’hi a reer a enenp...	(P.39) Pihet e vé éneb...
(P.31) Hag ober a dleer avechou aktou...	(P.41) Ha gober a dellamb guéhêdaou...
(P.32) Hag ar Verc’hez Vari, he adori a c’hellomp-ni ?	(P.42) Ha ni e hel adoreign er Werc’hez Vari ?
(P.55) benniget oc’h...	(P.61) hui ‘zo béniguet...

*Inf. V* a vez kavet kalsig e-barzh Katekis kanton en Arhanaou: un dra troet ger-ha-ger diwar batrom Katekis Eskobti Kemper ha Leon, koulskoude n’eo ked bet un dra digomprenapl ewid an dud-se, petramant e rankemp chañch an urz evel ma so bet gwraet ewid ar gerioù.

**Stagadenn-vihan: taolenn 6~11**

**Lakaad tal-ha-tal ar Mab Prodig**

Mammenn: Le Besco, Patrick. *Variations bretonnes sur la parabole de l'Enfant Prodigue*. TIR. 2016.

Gwersennoù 13, 14, 15, 16, 17, 18, 20, 28

**Galleg**

PP.222-224

**KLT**

P. Ar C'hoat PP.25-29

P. Carné PP. 30-31

P. Conan PP. 32-33

P. Doucin PP.33-35

P. Graveran PP.35-37

P. Joguet PP.37-38

P. Jacques Jourden PP.38-40

P. Jean-Philippe Le Coent PP.40-41

P. Le Coz PP.42-43

P. Le Fur PP.43-44

P. Le Hir PP.45-46

P. Moallic (Rieg, tech parlant ar barres-man a vez gwelet) PP.47-48,

P. Le Puyferre PP.49-50, fin an 18ved kantved

P. Tabou PP. 50-51

Jacques Le Brigant PP.61-62, 1799

Jacques Le Brigant&Le Gonidec PP.63-64, 1808 (ur stumm reizhet ged Le Gonidec)

Le Gonidec PP.64-66, 1808

P. Jean-François Talgorn PP.69-70, 1836

John Jenkins PP.70-71, 1847

Laméhaussé PP.72-73, 1853

P. Jean-Guillaume Henry PP.74-75, 1858

John Jenkins 2 PP.75-76, 1860

Gabriel Morvan PP.78-79, 1871

P. Pierre Le Sann PP.79-80, 1892

Guillaume Le Coat PP.82-83, 1897

John Jenkins 3 PP.84-85, 1897

P. Eugène Héry PP.106, 1899

P. Jean-François Caer PP.85-86, 1904

P. Jean Quéré PP.112-114, 1906

P. Louis-Marie Biler PP.88-89, 1907

P. Yves-Marie Madec PP.111-112, 1929

P. Jean-Marie Uguen PP.92-93, 1930

P. Jean-Marie Perrot (&J. Le Bayon) PP.109-110, 1912

Loth Berrien 1890 PP.198-199

Loth Landerne 1890 PP.210-211

Loth ar Faoued 1890 PP.213-214

Loth Bro-Dreger-Goueloù 1890 PP.216-217

## Gwenedeg

Dorn-skrid Santes-Anna PP.51-54

Dorn-skrid Gwened PP.55-57

P. Jean Marion PP.100-101, fin an 18ved kantved

P. Jacques Giquello PP.66-67, 1818

P. Corneille Le Diot PP.102-103, 1854

P. Jean Dano PP. 76-77, 1861

P. Jacques Larboulet PP.86-88, 1904

P. Jérôme Buléon PP.107-108, 1911

P. Jégouzo PP.108-109, 1912

P. Joseph Le Bayon P.109, 1912

P. Jean-Baptiste Oliero PP.90-91, 1912

P. Sylvestre Séveno PP.91-93, 1913

E. Ernault Sarzhaw 1876-1878 PP.192-193

Loth Gerueur 1890 P.196

Loth ar Gemene 1890 PP.201-202

Loth an Houad&an Houadig 1890 PP.204-2

Loth Groe 1890 PP.207-208

**Gwersennoù e galleg (*La Bible de Jean-Jacques Bourassé 1886*):**

13. <i>Peu de jours après, le plus jeune fils, ayant amassé tout ce qu'il avait, s'en alla dans un pays étranger fort éloigné, où il dissipa tout son bien en vivant dans la débauche.</i>
14. <i>Après qu'il eut tout dépensé, une grande famine survint en ce pays, et il commença à être dans l'indigence.</i>
15. <i>Il s'en alla donc, s'attacha au service d'un des haitants du pays, qui l'envoya à sa maison des champs pour y garder les pourceaux.</i>
16. <i>Et il eût été bien aisé de satisfaire sa faim avec les glands que les pourceaux mangeaient : mais personne ne lui donnait rien.</i>
17. <i>Rentré en lui-même, il dit [...]</i>
18. <i>Je me lèverai, et j'irai trouver mon père, et je lui dirai : Mon père, j'ai péché contre le Ciel et contre vous ;</i>
20. <i>Il se leva et vint vers son père. Il était encore loin, et son père l'aperçut, et fut touché de compassion ; et courant à lui il se jeta à son cou, et le baisa.</i>
28. <i>Celui-ci, indigné, ne voulait pas entrer dans la maison ; mais son père sortit et l'en pria ;</i>

**Gwersennoù e latin (fin ar IVved kantved~penn-ketañ ar Vved kantved):**

13. <i>Et non post multos dies, congregatis omnibus, adolescentior filius peregre profectus est in regionem longinquam, et ibi dissipavit subsatantual suam vivendo luxuriose.</i>
14. <i>Et postquam omnia consummasset, facta est fames valida in regione illa, et ipse cœpit egere.</i>
15. <i>Et abiit, et adhæsit uni civium regionalis illius: et misit illum in villam suam ut pasceret porcos.</i>
16. <i>Et cupiebat implere ventrem suum de siliquis, quas porci manducabant: et nemo illi abat.</i>
17. <i>In se autem reversus, dixit [...]</i>
18. <i>surgam, et ibo ad patrem meum, et dicam ei: Pater, peccavi in cælum et coram te:</i>
20. <i>Et surgens venit ad patrem suum. Cum autem adhuc longe esset, vidit illum pater ipsius, et misericordia motus est, et accurrens cecidit super collum ejus, et osculatus est eum.</i>
28. <i>Indignatus est autem, et nolebat introire. Pater ergo illius egressus, cœpit rogare illum.</i>

	Le Puyferre	Jacques Le Brigant 1799	Jacques Le Brigant&Le Gonidec 1808	Le Gonidec 1808	John Jenkins 1847	Gabriel Morvan 1871	Eugène Héry <sup>427</sup> 1899
13.	Ac aben un nebeud derveziou goudeze, ar yaouanca o cass gantan quemet en doa, a ïeas en eur vro bell; ac eno e tispignas e vadou tout o veva el libertina'h.	A neubed gondé, ar mab iouank gant é all draou a bartias évit éur vro bell ag enò a daibras, è vado en eur vevan dreist muzur.	Ha nébeut goudé, ar mab iaouañkañ gañd hé holl dreo, en eun [sic] lakaaz enn heñd évid éur vrò bell ag enò a debraz, hé vado ô vévañ gañt gadéles.	Hag eunn nébeud dervésiou goudé, ar mab iaouañka, ô véza dastumet kémeñd en dôa, en em lékéaz en heñd, évit moñd étrezég eur vrò bell meurbed, hag éno e tispiniaz hé zanvez ô véva gañt gadéles.	Hag un nebeud devesiou goude, ar mab iaouanka o veza dastumet tout, az eaz kuit da ur vro bell, hag e tispiniaz eno e vadou, o veva en diroll.	Abenn eun dervez bennac goude, ar mab iaouanka a reas he bacad da vont kuit euz ar gear. Ha setu heñ d'en em denna en eur vro bell, evit beva eno en he roll.	Eun devez benag goude, ar pôtr yaouañk a gemer ar pez a oa digouéet d'eañ ha setu héñ emez ar vro. Eno e rene eur vue diroll;
14.	A goude m'en doa dispignet e zanvez tout, e teuas eur famin vras er vro-se, ace commanças e-unan da gaout isom.	A pan efoé dispignet an oll, a deüas ar ghermes er v[r]o zé, ag à comensas caout fod.	Ha pan efoé dispigned ann holl, a c'hoarvéaz eunn naonéges vrâz er vrò zé, hag a deuas da gaoud ézomm.	Ha pa en dôe dispignet kémeñd en dôa, é c'hoarvéaz eunn naonéges vrâz er vrò-zé, hag é teuas da ézommékaat.	Ha pa en doe dispignet tout, e c'hoarvezaz un naonegez vraz er vrò-ze, hag hen a gommansaz beza en dienez.	Mes o ren ar vuez a rene, ar pez en devoa a deuzas buhan etre he zaouarn. Edo dija var an douar noaz, pa deuas eur gernez vraz er vro-se.	e zanve eta na harzas ket pell outañ. Doñd a eure neuze eur gernez vraz er vro, hag evit pellat an naon,
15.	Ac e zeas da servicha un den eus ar vro-se, pini er hassas da eur ferm en doa evit diouall ar mo'h.	Ag à as, ag en eun la kaaas en servi eun dénn euz ar vro zé, à énn cassas voar ar mez da vessa ar moh.	Hag a aas kuit, hag en eun lakaaz é gôpr gañd eunn dén euz ar vrò. Hag hé-mañ hen kasaz enn eunn ti d'ehañ war ar mez da vésañ ar môc'h.	Kuid éz éas-éta, hag en em lakaad a réaz é gôpr gañd eunn dén euz ar vrò. Hag hé-mañ hen kasaz enn eunn ti d'ézhañ war ar méaz, évit mésa ar môc'h.	Neuze ez eas, hag en em lekeaz gand unan eus a habitanted ar vrò-se, hag he-ma a gasa anezan d'e vesiou evit mesa ar moc'h.	Evit herzel oc'h an naoun, ec'h en em lakeas neuze e servich eun den euz ar vro. Hema her c'hassas da eun ti en doa var ar meaz da zivoal ar moc'h.	en em c'hopraas, hag e vestr a roas d'eañ ar moc'h da ziwall.
16.	Ac en doa hoant da garga e goff gat ar 'hloss a zebre ar mo'h, a den ne roë dezan.	ag an éfoa hoant dá gargan è goff, euz ar plusk à daibré ar moh, à dénn na rai déan.	Hag éfoa c'hoañd da gargañ hé gôv euz ar plusg a debré ar môc'h, ha dén na rôe d'éhañ.	C'hoañtéed en divijé leuña hé gôv gand ar c'hlosou a zebre ar môc'h: ha dén na rôe d'ézhañ.	C'hoanteed en divije leunia e gôf gnad ar c'hlosou a zebre ar moc'h; ha den na roe dezan.	Hogen ar mab prodic a vije bet joa ganthan carga he goff gat ar mez a zebre ar moc'h; mes ne gave den da rei dezhan.	Pegen trueüz e oa stad ar potr kez! C'hoañtât a re zoken ar mez a zebre ar moc'h: mes dén na roe d'eañ da zibriñ.
17.	ac antreet enna e-unan, e lavaraz [...]	Kend ar fin en eun sonjal én an è unan a laras [...]	Hôgen ô tistrôï d'éhañ hé unan a laras [...]	Hôgen ô véza distrôed d'ézhañ hé-unan, é lavaraz [...]	Neuze pa zistroaz dezan e-unan, e lavaraz [...]	Erfin, e tistroas ennan he unan hag e lavaraz [...]	Neuze e choñjaz er ger [...]

<sup>427</sup> Le Besco, Patrick. *Variations bretonnes sur la parabole de l'Enfant Prodigue*. TIR. 2016. P.106 “[...] et il a adapté pour les lecteurs de ce département le livre de Jérôme Buléon [...]”

18.	Sevel a rign, a mont a rign da gaout va zad, ac e livirign dezàn: va zad pehi am eus great a énep an cœ a dirazoc'h	Zevel à rin, ag à in dam zad, ag a larin dèan: ma zad, pehet emmeuz ouz an ev, à dirag oh.	Sével a rinn, hag a inn d'am zâd, hag a larinn d'éhaén: ma zâd, pec'het em euz ouz an eñv, ha dirag hoc'h.	Sével a-rinn, hag éz inn étrézé [sic] va zâd, hag é livirinn d'ézhañ: va zâd, pec'hed em euz a éneb ann énv hag enn hoc'h énep;	Sevel a rin, hag ez in da gaout va zad hag e livirin dezan, Va zad, pec'hed em eus a-eneb an nev, ha diragzoud;	Mes ne jommin ket mui; nan, mont a rinn da gaout va zad, ha lavaret a rinn dezhan; va zad, pec'hed am euz a enep Doue en oc'h enep-c'hui.	me yei-me da gaout ma zad, ha me laro d'eañ: "Ma zad, pec'hed am eus enep Doue hag enep d'ac'h!..."
20.	Ac o veza savet e teuas da gaout e dad; maes pa edo 'hoas pell e dad er goëlas, ac e galon a oue touchet gat truez outan, ac e redas d'e vriata, ac e poqas dezàn:	Ag en eun zével à deūas da è dad. Pa voa pèll hoas, è dad à voelas an éan, à leun à druetz à rédas, ag ag [sic] enn briataas, ag à pokas déan.	Hag ô sével a deuas d'hé dâd. Hôgen pa voa pell c'hoas, hé dâd a wélaz anéhañ, ha an éfoé trué out-hañ, hag o tirédek a lammas d'he c'houk, hag a pokas d'éhañ.	Hag ô sével, e teūaz étrézég hé dâd. Hôgen pa édô c'hôaz pell, hé dâd hen gwélas, hag en doé truez out-hañ; hag ô tirédek é lammas d'hé c'houzoug, hag é pokas d'ézhañ.	Hag e savas, ha e teuz etrezeg e dad. Mes pa oa hen c'hoas pell, e dad a ouelas anezan, hag en doe truez outan, hag o tiredec e lamaz d'e c'houzouc, hag e pokaz dezan.	Ha var gement-se, setu heñ en hent evit distrei da gaout he dad. He dad, o veza he remerket o tont a ziabell, en devoue truez outhan; en eur redadenn, e oue en he gichen ha kerkent e lammas d'he vriata ha da boket dezhan.	Zevel a reas 'ta; ha setu héñ 'treseg ar ger. A-ziabel, e dad a anaveas aneañ o toñt, hag en eur redaden, e oa ekichen e vap; hag e lañpas d'e c'houg, ha na skwize ket o vriata ar paour kez, hag o poket d'eañ.
28.	Mæs feq'et e oue, a ne falie quet dezàn antren; e dad eta o veza eat er meas, a gomansas d'e bidi.	Ma hlazas, à ne deur véé ket antrènn, è dad èt er mez, en eun lakaas dè bedin.	War gémeñt-se a c'hlazaz, ha na deurvée két moñd ébars. Hôgen hé dâd éed er mez, en eun [sic] lakaas d'hé bédin.	War gémeñt-sé é savas droug enn-hañ ha né fellé kéd d'ézhañ moñd-ébars. Hôgen hé dâd ô véza éad-er-méas, en em lakaas d'hé bidi.	Mes sevel a reaz droug ennan, ha na felle ked dezan antren: rag-se e dad az eaz er meas, hag a bedaz anezan.	O clevet an dra-ze, ar mab cossa a iecas drouc ennan, hag he dad o veza deuet h'he gaout.	O klevet an digemer a oa gret da heman, e vreur oa chomet er ger a yeas droug ennañ.

	Jean-François Caer 1904	Jean Quéré 1906	Jean-Marie Uguen 1930	Loth Berrien 1890	Loth Landerne 1890	Loth ar Faoued 1890	Loth Bro-Dreger-Gouelou 1890
13.	Nebeut deveziou goude, ar mab yaouanka, destumet ganthan he oll vadou, a iecas pel a zianveaz bro, hag eno e tispignas he	Hag eun nebeut deveziou goude, ar mab iaouanka, dastumet ganthan he oll beadra, a bartiag evit eur vro bell. Eno e tispignaz he	Eun nebeut derveziou goude, ar mab yaouanka o kas gantan kement en doa, a yeas pell, da eur vro estren, hag a zispignas	Hag un nebeut dezvezhioù goude-se, ar mab yaouankañ goude bezañ daspugnet kement en doa, en em lakas en hent, evit mont	Hag en nebeut dezvezhioù goude, ar mab yaouankañ, goude bezañ dastumt kement en doa, en em lakeas en hent evit	Hag un nebeut dezvezhioù goude ar mab yaouankañ, àr-lerc'h bout dastumet kement hag en doa, en em lake en hent, evit mont etrezek	Hag un nebeut dezvezhioù goude, ar mab yaouankañ, ouzh vezañ dastumet kement en doa, en em lakas en hent evit mont etrezek ur vro pell meurbet, hag eno ez

	zanvez o ren eur vuez direol	holl danvez en eur veva en dizurz.	eno e vadou o veva eur vuhez diroll.	trezek ar vro gwall bell, hag eno ez fouetas e zanvez en eur vevañ en diotaj.	mont etrezek ur vro bell meurbet, hag eno ez tispignas e zanvez ouzh vevañ en dizurzh.	ur vro pell meurbet, hag eno ez tispigne e zanvez e vev e-barzh an deboj.	tispignas e danvez ez vevañ en dizurzh.
eañ oè d'er memeus ker genein	LP	SVO
jamés kin ne basein dré er vered	SN	

Taolenn 4 korpus 4 diàr kenstrivadeg ar Falz

Guyonvarch Armand Lycée Dupuy de Lôme Lorient		
ur weh pennag, me zad noé laret dein monet de glask vrahad koet zéh get er garkell d'er gér oé añuet "ellaneieu"	LP	XSV
kar bout ni boé duzen un hangar	LP	boud V
hag mein nezé de vonet de glah	LP	diverb
més en noz oé arriù hoah	LP	OVS
ur hard' eur em oé laket i monet	LP	OVS
duzen em 'oé karget me harkell	LP	XVS
ha mein de zonet én dro d'er gér	LP	diverb
oé ket gwélet spéz kéin	SN	
m'oé choñjet oé un hent rell e oé beroh	LP	V1
hag èl m'a noz éma gwell dein kemér haneh	Isl	... V
mes ur hoed e zo de dreuzein	LP	OVS
ha mein tapet mad	LP	V1
kar me gleùé berpet treu i chuermal	LP	SVO
ha me harkell e ré trouz eùé	LP	SVO
me añsie monet en dousañ me hellèn	LP	SVO
mes er rod e chuerme	LP	SVO
ha ma rèdèn un tamig é ré kal goèh	Isl	... V
me laré é me fènn	LP	SVO
pé arriùein mein er gér me zraillo mein en tam karkell vrein man, na arrescht ket	Isl	... SV
arlèh n'ein ket mein kén de glah koet ken péll men pe dé en noz	SN	
mès kal goéh oé arriù hoah getn'ein	LP	XVS
ka pe oèn arriù é kreis er hoed me glaù un dra benag é tirohal	Isl	... SV
mès me grèdé oé er hoed oè i franchal get en auél	LP	SVO
mes me gleùé trouz goéh d'er hoéd	LP	SVO
hag enfin me wélas un dra du ar bord en hent a vouljé	LP	XSV
wezein mein d'er galop	LP	V1
ha d'er gir	LP	diverb
erfin m'oé losket me harkell	LP	XVS
ha d'er gér n'eur rideg ag n'eur grial	LP	diverb
e arrim ir gér, me zad e houléné genein petra oé arriù genein	Isl	... SV
ha me laré	LP	SVO
houian ket man dé en héol	SN	
mè més guélet un dra du a voulgé hag a zirohonné	LP	V1



nezen me zad n'oe gouiet oe un den meù benag e oe i kousket ar bord en hent braz	LP	XSV
a neze eañ oe oeit de glah er garkellad koed	LP	XSV
més me laré	LP	SVO
n'ein ket ken biskoah d'un tu benag surtout pen dé noz	SN	
més me zad ha rah en dud ag en ti hoarhé ha goalh endro mè larénen treu-sé [?]	LP	SVO
deu zen oe i falhad barh er hañpagne	LP	SVO
mes en noz e oe arriù arnehé	LP	OVS
el me oent é pas étal un ti inon anehé laras d'en arell	Isl	... SV
ni nes ket meid un dra d'obér	SN	
ni ia de houlen un dra benag de zébrein	LP	SVO
ha ni basei en noz ér foéneg	LP	SVO
nezen en deu zen e añtré én ti	LP	XSV
hag e houlen un tamm bara hag un tamm kig pebinon	LP	V1
pe oe reit un tamm bara-kig moh de bebinon éh oent oeit d'hin débren ér méz	Isl	... V
en dro monet d'er foeneg inon anehé e gol i damm kig hag i honet d'hin jérrah	LP	XSV
pe oe noz du eañ e jér un toseg é léh i damm kig	Isl	... SV
mes pe oe oeit d'ein trohein eañ e lar	Isl	... SV
kuiket pi diguiket hui zo reit dein	LP	XSV
hag m'hou tebo	LP	SVO
més p'en oe eañ debret en toseg, eañ e lar d'i gompagnon	Isl	... SV
eh an mein de bartiho	LP	V1
en arall e lar dehoñ "de bartio, pas alkent gorteit en dé"	LP	SVO
eh an mein de bartiho e-rog en dé	LP	V1
hag eañ e oe marù	LP	SVO

Taolenn 5 korpuss 5 diàr kenstrivadeg ar Falz

Michel Evanno (né le 21 avril 1940) "Le Chapeau-Rouge" Pluméliau (Mhan) au Lycée Joseph Loth Pontivy (Morbihan)		
en de monet de bourmen boe gaset me hi genin	LP	XVS
Oen e klask nehieu rahkoët	LP	V1
pe boe kerret deu pi tri kilomet boe selet ar me lerh	Isl	... V
gazimant boe eun	LP	XVS
ke arriu oen ir tachat touleu poharn(?)	LP	Pred V
neze oen oah bihan	LP	XVS
oant boe de vlejal get en eun boe	LP	OVS
kommens boe de bochtal	LP	V1
me selle ar me leh	LP	SVO
me selle em rock	LP	SVO
koehet boe ir radin	LP	V1
chomet boé azen	LP	V1
kousket boe? Marse	LP	V1
Atao digousket ven bet	LP	X Pred V
me selle	LP	SVO
donnet re er noz	LP	Inf V
pesa surprise boe bet	LP	OVS
me hi oe etal dein	LP	SVO

oe de me goartoz	LP	V1
diskoe boe me doarn dehou	LP	V1
doe ion pijet(?)	LP	V1
koutant ouen, me hi ha rah	LP	Pred V
atao kemeret boe kourage	LP	XVS
arriu boe er ger	LP	V1
huizein ren	LP	Inf V
me mam oe de me goartoz	LP	SVO
de men deulagad i ouie aset boe bet en dra bennek	LP	XVS
larret boe dehi petra oe arriu	LP	V1
e doe me gachteit untamig	LP	V1
debet oun doe koen	LP	V1
mes boé bet de gouesket forh eze hem debein	LP	V1
kavet boe mickey	LP	V1
a koutant ouen	LP	Pred V

Taolenn 6 korpuss 6 diàr kenstrivadeg ar Falz

Armand Guyonvarch 3ème B2 né le 17 mai 1942 à Château-Neuf en Bubry (Morbihan) Lycée Dupuy-De-Lôme Lorient (Mhan) Cours Supérieur Breton		
en noz dehan droeieu deg heur hantér un darhadenn e zihunan anein én un taul	LP	XSV
a gozég e oén bet blouarhet d'en drouz	LP	XVS
Laññ a jonjeu e oé deit d'ein	LP	OVS
me grédè e hè en dortoér de gouhel	LP	SVO
er goleuér troeias bout ru	LP	SVO
nezén, e chonjas d'en hoar e oé arriu én en "transformateur" ag er Lisé	LP	XVS
azé a m'em gwélé	LP	XVS
ag me ridas d'oh er fenéstr aveit zélet	LP	SVO
un darhadenn ral e darha	LP	SVO
aleh ur bér amzér me gleuas en nor vras e tigor	LP	XSV
hag e zas [ter auto] betag en "transformateur"	LP	V1
bout e oé diù a ré vras ré secour hag unañ vihañ	LP	boud V
tud e zichennas: er pompierejen	LP	SVO
get pileu ag e ré greinhan san doute hint e ras troienn en "transformateur"	LP	XSV
ha de garieu hint e zigoras en n'or meit n'o gobér bochad attention	LP	XSV
ag n'o guhet adran en n'or goudé e oé bet digoret hounañ	LP	XVS
nezé e arriuas eué un auto-ral kannu er PTT	LP	XVS
get ur skel é ré-man e entreas hem gober digarieu	LP	XSV
durann en amzér-sé én tuel ag en hent-pras rah en dud e oé doh hou fenestreu én hum houlenñ tré ti pesort tra e oé arriù	LP	XSV
hag un hantér-eur arleh rah e oént em hal leh	LP	XVS
hag rah en dud ag ou autoieue e oé oeit kuit	LP	SVO
a mé de vonet de gousket eué	LP	diverb
koutant a devoud gwélet un dra sorsé	LP	diverb

Taolenn 7 korpuss 7 diàr kenstrivadeg ar Falz

Job Morgant né le 13 décembre 1947, au lycée Dupuy de Lôme en classe de 5e M2		
Me wè er gér aveit vacans Pasq	LP	SVO
Pemzek déi hor bouè	LP	OVS
unan a me hamaradeù é wa deit de me gweled	LP	SVO
hag koutant e ùan é wa deit de bass i vacans ta dein	LP	Pred V
deù pe dri déi arlerh é wa yerhet	LP	XVS
ni boè laket hur jonj de monet d'obér un droéiat betag ur hoadig bihan	LP	SVO
ur vilo vraù e wa péuet dein get me zud aveit me bouarzek vlé	LP	OVS
hag é ùan jonjet mat d'i ensi	LP	V1
Un dé hag é wa hani en amzér ni n'im laka barh n'hent	LP	V1
ni e yé difoneik agost ne fotè ket d'in n'im chuiho	LP	SVO
un eur arlerh e wam wait kuit marsé	LP	XVS
me hamarat e uèl un nèh barh beg un ùenn	LP	SVO
ion e fotè dehon monet de glah non	LP	SVO
ni arachta	LP	SVO
hag éon e gomensa monet de beg er ùenn	LP	SVO
me lar dehon	LP	SVO
ya ya me sela mat mén krogon	LP	SVO
gosig oun yer	LP	XVS
me ùe sel d'ohton hen	LP	SVO
me uèl ur pikol camoulen vras	LP	SVO
hag é wa yerout arnim	LP	V1
en amzér e wa ponér	LP	SVO
hag é wa chetert kemér un anal	LP	V1
tuchantig hrei glaù bras!	LP	XVS
me hamarad e zichen bion ha bion	LP	SVO
ni e zaill ar ur bicycleteù	LP	SVO
hag n'im lakam de bédolo el me huè pet tout tan bar ur rèr	LP	V1
ni huizè agost en amzer pouk	LP	SVO
ni gauè genem ne uèhem ket bet yer james er gér	LP	SVO
ur pikol tapat glaù e goh ar me dran	LP	OVS
me greida houah huem gleb teil	LP	SVO
ar en tol ni bédalè bionnoh houah eid ne huèm rog	LP	XSV
ni e uè chereign hur bicycleteù bar hbranch duran e oa galù bras kohel	LP	SVO
ni vo jucht gèlet achap dizan en tapat kriuon	LP	SVO
mè bout e wa hiôl braù ken ben e ùam monet kuit	LP	boud V
ya mè arnañ e wa	LP	OVS
ni vo manket ur bourmenat vraù	LP	SVO
mè ni wa jonjet de monet en dro ma fotè d'en hiôl lugernein hoah	LP	SVO
er vacans vras e zo tost	LP	SVO
ha me zo coutant agost so lareit dein e ven pet oueit de bas ur miz ta me yon barh normandie	LP	SVO
hè gomança er blé man ur sedon	LP	SVO
moe chom er gér ur suhuniad rok monet kuit	LP	SVO

er lun vitin me saùe kours, de pinb heur hantér aveit tapout en autocar ei moned d'en Oriant de gemér en trén	LP	XSV
me laré kénavo de me zud	LP	SVO
ha me ya kuit	LP	SVO
me arriù en Oriant aveit eih heur	LP	SVO
dohtu dichenet ag en autocar me dap hent er gar	LP	XSV
ben é arrùon, on dein e laré dein é uèped arriù en trén barh ur hart d'heur	Isl	... SV
durant en amzér se me n'im laka de lén er journal é moe prinnet no zichen ag en autocar	LP	XSV
me oa okupet mat de lén me journal ben é klaouon un tol huitel	LP	SVO
en trén e oa yerhout	LP	SVO
yion é arasta en gas ag er gare	LP	SVO
me ya de galh me billet	LP	SVO
hag me saya barh	LP	SVO
pimp minut arleh é ouam é moned kuit	LP	XVS
me n'im laka barh tal ur fanest aveit guelet en traoù	LP	SVO
un heur aleh ni oua yer barh Normandie	LP	XSV
meraweh e uizé guélet un ti kollet barh mesk er gwei, er bokedeù	LP	XVS
en traoù sé rè un dra gris barh mesk er livacheù rel	LP	SVO
me uelè déjà barh me fén ti me yontr	LP	SVO
en trén e arasta barh ur gareich vien bénn é déleint me arast	LP	SVO
nor zichen d'en trén me e uel me yontr ajet ar ur vrich	LP	XSV
me laré bonjour de hon	LP	SVO
hag ion larè dein é va deit de me gmaj get en aouen ma ne mehé ket bet kawet en hent me yenon	LP	SVO
ni e yè a drèt agost i di ne va ket pèl d'ar gar	LP	SVO
deù minut aleh me uel un ti hag ur jerdin kolet ba mesk er bokedeù	LP	XSV
me e gaué me morep ajet ar ur vrich barh tal en ti, disan un avolen	LP	SVO
me e lar bonjour dehi	LP	SVO
hag me ya de uelet en traoù get me yontr	LP	SVO
me e jonja en différence e zo tré ur gér vraz hag er hampagne	LP	SVO

Taolenn 8 korpuss 8 diàr kenstrivadeg ar Falz

Pol er Meliner Melin er Baudry Languidic (Mor-bihan) e skol é Lycée en Oriant get en Autro Bernier classe 2e M Gañet d'er 27 12 44, é Bro Kembré d'er 15 a viz Est 1959		
Gorteit em es er moment devéhan de skriù d'oh	LP	V1
ho kuited em es pel zo, teir suhun m'ar m'es chonj mad	LP	V1
ha oudé m'ar pelan a zor m'em bro éma digor bras me deulagad	Isl	... V
gwel é kaveen me uéh genein é falé!	LP	XVS
kalz a dreu em es gwelet a oudé m'ar d'on oeit kuit	LP	OVS
ia, er vro, éon mem e zo plijus tré	LP	SVO
meh kalz plijusorh e oah é dud	LP	Pred V
kuited em es ur vro kaer aveit doñet en ur vro hag e gaùan kaeroh	LP	V1
iouank e on	LP	Pred V
hag a drecht oll é karan boiajein; gwelet penaos é fiù en dud arall	LP	XVS
m'em boiaj en dés n'em baset hag er chuech	LP	SVO

amzér gér e oé	LP	OVS
kuited em boé sant Maleu get er vag de nam eur de noz	LP	V1
splan e oé en néan	LP	Pred V
ha der lein, er stiret é luhein em geijé get splander er gér	LP	XSV
hag e oé arriù pel ha izél ar en deur	LP	V1
pran àùel erbet	LP	diverb
na re chuech e vehen bet goudé	LP	Pred V
neoah eh oé bourap balé hag ur pen d'er pen hag er pont	LP	V1
troieu kreisnoz en àùel e doé frenket	LP	XSV
nezé eh oém en ou unan é kreiz er mor	LP	XVS
a mé de gousket	LP	diverb
er mitin arlerh em m'es diousket é kourz	LP	XVS
deg munut goudé eh oén gusket	LP	XVS
breman é tostem de Vro Saus	LP	XVS
eh oé ret dein moned de évet thé!	LP	V1
hireh em boé de ùélet en douar	LP	OVS
àùel fresk e skoé ar me fas	LP	SVO
re gours eh oé surarhoal!	LP	XVS
mes tammeg a tammeg me ziforhé apepré en aod de bep kosté	LP	XSV
ha chetu er porh	LP	diverb
de getan eh oen eurus é teval ar er hé	LP	XVS
mé n'oun taol em es n'em gaùet é me hounàn hantér kolet	LP	XVS
ur bochat hent e m'oé oah d'obér	LP	OVS
en treu-sé me sponté!	LP	SVO
ur labous e oen é klah é dud	LP	Pred V
eh oen azé emb bourjal	LP	V1
hag e oé oah kousket	LP	V1
ur peh "policeman" braz en d'es me jénet a me huné	LP	SVO
éon d'es diskoeit d'ein ur bureù bras émen é vezé karget ha diskoeit paperieu	LP	SVO
é kuitad er porh sé me es n'em gaùet é kér	LP	XVS
en treu sé en des me diùenet tré	LP	SVO
a me de gemer er "bus" aveit moned d'er gar hent-houarn	LP	diverb
keméret em m'oé dohtu me billeteu	LP	V1
a mé kuit	LP	diverb
hireh em m'oé gùélet Bro Kembré	LP	OVS
hueh eur dohtu em es boiajet get en trein, adal Southampton betag Swansea	LP	XVS
er vro em es trézet elsé e oé plat tré	LP	OVS
peh en des me boehmet e zo en diforh étré glazadur er mézeu ha louser m'ar a gér	LP	SVO
ha ben er fin eh on arriù ér gar goudé bout bet paset eun anderiad én trein	LP	XVS
gorteit e oen é Swansea	LP	Pred V
ha mé oé gol koutant	LP	SVO
é arriù tal en or un den en des me galuet	LP	XSV
ha mé éon hiliet get plijadur em gouiet émen eh oen é moned	LP	diverb

nezé hemkin em'es adrecht oll kaùet e oen eurus bout elsé e fale eurus de voned de chom get tud [...]	LP	XVS
hag en oll e zo elsé er vro man	LP	SVO
ha pe don arriù e Llangadog eh on bet resùet èl m'ar vehen bet annaùet ha oll viskoah	Isl	... V
rè kourz eh on oeit de gousket	LP	XVS
ha devehat e oé a pen don saùet en dé arlerh!	LP	Pred V
en dé sé eh on chemet en ti de zichuech	LP	XVS
afer em boé	LP	OVS
mé goudé bamdé é ien de valé	LP	XVS
boiajet em es hag ur pen d'er pen arall a vro Kembré	LP	V1
kavet e vé mañnéu flour, falgenneu don get goahieu	LP	Pred V
er mañnéu e oé kaùet bandenneu deved	LP	XVS
hag ur ùèh eh on bet boémet é kaùit d'oh ou gouern, un den ar gein ur jau	LP	XVS
er loned sé e chema noz ha dé ér pradeuier	LP	SVO
evel just é vé kaùet en dachenneu er flagenneu	LP	XVS
meret e ma meh a pe dein d'er gèr	LP	XVS
er leur e zo dàlet	LP	OVS
faota d'oh gouiet pe petra é fiùant	LP	V1
int e ouia penaos emplì ou amzér	LP	SVO
tro didro d'en dachenneu e ùé gweled seud	LP	XVS
hag ével-sé ènt e ra muioh a leah	LP	XSV
mar a unan e vé mém goueret bamdé er pradeuier	LP	OVS
bep mitin ur hamion e bas de chérein er leah	LP	XSV
hag e vè kaset d'er Leahty	LP	V1
hui eh ès erhoalh gwéled penaos e viù en dud sé	LP	SVO
int e gaù elsé amzér de n'im uel a gampenn ou zi	LP	SVO
ha dirag er muian anehé, pa rah, e vé kamet en tammig jardrin get bokedeu	LP	XVS
ha plijus tré é den deulagad	LP	Pred V
klaùet e pes kons merhad ag er Snowdon	LP	V1
éon e zo en iùélan mañné a Vro Kembré	LP	SVO
bout em boé gwélet fotoieu anehon	LP	boud V
hag er ùèh ma eh on oeit d'er gweled	LP	XVS
bout on bet er blein	LP	boud V
koutant on de gredein penaos ha elsé éma braù er vro de wéled	LP	Pred V
mé en désé eh oé stanket tré en amzér	LP	XVS
eh én d'ankouhad konz dih hag er hastellieu koh em es visited	LP	V1
en hañni braùan e m'es kaùet e zo kanni Caernarvon	LP	OVS
éon e zo bet gouarnet ha kampennet mad	LP	SVO
unan arall hag en dé plijet dein e zo Harlech Castle	LP	OVS
éon e zo kohoh hag anaùetoh	LP	SVO
eon n'im zarl ar blein eur roh é kosté en deur	LP	SVO
pé e oé gwelet a getan e zo ruieu hem lousteri, hed a hed get en tiér	LP	OVS

dré bep diù ùeh e oé kavet panérieu aveit treul er paper	LP	XVS
be zo eùé en dra hag ne zelié ket bout ankouéet	LP	boud V
bout on bet d'en Eisteddfod	LP	boud V
hag azé e m'es klaùet moueh er vro ha nen dé ket kousket el ur hañni	LP	XVS
en dé sen rah en dud e oé joyus er ruieu	LP	XSV
hag é kement lerh e vezé gwelet bañniéleu gwenn ha guerh get en dragon ru é kreis	LP	XVS
hag e saùé sonnenneu a musik telenn	LP	V1
kaùet e m'es bourap tré en deùeh sé	LP	V1
gol kaer a oé en amzér	LP	Pred V
prenet em es nebeded livreu	LP	V1
hou diskoein e hrein d'oh a pe arriùein ér ger	LP	inf V
arriù e rein er gér édan ur sehun	LP	inf V
hireh em mes	LP	OVS
neoah éma bourap aman	LP	V1
gweled ha disket em bo ur bochat treu er vro man	LP	V1
ha me zehé endro ket plijadur	LP	SVO

*Taolenn 9* korpuss 9 diàr kenstrivadeg ar Falz

## Stagadenn II: Iwan Tangi

e 1976 e oa	LP	XVS
ar bloaz-se em boa kasset ur gartenn deoc'h [...]	LP	XVS
a-c'houde gwerso em boa soñjet skriv deoc'h [...]	LP	XVS
hag an degved blead goude hon emagv kentañ an heni eo am boa gortaet a-ratozh-kàer	LP	X Pred V
rag un arouez eo deg vlez [...]	LP	Pred V
hag an deg vlead-se tremenet heb ger ebed, heb gouied penn deoc'h biskoazh!	LP	diverb
marse en em santen kablus un tammig goude boud ho laosket da voned gant ho hent [...]	LP	XVS
gouied a raen	LP	inf V
santiñ a raen e oac'h ur plac'h tener ha karantezus	LP	inf V
daet e oa din ho kariñ iwe, a lizher da lizher	LP	Pred V
soñjet em boa moned da vevañ en ho pro, ha da zeskiñ ganeoc'h ho yezh	LP	V1
rag kuzhet e oac'h a-dreñv gerioù dianav ho parlant	LP	Pred V
ha menniñ a raen moned betagzoc'h, betag ho kalon estrañjoures, [...]	LP	inf V
prest e oan da zi-zraeniñ an hent a chome dimp d'ober ewid en em gavoud	LP	Pred V
me a faote din iwe moned pelloc'h ganeoc'h war hentoù ho pobl	LP	SVO
rag kariñ a raen ho pobl	LP	inf V
kariñ a raen ho yezh hag ho pro	LP	inf V
[...] mes gouied a raen pessort multroù a oa bet gwraet gante e Frañs, e Breizh [...]	LP	inf V
gwelet em boa gant doñjer fotoioù Kampoù-ar-Marw [...]	LP	V1
"lous eo ar bresel" a skrive Yann-Bêr Kalloc'h [...]	LP	OVS
[...] Ya gwir eo	LP	Pred V
lous eo ar bresel, an oll vreseloù	LP	Pred V
[...] Bew eo ar Varbared c'hoazh	LP	Pred V
E peb lec'h e vezont strewet	LP	XVS
[...] En hor mesk emaint	LP	XVS
[...] Gouied a raen ne oa ket an oll Alamanted bourewion	LP	inf V
e-pad ar bresel diwezañ, en Orient, pa oa Breizhis é sevel [...] ma zad en doa anavezet ur soudard alaman	Isl	... SV
[...] Pleget en doa [...]	LP	V1
kasset e oa bet du-se vel ur loen [...]	LP	Pred V
ur soudard plom war dachenn-c'hoari e vistri	LP	diverb
[...] Mes santet en doa	LP	V1
boud e vez neuse, er vuhez, gaouadoù ma ne vez ket hor bolontez mestres warnimp	LP	boud V
[...] ha traoù kontrol d'hon c'hoantoù ha d'hon soñjoù a c'hell ar youl estren-se hon lakaad d'ober	LP	OVS
na boud emaint divalaw ewid hon emskiant, ni o gwra	Isl	... SV
dre wanded, dre laoskentez ha digalon	LP	diverb
kariñ a raen ho pro dija e-raog hos anavoud	LP	inf V
heb boud bet eno james	LP	diverb
m'he c'hare a-bell [...]	LP	SVO



[...] nawazh, seul ma skrivemp unan d'egile, e oac'h-c'hwi daet da voud skeudenn vew ma Alamagn garet	Isl	... V
[...] mes ma seizh gwellañ a raen ewid lâred munudoù ma soñjom	LP	OVS
ur blijadur a vese din skriv deoc'h	LP	OVS
ha brassoc'h plijadur c'hoazh ho lenn	LP	diverb
ur wezh ho poa kasset ho portred din	LP	XVS
[...] a-lies e oan chomet da hunvreal dirag ar portred-se	LP	XVS
m'ho kwele e ruioù ho kêr é kerzhed a gammedoù prim, penneg a dal ha kuñv a galon	LP	SVO
m'ho kwele en ho kambrig asezet war vord ho kwele, é lenn barzhonegoù	LP	SVO
Ijinet em boa iwe mouezh ar verc'h sentus douzh hec'h mamm a zleec'h boud bet	LP	V1
ha bremañ mist ha propig da'm daoulagad	LP	diverb
ur vouezh klouar, dudius, enni leun a dederded hag a bassianted	LP	diverb
ar gerioù a lennen en ho lizherioù skrivet braw	LP	OVS
me a wele ha me a glewe ho tiweus c'hoantabl douzh o distag	LP	SVO
ha seul gwezh e vesen evel-se luskellet	LP	XVS
dedennet e vesen gant hanwioù-lec'h ho pro [...]	LP	Pred V
leusekl a raen o hud da redeg ennin [...]	LP	inf V
Ha hanw ho kêr a zistagen vel ar barzhoneg kàerrañ: Straubing-an-der-Donau	LP	OVS
en tu arall ag an Alamagn ema, e-kostez ar pezh a oa c'hoazh an Tchekoslovaki	LP	XVS
Hanw an Donaw dreist-oll ma lakae da hunvreal	LP	SVO
hañval ganin e oa ar stêr-se vel Moldaw Bedrich Smetana, é treusiñ [...]	LP	XVS
a-drugarez da Johann Strauss, e ouien e oa glas a liw	LP	XVS
ha doned a rae beteg ennin [...]	LP	inf V
ha c'hwi, Monika, douzh an Donaw e selle ho taoulagad	LP	XVS
m'ho kwele é vale a-hed ar ribloù [...]	LP	SVO
ur verc'h yaouank leun a romantism e oac'h	LP	Pred V
komz a raec'h din ag ho lennadurioù [...]	LP	inf V
Rainer-Maria Rilke a blije kalz deoc'h ha Goethe	LP	OVS
mes un deiz ho poa kasset iwe ur levr din [...]	LP	XVS
[...] un oberenn a-eneb ar bresek e oa, skrivet gant un den yaouank diskroc'henet e-bew é weled gwad e vro skuilhet a-boullad	LP	Pred V
er levr-sen em boa puñset an dour a glasken ewid torriñ ma sec'hed din	LP	XVS
boud e oa Alamaned na oant na kar na par d'ar Boched fall-vrudet a gomze an dud diwar o fennoù	LP	boud V
ha douzh an Alaman-sen en em santen tost	LP	XVS
[...] Neuse, er porzhioù trousus brumennet a voged, e korno ar listri bras	LP	XVS
hag e tawint	LP	V1
hag evel korfoù krivet mamouted ramzel, karget a zour, morgousket, hè a gouezo a-hed ar c'haeoù simant, didud, divuhez, bezhin [...]	LP	XSV
hag o frammoù, yac'h beteg neuse, a laosko fall vlas doñjerus [...]	LP	SVO
ha neuse, an diwezañ den roeget e vouzelloù dezhañ [...]	LP	diverb
neuse an diwezañ den, sec'h e galon, tàret, blasfemour, a laosko e glemm [...]	LP	SVO
[...] kresket en doa ennin, diouzh henn lenn [...]	LP	V1
[...] ha krial a rae Borchert ar wirionez-se [...]	LP	inf V
tud zo war an Douar, karantez a-builh en o c'halonoù [...]	LP	OVS
mar behe bet chomet ennin an disterrañ douestañs e-keñver denegezh an Alamagn, gant Wolfgang Borchert e vehe bet lamet diganin neuse	Isl	... XVS
heñv a oa ewidin mouezh an Alamagn guzh [...]	LP	SVO
hag ar vouezh-sen a gomze douzhin	LP	SVO
m'he c'hlewe	LP	SVO

ma breur a oe é komz	LP	SVO
daet e oa an Alamagn da voud ma bro-me iwe	LP	Pred V
pandeogwir e oa ur lodenn ag an Douar, a ma Douar	Isl	... V
Ar Varzhed, [...] a anav ar poent ma vez kreñvañ an taraw etre ar pennden hag an Istoer	LP	SVO
Rag ar gouelec'h lijorus hanwet Alamagn, ni henn kar	LP	OSV
karoud a raomp an Alamagn a-hiniw	LP	inf V
ha bremañ muioc'h eged biskoazh	LP	diverb
med rac'hwiñ a raomp merwel ewid an Alamagn-se	LP	inf V
bewañ ewiti eo a vennomp ober	LP	OVS
menniñ a raomp karoud an Alamagn-se vel ma kar ar gristenion o C'hrist: ewid e Bassion	LP	inf V
karoud a raomp an Alamagn-se, kalz ne vern	LP	inf V
ha ganti ar c'hêrioù hag an dismantrou [...]	LP	diverb
ewid o brassoni losket, ewid o gwiskamant gouron waet da ludu [...]	LP	diverb
ar garantez: setu hon ger-stur	LP	diverb
menniñ a raomp karoud mein ar c'hêrioù [...]	LP	inf V
karoud iwe ar fenestrou toemm ha melen [...]	LP	diverb
hag ar c'hawioù leun a razhed, gant bugale enne [...]	LP	diverb
rag setu ase an Alamagn	LP	diverb
setu ase ar pezh a vennomp karoud [...]	LP	OVS
[...] er bed goapaus ha touellus-mañ e vennomp sevel en-dro [...]	LP	XVS
[...] Vel-se e vese presantet an traoù en hor Republik, ha kelennet iwe	LP	XVS
Mes Passion an Alamagn a oa just a-walc'h ase	LP	OVS
goudañviñ en he c'horf, e korf he bugale, hec'h mammoù hag he gwased an drougoù daet a-greis hec'h ene	LP	diverb
goudañviñ en he askre [...]	LP	diverb
Bewiñ a raomp e-tal ur bobl prest da gouezel en divusulded [...]	LP	inf V
[...] hag he c'hredenn e oa an dresitpouell ganti ha ganti hebkén	LP	Pred V
[...] malet e oa bet yaouankis Wolfgang Borchert gant ar bresel	LP	Pred V
ha breinet e yec'hed gant ar prison, ar gerteri, an dienes	LP	diverb
[...] ha c'hwi a oa, Monika, a vro Wolfgang	LP	SVO
c'hoant am boa da bardoniñ deoc'h ha d'ho kariñ [...]	LP	OVS
ar garantez a verwe ennin he doa dober ag unan da gariñ	LP	SVO
red e oa din hoc'h anavoud hag ho kompren [...]	LP	Pred V
ur fenestrig e oac'h	LP	Pred V
ha dresi e welen diabarzh an ti	LP	XVS
un daol net, ur podad rosennoù ruz warni	LP	diverb
e-tal ar pod, un tamm paper skrivet gant dorn ur plac'h bennag he dehe bet ho taoulagad	LP	XSV
[...] emberr e tin en-dro	LP	XVS
[...] Fiziañs am boa	LP	OVS
[...] Luziet e seblante din boud santimantoù an dud [...]	LP	Pred V
mes c'hwi ho poa ma lakaet da goñserviñ ar bed a c'hoanag a glewen ar frontig anezhañ en ho skritur aketus [...]	LP	SVO
hañval eo peb yezh douzh ur rouantelezh	LP	Pred V

ha peb ger disoloet ha komprenet zo ur pas	LP	SVO
[...] Kerzhed a raen leun a joa e gwilizh ho parlant yac'h	LP	inf V
klewed a raen ho parzhed é kanal gwerzennoù melodius o lieder	LP	inf V
hag un erer e oan, é c'hournijal a-dreist ar Roen, pa vesen é kenn Heinrich Heine [...]	LP	Pred V
chomet e oan da dortal un herrad [...]	LP	Pred V
kredet em boa kass ur gartenn deoc'h nawazh [...]	LP	V1
traoù dister am boa skrivet moarhad	LP	OVS
mes ur galv a gassen deoc'h	LP	OVS
[...] Soñjet em boa ober ar mems galv deg vloaz war-lerc'h hag evel-se a zeg vloaz da zg vloaz	LP	V1
[...] Re dost e oamp bet e-pad ur prantad	LP	Pred V
ag ar memes beaj e oamp	LP	XVS
[...] hag a-stur eh ae ho puhez gant ma heni-me	LP	XVS
an emglew a oa bet etresimp a bermete din, a soñjen, chomel stag douzhoc'h [...]	LP	OVS
soñjal a c'helle ma skridoù [...]	LP	inf V
war ur roll bennag a genskriverion em boa kavet ho hanw hag ho chomlec'h	LP	XVS
ur c'hamarad din ha me hor boa diviset ar bloaz-se moned d'an Alamagn, mar tapehemp ar vachelouriezh	LP	SVO
ewid kement-se, ouzhpenn labourad a-fesson, ni hor boa dibabet tri fal [...]	LP	XSV
ewid deskiñ ar yezh em boa prenet ur levr [...]	LP	XVS
deg munut bemdez e vese red labourad gantañ	LP	OVS
[...] ha goude un tamm añsi, e oa chomet heb torriñ e benn gant an alamaneg	LP	XVS
Re ziaes ewitañ, a lâre	LP	OVS
me neuse a vehe ar jubennour e-pad ar Spedission	LP	SVO
hon jao a-benn ar fin a vehe ur skouter Vespa gwer e liw, gwerzhet din gant ur c'hamarad-skol	LP	SVO
beb sizhun, e Ti Ar C'hasetennoù, e prenen [...]	LP	XVS
berwiñ a rae hon speredoù [...]	LP	inf V
mezvamant a leunie hon pennoù é soñjal en traoù a welehemp a-dra-sur du-hont	LP	SVO
[...] prientiñ mat an dro-vale a vennomp ober	LP	OVS
me ataw a oa entanet gant an avañtur	LP	SVO
hag aketus em boa en em lakaet da zigoriñ bemnos "An Alamanteg didorr"	LP	XVS
un tammig re e oa ar ger didorr moarhad	LP	Pred V
mes red eo roiñ kalon d'an deraouidi	LP	Pred V
ha buan hag aes e c'heller deskiñ ar brezhoneg [...]	LP	XVS
Chelaou a raen iwe a-lies douzh ar radio alaman, ewid lakaad an distagadur mad em skouarn	LP	inf V
[...] rag peb tra skrivet a vez distaget	LP	OVS
[...] mar bese diaes din kompren Der Spiegel, e kaven bourrabl follennata Die Stern pe Das Bild [...]	Isl	... V
dre vras hor boa tresset hon hent	LP	XVS
dle oa dimp moned dre an Ardenn betag ar Ruhr [...]	LP	Pred V
ha me kentizh da glask, war rolloù kenskriverion a gaven edan ma dorn [...]	LP	diverb
bourraploc'h e vehe dimp [...]	LP	XVS
Loig ma laoske d'ober ma soñj war ar poent-se [...]	LP	SVO
Fiziañ a rae ennin	LP	inf V
ha da blac'hed hebkén neuse em boa skrivet ewid gelliñ kass hon ragtress da benn	LP	XVS

gwell e vese ganin skriv d'ar merc'hed eged d'ar baotred	LP	Pred V
tenerroc'h o santen eiwd komz a draoù ar galon	LP	XOV
[...] an oll draoù newez a ziwane en don ahanin	LP	SVO
d'an newez-hañv en em laka an awel da voud douss ha fresk [...]	LP	XVS
hag ar merc'hed dreist-oll a oui chelaou douzh komzoù awel an newez-hañv	LP	SVO
ar wirionez eo	LP	Pred V
test eo ag an dra-se an oll sonennoù a vese hag a vez c'hoazh kanet er vro	LP	Pred V
neuse em boa kavet Julia er Ruhr, Marianne e Essen-Werden, c'hwi, Monika, e Straubing [...]	LP	XVS
ouzhpenn-se e vehe bet re	LP	XVS
balisennet e oa bet vel-se hon hent	LP	Pred V
ha frankis a chome ganimp ewid kemer hon amzer da voned a di unan da di un arall	LP	SVO
e-pad ar blead-skol em boa neuse toemmet rac'h an dudigoù-se [...]	LP	XVS
a-drugarez da Loig just a-walc'h em boa desket, ur bloaz abretoc'h hebkén, petra a c'helle boud ur lizher [...]	LP	XVS
mad eo ar yec'hed	LP	Pred V
kàer eo an amzer	LP	Pred V
waet omp da Baris da weled matant Fin	LP	Pred V
prenet hon eus un aoto	LP	V1
arru eo an tele en ti	LP	Pred V
brassaad a ra ar vugale	LP	inf V
hag àr goshaad eh aomp-ni	LP	XVS
[...] Mankoud a rae er lizherioù-se anal an eneoù	LP	inf V
un deiz ataw e tiskouezas Loig ur lizher din	LP	XVS
kasset e oa bet dezhañ gant ur vigoes pe ur geniterw bennag	LP	Pred V
[...] displegañ a rae he c'hoantoù, hag ar pezh a lakae he c'halon da dridal	LP	inf V
un disoloadenn ewidin	LP	diverb
Hama! Tu a vese neuse da lakaad dre skrid trubuilhoù un ene ha lewenez ur galon!	LP	OVS
[...] adal an deiz-se em boa skrivet gant plijadur, gant birwilh, re marse	LP	XVS
[...] med d'an nebeutañ e rae vad din ressisaad ha lakaad urzh em soñjesonnoù	LP	XVS
ha pa skriven da'm c'henskriveresed, e laken em lizherioù, par ma c'hellen, ar gwellañ ahanin,	Isl	... V
hag engorto e vesen iwe a ressev ar gwellañ anezhe	LP	Pred V
ur wezh dreist-oll e voen dipitet [...]	LP	XVS
ur vignones din a anavezen a-vihanig [...] he doa hon dispartïet	LP	SVO
ha ni hor boa brassaet ha treuset hon oad krenn peb unan d'e du	LP	SVO
pa oan kasset da Wened e pañsion, em boa kroget da skriv dezhi	Isl	... V
lizherioù divlas ha boutin-tre da gentañ	LP	diverb
mes, goude ma disoloadenn, em boa kroget da gass dezhi testennoù dishañval bras diouzh ar re a vese-hi kustum da ressev	LP	XVS
[...] Respont a rae din ataw ar memes randonennoù e oan-me waet skuizh gante	LP	inf V
hag a-benn ar fin e chomas an traoù a-sav a-gaos d'ar vur a santemp en un taol etresimp	LP	XVS

[...] lizherioù hir a resseven[...]	LP	OVS
Hir e oa bet mis Gourhelen ar bloaz-se [...]	LP	Pred V
Hag eh arruas mis Eost	LP	V1

*Taolenn 10* Donaw, Iwan Tangi

## Stagadenn II: David ar Gall

Ganet on bet deiz Nedeleg	LP	Pred V
an deiz en deus choazet hor Salver evit krogiñ get e vuhez poanius	LP	OVS
[...] Ma zad, e-unan a dremene e amzer é klask monet da glask labour, bemdez, d'ar memes eur	LP	SVO
distroiñ a rae, sanson, a pa zigore dor ar ranndi e tec'hen edan an daol da guzhat	LP	inf V
pa oan bihan e lâre ne oan nemet ur c'holl-boued daet da bonneraat e vuhez	Isl	... V
goude e kave a bep seurt abegoù da zistag e c'houriz a-zoc'h e lavreg du	LP	XVS
[...] ha diaes e oa da ma mamm naetaat ar lin a zae diarnañ	LP	Pred V
kontant e oan pa zihune	LP	Pred V
[...] mes dre ma lâre e rae vat dezhañ	LP	XVS
tremen a rae un dorn e ma blev du fuilh	LP	inf V
ha leuskel a rae ac'hanin da vonet	LP	inf V
azeziñ a rae doc'h taol	LP	inf V
ha ma mamm a servije e dasad kafe berv	LP	SVO
chom a raen e-taltañ, é oueliñ, didrouz-kàer	LP	inf V
[...] hi ma c'hemere en he divrec'h	LP	SVO
ha gober a rae àr ma zro	LP	inf V
da ma daouzek vlez eo aet get ar re arall	LP	XVS
[...] interet eo bet e bered ar gêr gozh	LP	Pred V
ma zad eo en doa toullet ar bez	LP	Pred V
ur groaz koad a zo bet lakaet àrni Jane Johnes 1821-1843 Pedit eviti	LP	OVS
goude eo bet gwerzhet hon ti	LP	XVS
aet ma zad da glask bara ur mintin [...]	LP	diverb
graet em eus àl razh bugale a-oad genin	LP	V1
dre ar maezoù em eus kerzhet	LP	XVS
kavet em eus ur beajour a glaske sikour da zougen e draoù en e garr	LP	V1
hag aet on àr-raok getañ	LP	Pred V
un deiz en deus sellet doc'h ma c'hein	LP	XVS
ha lâret en deus "O man Doue"	LP	V1
boued en deus roet din [...]	LP	OVS
chom a raemp a-sav a gêr da gêr da werzhiñ louzoù ha diedoù a bep seurt a oa sañset paret an dud vac'hagnet	LP	inf V
c'hoari a raen an hani klañv savetaet get an died hud	LP	inf V
goude e tae razh an dioded da breniñ ar peurrest ag ar gargad	LP	XVS
[...] un deiz goude hor gwerzh omp bet arrestet àr hon hent get daou baotr saout	LP	XVS
an hani kentañ a zo diskennet	LP	SVO
ha goulennet en deus hor yalc'had	LP	V1
klasket hon eus diskouez ne oamp ket a-du	LP	V1
kendrec'het omp bet get ar Winchester a guzhe edan e vantell lâr hir	LP	Pred V
goulennet en deus genin petra a raen amañ	LP	V1
kavout a rae dezhañ e vehe gwell d'ur paotrig èldin bout é ouarn ar saout pe é teskiñ doareoù da c'hounit gwell e vuhez	LP	inf V
krapet em eus àr gein e jav	LP	V1
hag aet omp	LP	Pred V

leusket em eus anezhañ a-dreñv din èl an amzer dremenet	LP	V1
Jack, èl-se e veze anvet paotr e vantell lèr hir, a oa bugul saout	LP	SVO
e-karg e oa ag ur stropellad 1500 penn a gase betek ar C'holorado	LP	XVS
eno en doa da vout paeet	LP	XVS
da c'hortoz an deiz-se e klaske brasaat ar sammad dre laerezh an dud [...]	LP	XVS
bep noz e yae d'an davarn da weladenniñ merc'hed koant ar vro	LP	XVS
seblantout a rae bout anavet get razh anezhe	LP	inf V
chom a raen ma-unan doc'h an daol gont	LP	inf V
ha deskiñ a raen evet	LP	inf V
start e oa lonkiñ ar boeson c'hwerv a veze servijet deomp hep na vehe bet goulennet netra digenomp	LP	XVS
ha bepred ar memes jeu	LP	diverb
da zeiz ma c'hwezek vlez a oe bet profet din ma c'hentañ Winchester	LP	XVS
fier ruz e oan	LP	Pred V
a-c'houde tri blez e oan get	LP	XVS
desket em boa implij ha bout mestr àr imorioù ar mekanik-se	LP	V1
ar boledoù a yae a-barzh èl a pa vehe bet druzet an duellenn hep druaj	LP	SVO
lufriñ a rae doc'h bannoù an heol	LP	inf V
ma c'hentañ Winchester ha ma c'hentañ karantez	LP	diverb
profet din get ma skipailh mignoned	LP	diverb
"Suzie" hec'h anv	LP	diverb
ur vaouez àr an oad	LP	diverb
pad on diskennet em eus komprenet e oan daet gour	Isl	... V
un droiad a zo bet paeet get an ostiz	LP	OVS
hag evet hon eus betek kousket doc'h taol	LP	V1
da vintin a zo daet tri den en davarn	LP	XVS
lâret en deus an hani treutañ din e anave ma Winchester	LP	V1
eñ a anave anezhañ kement m'en doa c'hoant e adtapout d'e rentiñ d'e biaouer [...]	LP	SVO
a-boan savet ma dorn em eus santet un flemmadenn vihan doc'h ma bruched [...]	LP	XVS
goude eo en deus tarzhet trouz ar bistoled e ma divskouarn	LP	XVS
dihunet eo bet ar re arall	LP	Pred V
sellet em eus doc'hte	LP	V1
en em zigarezet eo Jack	LP	Pred V
Suzie a zo daet da boket din àr ma zal [...]	LP	SVO
un devezh kaer èl an deiz kent	LP	diverb
un devezh èl ma vez a-goursadoù en dilost-hañv, pa ne glever c'hwezhadenn ebet é tihousk an delioù àr o digarez diwezhañ	LP	diverb
ur banne heol é treuziñ gwer livet ar chapel ha bugale é redek àr-lerc'h ar chas er straedoù goudroñset a-nevez	LP	diverb
[...] hiriv 'vo kaer	LP	XVS
daou zen doc'h an daol-gont a oa é lenn an doareoù fresk	LP	SVO
ha moged ar butun gris é plavién izel er sal	LP	diverb
div daol, teir gwerenn lous en em ziskoueze	LP	SVO
kollet o gizioù pamdeziek en divizioù boutin	LP	diverb
lakaat a ra hec'h anv Royal da vout prezidantez [...]	LP	inf V
ma loa a droazan em zasad kafe hep sukr	LP	OVS
[...] ret eo bout kalloc'h da vout mestr àr ur vro	LP	Pred V
[...] èl-se e talc'h an divizioù gete, é komz a-zivout rouanez Breizh-Veur hag he sujerion	LP	XVS

Diàr Simone Veil, ur vaouez koupabl ha speredek	LP	diverb
Dont a rae soñj dezhe bout klevet anv rouanez an Danmark a oa karet get he fobl ivez	LP	inf V
[...] hennezh a ra àr-dro e stal goude bout goeret e saout	LP	SVO
hennezh a vehe mat da brezidant evidomp	LP	SVO
beviñ a rae Maoris Keraniz e-gunan goude marv e vaouez en ur gwallzarvoud karr-tan e kreisteiz Frañs, àr hentoù an Dordogn	LP	inf V
dalc'het en doa an taol	LP	V1
ha da ankouaat e walleur e oa kroget da labourat un hanter muioc'h	LP	XVS
labourat, da leuniñ e zevezhioù	LP	diverb
leuniñ ur vuhez daet da vout trist	LP	diverb
[...] e vugale a yae da gerc'hat er skol, bemnoz	LP	OVS
daou baotr gevell ha start da zesevel goude ma oa aet o mamm a-zoc'hte	LP	diverb
gwerzhiñ a rae bokedi ha dafarioù jardin e-pad an deiz	LP	inf V
ha pa serre e stal e rae àr-dro e dachenn	Isl	... V
dont a rae da benn ag en em denñ dre la ia e stal àr-vord an hent bras	LP	inf V
kuzhet edan un tog ledan e plije da Vaoris en em gavet get tud e vourc'h	LP	XVS
ha gwir eo e oa tost doc'hte	LP	Pred V
[...] a-benn ur blez e vo moien dezhañ	LP	XVS
sur on e vehe tud da votiñ evitañ	LP	Pred V
hag a-walc'h e vehen da vont àr e listenn	LP	XVS
[...] me 'zeskay	LP	SVO
dont a rae frankoc'h an heol dre ar fenestrig voan	LP	inf V
drezi e veze gwelet ur c'hi ruz é tostaat hag é tirogiñ seier ar poubellennoù	LP	XVS
un askorn kozh kavet getañ a oa krog da chaokat	LP	XVS
an nor a zigoras	LP	SVO
hag ur vaouez a yaas tre	LP	SVO
troiñ a raas o c'hein an daou bratik fidel	LP	inf V
en ur c'houlenn ur loto flach e embannas ar vaouez	LP	XVS
klevet ho peus emañ aet Maoriz da welet e dud e Gwened	LP	V1
[...] lâret e vez ivez emañ é hentiñ ur plac'h, ur vaouez vat sur a-walc'h	LP	Pred V
un tamm sukr a lakazan e ma zasad kafe	LP	OVS
get he ziked loto a yaas kuit ar vaouez	LP	XVS
[...] bepred é kousiñ hor plijadur!	LP	diverb
[...] strewet e oa ar poubellennoù dirak dor an ti paravis d'an davarn	LP	Pred V
[...] nebeutoc'h e vo ar blez-mañ	LP	XVS
re c'hleb eo bet an hañv	LP	Pred V
[...] Seul sec'hoc'h seul vuioc'h a douristed ha seul vuioc'h a voued evite ivez, ur seurt!	LP	diverb
[...] ensellet e vin ar blez-mañ	LP	Pred V
hor ministr a venn gouiet pep tra diàr e dud	LP	SVO
[...] rankout a rimp gouzañv ar pennseller stad	LP	inf V
re a argant a zo bet foraned?	LP	OVS
re nebeut arboellet kentoc'h	LP	diverb
tapet en deus e begement get lez ar c'hontoù a rebeche bout implijet fall an argant	LP	V1
argant ar stad	LP	diverb
argant mouezherion a skarzhay anezhañ deiz-pe-zeiz	LP	SVO



ha ni da gentañ-razh	LP	diverb
trumm eo hor rektor ma ne sentomp ket e vo prest kas buhez fall da lod ac'hanomp	LP	Pred V
ha prest oc'h da blegiñ	LP	Pred V
[...] goulennet a zo bet gober ag ar c'honkour publik ur c'honkour daoubennek	LP	Pred V
[...] e-lec'h tremen ar c'honkour matematik, èl gwezharall e rankay tremen ar c'helenner un eil danvez àr un dro	LP	XVS
[...] trouz a vo	LP	OVS
mes nebeutoc'h a dud paeet da lakaat ar c'honkour da dremen	LP	diverb
ha dasparzhet gwell an euriadoù er skolajoù	LP	diverb
[...]goulenn a rin ma vo savet ur sondadeg	LP	inf V
plijout a ra an dra-se d'ar ministr	LP	inf V
ha pep tra mat d'ar ministr a zo mat evidin	LP	SVO
[...] mall eo cheñch an traoù, ya	LP	Pred V
[...] tamm-ha-tamm e cheñchay	LP	XVS
kinniget em eus sevel ur rentiñ-kont pemdeziek evit pep kelenner	LP	V1
da sevel ha da rentiñ d'an Akademiezh, bep miz dre ar genrouedad	LP	diverb
ken torr-penn e vo ma c'houlennay ar gelenourion chom da labourat àr o lec'h labour o-unan	LP	XVS
èl-se e vo un tamm labour da dud melestradur ar rektoriezh ivez	LP	XVS
en em lakaat a rin, me ivez d'ar 35 euriad	LP	inf V
[...] ur c'hoererez elektronek am eus prenet	LP	OVS
meret eo get un urzhiataer	LP	Pred V
ur bleiniour a zo bremañ da ma zraktourioù ha da vleiniñ ar mekanikoù pounner, èl an dornerez	LP	OVS
peurrest an amzer gouniet e chomin er gêr	LP	XVS
siouloc'h e vin	LP	Pred V
ma n'eo ket ensellourion yec'hed an departamant eo paotred an ti-bank a sell doc'hin èl brandi àr o skourr	Isl	... V
kranked int tout, kranked, d'ober soubenn	LP	Pred V
un deiz bennak eh in da c'hrosaet en o zi	LP	XVS
n'eus nemet èl-se e c'hellont kompren eo an amzer a zo kaoz d'hor soursioù	LP	XVS
[...] ur miz a vez sec'h	LP	SVO
ar miz àr-lerc'h e vez re a zour	LP	XVS
dicheñch emañ pep tra	LP	XVS
dav 'vehe lakaat Doue d'ar 35 euriad	LP	Pred V
35 euriad, hag ur post daoubennek dezhañ	LP	diverb
[...] soubenn c'hoazh?...	LP	diverb
ur paz, dek, kant, kerzhadenn en aner	LP	diverb
dassoniñ a ra seuliou ma botoù lêr uhel àr blañcheris an trepas	LP	inf V
lufriñ a ra koar ar c'hoadaj àr sternioù alaouret poltredoù pintet uhel	LP	inf V
tud livet é sellet spis doc'h pep tra a dremene buan hag a ziskoueze dre o c'herzh o uhelled hag o renk	LP	diverb
karet em behe bet lakaat ma ferukenn e ma sac'h kouarc'h, kement ma krabis ma zal ha ma blev, ha kement mand on get an debron	LP	V1

poukr eo an aer	LP	Pred V
c'hweziñ a ran e ma lavreg kozh	LP	inf V
pegiñ a ra ma roched àr groc'hen ma c'hein	LP	inf V
glep eo ma c'horf	LP	Pred V
mouest ma daouarn	LP	diverb
ha flaerius razh an dud	LP	diverb
hor roue e-gunan eo start dezhañ andur kement-se	LP	Pred V
an hani a labour a c'hwez	LP	SVO
[...] gortoz, kerzhet, trapikellat ha gortoz arre ma vehe achu get an abadenn-selaou	LP	diverb
hor roue e-gunan a ro e asant da vout lodek er laz-soniñ ha da vout mestr e chapel	LP	SVO
ren hag urzhiiñ kant hanter-kant mestr-soner	LP	diverb
[...] hag en disoc'h ar gloar peurbadel, ar brud hag an argant peotramant an ankouazh	LP	diverb
edan berr e tigoray an nor vras	LP	XVS
ha tremen a ray hor roue diraktiñ, heuliet get ur stropad liperion a ra e lez	LP	inf V
mar ma saluday e talvay eh on degemeret [...]	Isl	... V
ur sonatenn evit an aotrou, setu ar pezh am eus savet	LP	diverb
anvet eo "Hentoù Arkadius" en enor d'ur mestr soner a vro-Pologn, an aotrou Arkadius Wulick en doa peurzesket e arz-soniñ dezhañ	LP	Pred V
ugent munut soniñ da zudiiñ hor roue	LP	diverb
ar gwazhañ-razh eo n'on ket er sal é sellet doc'h emzalc'h an aotrouion	LP	Pred V
na nebeutoc'h da ren ar bare sonerion	LP	diverb
enorioù miret d'ar lez	LP	diverb
tommoc'h-tomm eo en trepas	LP	Pred V
treuziñ a ra gwrez an heol dre ar fenestroù uhel	LP	inf V
donet a ray ma ziad genin pa vin staliet er gêrbenn	LP	inf V
gellout eurediñ ha chom e peoc'h gete	LP	diverb
ma mamm he deus afer sikour dreist-holl	LP	SVO
muioc'h-mui a wad a skop	LP	OVS
e dibenn ar gouiañv eo kroget da skopiñ druz	LP	XVS
amañ eh eus medisinourion	LP	XVS
ret eo paeiñ anezhe ker, setu amañ tout	LP	Pred V
[...] sin mat eo	LP	Pred V
kanniget em eus ma sonatenn d'ar c'hentañ violoñsour	LP	V1
un onest a zen a anavan a-c'houde mand on bihan	LP	OVS
eñ eo en deus hi roet da vinistr ar savadurioù hag hi diskouezet d'hor roue pa oant é klask àr-lerc'h ur mestr arall	LP	Pred V
digouezhioù dic'hortoz hag un tamm chañs	LP	diverb
ar memes mestr soniñ am boa bet get ar violoñsour kentañ, pa oamp krennarded, e skolaj ar Jezuided	LP	OVS
goude em boa eñ sikouret a denniñ razh-razh teneridigezh, sontiled, ha kened ar son [...]	LP	XVS
Gunter a vez graet anezhañ	LP	OVS
asabl hon eus desket mod soniñ an Italianed hag an Aotrichianed	LP	XVS

skañv e oa pluñvenn ar re gentañ	LP	Pred V
ha begon a gase ar re arall	LP	SVO
nebeut àr-lerc'h e oa aet kuit ma zad	LP	XVS
dilezet en doa e familh	LP	V1
ha hep argant hon doa ranket beviñ diàr ma skiant, er foarioù pe er lazoù bihan	LP	XVS
daet e oa-eñ da ren skol ar rouantelezh	LP	Pred V
plaset e oa bet eno get e dad ha dre binvidigezh familh e vamm	LP	Pred V
an digarez brav em eus hiriv neuse da lakaat ma familh d'he renk uhel a verita ha da dapout enor an noblañsiñ	LP	OVS
ur statut a vo din	LP	OVS
ur statut ha douaroù da heul	LP	diverb
ha diwezhañ notenn ar sonatenn é tarzhiñ er sal	LP	diverb
[...] an nor a zigor p'emañ razh an arvestourion é strakal en o daouarn	LP	SVO
komz a ra hor roue get Gunter	LP	inf V
soubliñ a ra hennañ diraktañ	LP	inf V
treiset on bet	LP	Pred V
tomm eo, re domm	LP	Pred V
kreniñ a ra ma divhar pa dremen ar lez digas diraktin	LP	inf V
ur stokadenn greñv e ma fenn	LP	diverb
ha serriñ a ra na nor vras koaret àr o lerc'h	LP	inf V

*Taolenn 11 Hent Arkadius, David ar Gall*